



Marvailhou evit ar Vretoned. levr. 4

<https://hdl.handle.net/1874/379608>



KLAODA AR PRAT
"Pluenzir"

Marvailhou

evit ar Vretoned

(PEVARE LEVR)

Da genta Doue,
Brciz-Izel goude
Hag he yez ive.

Skeudeennou gant J. HAINAUT,
eus Skol-Veur an Ijinou-Kaër e Paris,
ha gant Loize AR GWENNEK,
Kaznad an Ijinou-Kaër e Montroulez

KERAEZ
Moullérez Ar Bobl
1914

~~VAN HAMEL~~
~~553~~

vervallet

E DONATIONE

A. G. van HAMEL

PROFESSORIS
ORDINARII IN
ACADEMIA
RHOEN-TRIECTINA

1923—1946

3832


FB Pra 1

38

3832

F B Pro 1

450



Lezit ganeomp hon c'hoz-gizou
Hon ilizou hag hon c'hoavioù,
Ha iez ar re gousk 'n o bezion ;

Hon c'hontadennou 'tal an tan
Goude al labour bag ar boan.
E pad ar goany, a c'houde koan.

LUZEL..
(*Bepred Breizad*, p. 260)

3832



18.62

RIJKSUNIVERSITEIT UTRECHT



1554 4012



KLAODA AR PRAT
"Pluenzir"

Marvailhou

evit ar Vretoned

(PEVARE LEVR)

Da ganta Doue,
Breiz-Izel goude
Hag he yez ive.

Skeudennou gant J. HAINAUT,
eus Skol-Veur an Ijinou-Kaër e Paris,
ha gant Loeiz AR GWENNEK,
Kannad an Ijinou-Kaër e Montroulez

KERAEZ
Moullérez Ar Bohl
1914

Instituut voor
Keltische taal — en letterkunde
der Rijksuniversiteit te Utrecht



vervallen

Instituut voor
Keitische taal- en letterkunde
der Rijksuniversiteit te Utrecht

OBEROU KLAODA AR PRAT (PLUENZIR)

Mestr-Skol Kristen e Lanndivizio

1.	<i>Mouez Reier Plougastell</i> , gwerziou ha soniou	0	95
2.	<i>Marvaillhou ar Vretoned e-tal an tan</i> (n'eus mui)		
3.	<i>Buez Arzur Breiz</i> (Kurunet gant K. B. B.), dar-voud e pemp arvest tennet eus istor Breiz	1	25
4.	<i>Nosveziou an Arvor</i> (Eil Levr Marvaillhou)	1	75
5.	<i>Trubuilhou an Ao. Gargam</i> (Kurunet gant K. B. B.), pe Torrou-penn an deiz kenta 'r bloaz pezig c'hoari	0	30
6.	<i>An Teir C'had hag ar Mevel laer</i> , daou bez-c'hoari eus ar fentusa	0	30
7.	<i>E ber gomzou, petra eo Trede Urz Sant Fransez</i>	0	15
8.	<i>Devit holl daved Sant Fransez</i> , paperen, 4 enebben, an 50 paperen	0	50
9.	<i>Kentoc'h mervel</i> , darvoud e tri arvest, tennet eus istor an Dispac'h en hor bro Breiz (Kurunet gant K. B. B.)	0	50
10.	<i>Kanaouen ar Skolaer</i>		
11.	<i>Kanaouen ar Vran</i>		
12.	<i>Kanaouen nevez da Janed Ark</i>		
13.	<i>Son Paotred Lanndi</i>		
14.	<i>Rimadelou Brezonek</i> (Trede Levr Marvaillhou).	2	»»
15.	<i>Sonjezonou Devot</i> , evit peb deiz eus ar miz	1	25
16.	<i>Marvaillhou evit ar Vretoned</i> (Pevar Levr), gant skeudennou eleiz	3	»»

WAR AR STERN :

17. *Difennour bihan ar Relijion*, an doare da gas da netra an darn vrava eus al lavarou-treuz eneb ar relijon
18. *Levirig-dourn Breudeur ha C'hoarezed Trede Urz Sant Fransez*

D'an Aotrounez enorus

Charlez Ar GOFFIC

hag

Anatol Ar BRAZ

o deuz skrivet traou ker brao

diwar-benn hor Mamm-Vro

Breiz-Izel !

Kinnig doujus hag anaoudek.

Klaoda 'r Pratz

Landivizio, 15 a viz Du 1913.

D'AL LENNER

..... Erruout a rejont (*Ruth hag he mamm-gaer*) eta o diou e Bethléem. Hogen an dra-ma a yo a mare an eost, ha Ruth a zonjas mont da bennaoui evit kaout peadra da veva. Dourn Doue he c'hasas war douar Booz, eun den pinvidik bras hag a yo a kar da Elimeleg. Booz a deuas war an deiz da welet e zervicherien a yo a tastum ed en e barkeier. O veza gwelet eno Ruth o pennaoui, hag o veza klevet gant pebeus karantez he devoa heuilhet he mamm-gaer, ez eas d'he c'haout hag e lavaras d'ezi : « Va merc'h, chomit e-kichen va flac'hed, hag il war o lerc'h e kement leac'h ma vezint oc'h endramm. P'ho pezo sec'ched, evit eus ar pod a zo ama evit va zervicherien, ha da vare ar pred deuit da zibri asamblez ganto. » Booz a lavaras ive d'e zervicherien : « Pa viot oc'h endramm, lezit ama hag a-honi eur penn bennak da gouenza eus hoc'h herdin evit n'he devezo ket a vez oc'h o das-tum.... »

(Morvan, Histor an Testament koz hag an Testament nevez).

Ha me ive a zo bet o pennaoui... en eun douar drus e leac'h ma sav a bep amzer pennou ed eus ar re gaera. Endram'edon o pennaoui ez eus deuet Boozed Breton d'am c'haout, hag o deus lavaret d'in krak ha berr : « Chomit dre ama, kuttuillhit bleun brug eus a Vreiz, pe bleun lann, pe bleun balan, mes en han' Doue, n'it ket da glask danvez estren... Troet ho peus e Brezoneg eun toullad brao a varvailhou ; dastumit anezo ; kemerit ive er *Feiz ha Breiz* koz eus an traou dudiusse a blijas kement gwechall d'ar re a zo bet en hon raok ; zoken, meur a hini eus ar re Igoz o gwelas gwechall eno, o devo plijadur oc'h o gwelet a-nevez klezet en eul levrig... »

Setu ar pez am eus grêt.

Kutuilhet em eus ama hag a-hont marvailhou gallek ha brezonek gant m'o devoa spered breizek.

Lavaret a ran em eus *kutuilhet*, ne lavarin ket ha ne lezin den da lavaret em eus *peilhet*. Kement am eus kemeret a zo bet aotreet d'in gant o ferc'hen. Ha p'eo gwir e kavan tro e livirin ez eo eur blijadur evidon trugarekât ama an aotronez abad Perrot, Job-Per Ar Braz, Fransiz Even, Simon (mouller e Roazon), ha Yann ar Floc'h, eus ar gwiriou o deus roet d'in. Mes, petra lavaran ? n'eo ket me hepken a drugarekao anezo ; me zo sur e savo an hevelep mouez anaoudek eus kalonou kement Breizad a lenno al levr nevez-ma.

Kea, Levrig nevez, douget war aezen ar balan, ar brug hag al lann, kea da lavaret d'ar *paour kez Bretoned* eus an ugentvet kantved a goms c'hoaz ar Brezoneg ez eo o yez din a bep doujans, a bep karantez, a bep enor. Lavar d'ezo ouspenn ez eus en hon amzer tud a bep renk, a bep stad, lod zoken er c'hargou uhella, o deus desket ar Brezoneg, a gar hag a goms ar Brezoneg ken alies gwech ma kavont tro d'hen ober, a zi-fen ar Brezoneg, hag a c'houlien evitan e Breiz ar frankiz a zodleet d'ezan e pep leac'h.

Me va-unan, Aozer al levr-ma, am eus grêt betek-hen, a gav d'in, ar pez a ch'ellen evit-se. Setu ama ali daou veleg, etouez kalz a reou-all, hag ali eur mignon mat eus Brest :

Mon cher ami,

Tous les amis de la Bretagne vous sauront gré de ne pas désespérer d'elle. Elle est bien menacée, hélas ! dans tout ce qu'elle avait de beau et de glorieux. Nos compatriotes n'ont plus de fierté nationale. Il y a cependant un mouvement nouveau de relèvement, et dans cette tentative admirable de renaissance vous avez une part absolument hors ligne.

Que le peuple se mette à suivre tous ces vaillants initiateurs, à les écouter, à les lire, et la Bretagne sera sauvée ! Peut-être nous serait-il très utile d'avoir des colporteurs. Les protestants en ont.

Je vous envoie la trop modique somme de dix fr.,
avec l'expression de mes vœux les plus ardents pour
le succès de vos travaux. En tout cas Dieu vous en
tiendra compte, et aussi, j'aime à le croire, la Bretagne
de l'avenir.

Votre tout dévoué,
C. GUITTEREL, ch. hon.,
Curé de Gouarec, Diocèse de Saint-Brieuc.

.....
Va mignon ker,

....Ho levriou a vez lennet gant plijadur. Kalz a vad
a rit dreizo...

Ho servicher,
LICHOU,
Person Santec.

.....
Kear Vrest, ar 4 a viz Meurs 1913.

Aotrou Klaoda 'r Prat, va mignon ker,

Kemerit va hano evel rakprener ho " Pevare Levr
Marvailhou ". Mall bras am eus d'e gaout. Ar re-all a
zo ken brao, hag o deus grêt kement a blijadur er
goany-man, er beilhadennou tro war dro, m'ema va
mignonned o c'houlen diganen peur em bezo eun all
da rei d'ezo da lenn.

Pemp tiegez o deuz grêt o levriou evelse diouz an
noz. E Sant-Thonan em eus gwelet betek seitek den
o selaou ho Marvailhou, er m'emes nosvez.

Pebez blager ! a lavare lod — Setu aze eun distager !
a lavare an holl.

Buhan 'ta ar « pevare levr » !

...D'eoc'h a greiz kalon evit Breiz, gant va gwella
geurc'hemennou.

Ywan TILLENON (Louzaouer).

• • • • •
Gwella 'z eo m'am eus gret eur vad bennak gant va levriou.
Ne glaskan ken !

KLAODA 'R PRAT

Mestr-skol kristen,

euz Akademi ar Brezoneg.



MAO KERGARREG

an hini en doa grêt marc'had gant an Diaoul

Selaouit holl mar oc'h eus c'hoant,
Hag e klevlet eur gaozig koant,
Ha n'ez eus enni netra c'haou,
'Met marteze eur ger pe zaou.

En amizeriou-ze, pell zo abaoe, ez oa eun aotrou pinvidik, ker pinvidik ma ne c'houie ket ar pegement eus e zanvez. Hogen, dre ren buez direol ne zaleas ket e stal da vont da stalig, hag en devoe dizale kement a zle hag en devoa bet a beadra. Ma sonjas, 'velkent, lakaat eun tammig urz en e aferou.

Eun dervez edo o sellet ous e liziri ferm, hag e welas ez oa eun den hanvet Mao Kergarreg en unan eus e zouarou ha ne baee morse netra ebet d'ezan : edo eno evel eur perc'hen en e dra. Kas a reas kemennadurez d'ar c'houer da zont d'e vaner.


Oc'h en em gaout dirak mogeriou ar c'hastel, setu ma wel Mao diou skeuden livet war an nor vrás : a-gleiz, hini Satan goz, hag a-zeou hini hor Zalver Jezuz-Krist. Tenna reas e dok d'an diaoul hag e plegas e Benn izel dirazan, en eur lavaret : « Da hema da genta ; n'eo ket kustum eus kement a enor, ha moarvad hen lakai da calvezout d'in ; diskouez a rai anaoudegez vat en eur rei d'in eun taolig skoaz mach en em gavan dies, evel am eus aon e vin.

Eun tammig salud a reas ive d'hor Zalver, mes ken dichal ha ken difre !... Hag hen er c'hastel.

Digemeret fall e oe gant an Aotrou. Hema a gomzas uhel, a ziskouezas e baperou, hag a lavaras da Vao, e

feac'h, e vije grêt foar war gement en doa ma n'en
dije ket paeet kement a dlie abenn an eizvet dervez.

Mao a deuaz ac'hano en eur skrabat e benn. Ne
c'hoarze ket, me lavar d'eoc'h, n'oa ket a beadra da ober



ken nebeut. N'en doa gwenneg ebet ha ne c'houie petra
da ober evit kaout. Ouspenn-ze, eun toulleud tud en doa
da vaga.

Saludi a reas adarre ar pez divalo a yoa livet war an nor ; ne reas van ebet avat ouz an hini a yoa en tu deou.

Dizale ec'h en em gavas gant eun aotrou bras, gwisket kran, douget gant eur pez marc'h du.

— Deiz mat deoc'h, va den, a lavaras an aotrou.

— Ha deoc'h, va Mestr, a lavaras ive dioc'htu ar c'houeriad.

— Gouzout a ran eus peleac'h e teuez, ha petra zo war da spered oc'h ober dies d'it. Bet out a-ze e ti an Aotrou, da Vestr. Lavaret en deus d'it e ranki paea d'ezan eun toullad mat a arc'hant en 'eiz dez-ma, pe e lakaio foar war da arrebeuri ha da venviou labour ; hogen, n'ec'h eus tamm arc'hant ebet ha n'ouzout penaos en em gemeret evit kaout.

— Re wir eo an dra-ze, siouaz !

— Ac'hanta, me fell d'in rei skor d'it, abalamour m'out bet dereat em c'henver.

— Eun den madelezus oc'h ; hogen, me garfe gouzout gant piou em eus afer.

— Me eo an hini ac'h eus gwelet e skeuden du-ze war an nor, an hini ac'h eus tennet da dok d'ezan araok hen ober d'egile.

— Ya ! ya !... Hogen, aon am eus na deufac'h da c'houlen diganan eun dra bennak grevusoc'h eget an an dra-ze ; hervez ar pez a gonter, peurvuia e c'houlen nit goasoc'h.

— Penaos ?... Penaos ? Tra ! rei evit kaout, n'eus netra lealloc'h, mechans ?... Paotr paour, gwel e pe stuz emaout ; p'etra deuio da dud da veza ?

— Mat, livirit d'in 'ta neuze petra c'hoantait.

— Goulen a ran beza perc'hen war unan eus da vu-gale... Netra ken !

— Biken ne rin kement-se.

— Gwel 'ta paotr paour ! Setu aze ez peuz sez krouadur. Bremaik abalamour d'an Aotrou-ze n'helli mui labourat evit gounit bara d'ezo. Petra 'teui da veza ganto ?

— N'eus fors ! Biken ne roin d'eo'ch hini eus va bugale !

En em gaout ar pez a garo !

— Evel a gari ; hast affo avat ; n'hellan ket chom da zale re ama, rak n'eo ket labour a vank d'in !

Mao a skrabas e benn hag a jomas eur pennadig da zonjal. Tremen a reas dre e spered meur a hini eus ar c'hontadennou en doa klevet ken alies er beilhadegou goude koan. Er c'hontadennou-ze Paol goz a veze tapet dalc'hamad en e lasou. Hag e lavare outan e-unan : « Deomp atao, me ive a ouezo tenna eun dreusleuzen da hennez, pa vezou deut ar mare. »

— Setu ama petra 'm eus sonjet, a lavaras Mao : Mar fellfe d'eo'ch kemeret ac'hanon, el leac'ch kemeret va bugale, me a zo dare da ober marc'had ganeoc'h ?

— Gwelomp 'ta da varc'had, rag goude tout, n'eus fors d'in pe te da-unan pe da vugale da gaout.

— Ac'hanta, goulenn a ran epad tregont vloaz adalek hizio, kaout bep mintin pa zavin mil skoed en aour en archedig koat dero am eus du-ze e kichen va gwele.

— Hag az pezo hervez da c'houlen : bep mintin pa zavi, epad tregont vloaz, e kavi mil skoed en aour en archedig koat dero a zo en da gambr e kichen da wele, ha d'an termen-ze e teui ganen d'al leac'ch ma fello d'in kas ac'hanout.

— Ya, arabat avat e vankfe netra d'ar mil skoed a dlean kaout bep mintin, rag d'an deiz ma vanko eul liard bennak e vezou torret ar marc'had, evel just.

— Eun dra c'hreat eo. Ha brema e skrivi gant da c'hoad, da hano war ar paper-ma pourchaset ganen araok dont d'az kaout.

Hag e tiskouezas d'ezan ar paper el leac'h en doa skrivet ar marc'had.

— Ne n'ouzoun ket skriva, a lavaras Mao, nemet la-kaat eur groaz a rafen eleac'h va hano?

— N'em beus ket ezom a groaziou. Gra eur c'helc'hig aze, a-walc'h e vez o dra-ze.

Ar beacher a ziskennas diwar e varc'h. Gant beg lemm laonen eur gontel vihan e lakaas eur bizen-c'hoad da darza war breac'h Mao, hag e lavaras oc'h asten d'ezan ar paper :

— Sell, gra eur c'helc'hig aze warlerc'h ar skritur.

Mao a reas ar c'helc'hig, hag egile a blegas ar paper d'e c'horren en e c'hodel.

Goude e savas adarre war e varc'h hag e lavaras :

— Abenn tregont vloaz, deiz evit deiz, te en em gavo ama adarre ; diouall avat da vankout, rak me a gavo ac'hanout n'eus fors e peleac'h e c'heifses beza.

War gement-se, an Aotrou a yeas gant e hent.

Ha Mao a zistroas d'ar gear laouen bras.

— Mil skoed bemdez, a lavare hen, epad tregont vloaz ! Ne vez den ker pinvidik ha me er vro a-bez. D'am zro me c'hello c'hoarzin goap d'am mestr ; egile avat, Guilhou goz, — hen eo, n'em eus douetans ebet war gement-se, — en eur zonjal mat, a-benn tregont vloaz ama me i'm bezo kavet eun dreuflezen bennak da c'hoari d'ezan evit kaout peoc'h digantan.

* *

Epad ma tiruilhe ar zonjou-ze dre e benn, e valee skanv hag e tigouezas gantan hep dale eur marc'heg-all savet war eur marc'h gwenn. An Aotrou-ma a yo a henvet a-walc'h oc'h ar skeuden livet en tu deou d'an nor er c'hastel.

Ar marc'heg a jomas a-zav hag a gomzas outan evel-hen gant eur vadelez dispar.

— Deiz mat d'eo'ch, den.

— Deiz mat d'eo'ch ive, va Aotrou a respondas Mao.

— Gouzout a ran ec'h en em gavit nec'het, ha setu e teuan da ginnig skoazel d'eo'ch. Er pemzek deiz-ma e tleit paea eun toullad mat a arc'hant d'hoc'h Aotrou, n'hoc'h eus ket a beadra, ha kalz tud ho peus da vaga.

— Fazia rit avat; n'em beus ezom sikour digant den ebet; em zi du-ze em beus kalz muioc'h a arc'hant eget n'am bezo da gas d'am mestr. Bennoz d'eo'ch kouls-koude evit ho kalon vat.

War gement-se peh-hini eus an daou zen a gendal-c'has gant e hent.

Pa zigouezas er gear, kenta tra reas Mao oa sevel d'e gambr gant e wreg.

Dirazi e tigoras ar vouest koat dero hag e chomas digor he genou da zellet ouz ar bern aour a yoa dirazi.

— Jezuz, va Doue ! emezi, eus peleac'h e teu d'eompni kement-all a aour ?

— Arabat eo d'it sponta, a lavaras Mao ; me a c'hoar eus peleac'h e teu... An dra-ze a zell ouzin-me...

— Evei en doa lavaret Guilhou goz, Mao a gavas bemdeiz, bep mintin, e vil skoed en e arched. E nebeut amzer e teuas da veza pinvidik-mor ; paea reas e zle d'an Aotrou ; prena reas zoken e gastel, ha di ez eas da jom gant e dud.

Den na c'helle komprenn penaos e c'hellas Mao dont da veza ker pinvidik e ken nebeut-all a amzer. Mao a rank beza lakeat an dourn war eun tenzor, a lavare an darn vuia eus an dud, n'eo ket posubl a hend-all...

Unan bennak evelato a gomzas a vouez izel eus ar zorserien, a en em glev gant an diaoul ; hogen, kaer a oe spia, mont war roudou Mao, den na c'hellas dont a-benr da welet e veze oc'h henti paotred ar zabad nag ar zorserien. Den na gomprene netra.

* *

Mao a zavas mad e seiz krouadur. Kaset e oent d'ar skoliou bras, el leac'h e rejont studiou kaer.

Unan anezo a deuas da veza arc'heskob.

Unan-all, eskob.

Eun trede, vikel vrás.

Ar pevare, person en e barrez.

Ar pemped, kure.

Unan a oe ermid en eur c'hood.

Ar seizvet a yoa eat da laer. Ken brudet oa e daoliou kaer zoken, ma oe lakeat da vestr war ar re-all. Mont a rea da beilha ar veajourien war an hentchou bras, da beilha ar c'hestel hag ar c'houenchen. Deuet oa da veza spount an holl dre ar c'halter. Deuet oa da veza glac'hag e dad, e vamm hag e vreudeur.

* *

Hogen, eun termen a zo da bep tra er bed-ma, hag an tregont vloaz roet gant Guilhou goz da Vao Kergarreg a yoa o vont da echui. Ar paour kez den a deu da veza tervalloc'h tenvalla e benn. War zantelez e vugale, nemet unan, e fizie kalz evit kaout skoazel er stourmad ez ea da gaout.

Mont a reas da govez gant an hini anezo a yoa person ar barrez. D'ezan e tibunas ar guden penn-da-benn. Ar beleg a skrijas gont heuz o klevet traou ker grevus. N'en doa ket, emezan, galloud da absolvi eur pec'hed ker bras. Hag e kasas ar pec'her d'e vreur eskob. Heman a lavaras ar memes tra, hag a gasas Mao da gaout an arc'heskob, hag heman e gasas d'an ermid, d'ar c'hood.

An ermid a yoa eun den meurbed santel a dremene e holl amzer o pedi hag oc'h ober pinijen. Ne wele den ha n'en doa ken kompagninez nemet loened ar c'hood; d'ar re-ma avat ez oa mignon bras, hag an eil a rente servich d'egile.

E eal mat a deue bemdez d'e welet ha da goms gan-tan evel gant eur mignon.

An ermid a yoa daoulinet war dreujou e zor, e zaou-

lagad savet en nenvou, pa zigouezas Mao. Gedal a reas ma vije echu e beden gant ar manac'h, ha neuze e roas d'ezan da lenn al lizer en doa skrivet an eskob d'ezan. El lizer-ze e lavare freas e pe stad heuzus edo o zad. An ermid a lennas al lizer, hag a lavaras, an daelou leun e zaoulagad :

— Siouaz ! tad kez ! ken grevus eo ho pec'hed ma n'hellan, ken nebeut na va breudeur, ober netra evi-doc'h. Mes mar kirit chom ganen ama da dremen an noz, me a bedo evi-doc'h ha warc'hoaz marteze em bezouen ali mat da rei d'eoc'h.

E kreiz an noz, endra m'edo an tad kousket mat o tiskuiza e izili, an eal a deuas evel kustum d'en em ziskouez d'an ermid, ha setu ama petra lavaras :

— Galloud ebet war an douar n'hell terri ar marc'had en deus sinet ho tad gant e c'hoad. Mes pedi rin evitan an Intron-Varia, ha warc'hoaz me a zigaso respont d'eoc'h.

War gement-se an eal a zistroas d'an nenv, hag an ermid a gendalc'has da bedi betek an deiz.

— Ac'hanta va mab ? a lavaras an tad o tihuni.

— Ac'hanta, va zad, bet eo evel kustum va eal mat o welet ac'hanon ; komzet am eus gantan diwar ho penn. Lavaret en deus d'in e pedje an Intron-Varia, hag houma d'he zro a bedo he Mab Doue. En noz a zeu e tigaso respont d'in. Chomit eta ganen ac'hann da warc'hoaz vintin, hag e tremenimp an deiz-me o pedi hag o ouela d'ho torfed.

Pignet d'an nenvou, an eal a yeas da zaouilina ehars treid e Vestrez, ar Werc'hez Vari, d'he fedi da c'houlen trugarez da dad an ermid. Ar Werc'hez madelezus he devoe truez ouz Mao, hag a yeas da bedi he Mab evitan.

— Kergarreg ?... C'houi n'ouzoc'h ket, va mamm, en deus ar reuzeudig-se tennet e dok da genta da skeuden va enebour livet war dor porz an Aotrou ?... C'houi n'ouzoc'h ket, va mamm, em beus kinniget sikour d'e-

zan da stourm ouz Lusifer edo o nevez gwerza d'ezan e ene evit aour, dre eur marc'had sinet gant e c'hood. Ar marc'had-ze a zo brema en ifern. P'eo gwir, koulskoude, va mamm, e pedit ac'hanon evitan, n'hen dilezin ket, ha p'eo gwir eo ker santele vugale, nemet ar yaouanka, eo leal d'in ober c'hoaz eun dra bennak evitan. Hogen, a-raok kaout e bardon diganen-me e ranko monte-unan ez veo da gerc'hat en ifern ar paper-marc'had a zo tal-vezet d'ezan d'en em werza da Zatan evit aour.

N'eo ket eur veaj eas da ober ; red eo kaout kalz nerz-kalon evit se ; hogen, gant ar skoazel a roin d'ezan e c'hello dont abenn eus e daol.

Setu ama eur wialen wenn da gas d'ar paour kez Mao Kergarrek. Mar en deus fizians ennon e c'hello ganti en em zifen ouz holl diaoulou an ifern ha lakaat Satan góz e-unan da restao d'ezan ar paper sinet gant e c'hood. Red eo d'ezan avat beza bet oc'h ober e dro a-raok ma vezoz bet peur-glozet an tregont vloaz, rak goude-ze e vije re zivezat, ha Satan en divije leac'h da lakaat seveni penn-da-benn ar pez a zo er marc'had.

Ar Wer'chez a drugarekaas he Mab Doue ; kemeret a eure ar wialen wenn da rei d'an eal, hag hema a oe mall gantan mont d'he c'has d'an ermid ha da zisplegà d'ezan kement a yoa d'a ober.

**

Pa oa eat an eal kuit, an ermid a gomzas evel-hen ouz e dad :

— Bez'e chellit kaout eun tamm fizians c'hoaz, va zad, abalamour da bedennou va eal mat hag ar Wer'chez ; an Doue, leun a vadelez hag a drugarez evit ar paour kez pec'her a ziskouez keuz, a blij gantan sellet a druez ouzoc'h ha rei dourn d'eoc'h d'en em denna a dre skilfou Satan. Hogen, red e vezoz d'eoc'h avat kaout nerz-kalon, rak risklou bras a gavot war hoc'h hent.

— Riskl ebet, va mab, na vezoz en tu-all d'am nerz-kalon.

— Setu eta, va zad, ar pez ho pezo da ober : red e vezo d'eoc'h mont d'an ifern ez veo, da ziframma eus daouarn Satan ar skrid milliget ho peus sinet gant hokoad. Hag eo red d'eoc'h mont a-raok ma vo echu an tregont vloaz, da lavaret eo en tri dervez-ma !

— Mont d'an ifern !... Morse ne zistroas den ac'hano ha koulskoude eur fisians leun am eus e komzou Jezuz, p'eo gwir e c'hourc'hemenn d'in dre ho kinou. Mont a rin da welet.

— Setu ama eur wialen wenn en deus digaset va eal mat evidoc'h ; ganti e c'hellot dont a-benn eus ho taol ; ganti e c'hellot mont a-dreuz armeou an diaoulou ha tenna ar paper eus daouarn Satan.

— Mes penaos mont d'an Ifern a-raok beza maro ? Ha piou a ziskouezo d'in an hent ?

— Mar ez eus unan bennak war an douar hag a anavez hent an ifern, eo va breur laer, a-dra-zur ; eat eo doun en hent-se, me gred, red e vezd d'eoc'h eta mont d'e glask d'ar c'hoad el leac'h m'ema o chom gant e gensorted. Mont a ran da skriva d'eoc'h eul lizer da rei d'ezan.

Hag an ermid a skrivas eul lizer, hen roas d'e dad gant e vennoz, hag ar c'hez koz a yeaas en hent.

Noz oa dija pa erruas war harzou ar c'hoad el leac'h edo al laeron. Daou zen a zilammas eus ar c'harz da gregi en e chouk, hag o veza lakeat diou bistolen d'ezan dindan e fri a hopas :

— Ar yalc'h pe ar vuez !....

Diskouez a reas e lizer, hag e c'houennas gwelet ar Mestr. Kas a rejont anezan dre ar c'hoad betek eun toull hag a yea doun doun dindan an douar. Mont a rejont ebars, ha dizale e figouesjont dirak ar Mestr bras. Mao a astennas an dourn da rei al lizer d'e vab. Goude beza e lennet, hema a lavaras :

— Penaos, c'houi eo, va zad ? Hag e pe stad !....

Hag o lavaret kement-se e trueze war ar paourkezkoz.

.... Gwelet a ran eo mall d'eomp en em jacha ; mont a ran va-unan d'ho lakaat war an hent eün ho kasobetek penn.

Kas a reas e dad da benn pella ar c'hood, d'eur volz a yoa kleuzet en douar, hag e lavaras :

— Aze eo ! It er c'hao-ze ; baleit eün dirazoc'h, daoust d'an denvalijen. En em gaout a reot evel-se en eur blennen el leac'h ma kavot eur c'hastel koz, du pod, ha kelc'het gant mogeriou uhel. N'ho pezo ken nemetskei war dor houarn ar c'hastel-ze hag e vezd digoret d'eoc'h. Ha p'eo gwir ez it araozoun-me — rak mont a dlean di ive eun dervez, — goulennit 'ta gwelet al leac'h a zo miret d'in er gear-ze, ha mar teuit en dro — poan am eus o kredi — c'houi a deuio da zigas kelou d'in.

Ha war gement-se, al laer a deuas war e giz, leun e galon a druez, ar pez a rea d'ezan beza souezet. E dad a yeas dre an hent tenval.

* *

Bale a reas pell pell amzer, ar wialen wenn en e zourn, lugernus a-walch' evit diskouez d'ezan e hent. En em gaout a reas er blennen el leac'h edo ar c'hastel. Skoi a reas war an nor houarn.

Eur prenestrig a zigoras en nor vrás, hag e oe gwelet eur penn heuzus kerniel warnan. Heman a c'houennas :

— Piou a zo aze ?

— Mao Kergarreg ! a lavaras an hini a yoa o ti-gouezout.

— Mao Kergarreg ! Ya, aze ema ho kador ouz ho kortoz, e-kichen hini ho mab, mestr al laeron. Kredi reamp ho pijet ac'han da varc'hoaz,

— It da lavaret d'ho mestr em eus ezom da gomz outan.

Ar porzlier a yeas raktal da gemenn da Zatan oa goulen d'ezan e-tal an nor, ha Satan a deuas kerkent.

— Penaos 'ta, va mignoun Mao, te eo a zo aze, ken

abred-se ? N'edon ket war c'ched ac'hanout ac'han da varc'hoaz ; mes p'eo gwir out deuet, deus ebars, ha ra vezi deuet mat !

Ar porzier a zigoras an nor, ha Mao a yeas en ifern.

— Lakitanezan war e gador, a lavaras Satan.

Pevar diaoul a dosteas da gregi e Mao. Hogen, a-walc'h e oe d'ezan steki outo e wialen wenn evit ober d'ezo mont war o c'hiz buhan ha buhan o leuskel blejadennou spontus. Pevar-all a deuas war e dro, kaset gant Satan ; hogen, kerkent ha ma oe stoket outo ar wialen wenn ez ejont ive war o c'hiz oc'h ober kement a ardou ha pa vije kroget an tan en o bouzellou.

— Petra c'hoarvez gant ar re-ma ? a lavaras Satan ; ha setu hen e-unan da dostaat evit lakaat e grabanou war Mao. Santout a reas ive ar wialen, ha kerkent e tec'has oc'h eonenni gant ar gounnar.

— Er meaz !... Er meaz ! eme an diaoulou a bep tu ; er meaz ! an hini a zo deuet ama a-raok e boent ! E rank beza eur relegou santel'bennak gantan !...

Den avad na grede mui tostat outan.

Chom a rea eno e kreiz an dachen, dispont kaer.

— Nez in ac'halen, emezan, nemet pa 'm bezo bet digant Satan ar paper em eus sinet gant va goad !

— Ne'z pezo ket anezan ! Kers kuit buhan, ha varc'hoaz e tizroi, da vat neuze, evit chom atao.

— N'in ket ac'halen a lavaran d'it, ken em bezo bet va faper, pe da ler a zamanto.

— Ne'z pezo ket : kers, ki !

Ha Mao gant e wialen o skei a-gleiz hag a-zeou war an diaoulou ha traou-all a yoa da dosta d'ezan.

An drouk-sperejou a youc'he :

— A-walc'h ! a-walc'h ! roit d'ezan e baper, ha ra 'z ai prim ac'halen !

Satan a daolas e baper-march'had da Vao, en eur lavaret :

— Del, setu aze da haper, kers alese prim.... Dizrei a ri, ha neuze e kousto d'it.

Mao a gemeras e baper, hen lakaas en e c'hodel ; edo o vont da lavaret kenavo d'al leac'h milliget pa deuas sonj d'ezan eus goulens e vab laer, da lavaret eo teuler eur zell war ar c'hougn a viret d'ezan en ifern.

— A-raok mont kuit, emezan, me fell d'in gwelet c'hoaz al leac'h a virit d'in ha d'am mab fall.

An Diaoul-Kamm a ziskouezas d'ezan diou gador houarn e kreiz an tan, o diou tomm betek beza gwenn. Hag e lavaras :

— Sell, aze emaint !

Mao a skrijas gant heuz, hag a jachas buhan gantan e c'haravellou, gant ar paper klozet mat en e c'hodel.

**

Dizrei a eure da gaout e vab laer da rei d'ezan kelou eus an ifern.

— Ac'hanta, va zad. emezan pa her gwelas, gellet ho peus eta dont a-benn eus ho taol, pa ho kwelan dirak va daoulagad ?

— Ya, va mab, deuet oun a-enn, dre c'hras Doue hag ar Wer'hez santel, dre c'hras ar vialen wenn ive roet d'in gant ho preur. Skoazellet he deus ac'hanon.

— Hag oc'h ket en ifern ? Ar paper-marc'had a zo ganeoc'h ?

— Bet oun en ifern, ha setu ama ar paper-marc'had sinet gant va goad !

Hag e tiskouezas d'ezan ar paper.

— Ha goulennet hoc'h eus ive gwelet ar blas a virer d'in du-ze ?

— Ya, va mab, her gwelet am eus.

— Ac'hanta, va zad ?

— A paotr paour !... Eur gador houarn tommet betek ar gwenn, e kreiz eul lennad tan, setu petra eo da blas

en ifern : tostik-tost d'ezan ema va hini ; spountetoun c'hoaz pa zonjan er pez am eus gwelet.

Setu c'houi 'ta, va zad, deuet eus tre skilfou Satan hag er meaz a riskl hiviziken ; mes, me ?... Epad ma 'z oc'h bet oc'h ober ho tro du-ze em eus greateur zell war va doare ; kaset em eus da vale diwar va zro an holl ganfarter fall eveldon a rea an droug ganen ; bet oun o kovez gant person ar barrez tosta hag en deus lavaret d'in n'ez eus pec' hed ebet ha n'hellfe ket kaout pardon digant Doue, ez eo bras evel ar mor trugarez an aotrou Doue, hag e c'hellen c'hoaz o kaout keuz d'am fec'hejou hag oc'h ober pinijen galet evito beza pardonet ha salvet. Kredi a ran kement-se, p'eo gwir hoc'h bet pardonet c'houi, ha fizianz am eus e madelez Doue. Ne gilin dirak pinijen ebet, daoust pegen kalet bennak e c'hellfe beza.

Ne zalein ket da gonta d'eo'ch ar pinijennou spontus a reas al laer bras a-c'houdevez poulzet gant gras Doue evit miret da goueza en ifern el leac'h a yoa dija en e hano ; mervel a reas lazet gant e binijennou. Hag evel ne c'houiet ket e pe stad edo e ene, an tad a reas ar pez a yoa merket en testament en doa roet d'ezan e vab abaoe m'oа en em roet d'ar binijen.

Lavaret en doa : Da hanter-noz, oc'h sklerijen al loar c'houi a lakaio va arched a-dreuz war voger ar vered, en hevelep doare na skoio ket muioc'h en diabarz eget en diaavez ; goude-ze c'houi en em denno er porched evit gwelet petra dremeno. Gwelet a reot dizale eur goulm hag eur vran o tont unan eustu ar sav-heol eben eus tu ar c'huz-heol. En em ganna raint war ya arched. en em beilha zoken betek ar goad. Ar vran a boanio da lakaat an arched da goueza er meaz eus ar vered ; ar goulm, eus he zu, a glasko hen lakaat da goueza ebarz. Ma vez treach' ar vran, me a vezol kollet da viken ; mes ma chom an treach' gant ar goulmig wenn, kement-se

a ziskouezo d'eo'ch oun salvet, rak kerkent va ene a nijo d'ar Baradoz, el leac'h ma teuot d'am'chaout.

Da hanter-noz eta ez eas Mao da lakaat arched e vab a-dreuz war voger ar vered, hag ec'h en em guzas er porched. Prestik goude e welas o tont, pep hini eus hè zu, eur goulm hag eur vran. Ar vran da genta, a yeas evel dre ruzou penn-da-benn an arched, hag a reaz d'ezan kostezia kalz en diavez gant eun taol askel nerzus. Ar goulmig wenn a reas memez tra d'he zro, ha gant eun taol askel a lakaas kompez an arched. Gant eun eil taol askel ar vran a oe darbet d'ezi ober d'ezan kouenza er meaz ; mes ar goulmig a reas kaeroc'h : ober a reas d'an arched kostezia war an diabarz. Ar brezel a badas evel-se epad tost d'eun hanter-heur, an treach' gwech gant unan, gwech gant eben. Mao a grene gant an enkrez en e borched... An treach' diveza a jomas gant ar goulmig wenn : an arched a gouzezas er vered, hag en eur gouzeza e tigoras, hag e teuas anezan eun eil koulmig wenn hag a yeas da gaout an hini he doa stourmet ken kalonek oc'h ar vran zu. O welet kement-sè, Mao a varvas gant e levenez, war an heur, hag el leac'h diou goulmig e oe gwelet teir o sevel d'an nenv.

An teir goulmig-se oa eneou neteat an tad, ar mab hag ar vamm. Doue en doa aotreet d'ezi dont er stum-ze da rei skoazel d'he mab.

Skrivet e galleg gant Luzel.





Boud ! Boud ! Boud !.... Boû....d !!! (1).

Piou en deus ezom eur votezig voulouz rus tan ifern
gant eur boukl arc'hant ?... Piou a breno botezig an
aotrou S. Per ? Ema o vont da veza lekeat en gwerz, o !
marc'had mat, bezit dinec'h !...

Evel-se e youc'he ar pez diaoul a zo karget gant Lu-
sifer goz da ober an embannou en ifern. Hag ez ea, hag

(1) Gwelit Kilhog Sant-Per e Nosveziou an Arvor, p. 26.

e c'houeze en e gorn-boud. Diredet a rea eur bern diaoulou d'e zelaou, diaoulou bras, diaoulou krenn, ha diaoulou bihan, hag e choment digor frank o ginou da zellet ouz an embanner ha da glevet ar pez a yoa a nevez.

Hag e tiredent, a bell, o kredi gwelet eun dra gaer bennak, pa 'z int ker kustum da welet loustoniou, o kredi kaout da c'houesât eun dra bennak hag a raje vad d'o c'halon, p'ema bepred o fri er fank ; pe marteze e kreden edod o vont da lakaat da zina eun emglev madelezus, pa na reont ha ne raint morse nemet droug ha dougen d'an droug.

Mes, petra rea d'an difeson-ze kaout kement a hast d'en em zizober eus eur votezig kaer dudius da welet, laeret gantan e hars dor ar baradoz ? Perak kemeret anezi ma ne blije ket d'ezan ? C'hoant en doa bet da c'hoari eun dro zivalo d'an Aotrou Sant-Per, ha padal hen e-unan eo a oe tapet ar muia. Setu ama penaos.

Netra ken nemet beza krog er votez benniget hen lakeu da skrijal ha da yudal, hen deve gwasoc'h eget glaou rus an ifern, hag ar pez a rea muia poan d'ezan, moarvat, eo ar red-korf iskiz hag ar boan gov diremet a yoa kroget ennan abaoe m'en doa great al laeronsi. Ya, kaer en doa starda war e vouzellou, kaer en doa en em zifreta, merzer oa ken na venne lammet e avu eus e greiz gant e ivinou.

Mar deo gwir er bed-ma lavar ar re goz :

Bleud an diaoul a ya atao da vrenn, er bed-all, en ifern dreist-oll. eo gwiroc'h c'hoaz. Gouzout mat a rit ne bliij ket ar relegou santel, an traou benniget, d'an diaoulou ; hag ar votezig-ze bei da zant Per a yoa, mechant, eur releg a dalvoudegez, eur releg benniget pa he doa epad keit-all a amzer skoet war leuren ti Doue t

An hini a daole ar muia war ar votezig voulouz a yoa eur mell pez vil a ziaoul, tal du, fri kaouen, ken teo ha ken louz ar bleo warnan ha war eur marmouz. Roet e oe d'ezan evit tri c'chant pec'hed marvel !

An holl laeron, evit doare, o deus eur fri kamm, eur fri yuzeo ; an diaoul-ma dres, a yoa e garg bunta pe dougen d'ar pec'hed a avarisded ar re a zo o tiouall ar c'hefiou a espern, ar re a zo o micher laerez, en eun doare pe eun-all.

C'hoant en doa da ober eus ar votezig-se e bodig-espern. Eno, da vihana, a zonje, e vezò dastumet mad va feziou arc'hant ! » Rak, kaer en doa bet betek eno lakaat e boan d'o c'huzat, bepred e teuet a-benn d'o dizzelei, ha da gemeret eun darn anezo. Perak en em zicza, en ifern ?... Marteze zoken, emezan, piou c'hoar ? e raint re vihan, evel ar viou en neizou !!!

Eno eo e fazias, avat, ar genaoueg zo anezan. Rak, ar votezig venniget n'edo ket eas en ifern, skler eo ; mont ha dont a rea anezi he-unan ; gwech ez ea da guzat dindan eun arbel, gwech-all ez ea a.ispilh ouz eun treust, gwech en ti, gwech er meaz. Hag ar perch'en a yea en egar o welet kement-se, rak kredi mat a rea e veze laeret e votezig voulouz d'ezan, — ne vije ket bet dieas hen ober ! — hag e kolle bemdez kalz amzer ouz he c'hlask.

Eun dervez m'en doa kollet muioc'h c'hoaz a amzer ez eas e kounnar rus, hag o veza kroget er votezig koant ec'h hejas anezi evit kaout ar peziou arc'hant, hag e taolas anezi gant tiz ha gant eun nonde heuzus ar pella ma c'hellas en ifern.

Mat, tud keiz, mont a reas da blada war benn eur paour kez micherour a Landerne eat di abalamour d'eun taol fall en doa great o welet pegement a zle en doa. Ya, e vern dle en doa douget anezan da werza e ene d'an diaoul evit kaout arc'hant digantan. An diaoul en doa selaouet e beden ; kemeret en doa an ene evit nebeut a dra, evit... netra, ha kaset goude ar paour keaz d'en em grouga !... Evel-se eo ec'h en em gemer peurvvia Paol goz, ha re aliez, siouaz ! e teu e daol gantan da vad, abaoue m'her greas da Judaz.

Jakig Lagad-du, eus a Landerne, n'oa ket eur gwall baotr en e amzer, n'oa na laer na touer, mes avat eun den poud, pikouzet e zaoulagad, ker pikouzet zoken ma na wele zoken nemet pell goude an troiou kamm a rea d'ezan e vignoned, er c'hoariou dreist-oll. Ha me lavar d'eoec'h e chachent war e yalc'h. Hag ar paour kez paotr a eve, a eve kalz evit ankounac'haat e velkoni. An dra-ze eo a gasas anezan da goll.

Ar re a roe labour d'ezan koulz hag ar c'hoarierien kartou o doe keuz d'e varo.



« Mil gur'n ! eme Jakig Lagad-du, ema an ifern o koueza en e bouill ! » Ar votezig o koueza war gern e benn moal he doa great d'ezan gwelet c'hoec'h goulaouen ha tregont. Hogen, pa oe tremenet ar skrijaden genta, Jakig a stouas hag a welas eun dra lugernus : « Sell ! emezan, ar votezig goant !.. N'eo ket d'eundiaoul, rak an diaoulou n'o deus ket a vouteier ker kaer-ze !... »

E rank beza da unan bennak koulskoude, n'eus ket da lavaret ! Anat eo ez eus bet enni troad eun den... Ar seul a zo o vont da veza toull, sklear eo, mes ar voulouz a zo lugernus c'hoaz... Doare he deus da veza bet d'eun den krenv....»

Hag e troe, e tistroe ar votezig en e zorn.

« Ha petra rin-me ganti ama ? Netra... Kas a rafen anezi d'he ferc'hén, ma c'houzen da biou eo. Ker brao eo ma n'eus nemet Doue, ar zent, hag an elez, er Baradoz dudius hag o defe eus ar seurt traou-ze ! »

Hag o veza lavaret ar c'homzou dereat-se, Jakig a oe dibradet ha savet d'an neac'h a-nebeudou gant eun nerz treac'h d'e hini. Ar votezig eo, botezig eürus an Aotrou sant Per benniget, dre eur c'hallooud staget outi er Baradoz, a jache anezan, a roe d'ezan evel diouaskel da nijal ker buhan hag an avel a-dreuz an iferniou.

An holl dud daonet a zigore o ginou da zellet outan o tremen uz d'o fennou.

— A ! sell 'ta ! piou eo hema a ya gant kement a diz dre an ear evel eur stereden rederez ?

— Marvad e rank beza eur potr chansus en deus bet autre da vont da zistana eur pennadig.

— Hennez ? Hennez eo Jakig Lagad-du eus a Landerne.

— Hê ! Jakig !

— Da beleac'h ez ez, Jakig ?

— Kenavo Jakig !

— Beaj vat, Jakig !

— Deuet out da veza bran pe askel-groc'hen ?

— Jakig !... Jakig !...

Jakig a yea atao hep lavaret grik da zen. Ne zelle ket outo zoken. Traou-ali a yoa war e spered. Na pebez tro iskis a errue gantan ! Mont ker buhan, evel eul labous a-dreus an uhelderiou ! « N'eus fors, eme Jakig, da beleac'h bennak e vezin kaset, easoc'h en em gavineget ama. » Ha kaer en doa, n'helle ket zoken kaout

amzer da ober eur sec'ha d'ar c'houezen a zivere dioc'h e dal.

Red e oe d'ar paotr chom a-zav e-kichen dor an ifern. Ar porsier en doa savet e forc'h hag a ginnige sanka anezi en eun tu bennak.

— « A-zav ! emezan, n'eot ket pelloc'h ! »

Ar votezig a skoas daou daol gantan war e ziou jod, ken e teujont da veza rusoc'h eget he boulouz. Ar paotr faro a lezas e forc'h da goueza d'an douar.

Krik ! Krak ! ha dor vrás an ifern a zigoras anezi he-unna evit lezel paotr Landerne da dremen gant e votezig.



— « A ! emezan p'edo er meaz, n'eo ket ken tom ama, gras e kavan ! »

Hag ez eant atao gant tiz.

Ar Purkator? netra ken nemet tremen dirak.

— « Ha piou c'hoar da beleac'h ez eomp ? Piou c'hoar

e peleac'h e touarimp ? » N'en doa ket aon avat, pell
pell ac'hano. Treinen a rejont dre douez an heol, al loar,
ar stered, ha setu hi dirag dor ar Baradoz, hag ar vote-
zig da jom krenn a zav.

— Tok ! Tok !

— Piou a zo ? eme sant Per hep digeri.

— Me eo, Jakig Lagad-du eus a Landerne.

— Alo, mat ! Mes evit dont ama e ranker beza glan ;
diskouez d'in da baperou dre riboul ar c'haz !

Ha yao ! Jakig o tiskouez ar votezig da zant Per dre
riboul ar c'haz.

— O ! eme zant Per, seblantout a ra d'in ec'h anave-
zan an dra-ze !

— Gwella 'ze mar d'eo d'eoc'h ! Kemerit anezi neuze !
N'eo ket te, da vihana, an diaoul a laeras anezi d'in ?

— O nan da ! Me eo Jakig Lagad-du eus a Lander-
ne, hel lavaret am eus d'eoc'h.

— Mat, neuze, Jakig, va mignon, deus, ha ra vezi
digemeret mat er Baradoz !

Jakig a yeaz ebars. Sant Per a yoa kel laouen, ma
lammes gantan a dro vriad da bokat d'ezan eus an
daou du. Ar votezig great gant sant Krepin a yoa bihan
eun tamm hag a gigne e droad da zant Per, ha setu
perak oa kel laouen o kaout an hini goz a yea ker brao
dioc'h e droad.



NEDELEK AR SKOLIOU

Diw heur eo gant noz
Nedelek, an nozvez santez.

Ehanet eo ar c'hanaouennou ha mouget ar gouloueier en iliz parrez ; e pep leach'eo ledet a nevez mantel an dervalijen. An oll davarniou a zo serret (parrez eürus !) ha pep hini a zo distroet d'e c'hlud.

E kraouig arc'hinivelez koulskouds, Jezuz a zo dihun ha setu hen o koms ouz ar Werc'hez e vamm.

— « Mamm, emezan, poent eo d'eomp mont da ober hon dro vale. Kalzik tiez hon deus da welet



ha kalz bouteier da leunia a-benn oferen goulou-deiz.
Deomp, Mamm ! »

Ha setu Jezuz hag ar Werc'hez Vari, e vamm, o vot
net war o fouezig dre ruiou ar vourc'h.

N'oant ket eat gwall bell c'hoaz pa zigouezas d'ezo
chom a-zav. Ha setu ar Mabig Jezuz da skoi war eun
nor :

— Pan !... Pan ! !

— Deuit en ti ! a oe lavaret en diabarz.

— Ama eo, n'eo ket 'ta, ema ti Perig ? Eur bugel fur
hag a blij d'in abalamour ma c'hoar e bedennou hag eo
sentus ouz e vamm ! Buhan, diskouezit d'in e voutez
ma leuniin anezi a vadigou. Paour keaz bihan ! lakeat
en doa a-gostez eun aval oranjez da zigas d'in... Va
bennoz a roan d'ezan, ha d'eoc'h ive, mamm vat. Kena-
vo, mamm Perig !

Hag ar Mabig Jezuz a yeas pelloc'h.

Prestik goude e chome a-zav :

— Ama, Mamm, emezan, ema skol ar vugaligou n'o
deus ket c'hoaz sez vloaz. Labour a-walc'h hon deus
gant an inosanted-se... Pan !... Pan ! ! Digorit buhan,
C'hoar Visant... Setu ama ganen eur zamm merc'hoden-
ned, taboulinou ha kezeg-koat ! Ouspenn-se, setu ama
dilhad nevez evit va breudeurigou paour.... Kenavo,
C'hoar Visant !

Hag ar Mabig Jezuz da vont larkoc'h.

— Pan ! Pan !... Gouzout a rez, Mamm, ama ema skol
gristen ar baotred... Hastit afo dont da zigeri ! An dra-
ma zo da Wenole, da genta er c'hatekiz ; an dra-ma da
Jopig, ar furra er skol ; ha setu ama lod Korantin an Du,
a c'hoar respont an oferen gant kement a barfetegez !..
An dra-ma a rannot etre ar vugale-all.

Hag ar Mabig Jezuz da vont larkoc'h.

N'ez eas ket pell hag e chomas a-zav hag e lavaras :

— Ama, Mamm, ema skol gristen ar merc'hedigou..
Digorit buhan, Itron Renerez ! Mat. Lezit ac'hanon da

dostaat da zellet ouz an daolen el leac'h m'ema hanoiou ar baotrezed a labour ar gwella. O sellit 'ta, Marc'hari-dig a zo ar groaz ganti adarre ! Setu ama evit he digoll eus he foan ; ouspenn-ze, arabat e vezò d'eoc'h lavaret grik ebet d'ezi diwar-benn kement-ma : ember hi eo a c'hounezo ar pez a vezò a gaera ouz gwezen Nedeleg.... Hag Annaig 'ta ! o ar bugel ker, pegen devot ha pegen dibech eo ! Me he c'haso d'ar gouent ! Setu ama, da c'hemhal, peadra da ober plijadur d'ezi... An demezel Madalen ! adarre eun tammig dibarbet !... Neusfors, gwelloc'hik ez a an traou ganti... Mat, mat... Setu ama evit roi nerz-kalon da Vadalen da vont war wellaat... Ha brema, setu ama draje ha madigou-all eus ar Baradoz da ranna etre an holl merc'hedigou. Arabat e vezò avat beza re lountrek !...

Hag ar Mabig Jezuz ac'hano adarre gant e Vamm.
Chom a rejont a-zav eun tammik pelloc'h.

— O va Mamm, setu ama eur skol-all !.. Pan ! Pan ! Digorit buhan, Aotrou Mestr-Skol... Me eo ar Mabig Jezuz, Mignon ar vugale. Degas a ran bep seurt c'hoariellou d'am mignoned vihan. O ! nag a blijadur o devo ! Gwelet a raint n'ankounac'haan ket anezo ; gwelet a raint o c'haran a greiz kalon, hag int-i ive am c'haro, am c'haro hed o buez penn-da-benn ; n'eo ket 'ta e kariant ac'hanon ?...

Ar Mabig Jezuz a gomze evel pa vije bet ar Mestr-Skol ouz e zelaou ; an nor koulskoude a jome serret kloz.

— Me ho ped, Aotrou Mestr-Skol, livirit d'in ha klevet a rit-hu va mouez ?

— O ! me ho ped... Me eo ar Mabig Jezuz... Ma c'houfec'h pegement e karan-me an holl vugaligou-ze !. Digorit d'in ! digorit d'in ?

Eun nor a zigoras, hag eur vouez a grozas :

— It gant hoc'h hent ; ar skol-ma a zo direlijon, eur skol laik eo. N'ez eus plas ebet evidoc'h en hostaleri-ma !

• • • • • • • • • • • • • • •

Kalon Jezuz a deuas da veza beuzet en eur mor a
dristidigez. Kement tra he devoa great plijadur d'ezan
el leac'hiou-all oa bet enno a oe ankounac'heat gantan
war an heur evel ma teu ar stered skedusa da veza go-
loet gant ar wabren zu.

— Deomp ac'han, Mamm ! emezan.

Hag ez eas kuit en eur ouela.

Paour keaz Mabig Jezuz !

Ne fell mui da dud a zo e ve klevet hoc'h hano ben-
niget, hoc'h hano ken dous o tont diwar muzellou ar
vugaligou !

Ne fell mui d'ezo e ve meulet hano an Aotrou Doue,
ho Tad, gant bugale Frans !

Ne fell mui d'ezo e teufemp en hon tenvalijen, en
hon enkreziou, en hon holl ezommou, da bedi ar Spe-
red-Santel a deu ac'hanoc'h hag eus ho Tad !

Paour keaz Mabig Jezuz ! De kentoc'h, paour keaz
bugale ! Hep Jezuz, hep Doue, hep reliジョン, hep feiz, na
c'houi a zo din a druez !





SALAUN AR FOLL



Debret oa koan ; ar gwa-zed a yoa o tana o c'horn hag ar merched a glaske o c'hegilou evit ober eur pen-nad neza.

Ar vugale a dostaas ous ar vamm-goz eat da azeza e kougn an oaled :

— Mamm-goz, a lavaras Annaig, ar gosa eus ar vu-gale, kontit d'eomp eur ri-madel !

— Mamm-goz, eme Laouig iveauz, eur gontaden !... Eur marvailh ?...

— Va bugaligou, eme ar vamm-goz, me ne ouzon mui netra pell zo... Gouezet em eus bet sur eur bern traou gwechall... mes deuet eo va memor da vergli.. Me n'oun mui yaouank, va bu-gale !

— Mamm-goz, mamm-goz, gouzout a rit c'hoaz kalz traou...

— Istor Salaun ar Foll ! a lavaras neuze Perig, eur c'hanfard nevez great gantan e bask kenta.

— Deomp eta da Zalaun ar Foll ! Gwaz aze evidoc'h mac'h ankounac'haan meur a dra.

Hag ar vamm-goz a voulc'has he istor.

Er bloavez 1315 e veve e Breiz-Izel, e kichen Lesneven, eur paour kêz innosant, e hano Salaun. E dud a yoa paour glez ; setu kement a zesk d'eomp ar skridou koz diwar o fenn.

Pe ez eas Salaun d'ar skol, pe ne deas ket abalamour m'oa re baour e dud, biskoaz ar paotr kêz n'hellas deski ken peden nemet : *Ave Maria !* na ken kantik nemet *O Maria !*

Dre ma kreske ar bugel en oad e kreske iveau e garantez evit ar peoch'h hag a zioulder, ha pa varvas e dud e oe mall gantan mont da jom en eur c'hood. Eno e tibabas eul leach'h gouez ha distro, e kichenik eur feunteun goudoret gant eun derven goz.


Evel al laboused war skourrou ar gwez, Salaun a dremene eun darn eus e amzer o kana meuleudiou an Itron-Varia, e vestrez ; d'ez i goude Doue oa e holl galon, e holl garantez ; en noz, zoken, evel eun eostik, e kane mil gwech *Ave Maria ! Ave Maria !*

Gwisket truilhek oa, ha kerzet a rea diarc'hen ; n'en doa evit gwele nemet an douar yen ; hag evit plueg, nemet eur mean ; evit toen, nemet deliou stank an derven gamm e kichen ar feunteun.

Mont a rea bemdez er stuz-ze da Lesneven pe d'ar c'heariadennou-all a ziwar-dro da glask an aluzen. Ne rea ket a bedennou hirr e toull an doriou ha ne dorre ket pennou an dud gant e glemmou mantrus ; lavaret a rea :

— *Ave Maria ! Salaun a zepre bara !*

Digemeret a rea kement a veze kinniget d'ezan, hag e tizroe didrouz ha war e louezig da gichen ar feunteun. Eno e soube e vara en dour hag hen debre, o la-



varet a greiz kalon : *Ave Maria !*

Pa veze ar goanv en e wasa, pa veze yud an avel, skournet an dour, e taole e druilhou, hag e tiskenne er feunteun betek e chig (pe e helgez, evel eur pesk en dour) hag e kane mil gwech : *Ave Maria ! Ave Maria ! O Maria ! O Maria !...*

Gwechou-all, evit en em domma, e save d'en em lakaat a-ispilh ouz skourrou an derven, hag en eur vransellat e kane e ganaouea : *O Maria ! O Maria !*

Abalamour d'an traouze holl ken dishenvel diouz kustumou an dud, ar paour a dremene evit eun diskiant, ha ne real anezan nemet *Salaun ar Foll.*

Eun droiad ec'h en em gavas gant eun toullad soudarded a yea hag a duev dre ar meaziou.

— Piou out ? emezo.

Salaun evitan da veza dizesk a c'houie evelkent ez oa neuze brezel etre Blez ha Monfort, an eil hag egile o klask sevel da ren war Vreiz-Izel.

Ha Salaun da respont d'ezo, nan evel eun diskiant, mes evel eun den meurbet fur :

— N'emaon nag a du Blez nag a du Monfort ; me eo servicher an Itron Varia !... *Ave Maria !*

Ar soudarded a zirollas da c'hoarzin
hag hen lezas da vale.

Salaun a dremenais evel-se nao bloaz
ha tregont pe zaou-ugent o ren buez kalet,
disprijet ha dilezet gant an dud, mes
avat kaer ha glan dirak Doue ha meurbet
karet gant an Itron-Varia. Morse n'en doa
great an disterra droug da zen.


Koueza eure klanv. Meur a hini eus a
Lesneven a ginnigas e gas da hospital
kear ; morse ne fellas d'ezan mont eus e
ermitach.

Lod a gred e teuas Mari meur a wech
de welet he zervicher, d'hen kennerzi hag
ec'h en em ziskoueze d'ezan skedus evel
an heol, eur maread elez en dro d'ezi.

Ar paour kêz koulskoude a fallae hag
a gleve ar maro o tostaat. Neuze, evel an
durzunel en nevez-amzer, ec'h en em roas
da gana e veuleudiou da Vari gwasoc'h
eget biskoaz. Betek pa 'z oa toc'hor e tis-
kane gant karantez hano douz Mari, hag
e rentas e ene gwerc'h da Zoue, gant he
hano war e vuzellou.

E zremm distronket epad e vuez
gant ar pinijennou kalet a deuas
neuze da veza ker kaer, ker glan
hag al lili ha fresk evel ar rozen
glizennet da vintin.

E gorf a oe kavet astennet e-ki-



chen ar feunteun, dindan an derven a yoa bet e di.

An amezeien a deuas d'e zebelia ha pep unan a roas ali d'en douara el leac'h m'en doa bevet hag a oa marvet. Ar pez a oe great kerkent hep lid ebet.

Diskennet ar paour kez foll en douar, en eur c'hoad, den mui na zonje ennan pa deuas Doue hag ar Wer-c'hez da zizelei santelez o servicheren eun doare estlammus.

Eul lilien hag a daole eur c'houez dudius a zavas war bez Salaun, hag ar pez a yoa c'hoaz souezetoc'h eo ez oa skrivet war an deliou e lizerennou aour daou c'her peden Salaun : *Ave Maria !*

Ar burzud a badas c'houec'h sizun.

Ar brud a gement-ma a yeas buhan dre Vreiz a-bez. Diredet a reas eur bern tud da welet : noblans, tuchen-ti, leleien ha tud a renk izel.

Toullet e oe ar bez. Ha petra oe gwelet ? Ar boked en doa e c'hriziou e kalon Salaun....

Ar vamm-goz a reas eun ehan.

Ar vugale a zavas o fennou da lavaret :

— Ha goude ? Mamm-goz...

— Goude ?... Goude ?... echu eo... Goude e oe savet eun iliz eus ar re gaera war bez ar paour kez Salaun. An iliz-ze a zo gwestlet d'an Itron-Varia.

Divezatoe'h, pa viot brasoc'h, va bugaligou, c'houi a yelo da bardona d'ar Folgoat, hag a evo eus dour feunteun Salaun, servicher Mari. Kaout a reot anezi e penn uhella an iliz, a-ziavez, dindan an aoter vrás.

— O ya, mamm-goz, ni a yelo d'ar Folgoat.... Mes kontit d'eomp eun istor-all.

— Bugale, a-walc'h evit hirio... Perig ha Saik a zo kouskel, ne welit ket ? It da glask ho kwele... Varc'hoaz mar kirit, e komzin d'eoc'h eus Kear-Is...

— Ya, ya, mamm-goz !...



PENAOS E OE KOLLET IZ

— Petra gontin-me
d'eo'ch hirio, bugale ?

Hag ar vugale da respont
war eun dro :

— Kear-Iz, mamm-goz !
Kear-Iz !

Mont a ran eta da zisple-
ga dirazoc'h istor Kear-Iz,
Ahez hag ar roue Grallon,
evel em eus he c'hlevet pa-
oan yaouank.

Er pardaez-se, Annaig, ar
c'hlaskerez, pe ar baourez,
ma kavit gwelloc'h, a yea
goustadik, daoubleget war
he fenn-baz kelen, he cha-
peled ganti en he dourn,
gant an hent a ya eus Kear-
Ahez da Boull-Dahud.

Ha dre ma 'z ea penn-da-
benn an deven e Beg-ar-
C'haor, ar c'hlaskerez eur-
wech an amzer a rea eur
zell nec'het war bleg-vor
Morgad, hag he c'hlevet o-
lavaret gant rann-galon :

— Aotrou Doue, ho pezet truez ouz an hini a zo kousket aze !

Laouig, ar paotr-saout, a zavas en eun taol e benn dreist ar c'harz hag a c'houlennas digant Annaig :

— Mamm-goz Annaig, evit piou eta e pedit-hu evel-se o sellet ouz ar mor ?

— Laouig drouk, emezi, pedi a ran evit an hini a zo bet sebeliet er mor, p'eo gwir n'he deus ket pedet a-walc'h pa oa beo.

Hag an hini goz da ober sin ar groaz ha da bokat c'hoek da groaz he chapeled. Karet a rea kenan ar groazze abalamour m'oa bet stoket ouz aoter Santez-Anna-Wened hag ouz arched relegou sant Gwennole, mignon ar Vretoned.

Ar mesaer bian a yoa deuet tre betek ar baourez, e zaouarn a-drenv e gein hag uhel e fri gantan. En em harpa reas dirak Annaig, hag e c'houlennas krak ha berr :

— Pe hano he deus an hini n'he deus ket pedet a-walc'h ?

— Ar brinsez Ahez, merc'h ar roue Grallon.

— Eur brinsez ! O truez !... Anavezet hoc'h eus anezi, mamm-goz ?

— Aotrou Doue !... Anavezet... me ? O n'em eus ket.

Ahez a zo marvet eun toullad mat a gantvejou a zo, en deiz ma c'hoarvezas an darvoud skrijus a gasas da netra Kear-Iz, kear-benn rouantelez Grallon, he zad.

— Va Doue ! emezan.

Annaig a yoa deuet he fenn da veza tenval ; he daoulagad a lugerne evel diou stereden. Setu hi oo'h astenn he dourn war-zu ar mor direiz a rea eun trouz da vouzara o steki ouz ar c'herreg.

— An tarziou-mor-ze, emezi, eo o deus servichet da venji kounnar an Aotrou Doue.

— Penaos, Annaig, eo bet c'hoarvezet kement-se ?

— Asa, Laouig, ya mab, daoust ha n'ec'h eus Morse

klevet kana gwerz Kear-Iz hag ar roue Grallon ?

— Eo, marteze, hogen ankounac'haet am eus anezi. C'houi, mamm-goz, a c'hoar eur bern traou. Livirit d'in mar plij, istor ar brinsez Ahez hag ar roue Grallon ?

— Ya, va mab, hen ober a rafen a-walc'h. Mes, sonj 'ta ez eus pevar-ugent vloaz hag ouspenn abaoe m'he c'blevis kana evit ar wech genta gant ar barz Erwan Karadek, eus Ploumanac'h, e Bro-Dreger.... Pell a zo abaoe....

— Livirit atao, Annaig, sonj ho pezo.

— Karout a raffen, rak va istor a ziskouezo d'it betek peleac'h e c'hell mont fallagriez an den hag ar garantez direiz evit ar blijadur ; lavaret a rai d'it dreist-oll penaos e teu Doue madelezus mes just da gastiza zoken er bed-ma an dismegans a ra ar pec'hed d'e hanoc'h teir gwech santel.

* *

Annaig a azezas war eur roc'h goloet a raden, a vrug hag a yeot. Hag hi da genderc'hell gant he c'haoz.

— Selaouit, c'houi iveau, bugale, a lavaras mamm-goz Lanmodez, ha lakit da dalvezout an istor-man eus amzeriou koz hor bro garet Breiz-Izel.

— Aze, eme Annaig, e-harz hon treid, er pleg-morze el leac'h mac'h eonenn ar mor, el leac'h ma teu ar pesketer da deuler e rouejou en eur gana, aze ez oa gwechall tiez kaer, paleziou, maneriou, ilizou ; aze edo Kear-Iz, he doa dek dor hag a yo a kear-benn rouantelez Breiz-Izel.

Pa deue eur beachour da dremen dre ama, dibaoet e viche d'ezan chom hep goulen ouz ar re a gave war e hent :

Petra zo nevez e Kear-Iz
Mar deo ker foll ar yaouankiz,
Ma klevan-me ar biniou.
Ar vombard hag an telemou ?

Ha tud ar vro da respont d'ezan raktal :

N'eus e Kear-Iz netra nevez ;
An ebatou-ma ve bemdez....
N'eus e Kear-Iz nemet traou koz ;
An ebatou-ma ve bemnoz....

— Aotrou Jezuz !... Truez ! truez a lavaras Laouik.

Bodennou drez zo diaounet
Ha dor an ilizou prennet,
Ha war ar beorien o ouela
E c'hiser ar chas d'o drailha.

Ahez, merch' ar roue Grallon,
Tan an ifern en he c'halon,
Er penn kenta eus an diroll
A gas d'he heul ar gear da goll !

Sant Gwenole, beuzet e galon en eur mor a c'hla-
c'har, a zo deuet meur a wech da gaout an tad.

— Grallon, Grallon, emezan, diouall i rak divezat e
vezo kaout keuz pa deuio Doue da skuilha e vuhaneg
war ar gear gablus. El leac'h ez eus c'hoarzadeg e vez
skrignadeg dent ha goelvan... El leac'h ez eus kanaouen-
nou laouen e vezou youc'hadennou spontus.

— Truez, va Doue !... a lavaras Laouig. Ha petra
respontas ar roue d'ar zant ?

— Spontet oa, hag an daelou a zivere drus war e
ziou jed. Mont a rea da gaout e verc'h da ober d'ezzi re-
bechou c'hoero. Hogen, koz oa, hag ar plac'h fall ne rea
mui kalz van ouz e glevet. Skuiza reas zoken o selaou
he zad. Ha petra reas evit beza muioc'h en he frankiz ?
Sevel eur maner kaer e-kichen ar skluzou a vir ouz ar
mor da ziruillh war gear.

Eno eo ema ar gouel en noz-ma : eno eo ema Ahez
ar verc'h divezet o skedi en he dilhad pinvidik ; eno eo
e kinniger ezans da filhorez Satan.

Setu en eun taol eur prinz o tont e-touez an duchen-
tilou.

— Plijadur d'eoc'h holl, danserien dispar, emezan.

Gwisket oa gant voulouz rus ; e varo hepken a yoa du, hag e zaoulagad a lugerne en e benn evel diou c'hlaouen-dan.

— Ra viot deuet mat, aotrou diaveziat, a respontas Ahès o vousc'hoarzin ; ya, bezit ar gwella deuet mar doc'h ar gwizieka ac'hanomp e skiant an droug.

Ha kerkent Ahez da bedi an aotrou rus da ober eun abaden dans, endra ma wall gomze an holl enep Doue.

— O Annaig, spontus eo ! a lavare ar paotr bihan ; daoust ha ne deuio ket Doue da gastiza tud ker fall-ze ?

— Eo, a dra zur, kastizet e vezint, Laouig. Selaou ac'hanon betek penn.

Doue a yeas e kounnar hag a astennas e zourn warzu Kear-Iz.

Kerkent lez an treaz (palez Ahez) a skrijas war e aelou doun, ar gurun a grozas hag al luc'hed a skoas da zalla.

Ar prins daoulagad rus tan ifern a vousc'hoarze. Stoui a reas d'an douar dirak Ahez, hag e lavaras gant eur vouez leun a vel :

— Merc'h Grallon Meur, dous ha tener, rouanez va c'halon, daoust ha n'hellfen ket en eun doare bennak gwelet alc'houeziou ar skluzou ?

— Alc'houeziou aour ar skluziou a zo oc'h eur jaden a jom dalc'hmat ouz gouzoug va zad, ha va zad, re zur eo, a zo kousket pell zo.

Hen koulskoude a stoue atao muioc'h-mui hag a boke d'e daouarn flour. E lagad lemm a flemme re ar paour kez Ahez.

— Mes, petra fell d'eoc'h ? emezi d'ezan.

— Ho tad a zo kousket, a livirit ; mat, easoc'h a-ze e vezo d'eoc'h lammet digantan an alc'houeziou !

Ahez a skrijas.

— Ha piou, emezi, a c'hellfe kaout hardiziegez a-walch' evit ober an dra-ze ?

— O ! piou 'ta, nemedoc'h-hu, prinsez.

— Hâ peeur ?

— Bremaik ! It hep aon ebet. Mat eo d'eomp kaout an denvalijen d'hon harpa. War va hano e touan ne c'hoarvezo droug ebet ganeoc'h.

Ahez kerkent a yeas eus al lez war-zu ti he zad, da esa kaout an alc'houez aour ; evel eun aer viber e ruz e kambr he zad, ha didrous e lamm digantan an alc'houez burzudus a zioualle kear.

* *

Annaig a reas eur pennad ehana. Ar paotr-saout a skrijas gant ar spont hag a c'houennas :

— Ha penaos e lezas Doue ober an dra-ze ?

— Doue a ra mat kement a ra, Laouig. Kastiza a ra ar re fall, hogen, alies e ro amzer d'ezo da ober o zonj ha da c'houlen trugarez.

Selaou penn diveza an istor. Setu ama petra a gane ar barz en e werz :

— Piou eo hennez a deu du-ze savet war eur marc'h du a ra eun trouz da vouzara o stoki kern e dreid ouz mein ar stread ?

— Hennez eo kannad an Aotrou Doue, kaset davet roue Breiz ; hennez eo abostol ar feiz, sant Gwenole karet e Breiz.

Gwelet a ran anezan o tostaat, e var' abad en e zourn kleiz, eur stereden aour war e zae wenn, hag eur c'helc'h skedus en dro d'e benn.

— Setu ema war dreujou al lez el leac'h ma kousk ar roue, tad Ahez, hag hen da hopal en noz du hep disken diwar e varc'h :

— Grallon ! Grallon ! sav buhan ! Ema digor ar skluzou ! ...

Ar roue spontet a ra eul lamm er-meaz eus e wele.

— War zao ! war zao ! emezan ; va marc'h buhanna ! Siouaz ! ema echu gant ar gear-ma ! ...

Laouig a c'houennas :

— Hag an danserien ? Hag an diaveziad en doa daoulagad rus tan ifern ? Hag ar brinsez Ahez ?

— Holl ez ejont da goll, va mab, beuzet e oent er mor penfollet.

Ahez a lammas dirak he zad. Ar roue ha Gwennole a yea ac'hano difrea ma c'hellent.

— Va zad ! va zad ! emezi, mar am c'harit, kasit ac'hanoun ganeoc'h war ho marc'h skanv !

An tad, hep lavaret ger a zammas e verch en e gichen.

Neuze e oe gwelet an tarsiou o tiredet gwasoc'h c'hoaz war o lerc'h.

Gwennole a hopas en eur skrijal :

— Grallon ! Grallon ! hast affo teuler an aer-ze er mor.

An tad koulskoude... a yoa tad, hag a starde ar bec'herez war boull e galon ; mes ar zant a reas sin ar groaz hag a stokas e vaz ouz ar plac'h.

Kerkent Ahez a gouezas er mor, ar c'hezek a ehanas da zaoulammat, hag an tarsiou a reiseas.

Epad kantvejou ha kantvejou, Ahez deut da veza Mari Morgan, a zo 'et gwelet e doare eun teuz hanter maouez hag hanter besk. Gwelet e veze war an aod o kriba he bleo-bezin oc'h sklerijen al loar.

Laouig a reas sin ar groaz hag a lavaras :

— Peoc'h Doue da anaon tud Kear-Iz ! Mes livrit d'in Annaig, echu eo an istor ? Petra deuas ar roue Grallon da vezà ?

— Pa zavas an heol antronoz, ar zant ha Grallon a bigne war lein Mene-Hom.

Ac'hano, roue Breiz a daolas eur zell war al leach' edo Kear-Iz en derc'hent ; ne welas nemet mor.

— Eur gear eus ar re gaera em boa, emezan, ha setu hi eat da netra !

E galon a rannas hag eus e zaoulagad e teuas eur mor a zaelou.

Ar paotr-saout skoet e galon iveau n'hellas ket miret da lavaret :

— Paour kez roue !

— Ya, eme Annaig, paour kez roue !... Ar boan, ar glac'h, an anken n'emaint ket hepken e lod an dud a renk izel... Mes kendalc'homp gant hon istor.

Pa zavas Grallon e benn da zellet en dro d'ezan e welas o lugerni Ru-men-goulou, hag e lavaras gant eur vouez nerzus :

— War ar mean-ze hon tadou a skuilhe gwad da eun Doue didruez... Du-ze, me a zavo eun iliz d'ar gwir feiz evit derc'hel sonj a Gear-Iz, hag evit ma vezo gouezet he istor, me he hanvo Rumengol. Mamm dous hor Zalver Jezuz a vezo enoret e leach'h Teutatez hag Hezuz, ha bep bloaz, en enor d'ar groaz, me a raio lida eno eur pardon bras.

Pa vezo maro an doueou...

Laouik a droc'has he c'homz da Annaig.

— An doueou ! a livirit, Annaig ?

— Ya, an doueou... Ar roue Grallon a gomze eus falzdoueou ar baianed, adoret neuze c'hoaz gant hon tadou koz. Mar doa d'an ampoent kristenien evel ar roue Grallon, ez oa muioc'h c'hoaz a baianed. Evel-se 'ta, ar roue kristen en e zav war Mene-Hom a lavaras :

— Pa vezo maro an doueou, pa vezo diskaret eun darn eus dervennou hor c'hoajou, eun dervez bennak, pobl Breiz-Izel a ziredo du-ze eus ar pevar avel. Neuze, ma n'eo ket c'hoaz maro ar sonj eus ar roue Grallon e vezo lavaret : Nag a vurzudou a zo bet c'hoarvezet ama en amzeriou koz !...

* *

Annaig a davas war gement-se. Sevel a reas da gre-
gi en he baz kelen, en eur lavaret :

— Ema an heol o vont da guzat e mouigidel an drem-

wel. Ankounac'haat a rean em eus eur pennad brao a
hent da ober a-raok an noz. Kenavo, mesaer yaouank.

— Hag ez it kuit, mamm-goz ? eme ar paotr.

— Ha ne glevez-te ket kloc'h an *Angelus* o son e
tour Poull-Dahud ?... Lavaret em eus d'it kement a
c'houien diwar-benn ar brinsez Ahez, ar roue Grallon
ha Kear-Iz.

— Eur gerig c'hoaz, mamm-goz.

— Lavar buhan 'ta neuze.

— Piou oa hennez ar prins-se a dieuas en eun taol e
sal maner ar brinsez Ahez da zansal ha da c'houlen
alc'houeziou ar skluzou ?

— An droug-spered, va faotrig.

— Doueti rean. Fellout a rea d'ezan kaout an
alc'houeziou evit beuzi kear ha kas dioc'htu gantan
d'an ifern eneou an dud keiz-ze. Daoust ha ne jom mui
netra eus Kear-Iz ?

— Pesketerien zo hag a lavar o deus gwelet disman-
trou mogeriou pa vez ar mor izel izel... Nan, n'eo ket
eas gwelet netra brema : al lec'hid hag an treaz o deus
goloet kement a jome eus ar gear villiget. Ar gear-ze
distrujet gant kounnar an Aotrou Doue na zavo ken eus
strad ar mor doum.

Er menez doare eo bet kaset da netra Sodom, Go-
mor ha Babilon, abalamour d'o fec'hejou bras.

Annaig a yaas en hent en eur lavaret he chapeled.

— Ac'hanta, bugale, a lavaras mamm-goz Lanmo-
dez, kavet hoc'h eus brao va istor ?

— O ya avat, mamm-goz, eme Berig. Me garfe klevet
alies kontadennou evel-se.

— O mamm-goz, eme Laouig, c'houi c'hoar traou
brao !

— Traou koz, da vihana... Gwechall e veze plijadur
oc'h o c'hlavet. Ar yaouankizou hizio n'en em jalont
ket nemeur ganto...

— O mamm-goz, eme ar verc'h-kaer eus an ti, emaoc'h adarre o troug-prezeg hon amzer-ni... Gwechall... gwechall... ez oa traou mat ha traou fall, evel brema... Holl hon deus kavet berr an amzer ouz ho selaou... Alo, bugale, d'ar gweleou !



Paotr-saout Komanna

— Petra rez aze 'ta, Jopig, ken sioul-all, da-unan war eur roc'h e-kreiz al lanneg ? Ne daolez ket evez e c'hell dont ar bleiz da zamma ar c'haera eus da zanvadezed ?

— Bezit dinuc'h, maeronez ; Doue a daol evez evidon keit ha m'emaon o pedi.

— O ya, hep mar ebet, Jopig ; mes petra welan ganez aze en da zourn, e leac'h ar skourjez a vez peurvuia gant mesaerien ar meneziou ?

— Kroazig an Doue (1) eo, maeronez, hag ez oun deuet a-benn da zeski ennan an teir lizeren genta.

— Traou a re !... Traou a re... ha ne dalvezont ket ar boan ! Arabat e ve d'it, Jopig, e tapfen mui ac'hanout gant c'hoariellou evel-se en da zourn. Gouzout a-walc'h a rez pegement e karan ac'hanout ; hogen a-raok pep tra e fell d'in e vez eur c'christen mat hag eul labourer douar dispar... hag e rafez da labour wardro va loened !

Oc'h huanadi, Jopig a glozas e levrig en e c'hodel, ha merourez Kerestin a zistroas d'ar gear. Eun intanvez a feson oa, gwir eo, ha mat e-kenver he fillor emzivad (2) re stag, evelato a lavare lod, oa ouz madou an douar evit gellout klevet petra rea d'ar paotr kez huanadi, ar pez a zigase daelou en e zaoulagad pa zelle ouz an nenv hag ar pez a waske e galon pa zelle ouz an tachou bras a zalc'h stag Jezuz-Krist ouz ar groaz.

Pennherez ar maner nesa (3) avat, Gait, an demezel-lig devot, he doa gouezet lenn e kalon ar potr saout ; alies e teue d'al lanneg el leac'h ma ouie kaout anezan, hag eno neuze, etrezzo, e veze kaoziou dudius n'int bet klevet nemet gant an elez... Jopig a c'hellas hep dale

(1) Alphabet breton.

(2) Orphelin.

(3) Le plus rapproché.

zoken, henvet dre ho hano holl lizerennou *Kroazig an Doue*, daoust da c'hourdrouzou e vaeronez.

Nag hen oa desket... Eur paotr saout !... Evelato !...

Siouaz ! dont a reas eun dervez a zichans, a distri-digez !

Aotrou Kerestin a fellas d'ezan e ouesfe e verc'h eun draig bennak ouspenn lenn ar *Bater* hag an *Ave*, ha setu e kasas anez d'ar gouent. Jopig a gollas evel-se e vestrez-skol. Nag a zaleou e skuilhas eur pardaez el lanneg ! Nag a zaolou en dervez warlerc'h. Gouela reas-kement, ar c'heaz ! ma 'zoa gwalc'het lizerennou *Kroazig an Doue* gant e zaelou.

Karet a rea e levr hag e chome meur a heur dioc'htu da zellet ouz kroaz Hor Zalver a yoa er bajen genta, ha neuze e torre war e anken. Ar verourez, e vaeronez, a deuas eun dervez d'e welet en e labour. Siouaz ! kaout a reas ar paotr evel eat eus ar bed-ma, evel beuzet en e zonjou, ken n'en doa ket gwelet e zaout o vont da laerez a-gleiz hag a-zeou. Mont a reas eur zac'had droug er goueriadez, ken prim ha ken ter hag eur gorventen o tizac'ha en eun taol trum. Kregi a reas kerkent e levr ar paotrig hag e rogas anezan e mil damma nijas ama hag a-hont war eskel an avel.

Tra mantrus da lavaret ! Skeuden an Ao. Krist hi he-unan n'oa ket bet espernet !

A ! maeronez ! maeronez !... Kerkouls ho piye great regi d'in ive va c'halon dioc'htu !... N'he deus ket amzer, siouaz ! da jom d'am zelaou !... Mall eo ganti dastum he-denved a-raok an noz !...

* *

— Petra rez aze, paourig, daoubleget war al lann-leiz (1) ? O va ene ! leun c'hood eo e zouarn gant brou-dou an drez hag al lann !

(1) Humide.

— An dra-ze, Aotrou person, n'eo netra... mar galfen kaout treid va Jezuz hag unan eus e ziwireac'h a zo eat n'ouzoun dare da beleach' gant an avel !

Treid ha diwreac'h da Jezuz, va faotrig kez ? E gwironez, n'oun ket evit gouzout petra fell d'it lavaret ! Ha neuze, terval eo, eat eo an heol da guzat eur pennad brao a zo. Poe nt eo d'it mont d'ar gear, paotr paour !

— D'ar gear n'ez int ket, Aotrou person, a-raok beza kavet tammou va imach kaer ! a lavaras Jopig o ouela dourek.

Hag e kountas d'ar beleg madelezus ar gounnar a yoa eat en e vaeronez o kaout eur C'hroazig an Doue etre e zaouarn, hag ar pez he doa great anezan. Ar beleg mat a oe skoet o kaout kement a zevosion en eur bugel.

Neuze — o tra gouest da deneraat ar galon ! — e oe gwelet ar persoun koz hag ar paotr-saout o vont a-ruzou a dreuz al lann, an drez hag ar spern, o klask tammou an imach benniget sebeliet e tervalijen ar pardaez, hag o lavaret Litaniou hano Santel Jezuz.

Klask a rejont pell bras, dindan lagad ar stered. Lavaret zo bet d'in ez oa en noz-ze eun arc'heal o roi d'ezo eur sked, eul luc'h dreist an ordinal.

En eun taol, setu Jopig o leuskel eur youc'haden laouen, hag o sevel evel eun tenn en e zav : kavet en doa an tamm diveza a vanke eus skenden Hor Zalver. Hag ez ejont pep hini eus e du.

— Kerz buhan, Jopig, gant da zaout ha da zened. Kea dre ar wenogen a zo a-drenv ar c'hardi... O santez Anna !... An ao. Person el leur !... Kea dillo, Jopig, da guzat, n'eo ket gwelet a rafe an Ao. Person da zilhad toull ha fank.

— Eo, maeronez, mont a ran.

— Deiz mat d'eoc'h ive, merounez Kerestin, ha da holl dud ho ti... Dont a ran da goms d'eoc'h eus ho filhor...

— N'eo ket posUBL, Ao. Person ?... Da goms d'in

diwarbenn va filhor ? Klevet mat amjeus ? Siouaz ! eur paotrig dous eo, a gavan da vihana, mes paotr-saout fall ! Atao ema oc'h huvreal ! Kollet ſen 'deus d'in ar gaera eus va danvadezed !

— Eur c'holl eo, a dra zur, hen anzav a rankan ; mes selaouit ac'hanon evelato, me ho ped. Ho paotr a zo eur bugel dibabet gant Doue evit sevel, divezatoc'h, ouz an aoter...

— Jopig ?... eun diskiant ?

— Eur paotrig divalis evel eun oan ! Eun eal gant eur c'horf ! C'hoant am eus d'e gas d'ar skolach.

— Evit an dra-ze, Ao. Person, e lavarin d'eo'ch dioc'htu n'hellan ket ober. N'em eus mui tamm ed ebet da gas da varc'had Lanndi, ha n'e ket deuet c'hoaz em fenn teuler va gwenneien...

— Roit peoc'h, gwreg goan a feiz... Piou a zo o c'houlen arc'hant diganeoc'h ?... Roit d'in ar bugel, ha me bourveo da bep tra.

**

— Perak ez eus kement a vole er mintin-ma gant kleier Komanna ? Livirit d'in 'ta, Aotrou va zad... Digo-rit frank ar prenestrou, ma klevin gwelloc'h o c'ha-naouen & levenez ! Lakaat a reont eur peoc'h dudius da zisken em c'halon !

— Gait, va merc'h, bez didrouz ha didrabas. Hizio ema oferen genta Jopig Kerestin, hon deus anavezet paotr-saout gwechall.

— An oferen genta, santez Anna ! O mar gallchen mont d'he gwelet !... Roet em oa va ger...

— Ne dalv ket d'it lakaat an dra-ze en da benn, merc'h kez, klanv out, ha n'hellez ket bale.

— A ! eme Gait a vouez izel, beleg eo eta ! Brema e c'hellan meravel... Dont a rai da skuilha dour benniget war va c'horf paour.

Hag e oe klevet o c'hosmolat komzou kenta an

O salutaris. An abaden avat he doa dinerzet krenn
anezi, ha Gait a yeas da beur echui gant an elez ar
c'chantik kaer d'an Osti zantel.

Daou zervez goude, kleier Komanna a yo a adarre e
bole, eur bole leun a distridigez, eur bole klemmus en
dro-ma, ar glazou eo a yo a ganto.

Eur brosesion a yea d'ar vered. Aotrou Kerestin a
ouele puilh o vont warlerc'h an arched douget gant
peder blac'h yaouank diwar-dro, hag ar beleg nevez a
yea da genta o kana pedennou kanvus an Anaon.





Bez' ez oa e Betleem, bro ar Jude, eur c'hilhog gwisket kaer hag en doa eur vouez kaeroc'h c'hoaz, ar pez a reas henvel anezan Kan-Sklear. Kerkent ha goulou-deiz e veze klevet e vouez skiltrus o tregerni, o tiston a-raok pep mouez all betek pennou pella ar zaonen.

Ar c'hilhog-se a yoa dre wir da Obiaz, eur mesaer koz eus ar menez, en doa e welet o c'henel e klud e yer. Kerkent ha ma tispake ar c'hilhog e vouez, ar mesaer devout kenan a rea eul lamm er meaz eus e wele hag a yea d'an daoulin da adori Doue ha d'e drugarekaat evit e vadoberou. Goude ez ea d'ar c'hraou, eno edo e holl zanvez : eun ejen kaer ha pevar benn-darvad. Leaz e zenved ha viou e yer, setu peadra da veva, ha ne c'houlenne netra ebet ken. Beva rea e unanik, en e di-soul kollet er menez, abaoue m'oa deuet Doue da lammet digantan e wreg hag e zaou vugel. Doue a sko dizamant ar re a zo karet gantan ! Obiaz a c'houie kement-se, ha setu perak e plege goustadik dindan dourn ar Mestr

kárantezus, ne lamm digant Job kement en deus nemet evit kaout ar blijadur da rei d'ezan en dro diou wech kement all.

Hogen, eur pardaez, d'ar 24 a viz du, endra ma kouez an erc'h a druilhadou, setu ma klev hor mesaer skei eun taol skanv bennak war an nor. Daou ziaveziad a yoa eno : eur goaz eun tammik war an oad hag eur wreg yaouank c'hoaz ha kaer dispar :

— Deuet omp da Vetleem, a lavaras ar beachour, evit lakaat hon hano war ar rollou, evel m'eo gourc'hemannet gant Sezar. En aner omp bet o klask lojeiz en hostaleriou. Va gwreg koulskoude, her gwelit a rit, a zo gwall skuis ! Ne c'houennomp ket kalz a dra ; mes, abalamour da Zoue, roit d'eomp eun dournad kolo en ho kraou da dremen an noz.



— Tud kez, eme ar mesaer koz an daelou o tont en e zaoulagad, trempet eo ho tilhad, ha krena ra hoc'h izili.

gant ar riou !... Buhan, deuit buhan em lochen ! Tos-tait ouz an tan, ha kemerit ho lod eus va zammig pred. Eur skudellad souben al leaz a raio vad d'eoc'h ! Goude e roin d'eoc'h va gwele da dremen an noz, hag hoc'h azen a vezoz brao er c'hraou gant va loened, n'eo ket kolo a vanko d'ezan !

Daoust da galon vat Obiaz, Jozef ha Mari, anavezet hoc'h eus anezo, ne falvezas d'ezo kaout ken gwele nemet kolo seac'h ar c'hraou, hag abret ez ejont da c'hourvez, rak skuis maro oant.

Obiaz, hen iveau en em roas da gousket hepdale. Kousket kalet a rea zoken, en despet d'an avel diroll a c'houeze er meaz. Ya, an avel a yude mantrus e plegou ar menez o strilha d'an douar ar gwiskad erc'h teo a c'holoe skourrou ar gwez pin hag o regi ar c'houabr du a yoa en nevou o c'haloupat an eil warlerc'h egile.

* *

Mes, setu e kreiz an noz, e klever evel eun taol kléron, eur pez youc'haden skiltrus a-dreuz sioulder an ti :

« Kokoriko-o-o-o ! »

Obiaz a zihunas sebezet, a zavas eun tammig en e goaze, hag hen da frota e zaoulagad, o credi huvreal c'hoaz. Sevel a reas koulskoude nec'het bras ! Kornzigeri a ra dor e di evit sellet ouz kambr ar stered, e orolaj.

Setu ama eun dra zouezus avat, emezan. N'eo ket ouspenn hanter-noz, hag eo dihun Kan-Sklear !... Ar c'henta tro eo d'ezan da zihuna ac'hanon a-raok ar poent.

— Kokoriko-o-o-o !

Ha kerkent, gant sikour sklerijen an heol, Obiaz a welas e gilhog Kan-Sklear savet uhel war doen e graou, uhel e gribel gantan, e ziouaskel astennet, hag o kana da vouzara :

« Kokoriko-o-o-o !! »

— Peoc'h! peoc'h! Rei a ri peoc'h, labous fall !
Emaout o vont da zihuna ar paour kez tud a so kousket aze hag o deus kement a ezom da ziskuiza !...

Ha kredi a reot-hu ? Ar c'hilhog kerkent en em roas da goms. An holl a c'hoar e komzas al loened en nosvez eürus-se, evel ma reant gwechall araok ar pec'hed e baradoz an douar. Ar c'hilhog a respontas eta evel pa viche bet eun den eveldomp :



— Digarezit ac'hanon, va mestr Obiaz, hogen mar fell d'eoc'h e tavfen eo kouls d'eoc'h starda dioc'htu ar gorden-ma war va gouzoug. Ha penaos e falvesfe d'eoc'h e tavfen, me, Kan-Sklear, me karget dre vicher da gas d'an dud kelou goulou-deiz, e tavfen en deiz-ma ar c'haera eus an deizou ?... P'ema an Heol dreist an holl heoliou o nevez skedi, p'eo diskennet eus an nenv krouer ar sklerijen ?... Obiaz, va mestr mat ! Meulit an Aotrou ganen ! rag ar Mesiaz, Mab Doue, ar Zalver gedet a zo aze !... Ganet eo bremaik, dindan ho toen er

paour kez kraou-ma. Ha me, ar c'henta eus an holl grouadurien, me a embann d'ar bed-oll ginivelez eürus an Heol dasprener ! Kororiko-o-o-o !!

Hag an hekleoiou a dro-war-dro dihunet en eun taol a lavaras iveau peb hini d'e dro : « Kokoriko-o-o-o !! »

Nec'het ha laouen bras war eun dro, ar mesaer koz a yeas er c'hraou, el leac'h ma kavas Mestr ar bed-oll e doare eur bugelig gourvezet war eun dournadig kolo ! Mari ha Jozef hen adore didrouz ; an azen bag an ejen a denne d'Ezan o halan evit tomma e izili ; an denved a rea : « Bê-ê-ê ! » goustadik.

Obiaz a gouezas d'an daoulin, d'hen adori, ha goude gant prez ez eas d'ar menez da gas ar c'helou eürus d'ar vesaerien-all a yoa d'ar poent-se o tremen an noz war-dro o loened.

Obiaz neuze a welas oc'h tu ar sav-heol eur stereden gaer meurbet, a skede muioch'-h-mui dre ma save dioc'h



ar meneziou e bolz an nenv. Kerkent e klevas eur c'han ha n'oa ket eus an douar :

“ Gloar da Zoue e bar an nenvou ! Peoc'h war an douar d'an dud a volontez vat ! »

Tri eal, gwisket gant dilhad gwenn skedus a dosteas ouz Obiaz hag a lavaras d'ezan evit hen dienkrezi :

“ N'ho pezet nep aon, den karantezus, meulit Doue kentoc'h, rak ar Bugel a zo nevez ganet du-ze en ho ti, a vez abeg eul levenez vras evit ar bobl a-bez : ar Zalver gedet eo, ar C'christ, hon Aotrou !

“ Kokoriko-o-o-o ! » eme Gan-Slear divar e doen goloet a erc'h.


Unan eus an elez a vousc'hoarzas d'ar c'hilhog hag a lavaras d'ezan :

“ Ra vezi benniget, Kan-Sklear, te hag ac'h eus da genta meulet hag embannet donedigez ar Zalver divin, te bag ac'h eus en doare-ze gwestlet d'Ezan da vouez skiltrus ha freas !... Siouaz ! kan ar c'hilhog a zav hizio da embann ginivelez ar C'christ a zavo iveau dervez da embann e Basion glac'harus ! Hekleoioù Jeruzalem hen aslavaro eun deiz, ha drezout, kilhog, ez ai broad ar morc'hed e kalon an diskibl nac'het gantan e Vestr a-benn teir gwech. Abalamour da-ze, o Kan-Sklear, — perak n'hen lavarfen ket d'it ? — e vez lakeat da skeuden e kichen hini ar Groaz a vez bet Jezuz warni o paea pec'hejou an dud. Evit echui, o kilhog evesiant ! evel ma 'z out bet savet war doen kraouig ar c'hinivelez, kenta iliz Hor Zalver war an douar, dont a rai eun dervez ma vez gwintet da skeuden uhel uhel en oabl, da blava war ilizou Roue ar rouaned. Te, Kan-Sklear, a vez kilhog an holl douriou ! evit ar c'christen e vez skeuden ar vertuz war evez, hag evit ar boblou da zont, skeuden ar frankiz ! »

Hag o veza lavaret kement-se, an eal a yeas gant an elez-all a-denn-askel a-dreuz an uhelderiou en eur gana :

“ Gloar da Zoue e bar an nenvou ! »

Kan-Sklear, evit e drugarekaat, a huchas krenvoc'h
c'hoaz eget er gwechou-all:
« Kokoriko-o-o-o !!! »





AR BOD BEUZ BENNIGET

(Evit ar Zul Bleuniou)

— « He !... Youen Geradennek, eur vouest eus
Frans evidout !... »

Hag an hekleo a ziskanas an hano ker c'hoek d'ar re
a zo pell eus o bro : « Frans ! »

Hep dale e oe gwelet eur Breton bihan o tilammet
eus e delt lien :

— « Evidon ? » emezan.

— « Ya ! lavaret a rafet ! »

Hag ar mignon a zav ar vouest war bouez e vreac'h
da ziskouez d'ar Breizad eürus. Hema a lenn kerkent a
dreuz e zaelou a levenez an adres skrivet teo gant e
vamm... O ya, gant e vamm, n'en deus poan ebet oc'h
anaout he skritur.

Ar mignon Goubay a zalc'h krog er vouest keit ha
ma labour Keradennek da ziskoulma an neuden a zo
oc'h ober an dro d'ezi. Skoulmet mat eo.

— Troc'h anezi ! a lavar Goubay.

— Ya ! Trec'hi eun neuden great ha skoulmet gant va mamm.... e Breiz-Izel ?... O ne !... Ne garsez ket elevato ?...

Komzou ar Breizad a ya war-eün betek goueled kalon e vignon :

— « Gwir a levezez ! » eme hema.

— O ! Ar vouest-ze bet etre daouarn e vamm !... Ar vouest-se bet lakeat ganti war eur vativant da vont betek he mab, zouav du-ze en Afrik, pell pell en tu-all d'ar mor bras... daoust ha petra a zo kuzet enni ?

Hag o daou neuze hant hast e tilammont ar golo koat hag eur bern paper. Ha petra welont ?... Eun toul-lad krampoez gwiniz-du !!!...

— O mamm vat ! eme Geradennek, hi eo he deus aozet ar c'hrampoez-ze evidon !... Pegen alaouret int ! Ha pebeus c'houez dudius a zo ganto !... Ne gavez ket, Goubay ?

— Digas a reont sonj d'in eus kouignou ar Vandee ! a respontas ar paotr a vouez izel o plega e benn... mes siouaz ! n'em eus mui den ebet du-ze en hor c'hear-ni da ober kouignou d'in !...

— Mat ! mat !... arabat eo d'it mont da ouela evit an dra-ze !... Del ! debr ar re-ze a-raok ma vezint dizec'het gant avel bero an Afrik !...

O lavaret kement'sé o doa dizavet goustadik ar c'hrampoez tano. N'oa hini vruzunet ebet ! Ar vamm-ze a c'houie pakeda brao an traou !...

En eun taol, krak ! setu daoulagad ar Breton o kouezza war eur skourrig glas :

— Sell 'ta, emezan, petra eo an dra-ma ?

— Eur bod beuz benniget ! emezo war eun dro.

Youen a grog gant doujanz er skour glas diouanet war douar e vrô, pell pell du-ze, harp ouz e di. Lavaret a rafet ez eo bet troc'het en derc'hent, ker fresk eo c'hoaz. An deliou glas-velen-ze a vir pell boueden an

drojen o magas ; henvel int ouz paotred an Arvor a vir en o ene ar feiz koz o deus sunet ez vihanik.


Kas a ra d'e vuzellou ar skour benniget evit pokat d'ezan gant feiz, devosion ha karantez. Seblantout a ra d'ezan klevet c'hoaz gant ar beuz-se c'houez an ezans, an dour benniget, ha mouez ar pedennou hag ar c'han.

E galon vat a reas d'ezan divinout ez oa eun tamm avi e hini e vignon dirak kement a eürusded, ha setu hen ha diskolpa eur bodig da rei d'ezan :

— Daou vod eleac'h unan hon deus breman ! emezan. Del, va mignon, kemer hennez te !...

Kerkent e oe klevet hopal :

— War zao ! War zao ! D'ho fuzuliou, paotred !



Birou a skoe stank
stank war-zu enno
hag a roge deliou ar
gwez a dro-war-dro.

— War a-raok !
eme ar serjant d'an
holl zoudarded ha

krogomp en unan bennak eus ar gouezidi-ze, hervez an urz roet gant ar c'habiten !

— Ya, war araok ! eme iveau daou vignon eun tammig dies o fenn abalamour m'oant bet troc'het en o c'haoziou tener.

Ar skourrou bet binniget en eun ilizig a Vreiz-Izel d'ar Zul Bleuniou diveza a oe lakeat difre e godel ar chupen, ha neuze, prim ha prim, setu an daou zouav o tilamm da zailla war ar gouezidi. En em zantout a reont krenv evel loened hag hardis evel bleizi. Seblant tout a ra d'ezo ema Breiz ha Bro-C'hall a-bez o sellet ouz an daou zen yaouank o deus kaset pell du-ze da greski o sked, da zifin o douarou hag ho misionerien.

Ar birou a fuc'h atao a-dreuz d'an ear, hogen, rouesât a reont ; tennou fuzul a druilhadou a respont d'ezo kerkent, ha dizale zoken ar c'habiten chomet er gear ne glev mui grik ebet.

Goude beza gedet epad eun toulladig heuriou, eat bihan e galon gant an enkrez, setu ar c'habiten o welet e dud o tifourcha a douez ar girzier.

— Kabiten, eme ar serjant o tiskouez ar Breizad hag ar Vandead skuis maro mes laouen evelato, an daouma o deus kerzet evel daou bennfollet !

Lavaret a reas c'hoaz o tiskouez ar vorianed a stle-jent d'o heul :

— Int-i eo o deus o daou tapet krog er vorianed-ma !


Ar c'habiten a ra eur zell war ar vorianed ; unan anezo a zeblant d'ezan beza eus ar pennou bras... Sellet a ra goude ouz an daou vignon kalonek... O dilhad a zo poultrennet, roget... Gwelet a ra dreist-oll ar skourrou glas o tont eus o godellou :

— N'ouffen ket, emezan, e ve eus ar plant-se er vro c'houez-ma !...

— Nan, va c'habiten, eme ar Breton, ar plant-ma a deu eus Frans, benniget int bet em iliz parrez d'ar zul Bleuniou, ha va mamm eo he deus o digaset d'in !

Ar c'habiten a yoa skoet e galon gant ar pez a gleve :
e vugaleaj a dremenras dre e spered, ha souden e vouez
a zavas da lavaret uhel :

— Eun dra bennak, va mignoned, a vank da skour-
rou glas ho Pro ! ... Gouzout a ran petra eo... An dra-ma !



Kemeret a reas diou vedalen outo rubanou tri liou Frans, hag e stagas anezo e-unan war bruchedou an daou vignon, e kichenik ar beuz :

— Ha brema, emezan, paotred kalonek, e c'hellit hopal ganen : « Ra vevo ar Frans ! » rak ar Frans a zo a-bez war ho kalonou !

.


D'ar poent m'en em stleje mantel zu an noz war gwez koko ha banan an Afrik, an deiz a darze war Breiz-Izel, ha dizale an heol a lede e liou melen aour war gerreg an aochou.

Mamm Youen a yoa en he zav war dreujou he dor o floura ar voden-veuz glas a greske harp oc'h he zi ; lavaret a rea d'he amezegez :

— O Berc' hed, va fôtrez kez ! pebeus huvre kaer em eus-me great en noz-ma ! .. Ar bodig beuz am oa kaset da Youen a deue a-nebeudou da veza eur vedalen !... O mar hen dese va faotr ar vedalen a enor da zont d'ar gear !...

Berc' hed a yoa eat he spered da gaout he breur, missioner en Dahomey. Sevel a reas he fenn en eun taol krenn da respont :

— Evit sur, mar hoc'h eus huvreet an dra-ze, kement-se a c'hoarvez ! Daoust ha n'ema ket ar Vretoned da genta e pep leac'h ?...



YANN HA MAC'HARID

I

Mont a reant, ar c'hez emzivaded, tristik o doare, dre lanneier Plomeur, e Kerne, hep gouzout d'ar just da beleac'h.

Truez oa gwelet anezo gant o dilhad truilhennek. Mac'hарid (Gaid) he doa c'hoec'h vloaz ha Yann tost da bevar. O mamm a yoa kousket e gwered ar barrez ; o zad avat a yoa bet beziet er mor. N'o doa mui na kar na par da deuler evez warno.

O tihun er mintinvez-se war he gwele raden e ti ar Gof, Gaid a reas sellou nec'het en dro d'ezi hag e teuas eur mor a zaelou eus he daoulagad.

— Va Doue ! va Doue ; emezi, gwir eo eta an huvre am eus bet !

N'oa ket eun huvre, siouaz !

Dont a rea sonj d'ezi eus ar pez a yoa c'hoarvezet, gwelet a rea a spered he mamm drouk livet hag asten-net war eur c'holc'edad kolo, an aotrou person en he c'hichen, o pedi ; Rene, ar c'hurust, o tont en ti da heul ar beleg, eur c'hloc'hig gantan en e zourn... Hag e klevas ar glazou kanvus... Kaer o doa o daou gervel o mamm, respont ebet na roe.

Lavaret oe d'ezi oa maro he mamm.

Gouzout a rea brema petra oa kement-se. Yannig avat na ouie ket c'hoaz. Gouela rea, ha dalc'hmat e lavare :

— Pegoulz e teuio mamm ?

Gaid, ar c'hoar hena, a gemeras anezan etre he di-wreach'h hag a lavaras d'ezan :

— Mammig na glev ket ac'hanout, Yann... N'ema mui aze.

— E peleach ema ta, Gaid ?

— Mont a ran d'hen lavaret d'it : eat eo warzu baradoz an Aotrou Doue.

Yannig en em roas da ouela muioc'h-mui.

— Ha perak n'he deus ket kaset ac'hanomp ganti ? N'hor c'charie ket neuze 'ta ?

— Eo, Yann, mamm a garie ac'hanomp, kalz en deün.

— Mat, dont a rai neuze d'hor c'herc'hat ?

— Ya, Yannig.

— Me fell d'in e teufe dizale... ya, dizale. Ni a zo re reuzeudik hon doare.

Ar bugel a jomas eur pennad da ober e zonj, hag e lavaras adarre :

— N'eus na naon na sec'hed er baradoz, n'eo ket 'ta, Gaid ?

— Nan, Yannig, mes red eo beza fur, fur kenan evit mont di.

— Ni vezo fur !

— An Aotrou Person en deus lavaret ive eo red gouzanz hep en em glemm ar boan, an naon, ar zec'hed, ar skuisder, ha beza sentus bepred, mar fell d'eomp mont da gaout hor mamm d'an nenvou. Doue e-unan eo a c'halvo ac'hanomp pa vezo deuet ar mare. Ha martez hon devezo pell c'hoaz da jom war an douar. Eur mennoz a deu d'in, Yannig.

Ar paotrig a zavas e benn da lavaret :

— Eur mennoz ?

— Ya ; sonj em eus e lavaras mamm d'in eun dervez ; Doue a fell d'ezan, Gaid kez, e tizrofen davetan. Pa ne vezin mui aze, te a gemero da vreurig dre an an dourn hag a yelo gantan dre ar raden hag al lanneier da verouri an tonton Loiz, e Gouesnac'h. Va breur

Loiz a zo eur c'christen mat hag en devezo truez ouz ho-tinez, hag a roio d'eoc'h loj en e di ha bara da zebri.

Hor mamm vat a lavaras c'hoaz :

— C'houi garo ho tonton Loiz hag a zento outan.

— O ya. Gaid, ni garo hon tonton Loiz hag a zento outan. Deomp d'i, Gaid, deomp dioc'htu.

Ha setu petra rea da Yannig ha da C'haid beza oc'h ober hent dre lanneier Plomeur, e bro Gerne !

II

Eun dervez kaer a yoa. An heol a yoa tomm, ha n'eo ket souezus p'eo gwir edod e Miz gouere. Bolz an nenv a yoa digoc'hen, nemet eun tamm gloan danvad bennak uhel, uhel, a yea hag a dueu kaset gant an aezennig skanv. Hag an daou vugel a jome da zellet outo gant plijadur ; kustumetoc'h oant da welet koumoul du o-tremen uz d'o lanneier.

Yann a lavaras d'e c'hoar :

— Hor mamm eo a zo d'an neac'h o vousc'hoarzin ouzomp hag o kas ac'hanomp da di hon tonton Loiz. Anaout a rez anezan, Gaid ?... Anaout a rez tonton Loiz ?

— Eur wech em eus e welet er pardon du-ma ; pell zo abaoe.

— Dizale e welimp anezan, n'eo ket gwir, Gaid ?

— Nouzoun ket, Yannig ; kredi ran evelato.

Yannig a oe darbet d'ezan anzao en doa naon ha se-c'ched, ha poan en e dreid noaz. Tevel a eure koulskoude, o sonjal e ranke gouzavng hep klemm evit gallout beza digemeret eun deiz el leac'h edo e vamm.

An daou vugel a valeas hir amzer dre al lanneier hep gwelet den. Bep eun amzer, eur golvan, eur boc'hig rus, savet uhel war blenchen ar vein-hir goloet a van, pe kuzet en eur voden lann, a gane, a richane en enor

d'an daou veachour ; hag an dra-ze a roe d'ezo eun tamm nerz-kalon.

— Sell, Gaid, hennez, eme Yann, eo bochig-ru hon liorz. Hen anaout mat a ran. Mont a ra da lavaret da donton Loiz emaomp erru.

Gaid na lavaras netra. Seblantout a rea beza nec'he toc'h eget he breur. Alies e chome a-zav, hag he daou lagad en drem-wel, e klaske gwelet merouri Gouesnaç'h pe da vihana nadoz eun tour bennak da ziskouez d'ez i an bent. Mes, kaer he doa, ne wele netra, ar baotrez kez !

An daou vugel a deue da veza skuis maro. Setu i o koueza o daou war eur mean e kichenik eur voden valan. An heol a yoa diskennet izel ; dizale e teuje an noz hag oa red d'ezo kaout eun toull bennak d'he zremen.

Yann a c'houlennas evit an dekved gwech :

— Erru omp tost, Gaid ?

Siouaz ! Gaid na grede respont netra. Briata reas he breurig en eur ouela hag e lavaras d'ezan :

— Pedomp an Aotrou Doue, Yann ; hen hepken a c'hell savetei ac'hanomp.

— Pedomp ive ar Werc'hez, Gaid, ja santez Anna-Wened hag an Aotrou sant Erwan.

— Ya, pedomp, pedomp !

Mont a rejont d'an daoulin, hag e savjont warzu an nenv o mouzeiou glan leun a anken. Doue ne c'helle ket ober skouarn vouzar ouz pedennou daou eañig ker fur !

Setu i o klevet an *Angelus* er pellder.

Saveteet cant !

III

Mac'harid a grogas e dourn Yann : Deomp brema, emezi, Doue en deus selaouet ac'hanomp hag en deus bet truez ouzomp. Kloc'h Gouesnaç'h eo hep mar an hi ni hon deus klevet.

— Ya, eme Yann, hen eo sur a-walc'h. Deomp. Hag e lamme gant al levenez.

Taoliou diveza an *Angelus* o doa ehanet da skei hag a yoa eat da ober hekleo da benn pella lanneier Ploemeur. Yann ha Mac'harid a yeas war-zu al leac'h ma seblante d'ezo o doa klevet ar c'hloch'. Ankounac'heat o doa holl boaniou an dervez kris-se. Sonjal a reant brema en digemer laouen a raje tonton Loiz d'ezo, el leaz teo gant bara du a vije roet d'ezo, er gwele raden ha yeot seach' ez ajent da c'hourveyz warnan.

Mont a reant dre eun hent doun, kleuziou leun a vrug rus en daou du d'ezan. En eur c'horn-tro e weljont eur groaz ven savet Uhel. Ar vugale a reas sin ar groaz en enor d'ar C'christ a bleige d'ezo e benn kurunet a spern, hag en hent adarre.

— Pa lavaren d'it, eme Vac'harid, an Aotrou Doue eo a zo oc'h hentcha ac'hanomp... Sell, na kaera foenneg ! Yann a yoa o vont da lavaret eun dra bennak warlerc'h e c'hoar pa glevjont eun den o koms gant eur vouez c'hzoz. Eur Breizad, eun tammik war an oad, a yoa dirazo o c'houlen outo :

— Paour kez bubale, da beleac'h ez it d'ar poent-ma eus an deiz ?

— Ni a zo o vont da di eun tonton d'eomp o chom e Gouesnac'h, a lavaras Mac'harid.

— Eun tonton o chom e Gouesnac'h ?

— Ya, eme Yann, ni a zo o klask hon tonton Loiz, breur hor mamm vat nevez galvet gant Doue d'e varadoz.

Ar c'houeriad a reas eur skrijaden hag e teuas eur berad daelou da lugerni e korn e lagad.

Kregi a reas e dourn ar vugale hag e kasas anezo dre gichen ar groaz, en eur lavaret d'ezo :

— Deuit ganen, bugale, arabat eo d'eomp chom dre ama.

— Perak, eme Yann, ne deomp ket dre ar prad-se ?

M'em bije dastumet bokedou koant da gas d'am zonton
Loiz !

— Aze ez eus toullou doun. Ez eac'h da goll o vont
dre ar prad-se.

— Va Doue ! Itron-Varia ! a lavaras an emzivated
spontet.

Erru oa an noz. Ar c'houeriad hag ar vugale a yeas
buhannoc'h. Eur wenojen a gasas anezo betek eur
foenneg a yoa enni eur vioc'h lart hag eun toullad d'an-
ved o peuri. Pelloc'h, dindan ar gwez avalou, e weljont
eun ti-soul.

— Aze eo, eme ar c'houeriad o tiskouez an ti d'ar
vugale.

Chom a rejont goude eur pennadig hep lavaret ger,
ha Gaid a c'houennas a vouez izel :

— C'houi a anavez eta hon tonton Loiz ?

— Bugale gez, me eo ho tonton... an tonton Loiz
emaoc'h o klask. Hiviziken, c'houi vezoo bugale d'in-me
Hag o welet daou bennad bleo melen etouez an ed en
eur park a-dost e lavaras : Ha setu aze ho tiou c'hoar ;
kalon vat o deus, karet a raint ac'hanoc'h !

— Pebeus eürusted ! a lavaras Yannig. Ni a bedo
holl an Aotrou Doue da zigemeret bon tad hag hor
mamm en e varadoz, evit ma 'z aimp di ni iveau d'e ga-
ret ha d'e veuli pa vezoo deuet ar poent.

(Troet divar *Almanach de l'Œuvre Expiatoire,*
La Chapelle-Montligeon, Orne).



NIK HA SEVEN

En amzer ma teue aliez Jezuz hag e Vamm zantel da ober troiou hale er vro-ma, e veve daou zipientil yaouank, Nik ha Seven.

Nik a oa krog en e c'houezek vloaz ; ha Seven ne oa c'hoas nemet pevarzek.

Seven a garie an Aotrou Doue hag ar beorien a zoubigale muia karet an Aotrou. Ne jome ket pell e wenneien en e c'hodel. Nik avad na roe da bep-hini nemet ar pez a ranke, ha marc'hata a rea c'hoas zoken.

O zad a oa êt diganto, hag o mamm a zonjas kas anezzo da floc'h (floc'hed) da di o eontr a oa o chom e pell bro. Eun devez eta, e roas bep a vantel vouk (glas), bep a yalc'hadi gvat, ha bep a loan kezek d'ezo, hag an daou vugel da vont lacouen o c'halon da welet broiou nevez.

Hogen en eur c'hoazez hent, eur vintinvez, e welchont en he c'hoazez etal eur groaz, eur vaouez keaz kuzet he fenn ganti en he zavancher. Seven a reas d'e varc'h chom a zao, hag hen goulen digant ar baourez petra rea d'ezhi beza o lenva. Hi a lavaras oc'h hirvoudi :

— Maro eo va mab diganen ! Ha brema eo red d'in mont da glask va zammik bara !

Seven a oe mantret ; mes Nik, eat eun tammik lar-koc'h, a hopas gwap warnan :


— Ha kredi a ri ar pez a glevi gant kement klufan a gavi ? Huanadou ar wrac'h-se a zo eur griped da gaout da yalc'h diganez.

— Va breur, ro peoc'h, en han' Doue ! Da gomzou c'houero a ra d'ezi goula muioc'h-mui.

Hag hen o rei e yalc'h d'ar wreg paour :

— Dalit ; ne hellan rei nemet an dra-ma d'eoc'h, mes-

pedi a rin Doue ma blijo gantan skuilh eur beradig gliz
bennak war ho kalon.



Ar baourez a gemeras ar yalc'h o lavarout:

— P'eo gwir hoc'h eus bet ar vadelez da rei d'in ar pez ho poa, kemerit ar graouen-ma a zo enni eur wes-peden great he flem gant dir.

Seven a gemeras ar graouen, hag e vreur hag hen a yeas gant o hent adarre.

Digouezout a rechont abenn eur pennadik e-kichen eur c'hoat. Er c'hoat-se, eur bugelig noas-pilh a glaske eun dra bennak, mél marteze, e toulou ar gwez, ha kana a rea war eun ton ken klemmus ha gousperou an Anaon :

— Riou (anoued) am beus !

Seven a lavaras d'e vreur :

— Jezuz ! Nik, nag ar paourkeaz bihan-se a chouzanv gant an avel yen !

— Rividik eo eta ! Me ne gavan ket an avel tamm yen ebet.

— N'eo ket dies d'it. Te a zo gwisket mat, e leac'h hen, n'eus nemet an ear en dro d'ezan.

Hag hen ha chom a zav, gervel ar paotrig, ha goulen outan petra'rea.

— Me zo o klask an nadoziou-aer a zo kuzet er gwez, eme ar bugel.

— Ha petra'ri ganto ?

— P'am bezo kavet kals, me a yelo da werza anezo, ha me a breno dilhad a roio tom d'in.

— Ha kavet e teus ?

— Unan hebken. Er gaoued broen-ma ema. Sellit, Aotrou.

— Ma, eme Zeven, kemer a ran kaoued hag all. Dal va mantel vouk, paour keazik, da gaout tom d'az izili.

Hag an daou vrèur gant o hent adarre. Seven en doariou da genta ; mes tremenet ar c'hoat ganto, an avel a davas, ar choumoul a zispakas, hag eur wazien heol a baras.

E oant neuze tostik ouz eur prad glas. Er prad-se ez

oa eur feunteun hag, azezet etal ar feunteun, e oa eun den koz. Eur val a oa gantan war e skoaz ha s-blant skwiz a oa war e zrem. Pa welas an daou zen yaouank, e c'halvas anezo gant eur vouez truezus. Ha Seven da dostaat outan.



— Petra 'peus c'hoant, tad koz ? emezan.

— Allas ! Aotrouien, gwelet a rit peger gwenn eo va bleo ha peger roufennet eo va zal ! Kabach' oun deuet da veza, ha va divesker o deus beach' o tougen ac'h-anon. Red e vezd d'in mervel ama, nemet gwerza a rafe unan ac'hanoc'h e varc'h d'in.

— Gwerza eul loan d'it, klasker bara ! eme Nik gant dismegans. Ha paet e vezd ?

— Gwelet a rit ar vezen-ma. Enni ez eus eur giniden hag a oar ober gwiad krenvoc'h eget an dir. Evit eul loan ho pezo anezo.

Ha Nik o tirolla da c'hoarzin. Seven avat a lavaras gant dousder :

— Me a ro va loan d'eoc'h, va den mat ; n'eo ket abalamour d'ar giniden, mes abalamour ho peus poan.

— Bennoz Doue d'eoc'h ! Aotrou.

Hag an den koz a zav war ar marc'h hag a gerz seder.

Nik na oe ket evit mirout da lavaret traou d'e vreur :

— Genaouek ! emezan. Mez a dlesez da gaout ! Te a vezо reuzeudik da stad brema ! Sonjal a reez marteze am biche daouhanteret va zraou ganez ? O tra ! ne vezо ket ar stal egiz-se !... Skiant prena, skiant gwella ! Te a zesko diwar da goust beza furoc'h hiviziken.

— Na oa ket bet Morse em zonj, eme Zeven, kaout lod eus ar pez a zo d'it, Nik. Kea eta. Me a yelo ives.

Nik a dec'has, lorc'h ennan war gein e varc'h. E vreur a gerze war e droad war e lerc'h hep rebech seurt d'ezan.

Digouezout a rechont e giz-se war eur streat (garden) stris, gwasket e pep tu gant eur menez. Ar streat-se a oa e mano ar streat villiget, rag en he c'hichen a veve eur rounfl hag a bake atao (dalc'hmad) an dud pa gleve anezo o tremen. Dall e oa, sezet ives, mes ken tano e oa e ziouskouarn ma ouie pe da vare e teue eur vuzugen eus an douar. Da vevelien gantan e oa daou erer don a niche war e gomz da dapout nep piou bennak a yea gant ar streat.

Nik na ouie seurt, hag hen gant e varc'h dre ar streat.

— Va chas mat, eme ar rounfl, it da gerc'hat an tremeniad-ze d'am lein d'in.

Hag an daou lapous da vont gant herr e-giz eur bolled. Hag int kemer Nik ha kas anezan d'ar rounfl.

Seven a zigouze d'an ampoent e penn an hent stri. Gwelet a eure e vreur o vont gant an daou erer. Hsg hen koueza war bennou e zaoulin :

— Aotrou Doue holl-c'halloudek, emezan, saveteit
Nik va breur !

— N'ez ket da zirenka Doue gant eun dra ken dister,
eme eur vouezig flour en e gichen.

Ha Seven trei e benn, na welas gour.

— Piou eta a zo o kaozeal ? emezan. Peleac'h e-
maoc'h ?

— E godei da chupen, eme an teir vouez.

Hag an den yaouank klask en e c'hodel, ha tenna
er meaz ar graouen, ar gaoued hag ar vezen. E pep hini
anezo, c'houi a oar, e oa eur loenig bihan.

Ha Seven d'ezo :

— Chouï eta eo a fell d'eoc'h savetei Nik ?

— Ya, emezint.

— Ha penaos, va netraïgou ?

— Digor warnomp hag e weli.

Hag ar giniden steui eur wiad kalet evel an dir ; hag
hi sevel war gein an nadoz-aer a zougas anezi en ear :
eur skeul a wias ; Seven a bignas gant ar skeul vurzu-
dus, ar wespeden o nijal dirazan, ken e tigouezchont e
ti ar rounfl.

Ar rounfl dall ha seizet a oa en e goaze war al leur-
zi. Bralla a rea e gorf o kana :

Me a gar kik al Leonard
Magei druz-druz gant fars ha lard ;
Re Dreger a zo mat o blaz,
Blaz krampouez fritet ha leaz glaz ;
Mes re Wened ha re Gemper,
Foei !

Hag o lavarout ar zen-se, e renke pastellou kig moc'h
da boaza Nik. Henma a oa e-harz e dreid, ereet e zives-
ker (diouhar) hag e zivreac'h egiz eur penn-yer da la-
kaat ouz ar ber. An daou erer a oa eno iveau : unan o
tresa ar ber hag egile o c'houeza tan.

Trouz ar rounfl o kana a viras outan da glevet Seven

hag e deir vignounez. An daou erer avat a oa o vont da blanta o skilfou e Seven, mes dallet e oent gant flem dir ar wespeden. Houma a nijas etresek ar rounfl a oa bet dihunet eus e hunvre gant skrijadennou e zaou vevel, hag hi a skei warnan. Ar giniden a zeuas hag a dapas anezan en he gwiad dir. Gervel e zaou vevel a reas ar rounfl; ar re-ma a ziredas, n'eo ket d'e zifenn mes d'e zispenn. Dibri a rechont ar rounfl a dreuz d'ar wiad dir, hag e krevchont: kik rounfl a laz.



Ha Seven da ziliamma e vreur ha da bokat [d'ezan]. Great e labour gantan, ez ejont er meaz. An nadoz-aer hag ar wespeden a oa eno, sterniet ouz ar gaoued, a oa brema eur wetur gant ar graouen hag ar vezen da roujou. Hag int lavaret d'an daou vreur mont er wetur. Ar

giniden a grogas er zugellou. Ha yao ! ker buhan hag avel. Ar wetur a dapas douar e-kichen ti eontr ar bao-tred yaouank. An daou vreur a gavas eno o loaned a zeblante beza ouz o gortoz. Ouz dibr marc'h Seven e oa yalc'h henma hag e vantel, mes ar yalc'h a oa teurennek hag ar vantel goloet gant perlez aour.

Sebezet, na petra 'ta ? Seven a droas war-zu ar we-tur da c'houlen digant e loenedigou petra oa an dra-ze. Ar wetur ne oa ken eno, hag e leach'h ar wespeden, an nadoz aer hag ar giniden, ez oa tri eal lugernus.

Hag an daou vreur koueza war bennou o daoulin.

Neuze, eun eal, an hini kaera ha gwisket ar splana, a lavaras da Zeven :

— N'az pez aoun ebet, te hag a zo mat da galon ; rag ar vaouez, ar bugel, an den koz e teuz great vad d'ezo a oa ar Werc'hez Vari, ar Mabig Jezuz ha sant Jozef. Ni a zo bet roet d'it da gas da veaj da benn. Bre-ma pa 'z out digouezet, ni a ya en dro d'ar Baradoz. Kenavezo !

Hag hen da Nik :

— Bez sonj eus ar pez az peus gwelet ! Gra vad d'ar paour.

Hag an tri eal digeri o diouaskel ha nijal kwit o kana an *Alleluia*.



Foar ar godellou toull

Ar gontaden dudius-ma a zo tennet ganen eus Levr Buez Sant Teodot, savet gant an Ao. Guillou, maro person e Penmarch, an hini en deus gret traou ker brao e Brezoneg. Goulen a ran, evit brasaplijadur ar Vretoned, ma vezo advouillet e oberou. (Klaoda'r P.)

* *

Dioc'h an abardaez, setu Fanch koz o tont d'am c'haout :

— Gouzout a rit, Aotrou, emezan, em beus divizet tri derivez foar ; varc'hoaz, ma n'ho peus ket ezom ac'h-anon, em beus sonj da vont da Landi.

— Mat, mat, yao, eme ; eus goulou-deiz betek nav eur ema ho kabestr war ho moue... Setu ama gwerz eur banne hag eun tamm butun... »

Hag e rojon d'ezan eur pez dek gwenneg. Fanch koz a dennas e voned segovi hag a bokas d'e zourn. En nosvez-se ar zaout, ar marc'h, o devos askoan, kel laouen oa ar mevel.

Antronoz, mintin mat, edo Fanch koz oc'h en em frotta, oc'h en em spura, oc'h en em larda (da lavaret eo o larda e voutou) ; e varo a yoa raklet, e vleo gris difuilhet, diboultrennet... M'hen diche gellet ive o diloueda !!!... Mes, siouaz ! ouzomp-ni, braserien koz e wall stag ar c'hanastr !

Wardro sez eur ez eas d'é yalc'hig, e kemeras eur pez ugent real, e sellas piz outan, rak marteze her gwele evit ar wech diveza... Unan koant oa, kochet tro-war-dro. Eur pez a eiz real digoch a deuas warlerc'h, ha da echui, eur gwenneg bennak. Evel just, va fez dek gwengen a yoa ive eus an abaden.

Goude-ze Fanch a zoubennas, hag e jileten vanchek dindan e gazel, e gorn en e veg, en em lakeas da dreuzi ar bourk ken drant ha pôtr yaouank ebet.

— Ata, Fanch, a lavare an dud, mont a reer 'ta ?

— Ya, ya ! eme Fanch.

— Asa, Fanch, eme re-all, n'oar ket korbezen hizio ?

— Tra, tra ! eme Fanch.

— Petra, Fanch, eme eur miliner a yoa o karga daou pe dri leue, ne vez ket eur banne... eun tammig sao ? »

Fanch a zellas a-dreuz ouz va frenestr, rak gouzout a rea ne garan ket kalz ar saoiou. Kloz oa pep tra. Setu Fanch en ostaleri hag ac'hano e kar ar miliner. Ma savas marvailhou, n'eus ket ezom d'hel lavaret, ar vilinerien a zo touchennet mat o zeod, ha farouel Fanch goude eul lipaden a yea ive kempen en dro.

O c'hoarvezout e Landi e tiskennas ar miliner hag e amezeg ; an daou leue ive a deuas er mês war bouez o divesker. Ar miliner a ranke paea ar gwir evit an daou leue, ha Fanch, pôtr brao, na petra 'ta, a baeas adarre ar gwin d'ar miliner.

Setu Fanch e kér. Evit gouzout an eur e sellas ouz horolach an iliz, hogen ne c'houie ket kalz dioc'h an traou-ze ; an nadoz hirra a yoa war bemp, ar verra eun tammig en tu-all da nao.

— Sator dallik ! eme Fanch, setu aze diou nadozen ha n'int ket evit en em glevet ! Ma vichen-me horolacher, ne viche nemet eun nadozen war ar rond gwenn-ze, ha neuze an holl a welche sklêr an eur. An heol, setu eno eun horolach !... Nadozen ebet warni ! Setu eno eun dra grêt diouz ar baizanted !... Bah ! Bah ! eme Fanch o vont larkoc'h, nav eur eo, en gros, perak chipotal ?

Petra reer en eur foar pa ne vez netra da ober ? Evidon-me n'her g'uzoun ket, Fanch ayat her gouie.

Da genta ez eas da dachen ar moc'h hag e varnas pep unan hervez e *galite*, hervez e vent hag e gig. Goude-ze da dachen ar zaout..., goude-ze da dachen ar c'he-



Iliz Lanndi

zek. Edo eno pa zonas an *Angelus*. Fanch a yoa kristen mat, a dennas e zegovi hag a ziskouezas e vleo gris adarre eun nebeut poultrennet.

— Eun tamm boued brema ! eme Fanch. Hag ez eas warzu eun ostaleri. Edo o kompreñ enuan e-unan an dispign a dlie da ober... daou wennegad bara, daou wennegad souben, tri gwennegad kig, pevargwennegad gwin, hag...

Fanch a lakea e zourn en e c'ho-del zeou ; eno e kave d'ezan beza lakêt hag ar pez kochet hag an hini digoch, hagarre-all... Siouaz ! Siouaz ! netra ebet er c'ho-del !... Goude-ze ez eas d'an hini gleiz.

Siouaz ! Siouaz ! Kant gwech siouaz ! goullo oa ! toull oa ! daou viz Fanch a deue er mèz... E arc'hant paour a yo a eat kuit koch-digoch dre ar memes hent.

G'houi, kredabl, a viche fallgalonet gant eun hevelep tòl ; peadra a yo a. Fanch avat ne reas nemet leuskel tri satordale ! c'houek hag a greiz kalon, ha skrabat e benn evel m'hen divije kollet e grib abaoue eur Miz.

Mont a reas war eün da dachen ar moc'h, hag e selle, ha, respet d'eo'c'h ! e turie gant e zaouarn.

— O c'houennat petra emaoc'h aze, va den mat ? a lavaras unan bennak d'ezan.

— Satordale ! eme Fanch, n'eo ket o c'houennat, oc'h hada eo oun bet, siouaz ! evidon. Eur pez ugant real kochet, unan a eiz real digoc'h... M'ho peus o c'ha-vet, m'ho ped, en han' Doue, roit anezo d'in !...

Ne reat nemet c'hoarzin.

— Bah ! Bah ! pôtr koz, eme an dud, tremp nevez a 'zo aze, diwana raint a-benn bloaz !...

Mont a reas da dachen ar zaout, hag e kollas e boan ; da dachen ar c'hezek, hag e oe respontet d'ezan :

— Bah ! bezit dizoursi, ne jomint ket er mèz dindan an amzer, kaout a raint lojeiz !

— Koulskoude satordale ! eme Fanch, eun den a guzul vat bennak a dle beza er gér-ma ! Mont a ran da gaout an aotrou person.

Dioc'htu e oe digemeret.

— Aotrou, eme Fanch, me a zo toull va godel ; kollet em eus eur pez ugant real kochet hag unan a eiz real digoc'h !... Petra rin-me brema evit o c'haout ?

— It, eme an aotrou person, da gaout an tabouliner, hag it buhan, rak er c'hériou an arc'hant a gouez a zo askellet.

Setu 'ta an taboulin en dro diwar-benn arc'hant Fanch, ha Fanch e-kichen o tiskouez tri biz dre doull e c'hodel, rak dre lakât alies e vizied eno en doa frankaet an digor. O klevet an trouz, ar zaout a heje o fenn, ar

c'hezek lard a zave er vann, ar re dreut a jome sioul,
ker sioul hag an hini en doa grêt ar gavaden.

Fanch a reas war hed tost tro kér da heul an taboulin, hag evel m'en doa klevet lavaret oa anet diouz an drem (vizaj) anaout eul laer, e sell piz ouz an holl, e kave d'ezan zoken edo liou ar groug war meur a hini, mes ne grede ket mont larkoc'h.

— Alo, eme Fanch, pa wele e poanie en aner, sator-dalle ! paouezomp !... Kenavezo, pez kochet !... Kenavezo, digoch !... Mont a ran war yun da welet peseurt labour a ra an dud-all !...

Edot en e gichen o klask gwerza eur vioc'h ; gevier a zizac'het eus an eil kostezen hag eben. Unan a c'houlenne kalz re, egile a ginnige kalz re nebeut.

— Sator ! eme Fanch, c'houi ive a zo toull ho kodel, pa glaskit noazout d'ho nesa !

Eur pennadig larkoc'h edo merc'hed an amann, eur chaok spontus ganto, hag o klask lakât da lentaat ar re n'oa ket eveldo dir war o fas...

— Sator ! eme Fanch, c'houi ive zo toull ho kodel !

Larkoc'h edo ar varc'hadourien kezek ; ar geriou bras a fuc'he, a groze..., lavaret a rachac'h e vichet o prena eur jeo d'an diaoul da jarreat tud daonet...

— Sator-dalle ! eme Fanch, c'houi a zo ive toull ho kodel !... War ugent skoed a c'hounezit e kollit kant gwech hoc'h ene !!....

Erfin Fanch a skuizas hag araok mont d'ar gér e c'hoantaas mont d'an iliz da zaludi ar Werc'hez, da lavaret eur *Bater* hag eun *Ave*. E-kichen ar c'hef ez eas war bennou e zaoulin. Eur paour kez koz a yoa en tuall gant e japeled. Fanch a zelle outan... Dioc'h kostez Gwiniventer e tu bennak e ranke beza diouz e wiskamant, ma c'heller da vihana henvel gwiskamant eun dournad truilhou a yoa war e dro, rak edo war gorf e roched, ha c'hoaz peseurt roched !...

Ar paour pa oe echu e beden a deuas warzu ar c'hef.

Tenna reas eus e vruched eur yalc'h ler stag ouz e c'houzoug evel eur skapular ; hag eur pez-a eiz real a lugernas en e zourn hag a gouezas en eur zini ebars er c'hef.

Fanch a yoa mantret.

— Va den mat, emezan, penaos e c'hellit-hu dioueret eur pez arc'hant egiz-se ?

— Ne zioueran netra, eme ar paour, ar pez-se em eus kavet hizio, ha re-all gantan. Evel n'ouzon ket anaout ar perc'hen, e roan eul loden d'ar Werc'hez en e hano, hag ar rest a zalc'han evidon.

— Me just, eme Fanch, eo em eus grêt ar c'holl : eur pez ugent real ho peus c'hoaz, eur pez kochet...

Ar paour a ziskouezas e bez, kochet oa. Ouspenn, andra-ma a dremene en eun iliz, el leac'h n'eo ket brao l'avaret gevier. Kinnig a reas 'ta da Fanch e bez kochet, e bez dek gwenneg hag ar mouniz.

— Nan, satordale ! eme Fanch, a zaou-hanter, mar plij !

Hag ez ejont o daou d'an ostaleri da zibri ha da ranna an arc'hant.

Fanch a zigouezas er gêr abret.

Pa c'houlenjot digantan peseurt foar a yoa bet.


— Foar ar godellou toull ! eme Fanch. Me oa toull va godel ; ar varc'hadourien saout, kezek, moc'h, amann..., a oa toull o godel ; eur paour hepken am eus kavet en iliz ha na c'hoantae na pec'hi, nag en em vesvi, na laerez ; hennez n'oa ket toull e c'hotel, rak n'en doa hini ebet.

Ao. GUILLOU

Beleg.

An daou vartolod breton

Brema ez eus eun neubeut bloaveziou (1), eul lestr (eur brik) a yo a loc'het eus kér Alexandri evit mont da Smyrn. Al lestr-ze n'oa ket henvel oc'h listri Frans ; eul lestr grek oa, kemeret gant ar Fransizien diwar goust al laeron-vor a zo bandennou anezo er c'hosteziou-ze. Pemizek martolod hag eun ofiser a yo a laket e



penn al lestr-se kemeret war forbaned ar C'hres. Mes al lestr-ze n'oa netra a-zoare war e dro, hag evel-se n'ellas ket heuilha eul lestr-all brasoc'h a yo a loc'het er memes amzer gantan, hag a en em gavas hep dale dilezet e kreiz ar mor bras. Dont a reas an noz du ha

(1) Er bloaz 1827.

tenval ; glò hag avel a rea, hag ar mor a yoa spontus gwelet e wagou.

Etre ar c'houezek den laket da ren al lestre-ze, an daou genta, ar c'habiten hag ar mestr storier, a yoa Bretoned. Ar c'habiten a yoa Bisson e hano (1), hag ha-no ar storier a yoa Tremintin (2).

Eus an daou zen-ze eo e fell d'in koms, daou varto-lod kalonek ha pennek evel gwir Vretoned ma 'z oant.

Edont o daou war ar pont, unan krog er stor, hag egile o klask gwelet a be du e c'houeze an avel evit gal-lout lakât mat ar gwerniou hag ar gweliou.

Ar c'habiten a lavaras d'ar storier :

— Eur wall nosvez, Tremintin !

— N'eo ket brao sur, kabiten. ha ma na deu ket Itron-Varia-Porzik d'hor zikour eun neubeut, em eus aon na ve grêt frigousen gant hon lestr.

— Intron-Varia-Porzik ne zilez Morse ar Vretoned, Tremintin.

— Setu ar pez a ro fizianz d'in ive !... Ay ! !...

Ar wern vrás a yoa torret hag he doa laket ar stu-rier da glemm. An tarziou mor a zilammas war ar pont hag a oe tost d'ezo skuba ar c'habiten hag ar stu-rier. Ret oe d'ezo kregi mat evit ne vijent ket strinkellet er mor. Prestik goude Bisson en em roas adarre da-goms :

— Sell, Tremintin, n'em eus aon na rak an tarziou, na rak an avel, na rak ar reier ; mes daou eus al laeron a yoa e gouealed al lestr o deus gallet tec'het kuit hag en

(1) Ganet e Guémené (Morbihan) er bloaz 1796, maro war vor, er bloaz 1827.

(2) Ganet en Enez-Vaz, ha marvet eno ive d'an 3 a viz even 1862. d'an oad a 84 vloaz. An Tremintin-ze a yoa eun tonton-koz da Ber Tremintin a zo brema mear Plouescat ha kuzulier jeneral.

(Klaoda).

em deuler er mor. Mar gell ar re-ze mont d'an douar e tastumint an holl laeron a zo wardro ar c'harter-ma hag e teuint holl warnomp.

C'houec'h eus al laeron-vor a yoa liammet e goueled al lestr, ha daou o doa gellet terri o liammou ha tec'het.

— Mar teuont warnomp, eme Tremintin, e vezint digemeret. Muioc'h a aon em eus da welet al lestr-ma o tigeri eget da veza trec'het gant ar re-ze.

— Mes, sonj 'ta, n'omp nemet c'houezek !

— Eun den war evez a dalv dek, a leverer. Eur martolod a Frans a dalv kant laer-mor eus ar C'hres. Me garre o gwelet o tont !...

— N'eus fors, Tremintin, m'em eus aon, me. Me zant al laeron-ze evel ma sant ar c'haz al logod. Grêt em eus pep pourchas evit, ma rankomp stourm, ma vez start ar c'hoari. Eun dra am eus de lavaret d'it : Ma vezont trec'n d'eomp, me ne vezin ket prizonier, me lakaio an tan er poultr.

— Mat a reot, kabiten !

— Dalc'h sonj mat !

— O n'ankounac'hain ket !

Ar pez en doa lavaret ar c'habiten Bisson a c'hoar-vezas. Pegen tenvel bennak ma 'z oa, e weljont hepdale o tont warno daou lestr a yoa tri-ugent den pe dek den ha tri-ugent e pep hini anezo.

— Alo, Tremintin, eme 'r c'habiten, bremaik e tigoro an abaden.

— A gav d'eoc'h kabiten ?

— N'eus douet ebet !

— Mat, boued ar groug int, evelkent !

Ar c'habiten a laoskas eur zutaden, hag a youch'as a-houez penn :

— Holl war ar pont !... Ar gwerniou hag ar c'herdin d'an traon !... Pep hini e armou !... Hag evez mat !...

Pep hini en em laka el leac'h ma tle beza. Tremintin en em erbed ouz an Intron-Varia-Porzik ; Bisson a ya

gant eur mous, eul letern gantan en e zourn da oueled al lestr. Pevar eus al laeron-vor a yoa eno c'hoaz chadennet. O distaga ra, hag e lavar d'ezo :

— Alo ! d'al laez (d'an neac'h !), labaskenned !.. d'al laez !... d'al laez !... Ho kamaraded zo eat da gerc'hat eur vanden vuntrerien d'hon distruga-ni. C'houi a zo mat da ober garz (haie) etre va martoloded ha birou pe boulji ho mignonned !

Ar brezel a ya da zigeri. An daou lestr laeron a dosta. Youc'hal a reer outo ha ne respontont nemet evel an tigr o vont d'en em stleja war e breiz.

Bisson a dosta oc'h Tremintin, a denn e vontr bet roet d'ezan digant e vamm, hag a lavar :

— Tremintin, kemer ar montr-ma ; me a zo o vont da vervel, eun dra bennak hen lavar d'in. Hen lavaret am eus d'it, ne jomin ket etre daouarn ar re-ze. Te, gra da c'hallooud evit tec'het ; me fell d'in kement-se !

— Mat, kabiten ! eme Tremintin gant eur vouez c'holoet ; hag e talc'he mat atô d'ar stur.

Pa 'z oa deuet an daou lestr forban war hed tenn, Bisson a hopas adarre, hag o vez a ne respontent ken nemet yudal evel loened gouez, e tigoras an tan o tiskarga warno e fuzul a zaou denn. Eno neuze e oe eur stourmad kris, tennou, tôliou bouc'hal, tôliou gant pep seurt benviachou, youc'hadennou, malloziou, skrijaden-nou, gwad o redet, tud lazet, gouliet, izili torret, flastret, bruzunet. C'houezek den oc'h seiz ugent pe kant hanter kant !...

Hepdale al laeron-vor a oe ar vistri, hag o doa gellet kalz anezo sevel e lestr o enebourien. Tremintin en doa dalc'het mat d'ar stur. Bisson a yoa gwall-laket. En em stleja a ra betek ar storier :

— Alo ! Tremintin, ret mat eo echui ! Lavar d'ar re a zo c'hoaz beo eus hor martoloded en em deuler er mor, ha te, en em dôl ive eveldo. Marteze e c'hellot mont d'an douar war neun... Me ya da lakât an tan.

— Kabitén, lavaret em eus d'an holl vartoloded.
N'em eus mui nemet an dra-ma da ober.

Hag o kas e zaouarn d'e c'hinou e reas eur c'horn-boud gant e voz hag e loskas eur voudaden.

— Alo ! kabitén, n'eus ken da ober !

Hag e krog adarre en e stur.

— Mes, ha te ?

— Me jomo ama.



— Tremintin, gourc'hemenn a ran d'it en em deuler
er mor !...

— Ha me, kabitén, n'ouzoun ket petra vir ouzin na
grogan ennoc'h ha n'ho tôlan ebars hoc'h-hunan.

— Tremintin ! Tremintin !

— Sellit, n'hoc'h eus ket a amzer da goll. Me ne dal-vezan ket kalz a dra, ha ne din morse a-bell. C'houi a zo yaouank, eun den a vor eus ar re wella ; c'houi oc'h eus eur c'hoar...

— O ro peoc'h ! ro peoc'h ! ranna rez va c'halon !

— C'houi zo gouest da zifen hor bro. En han' Doue, en em dôlit er mor. ha va list da lakât an tan er poultr. Bezit dienkrez, ar re-ma n'ho devezo ket al lestr !

— D'in-me eo da lakât an tan ; va dever eo, hag e fell d'in hen ober.

— Mat, kabilten, neuze e vezimp strinket en ear hon daou !

E keit ha ma komze ar sturier, unan eus ar forbaned a yoa tostaet ouz ar c'habiten hag a yea da zisken eun tîl bou'hal war e benn. N'en devoa ket a amzer avat, Tremintin hen diskaras gant eun tenn pistolen, hep diskregi eus e stor.

— Gwelet a rez n'eus mui da varc'hata ! eme ar c'habiten.

— Roit d'in ar c'hef tan, me ho ped !

— Nan, ne c'hellan ket !... Kenavo, Tremintin !

— Kenavo, kabiten ! En em vriatomp ! Intron-Varia-Porzik ra hor zikouro !... Mall eo hasta !...

An noz a yoa tenval sac'h ; al laeron, savet eun niver bras anezo war al lestr, en em laze an eil egile e-kreiz an denvalijen. Eun tammig sklerijen a weler koulskoude ; Bisson eo ha gantan en e zourn eur pennad korden lakêt an tan en he fenn ; Bisson eo, n'en deus'mui na tad na mamm, n'en deus nemet eur c'hoar, eur c'hoar karet kenan, hag en deus aon na varvfe ar re-all epad ma 'z a da vervel e-unan :

— Tremintin ! Tremintin ! emezan, en han' Doue en em dôl er mor !

Ar sturier ne lavar ger, ne finv ket, mes pedi a ra Doue kalonek. Bisson, pa 'z oa diskennet en hevelep

doare n'oa mui nemet e benn a-zioc'h ar pont, a reas c'hoaz eur griaden oc'h Tremintin oc'h e bedi d'en em zavetei. Neuze e tiskennas tre.

« O Intron-Varia-Porzik ! » eme Tremintin.

Kerkent e savas al lestr a-bez en ear ; eur strakaden spontus a oe, hag al lestr, an tan ennan, brevet oll, lakêt a beiou, a gouezas tamm ama, tamm a-hont, war ar mor. Prestik goude, den n'en divije gouezet oa bet eul lestr eno ha tud a-leiz ennan.

Ar c'habiten Bisson a oe draillhet, an holl forbaned a oe flastret ive, dispennet ha lonket holl gant ar mor. Tremintin a yoa oc'h en em erbedi ouz ar Werc'hez er mare ma tispenne al lestr, Tremintin a oe savet en ear, en devoe eun troad divarc'het, e gorf devet, mes n'oa ket maro tre pa gouezas er mor. Dres e kavas eur gorden dindan e zaouarn, hag evitan da vez da goll e anaoudegez, e talc'has krog mat enni. Ar gorden-ze a yoa stag oc'h unan eus ar bagou bihan deuet da heul listri ar forbaned, ha prestik goude Tremintin a yoa war an aod chachet gant ar vag vihan-ze, da lavaret eo e c'helled lavaret dre vurzud. Tremintin a oe semplet eno eur pennad mat, ha pa zizemplas ez oa unan eus al laeron-vor o lammet digantan e zilhad ha kement a yoa war e dro. Tremintin a reas eur finvaden bennak, ha kerkent e oe lakêt beg eur gountellazen war e galon, oc'h e c'hourdrouz hen laza dioc'htu mar graje an disterra van da zifen ar pez a yoa en dro d'ezan. Ar pez a rea ar muia poan d'ezan oa gwelet o vont gant ar forban montr ar c'habiten kez, ha ne c'hellje ket hen renta d'e c'hoar.

Wardro dek eur dioc'h ar mintin e oe kavet, en noaz ha dare da vervel, gant tud eun tammig gwelloc'h. Gouerner an enezen (en enezen Stanbali edo) a reas e zougen d'e di el leach'ma oe prederiet gantan, ha pa oe pare tost da vat e lakaas e zougen da Frans.

Tremintin e-unan eo en deus kontet kement-ma.

Hen e-unan eo a asur mar deo chomet beo eo ar Werc'hez
he doa saveeteet d'ezan e vuez. Tremintin zo bet goude-
ze letanant war eul lestr brezel. Bet en deus ive ar groaz
a enor.

N'em eus ket ezom da lavaret en deus miret betek e
varo eun devosion vras d'an Intron-Varia.

G. M.

F. ha B. koz, 10 gouere 1875.



Bragou kenta Paolig

E meur a garter eus a Vreiz, ha zoken e karteriou-all, e weler awechou potred sez, eiz vloaz, ha betek nao, dek vloaz, ha n'o deus ket c'hoaz ar pez dilhad-se anez pehini eur paotr n'eo ket c'hoaz eur paotr tre, a zo c'hoaz e renk ar merc'hedigou, me fell d'in lavaret eur bragou. Awechou marteze kement-se a zigouez dre an diegi he deus ar vamm o lakaat he c'hrouadur e renk ar baotred ; awechou-all ive n'he deus ket a beadra da brena an danvez a ve red evit lakaat ar pez dilhad prisi-us-se en dro d'he mab. Setu petra c'hoarvezas gant mamm Paolig ez eomp da goms dioutan. Ker paour oa, ma 'z oa deuet he mab d'e zek vloaz, hep m'he divije gallot c'hoaz e vragnaoua. War bouez gwriat, takounat, staga an eil oc'h egile, koz tammou lien ha koz tam-mou mezer, he devoa great d'ezan eur pez dilhad ha ne oa ket tre eur zae losten, ne oa ket tre eur zac'h, ne oa ket tre eur bragou, en eur ger, ne oa ket tre henvel oc'h nikun euz an tammou dilhad bet great ha krouet betek neuze gant kemenerien ha gant kemenerez, pegement bennak a spered hag a ijin o deus da zevel giziou nevez.

Paolig, a chellit kredi, a veze great gwap anezan abalamour d'e zae. Eur potr ker bras hep bragou ! Red e ve beza bet eleac'h ar potr keaz evit gouzout mat pegement e c'houzanve. Evese ive, bemdez Paolig a hope war e vamm o c'houlen eur bragou hag ar pez a rea ar muia poan d'ezan oa gwelet bugale an amezegez, Perig, Laozig, Yannig, o zri bragaouet hag i kouls-koude o zri yaouankoc'h evitan. Paolig eta a bede e vamm ker brao ha tra. Ne rea ket a forz peseurt bragou da gaout, pe lien pe vezet, pe rus pe c'hlas, pe goz pe

nevez ; gant m'en divije eur bragou, eur gwir vragou,
ne c'houlenne ken.



« Ma, a lavaras e vamm d'ezan eun dervez, bez paotr mat ha sentus, lavar kalonek da *Bater*, noz ha mintin, hag em bezo eur bragou d'it a-benn gouel Yann. »

N'em beus ket ezom da lavaret d'eoc'h pegement e tridas kalon Paolig o klevet ar c'helou-ze. Azalek neuze betek gouel Yann, e kontas hag ec'h adkontas ken allies an derveziou, hag e kave keit an amzer, ma oe darbet d'ezan kredi ne deuche biken ar gouel kaer-ze, an dervez-se en doa kement a vall da welet.

Gouel Yann a deuas koulskoude d'e vare. Ar vamm geaz, dre boan a-walc'h, hag ive bennoz Doue d'an dud vat, he devoa gallet sevel eur bragou da Baolig ; ha pa zihunas dioc'h ar mintin, ar paotr, kenta welas, oe an tamm dilhad prisius, eur bragou, eur bragou nevez-flamm. Ne oe ket ezom, kredit ac'hanon, da jacha warnan evit ober d'ezan sevel. Ar bragou a oe poket d'ezan, lakeat buhan, hag eur pennadig goude, edo Paolig o vont hag o tont dre 'n ti gobius, mil gwech eürusoc'h evit eur roue pe eun impalaer. Ne bade ket gant e fouge.

E vamm a vousc'hoarze oc'h e welet gwech soun e benn gantan, gwech e zaoulagad pleget da zellet oc'h e vragou nevez. Abarz eun heur goude, oa bet ar c'hanfard oc'h en en em ziskouez e tiez an holl amezeien. N'en doa ket, zoken, tizet dibri eun tamm, ken ne oa bet gwelet ar bragou gant Perig, Yannig ha Laouig, hag evel n'oa ket c'hoaz a-walc'h, o veza en em gavet gant Alanig, eur paotr eun tammig brasoc'h evitan, hag a yo a vont d'ar vourc'h, ez eas ive d'ar vourc'h gant e vignon. Siouaz ! ama eo ema ar chanz o vont da drei. Gwelloc'h en divije great kalz Paolig chom er gear. Mes eur paotr bragaouet evit ar wech kenta a gred e c'hell hiviziken mont e pep leac'h. Paolig a gave d'ezan e oa dioc'htu eur gwaz.

Setu i eta war hent ar vourc'h, Alanig hag hen. Bez' o doa da dremen e-biou d'eun tammig glazen pe flouren a yo a kostez an hent; eur wazennig zour a rede hed ar c'hlazen-ze, hag a-zioc'h ez oa eun dorgennig. Diwar gern an dorgen pe an duchennig-se, ez oa eun doare gwenojen soun, war ziribin, hag eno ar baotred a yo a boaz da gemeret o ebad. Sevel a reant war an dorgen, ha neuze e tiskennent a-ruz war ar c'hlazen. En em lezel a reant da vont a-ruz, n'eo ket war o zreid, n'eo ket war o daouarn, n'eo ket war o c'hein tre ken nebeut, mez war an tachad-se eleac'h ma 'z eo ledana ar bragou. N'ouzon ket, lenner, ha c'houi hoc'h eus great ar c'ho-

ri-ze morse, pa oac'h nevez bragaouet, mes, a dra zur,
ec'h ouzon ez eus hag o deus hen great.

Alanig eta n'hellas ket tremen dre eno hep mont da
ober eun dro war an dorgen. Paolig ha n'en doa ket
gallet betek neuze kemeret perz en ebad-se, abalamour
d'e zae losten, n'halle ket brema kennebeut mankout
da vont da heul e gamalad. An dro genta ne deuas ket
kaej gantan, mes a benn m'en doa great diou pe deir
zro, e ruze ive brao ha kempen betek an traon. Ar
c'hoari a blije da Baolig ; mes, siouaz ! pep plijadur a zo
berr war an douar. P'edo oc'h ober ar bemped pe ar



c'houec'hved tro e oe klevet eur strakaden. N'eo ket eur
rog, n'eo ket eun disframm hepken a yoa diskolpet ha
distaget tre, ha chomet e hanter an dorgen. Hag evel pa
erru eun dichanz, ec'h erru peurliesa meur a hini, ar

paotr a yo a diz warnan, hag 'a risklas tre betek ar wazig dour eleac'h ma oe glebiet, kailharet ha goloet a bri ar pez a jome gantan eus e vragou.

Me ho lez da zonjal pebez glac'har, pebez anken evit ar paour kez Paolig ! Penaos mont d'ar gêr er stum-ze ? Penaos mont dirak e vamm ? Ha kaout c'hoaz, douetus, fest ar vaz ! Paolig a skuilhas o vont ac'hano d'e di daelou a-walc'h evit gwalch'i e vragou, ma vijent bet destumet.

E vamm a yo a eur gristenez vat hag a ouie diorren mat he bugale. Gouzout a rea ne dleer ket kastiza eur c'hrouadur pa fazi dre skanvadurez hag hep sonjal, evel pa fazi dre benn fall ha gant anaoudegez eus ar pez a ra. Evese, petra bennak ma 'z oa keuz ganti gwelet kollet an holl boan he doa kemeret evit sevel ar pez dilhad-se d'he mab, ne skoas ket gantan, n'her gourdrouzas ket zoksn. Ne reas nemet e alia da ziwall.

Mes Paolig a oe kastizet awalc'h, koulskoude ; rak, siouaz ! ar zae-losten a oe red da lakaat adarre, ha da zerc'hel, zoken, meur a zervez, ken ne devoe gallet ar vamm baour dont a-benn da lakaat ar bragou freuzet e stad da veza gwisket a-nevez. Hogen, mar great gwap diaraok eus ar paotr keaz gant e zae-losten, e reat c'hoaz muioc'h brema, ha Paolig a renke plega e benn gant mez, meur a wech.

Brema, marteze, ho pefe c'hoant da c'houzout petra deuas Paolig da veza divezatoc'h ? Setu ama e berr gomzou.

Er c'hatekiz, person ar barrez e welas ez oa Paolig eur bugel fur ha sentus, en doa kalz a spered hag a skiant vat, hag ez oa devot evel eun êl. E gemeret a reas en e di, hag e reas d'ezan studia. Goude-ze, her c'hasas d'ar skolach eleac'h ma oe atao unan eus ar regenta e-touez e gamaladed. Divezatoc'h, ez eas d'ar c'hloerdi bras, hag eno e oe evit ar gloer yaouank eur skouer a bep seurt vertuziou. O veza beleg e labouras

epad meur a vlavez evit silvidigez an eneou en eur barrez. Abenn eur pennad, e eskob her galvas evit beza vikel-vras, hag erfin, Paolig a oe e-unan lakêt da eskob.

O veza eskob, e konte e-unan gant plijadur ar pez am eus merket ama, hag e lavare : « Mar on deuet da veza eun dra bennak, e tlean holl d'am mamm vat, d'an deskadurez gristen he deus roet d'in. »



(Tennet eus ar *Feiz ha Breiz* koz.)

Loden Doue

Eur gouel ar Rouaned e mare an Dispac'h

Pep tra a yo a sioul ha dienkrez en nozvez-ze e Ker-dafred. Kedern, ar merour, a yo azezet war skabel an oaled o tevi eur c'hornad butun da c'chedal koan. Tri pe bevar bugel a rea jolori endro d'ezan : lod a jache war e zilhad, lod-all a bigne war e zaoulin, ha kement-se evit kaout ar blijadur da lavaret d'ezan ez oa gouel bras.

— Tad ! tad ! ankounac'heat hoc'h eus... Hizio ez eus gouel ! a lavare Janedig.

— Ya, eme Louis ive, eur paotrig albemp bloaz, hizio ema gouel ar Rouaned ! Mamm he deus great eur gouign gant bleud gwiniz ; lakeat he deus enni mel, hag eun dra bennak-all c'hoaz, eur...

— Arabat lavaret, Louis, pe hon tad a ouezo evel-domp ! a lavaras Gaïd, ar baotrezig dous.

— Plijadur a vo ! Plijadur a vo !... a lavare ar vugale o strakal o daouarn hag o tilammat d'an douar.

Pen Kedern a deuas da veza tenval.

Ar pez a lavare a rea d'ezan sonjal e traou a-bouez. Edod neuze e mare gwasa an dispac'h, p'edo ar spont vras o ren war ar vro. Ne vije ket bet brao da dud Ker-dafred beza tapet oc'h ober an disterra tra a c'helle digas sonj eus gouel koz ar Rouaned ; ouspenn peadra a yo a eno da veza barnet ha dibennet. An dispac'herien a yo a kris ha n'helled kuzat netra outo. Piou c'hoar ha n'edont ket zoken d'an ampoent oc'h ober o zro, hag o spia ar pez a read en tiez ? E abardaez an deiz-se, en-deün, o tont eus foar Foujer, Kedern en doa klevet tennou fuzul a-bell.

E galon a deuas da veza ankeniet pa zonjas e ke-

ment-se. Chacha reas ar vugale davetan hag e lavaras d'ezo a-vouez izel :

— Roït peoc'h, bugale ! Ma klevfed ac'hanoc'h !

Ar vugale a oe spontet d'o zro hag a yeas d'en em starda ouz o zad.

Gwelet a reant ez oa eur riskl bennak uz d'o fennou.

Gaid hepken a gredas lavaret goustadik :

— Perak kaout aon pa 'z eo prennet ker mat an nor ?

— Aon am eus evidoc'h, bugale !

— P'eo gwir emaomp ganeoc'h !

— N'eo ket a-walc'h, emezan.

— O tad ! an dud fall ne gredit ket dont ; ha neuze, Doue a gar ac'hanomp ; hen hon diouallo dioc'h pep droug. Mamm he deus great d'eomp lavaret hor pedennou evit gouleñn e skoazel.

Kedern a roas eur pok d'e verc'h :

— Doue ra viro ac'hanout, emezan. Poent eo d'eomp debri koan. Ouz taol, bugale !

Ar wreg he doa lakeat eun dousier wenn war an daol, ha war an dousier-ze eur podad chistr hag eur bara gwiniz da zigas c'hoant debri d'an dué.

Ha setu, p'edod o c'chedal an nebeuta, unan bennak o skei taoliou munut war an nor, hag e oe klevet eur vouez o lavaret :

— Digorit buhan, en han' Doue !

An ozac'h a hastas mont da zigeri, hag e kavas dirazan eun den koz, gwenn e vleo, sounn c'hoaz evelato war e ziwesker, d'ezan eun dremm leun a vadelez hag a zousder.

— Aotrou person ker ! a lavaras Kedern mantret.

— Deuit tre, aotrou person, a lavaras ive Madalen, ar wreg. Deuit en ti, hag ho pezo ho lod eus kouign ar Rouaned.

Ar beleg a vousc'hoarzas.

— Siouaz ! va mignoned, n'eo ket brao digemeret eun den eveldon-me. Pardonit d'in koulskoude mar dan

en ho ti : kement a riou hag a naon am eus ! Skuis maro oun ives o c'haloupat ar c'hoajou.

An aotrou persoun a azezas war eur skabel. Dare oa koan. Goude beza lavaret ar pedennou, ha gouennet bennoz Doue war ar boued ez ead da gemeret, an aotrou person a yoa o kas eun tamm bara d'e c'hinou, pa oe klevet trouz tud o vale dirak an ti ha prestik goude e koueze taoliou pounner war ar paour kez dor.

— An enebourien ! eme an aotrou person. Lezit ac'hanon da vont daveto. Ne fell ket d'in ho pefe da baea ho karantez evidon. Digorit an nor !

— Biken, aotrou Person !

— Red mat eo koulskoude !

— Aotrou Person, gellet e vez marzeze savetei ac'hanoch'h. Deuit ! Deuit !

Ar c'houeriad a jachas ar beleg keaz warzu eun archig a yoa en eur c'horn eus an ti hag a reas d'ezan mont ebars.

— Dreist-holl, eme an aotrou person, n'it ket da lavaret gevier ! Ne fell ket d'in, klevet a rit ? Ne fell ket d'in prena va buez gant eur gaou !

Edo ar chas Gall o tivarc'h an nor pa'z eas an ozac'h da zigeri.

— Eur beleg a zo kuzet ama, a lavaras ar bleizi o yudal. E peleac'h ema ? Lavar buhan ! Ha diouall na lavarfez gevier d'eomp !

Ar c'houeriad a reas eun heja d'e skoaz hag a lavaras :

— Grit hervez ho micher !

— Asa ! lavar : E peleac'h ech eus kuzet anezan ? Da respont, mar deo gaouiad, a gaso ac'hanout d'ar maro, ha da dud ives.

Kedern a zavas aon gantan ; dont a reas da veza drouk-livet, bag edo o vont da zempla. Kemeret a reas kalon evelato o sonjal n'edo ket ar mare da goll ar penn.

Ar gourdrouz a vije sevenet, her gouzout a rea ; an armou a lugerne en o daouarn a yoa c'hoaz rus gant ar

gwad, da viana meur a hini anezo. Dont a reas sonj d'ezan eus komzou ar beleg : Ne fell ket d'in prena va buez gant eur gaou !

Kedern a ziskouezas an arc'h d'an dispac'herien hag a lavaras d'ezo :

— Aze ema !

An enebourien a daolas eur zell war an tamm koufr. Ar Breizad a lamme direiz e galon en e greiz ; e dud a varve gant ar spont ; den avat na roas da anaout a-zia-vez ar pez a dremene en e ziabarz.

An hini a yoa e penn ar strollad muntrerien a yeas eur zac'had kounnar ennan :

— Petra ! Daoust hag oc'h ober gwap emaout ? Ni n'emaomp ket o klask eun toull gedon. Eun all a die beza en da di, en eur c'hougn bennak.

— Klaskit anezan, a lavaras Kedern.

— Ne fell ket d'it hen diskouez ?

— Petra livirin-me d'eoc'h ouspenn ?

— A-walc'h eo, eme ar c'habitent ; mes malloz d'ar person mar tigouez d'eomp lakaat hor c'hrabanou war-nan !

Ar zoudarded a glaskas dre an ti ; mes kaer o doe klask ne gavjont netra. Mont a rejont kuit o kounnari hag o sakreal war goust ar paour kez aotrou person.

— Tee'het a ra eur wech muioc'h eus tre hon daouarn ; souezus eo, rak kredi mat a reamp edomp war e rou-dou. Mes ne gollo netra evit gedal.

Eat oa kuit eta pelloc'h ar vandennad chas Gall. Ar beleg koz a deuas er meaz eus e doull kuz.

— Meuleudi da Zoue ! emezan laouen bras ; saveteel oun bet gant ar wirionez hoc'h eus lavaret. Holl avat e vijemp bet kollet mar ho piye lavaret eur gaou.

— Choui a zo eur zant, aotrou person !

— Me a zo eur paour kez pec'h dare da vervel gant an naon, eme ar beleg oc'h azeza uz taol. Mall bras eo d'eomp kregi e pred ar Rouaned.

— Setu ama loden Doue, aotrou person ; d'eoc'h eo ! Ra vezimp muioc'h en hon eaz er bloaz a zeu evit debri ar goan-ma ! Ni da vihana n'ankounac'haimp biken an nozvez trubuilhet-ma.

— Diskouezet he deus d'eomp penaos ema dourn Doue o tifен ac'hanomp, a lavaras ar beleg. Meulomp da viken e hano santel ! Greomp atao hon never, ha da c'houde, ra vezimp etre daouarn an Aotrou Doue, ma rai ac'hanomp ar pez a blijo gantan.



Ar marc'heg milliget



E Breiz-Izel, en eur c'hornig a venez Arez eus eur chapel dindan hano St-Herbot, hag ar chapel-ze zo anavezet ha darempredet gant kalz a dud. E kichen ar chapel-ze ez eus ar pez a c'halver eur c'houez-dour hag a deu tud a-bell da zellet ou-tan. Ar ster Ellez, gou-de dont eus an douar e Gun-Elle, e-troad menez Sant-Mikeal, a dreus Brenniliz ha Lokfred o vont war-zu Sant-Herbot. Ar ster a zo eno war eur blenen

uhel, mes araok digouezout e Sant-Herbot e tisken en eun taol, diwar ar menez, en eun draonien pe stanken don don. An dour en em daol a gas, a lamm da lamm, a roc'hel da roc'hel, hed wardro eur c'hard eur bale, azalek ar beg betek ar goueled. Dreist-oll pa vez krenv an doureier, ne weler nemet eonen evel eul linser wenn ledan stignet o plega hag o tisplega azalek gorre ar menez d'an traon hag e klever eun trouz a laka da dregerni ar c'charter-oll. En daou du d'ar ster ez eus koat, ha gwelet a reer ive stank a-walc'h, oc'h diribin an dorgen

zonn-ze, peziou rec'hel ha ne gretet ket mont tost d'ezo,
rak dalc'hmad e sonjset e vent o vont da riskla eus al
leac'h m'emaint ha da ruilha da oueled an draonien.

Dindan unan eus ar rec'hel-ze ez eus eun toull, evel
eur c'hao, hag e goueleg ar c'hao-ze, don kenan, ez eus
eun eienen a red an dour anezi en eur seunteunig eur
pennad ac'hano. Hounnez oa gwechall feunteun Sant
Herbot. Hogen, abaoue ma 'z eo digouezet ar pez ez
eomp da verka ama, an eienen-ze n'he deus mui a ha-
no ; he dour a zo milliget ; ar mesaer a dec'h diouti, ha
ne fell ket d'ezan zoken lezel e loened da eva eus an
dour-ze.

E kichen dor ar c'hao-ze ez eus eur mean-hir asten-
net e-touez ar c'hinv ; dindan eur penn eus ar mean ez
eus eur mean-all bihannoc'h. A-bell e kemerset ar mean-
ze evit eur mean-hir, evel a zo eleiz e Breiz Izel, mes
a-dost e ve lavaret e ve eno war e c'hourvez eur mar-
c'heg gant eur mean dindan e benn oc'h ober penn-we-
le. Hennez eo skeuden pe mean ar marc'heg milliget, a
zav ac'hano a-wechou, a leverer, hag a glever oc'h hir-
voudi. Setu ama penaos eo bet savet an histor-ze.

Eun amzer zo bet, hag an holl o deus klevet hano
eus an amzer-ze, ma 'z ea, eus a Vro-C'hall hag eus an
holl broiou kristen, tud a vandennou d'an douar santel,
da vrezelekaat evit difen bez hor Zalver hag al leac'hiou
all bet rusiet gant gwad Jezuz-Krist, pe bet santelleat
gantan o vale dreizo. An duchentil dreist-oll a yea en
hent, ar re da vihana anezo a yoa kristenien vat, ha
pep hini a gase gantan muia ma c'helle eus e wazien,
eus ar re ma en doa gwir warnezo. Setu petra c'halvet
ar brezel santel pe brezel evit ar groaz, hag ar re a yea
d'ar brezel-ze a c'halvet kroazourien, ha dougen a reant
eur groaz e mezer war o dilhad. Ar Vretoned ne oent
nak ar re ziveza o vont d'ar brezel santel-ze, nak ar re
a ziskouezas ennan nebeuta nerz-kalon na nebeuta feiz,
hag ar Sarazined, an dud divadez eus ar vro-ze o deus

dalc'het sonj pell amzer eus an taoliou kaer great eno
gant tud a Vreiz-Izel. En amzer-ze ez oa a-dost da Zant
Herbot daou gastell hag a yoa o chom enno daou zijen-
til, daou varc'heg, ar marc'heg Ruskeg hag ar marc'heg
Rusdal, hag an daou gastell a zouge pep hini anezo ha-
no e berc'hen.

Ar marc'heg Ruskeg a yoa eun dijentil a lignez uhel
eun den eus ar re wella, eur c'christen kalonek, karet
gant e wazien ha gant an holl. Ne vije ket bet brao er
mare-ze mont da glask stourm o'ch kastell Ruskeg.
Gwelet e vije bet hep dale labourerien-douar, mesaerien,
pilhaouerien o kemeret, e defot gwell, pep hini e benn-
baz evit mont da zifen an Aotrou. Ar vugale zoken, o
tiouall an denved er menez, a vije eat d'an emgann gant
o fenn-baz-dotu, kentoc'h eget lezel ober droug d'an hini
a garient holl bras ha bihan. Kerkent ha ma oe hano da
vont da zifen bez hor Zalver, marc'heg Ruskeg, evel
eur c'christen mat ma z' oa, a oe unan eus ar re genta
oc'h en em lakaat en hent, hag o testum eur vanden
eus e wazien hag eus e vignoned da vont d'e heul.

Marc'heg Rusdal ne oa tamm henvel oc'h an dijentil
mat hon deus komzet anezan. Rusdal a yoa eun den
kris ha diboell. Kredabl oa bet badezet ; hogen, hag e
viye bet divadez, n'en divije ket renet eur vuez dizu-
choc'h, direoloch'n na gwasoc'h evit a rea. E wazien hag
ar re a yoa dindanna ne dosteant morse outan nemet
en eur grena. Beva a rea en e gastell gant eun toullad
mevellou pe lakizien ken direol, ker kris ha ken diva-
dez hag hen. Ne deant er meaz eus ar c'hastell-ze nemet
evit skrabat ar pez a blije d'ezo : laeres ha laza a yoa
evito eun ebat. Tec'het a reat dioc'h ar c'hastell evel
dioc'h eun toull laeron. Abaque ma oa eat an dijentil
Ruskeg d'an douar santel, Rusdal en doa kresket c'hoaz
e dorfejou, ha kresket oa ive dre ar vro ar strafuill hag
an enkrez a yoa razan. Rak, e c'hellit kredi, Rusdal n'oa
ket eat da zifen bez hor Zalver ; eun den eveldan n'oa

ket great evit dougen ar groaz, na bale dindan banniel Jezuz.

E kreiz e zizursiou, e kreiz an ebatou euzus en em blye enno, Rusdal a yoa bepred eun dra o kriniat e galon ; an youl d'en em venji, ar gasoni en doa oc'h an dijentil Ruskeg. Kounnari a rea o sonjal ez oa an dijentil-ze karet gant an holl, endra ma'z oa hen kaseat gant holl dud ar vro. Roet en divije e ene, ha meur a hini, mar en divije bet da rei, evit gallout en em zizoher, evit gallout en em venji eus e enebour. Ar gounnar, ar warisi-ze her c'hrinie noz-deiz. Dalc'hmad her c'hlavet o lavaret : « Piou am venjo-me war hennez ? Piou en distrujo ? Piou a roi d'in-me tro da ziskar warnezan va chouunnar ha va malloz ?

Evel a welit, an ifern a yo a kalon ar marc'heg hag an ifern a respontas ive a-benn eur pennad oc'h an youl-ze eus e galon kaledet. An droug-spered a gavas da gas d'e zikour unan hag en doa eur galon ker kris hag hen. Eun nosvez ma edo Rusdal en eun dourel eus e gastell, e rea eun amzer skrijus ; an avel a yude, ar gurun a groze, al luc'her a zidarze hep ehan, hag ar marc'heg direol a doue hag a lavare bep eun amzer :

— Piou a zistrubo va enebour ?

— Me ! eme eur vouez o respont eus ar meaz.

Ha kerkent e tigor dor an dourel, hag eun den en em gav en e zav dirak Rusdal, ober a reas eur skrijaden, hag e lavaras :

— Te ? Piou out-te ?

— Sorser Lannedern, Korrig, ho prasa mignon.

— Sorser Lannedern ? Mat, daoust pe te zo den, pe te zo diaoul, mar grez va labour, bez deuet mat !

— Hen ober a rin.

— Ha petra zo red d'ober ?

— Dont d'am heul.

— Da beleac'h ?

— Da feunteun Sant Herbot.



Rusdal ne blije nemeur d'ezan klevet hano eus ar
zent na mont wardro o chapeliou.

— Petra, emezan, ha ne ve ket kouls mont eleac'h-all ?

— Aon ec'h eus Rusdal ? Mar ec'h eus aon, chom aze, mes me lavaro ez out eur marc'heg digalon.

— Me... aon ! bale e leac'h ma kiri, n'eo ket Rusdal a jomo warlerc'h...

— Ni welo.

— Pe zeiz eo red mont ? Da be heur ?

— Henoz, brema dioc'htu. Selaou !

Ha kerkent e klevichont horolaj ar c'hastell o sini hanter-noz. Ar sorser a gontas an daouzek taol hini da hini, a vouez uhel, ha pa en devoa kontet an daouzek-ved taol e lavaras :

— Alo, setu ar mare ; mar deus gwad en da wazied, deus war va lerc'h !

Evel daou lapous noz, pe daou ziaoul o klask tud da zamma, ez ejont ac'hano, buhana ma c'hellent, a-dreuz al lann hag ar brug, e-trezek feunteun Sant-Herbot.

Araok mont larkoc'h, lavaromp petra oa an hini a yoa deut.da gerc'hat Marc'heg Rusdal, hag a lavare oa e hano Korrig pe sorser Lannedern.

Korrig, evit gwir, a yoa ganet e Lannedern. E vamm a yoa eur gristenez vat, hag he divije e ziorroet evel m'eo dleet ma vije chomet beo gantan. Siouaz ! dont a reas ar maro d'izi pa oa c'hoaz bihan he mab. Korrig a oe neuze dilezet, rak e dad, hag a garie re ar pichera-dou, en em lakeas neuze da renar saout ha loened-all, evit kaout tro evel-se da vont dalc'hmad eus an eil kear varc'had d'eben, ha da derri e zec'hed aliesoch, hag 3 lezas e vab d'en em denna evel ma karje. Korrig en doa spered, mes evel n'en doa den na da gemeret soursi anezan na d'e gelen, en em roas d'an droug. Evel eir parkad ed doareet brao da genta, ma na vez ket c'houennet, ma na vez kemeret soursi ebet anezan, a deu al louzeier fall da zevel ennan ha da c'hounit var an ed mat ; evel-se e c'hoarvezas gant ar paotrig-na.

N'en devoa den evit hen difazia pa vanke, ha gevel-se an droug a deuas e ber amzer da c'hounit en e galon war ar mad. E dad ne roe d'ezan nemet gwall skouer. Pa deue d'e di goude beza bet diou pe deir zizun o vale, pa gleve tamall eun droug bennak d'e vab, en em lakea d'e vazata, hag eun dervez e skoas gantan gant kement a grisder, ma tec'has Korrig ac'hano en eur douet ne deuje mui biken war-dro e dad na d'an ti eleac'h ma 'z oa ganet. Neuze ez eas da veva er c'hoajou, gwech ama. gwech ahont, en toullou dindan ar reier, hag ac'hano ez ea da c'houlen an aluzen, pe da laëres, dioc'h ma kave tro. Pa oa deuet da veza den a-walc'h, en em lakeas da ober similherez, ha tud ar c'harter o doa aon razan her galve sorser Lannedern.

Korrig a ouie pebeus kasoni en doa Marc'heg Rusdal oc'h Marc'heg Ruskeg. Gouzout a rea e tlie an dijentil digouezout er gear, distro eus an douar santel, goude beza brezelekeat eno gant kalon evit bez hor Zalver. Ha setu perak oa deuet da gerc'hat Rusdal evit taga an dijentil Ruskeg araok ma tigouesche en e gastell.

Korrig ha Rusdal a yea eta a-hrez, evel m'on eus lavaret. An noz a yoa tental-zach' ; lammet a reant er poullou dour ; steki a reant oc'h ar reier ; ar skourrou gwez a fouete d'ezo o drem ; o dilhad a yoa treuzet gant an dour bil a rea. Rusdal a yoa eat ker skuiz ma na c'halle mont ken.

— Ehanomp eun neubeut, emezan.

— Ehana ? eme ar zorser o laosker eur c'hoarzaden chouez.

— C'hoarzin a rez, den fall zo ac'hanout, oc'h va gwelet skuiz maro !

— C'hoarzin pe vervel, eme ar zorser ; bete vrema, Rusdal, n'ec'h eus bet nemet ebav ; ma n'hellez mui c'hoarzin, n'ec'h eus ken nemet mervel.

— Den fallakr, te da vihana ne c'hoarzi mui ! Hag ar marc'heg a yea da dreuzi Korrig gant e gleze. Mes

hema a yeas en eul lamm pell dioc'h Rusdal, hag a lavaras adarre en eur c'hoarzin :

— Klask a rez va laza, Rusdal ; mes neuze, ha da venjans ? Neuze e fell d'it lezel Ruskeg didrouz ?

— Biken ! ha pa rankchen....

Ne gredan ket merka blasfem ar reuzeudig.

— Ma, neuze, dalc'h mat da zont d'am heul.


Etre daou oant digouezet e kichen feunteun Sant Herbot, er c'haos dindan ar roc'hel.

— Ehan brema eur pennad, eme ar zorser, rak bremaik ez pezo ezom eus da nerz. Ha neuze, n'ec'h eus ket lavaret c'hoaz pegement a aour ec'h eus sonj da rei d'in. Me ne garan ket labourat evit netra, hag ar zervich a rentan d'it ne deo ket dister.

Rusdal n'en doa ket bet c'hoaz an amzer da respont, pa weljont eur c'houlaouen dindanno e goueled an draonien, e-touez ar gwez.

— Henhont eo ar marc'heg Ruskeg ? eme Rusdal.

— Hen e-unan, eme ar zorser ; ema war varc'h ha daou vevel en e raok, eul letern ganto.



Marc'heg Rusdal ne c'hortoz ket hirroc'h. Ar warizi, ar gasoni, ar gouunnar, an egar o virvi en e galon, en em daol a benn-herr d'an traon evit en em strinka war e enebour. Hogen, pelloch edo dioc'h goueleg an draonien evit na zonje d'ezan, hag evel daoulagad e gorf ne welent ket muioc'h evit daoulagad e ene, ez a da steki oc'h eur roc'hel, ha diwar ar roc'h-se e ruilh a roc'h da roc'h beteg an traon, hag e koez flastret etre treid marc'h an dijentil Ruskeg.

An dijentil mat a lavaras d'e zaou vevel sevel an den-ze, hag hen e-unan a ziskennas diwar e varc'h evit sikour an hini a wele astennet eno maro war an hent. Hogen, pebeus souez ha pebeus spont o devoe pa weljont n'allent ket e zevel hag oa troet ar c'horf maro e mean ! Neuje e weljont ive eun all o tont da gregi e korf ar marc'heg maro : sorser Lannedern oa ; ha pa welas petra oa deut e vignon da veza, e laoskas eur youc'haden skrijus, hag e tec'has ac'hano evel eun den diskiant. Hag e gwirionez, troet oa e spered, ha mervel a reas hep dale, skoet hep mar gant dourn Doue.

An dijentil Ruskeg a drugarekaas neuze Doue c'hoek da veza e zifennet oc'h an daou zen fallakr-se.

Korf ar marc'heg eat e mean eo a zo eno dirak ar c'haos ma hon eus komzet anezan, hag hen henvel a reer
AR MARC'HEG MILLIGET.

G. M.

(Tennet diwar *Feiz ha Breiz*, 23 mae 1868).



DIZOURSI

PE

Ar Marichal hag ar Maro

Eur wech ez oa eur zoudard breizad hanvet Dizoursi abalamour ma veze atao laouen, hag iveauz abalamour ma karie lavaret farserez evit lakât an dud da c'hoarzin. Edo o tizrei d'ar gér eus an arme, echu e gonje gantan, a lavar lod ; re-all a lavar oa deuet dreist ar voger ; n'es an dra-ze ne zell ket ouzomp.

Goude beza baleet epad eun dervez hirr ec'h en em gavas wardro mare kuz-heol dirak mogeriou uhel eur c'hastell-krenv. Skuis oa ; naon en doa iveauz, ha n'en doa gwenneg ebet war e hano. Ma 'z eas da c'houlen lojeiz d'ar c'hastell.

Skei a reas war an nor. An norig vihan a yoa en hini vrás a zigoras, hag ar porsier a c'houlennas :

— Petra glaskit ?

— C'hoant em befe da gaout eun tamm lojeiz, evit an noz-ma hepken, rak skuis oun gant va derveziad bale.

— Chomit aze da c'chedal eur pennadig, mont a ran da c'houlen ali an Aotrou.

Ar porsier a yeas da gaout an Aotrou, hag a lavaras d'ezan ez oa e-tal an nor eur zoudard skuis maro o c'houlen loja.

— Grit d'ezan dont d'am c'haout, a respondas an Aotrou.

Ar porsier a zigoras an nor d'ar zoudard hag a gass anezan da gaout an Aotrou a oa o tomma e-kichen eun tan brao e sal vrás ar c'hastell.

— Noz vat, Aotrou ! a lavaras Dizoursi oc'h erruout er zal.

— Noz vat. va faotr, a respondas an dijentil. Petra fell d'it ?

— C'hoant em befe da gaout lojeiz, rak skuis maroun, naon em eus iveau ha gwenneg ebet n'em eus.

— Loja rin ac'hanout a-walc'h, ha zoken bez' ez pezo kement a gari da zibri ha da eva, ma n'out ket aonik, ha ma karez tremen an noz en unan eus kambchou ar c'hastell a vez gwelet bennoz enni, teuzed, diaoulou, pe me n'ouzoun ket petra. Ar pez a c'houzoun eo e ve enni eun trouz, eur safar bennoz ma ne c'hell den chom a-dost ; red mat eo bet d'eomp dilezel krenn ar gambr-ze. Ma teuez a-benn da gas kuit an drouk-sperejou, ma c'hellfomp distrei adarre da jom enni, kleo, n'ez pezo ket kollet da boan, paeet mat e vezí.

Dizoursi a respondas :

— C'hoant am eus da ober eun taol-esa, daoust petra c'hoarvezo. N'oun bet morse eur c'hrener, ha ne zisplijfe ket d'in gwelet eun tammig an diaoui a-dost ; allies a-walc'h em eus klevet ober e gaoz hep mac'h anavesfen anezan egiz-all. Goude tout, n'eo ket marteze, ken drouk ha ma laverer.

— An dra-ze avat, eme an Aotrou, a zo kozeal ; te a zo eur paotr dibikouz. Mont a ran da gas ac'hanout betek eno. Kaout a ri er zal ar pez a goat az pezo ezom evit ober tan, ha bremaik me a roio urz da gas d'it bara, kig, chistr ha gwin kement ha ma kari. Ober a ri goude da geusteuren evel ma plijo ganez.

Dizoursi a yeas er zal vrás, hag hep dale e teuas mevelien da zigas d'ezan eur feskennad danvad kris, eur vouchen vara gwenn ha c'houec'h boutailhad gwin koz. Da genta e reas eun tantad bras a dan hag e lakeas

ar c'hig ouz ar ber. Goude ec'h azezas en eur gador vourret e-kichen an tan, e tanas e gorn butun, e tistoufas eur voutailhad gwin hag ec'h evas eur werennad. Hag e chachas war e gorn butun endra ma selle ouz ar c'hig o rosta.

— Petra eo ar spont ! emezan. An dud-se a gav d'ezo eù eus ama teuzed, korred, diaoulou, ha me c'hoar ?

...Ha gwelit pegen sioul eo pep tra dre ama ! peger brao emaon-me ama !... Ne vijen ken fall ganti ama, dreist-oll ma vije great ker brao atao d'in...

Hag hen ha diskarga eun eil gwerennad gwin ; edo o vont da staga ganti pa glevas eun trouz bras er siminal ; hepdale e kouezas en tan eur spez dic'hiz, eun diaoul, kredabl, hag a grogas ennan hag hen stlapas hep diezamant ebet betek ar penn pella eus ar gambr, koulz ha pa vije bet eur sagoden, hag hen da azeza en e leac'h war ar gador vourret.

— A ! a zonjas Dizoursi, setu ar zabat o vont da zigeri ! O n'eus fors, gwelet a raimp pe seurt finvez a vez.

Sevel a reas en e zav, hag hen o vont da azeza disponent e kenver an hini nevez deuet, en eur gador-all, en tu enep d'eben. Hogen, prestik e klevas adarre trouz er siminal, hag eun eil Aotrou henvel mil ouz ar c'henta a gouezas adarre en tan, a zavas prim en e zav, hag Ober ivez evel egile, kregi er paotr hag hen stlepel e penn pella ar gambr, ha da azeza en e leac'h.

— Setu ama mignonned difeson ! a zonjas Dizoursi o sevel en e zav ; va rost eo a dle beza poaz ; mont a ran d'hen tenna eus an tan, n'eo ket dont a rafe c'hoant d'ar re-ma da zailha gantan.

Dizoursi a eure d'an oaled ; edo o vont da gregi er rost pa gouezas eun diaou-all en tan, hag hen henvel e pep tra ouz ar re a yoa deuet en e raok. Hema iveauz a grogas e Dizoursi hag hen taolas rost hag-all e penn pella ar zal.

— A ! eme ar c'hanfard, dont a ran da skuiza gant ar c'hoari-ma. Me a zo o vont d'o lezel da domma, rak doare a zo e karont an tan ; e keit-se me a yelo er gwele-kloz a welan aze. Kas a ran ganen ar c'hig hag eur voutailhad win ; marteze am lezint da goania e peoc'h.

Mont a reas e gwirionez d'ar gwele a yoa e traon ar gambr vrás. Mes n'edo ket ennan astennet mat pa deuas an tri diaoul (ya, diaoulou oant, red eo hen anzav) betek ennan ha da goms outan evel-hen :

— A ! Dizoursi, an den dispont, te gav d'it eta emaomp o vont d'az lezel e peoc'h da frikota aze evel-se, en hon zra, evel pa vijez en da di da-unan ? Fazia rez, va mignon, ni a zo o vont da ober da stal d'it.

— Evelato, Aotrounez, mechans n'am lazot ket er gwele-ma, evel tri digalon, hag am lezot da zevel evit gellout en em zifen ? Emaoc'h tri ouz unan.

— Ya, emezo, sevel a c'hellez.

Ha Dizoursi da lammet eus e wele. En noz a-raok en doa kousket en eun iliz, ha dioc'h ar mintin en eur vont er meaz en doa kemeret er pinsin bras eur voutailhad dour benniget a yoa bet chistr enni. Kerkent ha ma oe war e zeuliou e tistoufas e voutailh, ha dao ! dao ! dour benniget a-dreuz hag a-hed war an diaoulou. Ar re-ma a wike, a fiche, a lamme, a filbouche o klask eun toull bennak da guzat pe eur riboul evit tec'het. Mantrus oa klevet anezo o vlejal.

— Awalc'h ! awalc'h ! emezo ; lez ac'hanomp da dec'het, Dizoursi ! Truez ! awalc'h ! awalc'h !

— Ya, ma roit d'in ho ker ne zistroot mui d'ar c'has-tell-ma.

— Ya, ya, rei a reomp ; birviken mui ne zistroimp !

— Sinit neuze, lakit hoc'h hano ama war ar paper-ma gant ho kwad.

— Ya, ya, sina raimp gant hor gwad.

Sina rejont war baper parch a oe kavet dre eno. Dizoursi kerkent a lezas anezo da vont e peoc'h dre al

leac'h ma 'z oant deuet, da lavaret eo dre ar siminal.
Hag e c'hellas koania en e eaz. Kousket a reas c'hoek
goude betek an deiz.

Mestr ar c'hastell kerkent ha savet a oe mall gantan
mont da welet Dizoursi. Meurbet souezet e oe oc'h e
gaout beo.

— Penaos, emezan, n'out ket maro eta ?

— Ya da, Aotrou, beo oun evel a welit, ha n'em eus
ket bet an disterra glaz zoken.

— Hag ec'h eus tremenet ama an noz penn-da-benn ?

— O ya da, Aotrou.

— Ha n'ec'h eus gwelet netra direiz ebet ?

— Aze avat, aotrou, n'hellan ket lavaret nan. Bet
em eus da ober gant kansfarted eus ar seurt ne garfen
ket gwelet alies ; mes bezit dinuc'h, kaset em eus anezo
da vale evit biken diwar ho tro.

— Poan em eus o kredi sc'hanout ; pe seurt merk
ac'h eus da rei d'in evit ma kredin ?

— Kemerit ar paper-parch-ma, ha gwelit petra zo
warnan.

Hag e tiskouezas d'an aotrou ar paper el leac'h m'o
doa sinet an diaoulou gant o gwad.

An aotrou a reas eur zell warnan, hag a lavaras
laouen bras :

— O pebeus labour talvoudus ac'h eus grêt evidon !
Goulen diganen brema kement a gari evit da baemant,
ha me hen roio d'it. C'hoant ac'h eus e rofen d'it va
merc'h ?

— Ne dalvezan ket kement-se a enor, ha n'em beus
tamm c'hoant ebet da zevel ken uhel. Me a zo goveller
dre vicher, evel oa va zad, ha mar fell d'eoc'h ober pli-
jadur d'in, grit sevel d'in eur c'hovel e kichenik an bent
bras, lakit enni houarn ha glaou, rak n'em eus gwenneg
ebet. Me a houarno d'eoc'h ho kezeg ha re ho merourien
hag iveau re ar veajourien a dremeno, hag e vevin evel-
se dioc'h va labour, evel ma tle pep den onest.

An aotrou a reas sevel ar c'hovel e kichenik an hent bras. Dizoursi a oe mall gantan mont da jom enni. Penn-da-benn an deiz hag an noz alies e klevet ar morzol o skei war an anne ; Dizoursi a garie'al labour. Ar praktiou na vankent ket, ar pez a rea plijadur d'ezan hag hen lakae laouen hag eurus.



Eun dervez edo o labourat evel kustum, war gorf e roched, du e zremm gant ar glaou hag ar moged, pa deuas daou ziaveziad da dremen, unan anezo koz hag egile yaouank. Hag i da jom a-zav dirak ar c'hovel.

— Labourat a rez a galon vat, Dizoursi ! a lavaras ar yaouanka.

— Red mat eo da bep unan labourat, Aotrounez, evit gounit e voued, a respontas Dizoursi.

Hag e tenne an houarn eus an tan, e skoe warnan gant ar morzol, hag hen lakae adarre en tan.

Ar c'houezen berad warlerc'h berad a zivere stank eus e dal. An daou dremener a jome bamet da zellet outan.

— Eveldout, Dizoursi, me a gar al labourerien, a lavaras adarre an dianavezet, hag evit hen diskouez d'it, gra ouzin teir goulen, ar re a giri, hag ez pezo hervez da c'hoant.

Dizoursi a reas eur zell korn ouz an daou zen, a vousc'hoarzas evel eun den ha n'eo ket bras e fizians.

— Da genta, eme ar c'hosa eus ar veajourien, goulen ar baradoz.

— Ar baradoz, va den mat, a zo d'an nep hen gounez, ha ne vez ket roet evel-se n'eus fors da biou, mechans.

— Komzet mat ec'h eus, eme ar yaouanka ; gra ouzin da deir goulen, ha me a raio hervez ma fello d'it, daoust petra c'houlenni.

— Mat, alies e teu sec'hed d'in o skei war an houarn, hag ar feunteun a zo gwali bell. Bez' em eus aze eur wezen-ber er porz, a-drenv ar c'holoel ; goulen a ran ma tougo frouez kaer ha dare e pep mare eus ar bloaz, zoken er goanv.

— Da c'houlen ez pezo, eme ar beachour.

Kerkent gwezen-ber Dizoursi a oe goloet a vleun gwenn hag eur pennadig goude n'oa mui krenv a-walc'h ar skourrou evit dougen ar zamm per alaouret a yoa outo. Edot koulskoude e Miz genver.

— Gra da eil goulen, Dizoursi, a lavaras adarre ar beachour.

— Goulen ar baradoz en dro-ma da vihana ! a lavaras a nevez an hini koz.

— Roit peoc'h d'in-mañ gant ho paradoz, tad-koz, a respondas Dizoursi ; ar baradoz a zo d'an nep a c'hoar e chounit, her gouzout mat a rit, ha fizianz am eus ne vezo ket serret ouzin goude va maro, ma em eus e chounezet.

— Ar wirionez eo, a lavaras an den yaouank. Gra da eil goulen, Dizoursi.

— Mat ! me garfe kaout eur gador vourret a-ze e korn va c'holvel ; ha me garfe ne c'heilse sevel ar re a yeolo da azeza warni nemet pa o devezo bet va aotre (va asant).

— A zo roet d'it.

Kerkent e oe eur gador vourret e korn ar c'holvel.

— Gra brema da deirvet goulen.

— Arabat eo d'it mankout da c'houlen ar baradoz en dro-ma, da vihana ! a lavaras an hini koz.

— Ravoder koz, lavaret em eus d'it roi peoc'h d'in gant da varadoz. Goulen a ran brema eur re gartou e c'hounezin ganto hep taol, n'eus fors piou a deuse da c'hourin ouzin.

— Hag ez pezo ! Del, setu aze ar c'hartou.

Hag e oe gwelet eur re gartou nevez flamm war an anne.

War gement-se, an daou veachour a lavaras kenavo d'ar goveller. An daou zen-ze, n'em eus ket ezom d'hen lavaret d'eo'ch, oa Sant Per, an hini koz, hag hor Zalver Jezuz-Krist, an hini yaouank, oc'h ober o zro dre Vreiz-Izel, evel ma reant alies en amzer-ze.

* * *

Meur a vloavez a yoa abaoe m'oa bet Hor Zalver ha sant Per o welet Dizoursi. Hema a rene buez eürus o labourat en e govel, daoust d'ezan da veza deuet eun

tammig war an oad, pa deuas unan-all d'e welet. Ar weladen-ma avat na reas ket a blijadur d'ezan. An *Ankou* e-unan n'ankounac'haas ket Dizoursi. Dioc'h e forc'h hag e eskern noaz, Dizoursia anavezas an Ankou dioc'htu. Ne gollas ket e benn evit an dra-ze ; kenderc'hel a reas da labourat ha da skei an houarn war an anne, evel pa vije dirazan an disterra eus e bratikou.

An Ankou a gemeras an dra-ze evit eun dismegans. Sevel a reas e falc'h gant buhanegez.

— Ah ! Dizoursi, emezan, hast afo lakaat urz en da stal evit dont ganen ; da dro a zo deuet.

— Va zro petra ? a respontas Dizoursi, oc'h ober neuz evel pa n'en divije ket komprenet.

— Petra ! n'am anavazez-te ket ? Me eo an Ankou, va mignon !

— A ! c'houi eo ar mestr Falc'her ? Mat ! mat ! Alies em eus klevet ober ho kont ; n'hoc'h anaven ket, petra fell d'eoc'h ? Digarezi reot ac'hanon.

— N'eus droug ebet ; alo, deus buhan, n'em eus ket amzer da goll.

— Ya, ya, sklear eo, p'eo gwir evel ma livirit eo deut va zro, ne garfen ket mont kuit evel-se hep beza houarnet ar c'hezeg a zo aze o c'chedal e toull va dor. Azezit aze eur pennad war ar gador-ze : eur pennadig bihan hepken, hag ez in d'hoc'h heul d'al leac'h ma karot.

— Mall eo d'in mont, ha n'em eus ket amzer da c'chedal. Mont a ran da rei d'eoc'h taol ar maro.

Sevel a reas e falc'h evit skei.

— Asa, kemerit hoc'h amzer, pa lavaran d'eoc'h ; petra ra an dra-ze d'eoc'h ? O ! ne viot ket pell evit gounit an amzer gollet. Lezit ac'hanon da vihana da houarna kazeg hon aotrou person. Tri houarn a zo lakeat, ne jom nemet unan, hag evit va brud vat, ne garfen ket abalamour da n'eus fors petra, lezel en doare-ze ar marc'h diveza em bezo houarnet, dreist-oll hini hon aotrou person. Petra lavarfe sant Alar p'en em gavin

dirazan du-ze d'an neac'h ? Azezit eta eur vunuten, pa lavaran d'eoc'h ; o ! ne vezin ket pell !

An Ankou a azezas er gador vourret. Dizoursi en em gavas dienkreuz. Hag hen da labourat en eur gana hag o sutal. Lakaat a rea an houarn en tan, c'houeza rea avel er vegin, hag e tenne an houarn eus an tan da skei warnan war an anne ; kemерet a rea e amzer. Echui eure da houarna kazeg ar person, ha meur a hini-all zoken warlerc'h hennez. An Ankou a lavaras adarre :

— Alo ! red eo mont, kalz hent a jom ganen c'hoaz da ober hirio ; n'hellan ket gedal pelloc'h.

— Terri a rit va fenn d'in. e gwirionez ! Roit peoc'h d'in hag am lezit didrouz ha didrabas da ober va labour ! a lavaras Dizoursi. Gouzout a rea re vat n'helle ket an Ankou finval dioc'h ar gador.

Kenderc'hel a reas da labourat epad an nemorant eus an deiz, epad miziou ha bloaveziou, hag ar Maro a jome atao stag o'ch ar gador. Pa veze hano gantan da vont kuit, Dizoursi ne rea nemet c'hoarzin ha sutal gwap d'ezan betek dindan e fri. Kement-se a badas pell.

Setu ez oa kant vloaz abaoue m'edo an Ankou tachet e ti Dizoursi, ha den n'en doa gwelet ar Falc'her epad an holl amzer-ze ; hag edot nec'het o klask gouzout petra oa deut da veza. Kaeroc'h c'hoaz, keuz a yoa d'ezan, inouet oat o'ch e c'chedal, koulz ha kement ha ma 'z oa kasouni outan diagent. Ne varvet mui ; deuet oat da gemeret ar vuez evit ar gwasa eus an holl drougou.

Dont a reas Doue evelato da gaout truez ouz an dud kez, hag e kasas eal an Ankou da lavaret da Dizoursi rei frankiz d'ar Falc'her bras.

Pa zigouezas an eal er c'hovel e kavas Dizoursi o'ch houarna kezeg evel kustum.

— Penaos, Dizoursi, emezan, e c'hellez-te derc'hel keit-all an Ankou en da govel evel en eur prizoun ? Kant vloaz a zo n'eus maro den ; ema an holl o klemm

en ifern, er purkator, er baradoz ha dreist-holl war an douar ! An holl dud a fell d'ezo mervel brema. Gervel a reer ar Maro evel an hini hepken a c'hell parea ar poaniou, evel eun eal a deu da derri ar chadennou. Digaset oun gant Doue da gemenn d'it rei frankiz d'an Ankou war an heur.

— Ar wirionez eo, eme Dizoursi ; pell a-walc'h emaaze azezet war ar gador-ze. O veza n'eus trouz ebet gantan p'eo gwir ne ra nemet kousket, e feiz oan deuet d'hen ankounac'haat a-grenn. Mont a ran d'hen lezel da vont ganeoc'h. Hogen, prez labour a zo, dres. Gwelit, nag a gezeg a zo aze e toull an nor o c'chedal o zro ! Amzer hepken da lakaat eun tach bennak d'ar marc'h gwenn-ma bag a zo da Aotrou ar maner ; dioc'htu goude me a vezoganeoc'h. Azezit 'ta da c'chedal .. n'euz fors e peleac'h... aze, mar kirit, e-kichen an Ankou, frank a-walc'h eo evidoc'h ho taou.

Hag an eal a yeas da azeza e-kichen Mestr bras ar Falc'herien. Dizoursi a zerras dor ar c'hover war an Ankou hag an eal, a lakaas an alc'houez en e chodel hag a yeas en hent gant ar c'chartou en doa roet Doue d'ezan ; n'en doa great netra ganto c'hoaz. N'oa ket eat a bell pa gavas eun Aotrou o veachi, eun Aotrou ha n'en doa ket eur penn da blijout O welet eur re gartou gant Dizoursi en e zourn, an Aotrou-ze a deuas d'egaout.

— Me garfe, emezan, ober eun abaden c'hoari ganez, va mignon.

— O feiz, eme Dizoursi, me ne c'houlennan ket gwelloc'h.

Hag ez ejont da azeza war eur mean bras, e kreiz eul lanneg, evit ober o abaden c'hoari kartou. Rannet eoe ar c'bartou, ha Dizoursi a c'houlennas :


— Petra zo da c'hounit ?

— Ac'hanta ! c'hoariomp ene oc'h ene, da hini oc'h va hini, a respotas an diaoul.

Dizoursi a oe mantret o klevet kement-all. Hag hen da zispenn an Aotrou dianavez azalek blenchen e vleo betek seuliou e voutou. E voutou a lavaran ?... n'en doa boutou ebet ; e dreid a yoa forc'hek. Dizoursi a welañ neuze en doa kavet Laou goz. Hogen, fizians en doa en e gartou, ha setu perak e lavaras :

— Er memes tra !... N'ouzout ket petra zo oc'h da c'chedal, te hag a dremen koulskoude evit eul louarn koz.

Hag int da c'hoari. Dizoursi a c'hounezas ar barti genta hep poan ebet.



Deomp átao, eme Laou (Guilhou goz, an diaoul),
daou ene-all oc'h an daou ac'h eus brema !

— Ya, eme Dizoursi, mar kerez ! Ro ar c'hartou.

Ar c'hartou a oe rannet evit an eil gwech, ha Dizoursi a c'hounezas adarre.

— Pevar ene oc'h ar pevar ! a lavaras egile, eun tammik lostok.

— Dao d'ez !... Pevar ene oc'h ar pevar ene am eus gounezet, a respondas Dizoursi.

Hag e c'hounezas evel bep tro, na petra 'ta !

Hag evit troc'ha berr e livirin e chomchont evel-se da c'hoari epad kant vloaz, o toubla bep tro ar pez a vije en taol a-raok ; ha Dizoursi a c'houneze bep taol. Nag a eneou gounezet gantan ! Gounit a reas kement a eneou ma oe skarzet an ifern ! An eneou dre ma vezent lezet e frankiz a yea eus an ifern d'ar purkator ; mes kement a yoa anezo, ma oe red kas d'ar baradoz an eneou a yoa er purkator pa oat en em roet da c'hoari kartou.

Ar c'hoarier reuzeudik a laoskas neuze eur youc'haden spontus ; skei a reas eun taol troad war ar roc'h, hag hizio c'hoaz e c'heller gwelet ar roudou. Goude-ze an douar a zigoras da lounka an Diaoul.

E keit-se, an Ankou hag an eal a yoa alc'houeziet er c'hol, hag o veza ne varvet mui, an dud a deue da veza reuzeudik evel ar vein. Kaout a reat anezo e pep leac'h, o sevel o divreac'h war-zu an nenv, oc'h hopal :

— Mervel ! Mervel !... O Maro, bezet truez ouzomp ! Dizoursi a oe skoet e galon gant ar c'hlemmou-ze.

— Pell a-walc'h a zo emaon war an douar ! emezan. Ne welan netra nevez abet e-touez an dud : re vat ha re fall, re baour ha re binvidik, kalz poaniou, anken e pep leac'h ; ne welan den a gement a ve laouen e galon gant ar pez en deus. Mont a ran, brema, da welet petra, zo en tu-all. Mont a ran da lezel an Ankou da vale.

Hag hen d'e govel. An daou brizonier a yoa eno. Di-huna reas anezo, rak kousket kalet oant ; hag e lavaras d'ezo :

— Pell a-walc'h zo emaoch aze oc'h ober ho tud lezirek ; it brema gant hoc'h hent, ha grit labour vat ;

dre holl e klevan tamall d'eȏch ho leziregez, war an douar kouls hag en nenv.

Ne oe ket ezom d'o fedi diou wech da zavel, hag an Ankou kenta tra a reas a oe sevel e falch' da skei Dizoursi. Mont a reas goude da ober e dro dre ar bed, ha me lavar d'eȏch, ne jomas ket da zellec, c'hoant en doa da c'hounit an amzer gollet. Skei a rei herra ma c'helle a gleiz hag a-zeou, evel eur penn-follet, hag an dud kez a goueze an eil war egile, a-verniou, evel ma kouez ar yeot er prajeier e Miz even dindan taoliou ar falch'er.

* *

Setu ene Dizoursi savet d'an nenv, o vont war-eün da zor ar baradoz : Tok ! tok !

— Piou a zo aze ? a c'houennas sant Per a yo a-drenv an nor.

— Dizoursi eo ! Digorit, mar plij.

— Dizoursi ?... Kerz pelloc'h, n'ema ket ama da leac'h.

— Perak 'ta, Aotrou sant Per benniget ?

— Sonj ez peus-te eus an deiz-se, pa oamp Jezuz ha me o veachi dre Vreiz-Izel, e kavchomp ac'hanout o skei war an houarn en da govel, tostik d'an hent ? An Aotrou a lavaras d'it ober teir goulen, hag e vije roet d'it hervez da vennoz, daoust petra c'houlenjez ?

— O eo ! sonj mat !

— Teir gwech e rojon ali d'it da c'houlen ar baradoz. Te avat a yo fae ganez selaou ac'hanon. Mont a reas zoken betek lavaret d'in ez oan eur ravoder koz. N'eo ket gwir ?

— Eo, gwir eo, aotrou sant Per benniget ; ankouna-c'hait an traou-ze, me ho ped, ha digorit an nor d'in. N'eo ket plasou a vank aze, marvat ?

— Tra, tra, Dizoursi, ne deui ket ama.

— Ha da beleac'h eta e fell d'eȏch ez afen ?

— D'al leac'h ma kari, ha pa ve da di an diaoul.

— Da di an diaoul ? O ! e anaout a ran ! Bet em eus da ober gantan. E peleac'h ema o chom ?

— An eil dor, en dourn kleiz.

— Mat eo ; mont a ran d'e welet, rak n'em eus aon ebet razan.

Ha Dizoursi a yeas da skei war dor an ifern : Dao ! dao ! dao !

— Piou a zo aze ? a hopas eur vouez en diabarz.

— Me, Dizoursi, emezan.

— Dizoursi ! Hag a zo mat, fidamoustik ! Mes ne dalv ket d'it gedal dont a ma ! N'hon deus ket ankounac'haet petra ez peus great d'eomp gwechall er c'hastell. Pebeus merzerenti !... Goude-ze ez peus skarzet hon rouantelez ha miret oc'h kalz re-all da zont ama, o trec'hel ar Maro chadennet en da di epad daou c'chant vloaz. Kerz, kerz buhan alese !

Hag e oe serret an nor ouz e fri.

— Setu ama eun abaden avat ! a lavaras Dizoursi ; n'ez eus ezom ac'hanon nag en ifern nag er baradoz. Red mat eo d'in mont da skei war an nor a zo aze e kreiz ; marteze e vezin digemeret ganto !

Hag ez eas. Ar purkator eo a yo a eno : Dao ! dao ! dao !

— Piou a zo aze ? eme eur vouez eus an diabarz.

— Me eo, Dizoursi.

— Dizoursi ? Kerz, kerz buhan alese, reuzeudik ! Te peus diskarget an ifern warnomp-ni ! Kerz buhan ! Kerz pell bras ac'halen.

— Evel-se 'ta, den ne fell d'ezan digemeret ac'hanon ! a lavaras Dizoursi outan e-unan, nec'het o klask gouzout petra deuje da veza. N'hellan ket chom ama va-unan koulskoude, er meaz. N'eus ket da lavaret, red e vezd d'in kaout lojeiz en eun tu bennak. Mont a ran adarre da skei war dor sant Per ; doare vat en deus, evel an dud koz peurvuia, hag evit tra pe dra, me zo sur e kavin an tu d'hen lakaat da zigeri an nor.

Hag ez eas a-nevez da skei war dor ar baradoz.

— Piou a zo aze ? a hopas sant Per.

— Me, aotrou sant Per benniget : a lavaras Dizoursi.

— Me ? An dra-ze n'eo ket eun hano. Pe hano ?

— Dizoursi ! aotrou sant Per benniget.

— Adarre !... Lavaret em eus d'it mont da glask lo-jeiz e leac'h-all, evit ama ne vezо ket digoret d'it.

— E nep leac'h, aotrou Sant Per, n'em eus kavet dor zigor : lezit ac'hanon da vont aze, mar blij !

— Biken ! biken ! ne dalv ket d'it dale aze ! Kerz, terri a rez va fenn d'in.

— Me ho ped hag hoc'h asped, aotrou sant Per, kor-zigorit an nor d'in, ken nebeut ha ma kerot, ma c'hellin kaout eun tanva dister eus eürusted ar baradoz.

An Aotrou Doue en em gave d'an ampoent e toullig ar porsier e kichen an nor ; deuet oa da welet e vignon koz, hag evel a rea alies, chomet oa da ober eun abaden kaozeal gantan. Trucz en devoe ouz Dizoursi, kaset kuit a bep leac'h, hag e lavaras da zant Per :

— Kor zigor da zor eun tammig, Per, ha lez anezan da ober eur zell war ar baradoz.

Sant Per a zentas.

Kerkent Dizoursi a stlapas e galabousen pella ma c'hellas er baradoz, hag e lavaras da zant Per.

— Lezit ac'hanon, mar plij, Aotrou sant Per, da vont er baradoz.

— Nez i ket, sell, mar kerez, keit ha m'eo digor an nor.

Mat ! ne virot ket ouzin evelato da vont da gerc'hat va c'halabousen ?

— Nan, re louz eo evit ma krog f'en enni ; hast buhan neuze.

Dizoursi a yeas eta er baradoz hep ma vije ezom d'e bedi diou wech. Kerkent ha m'en doa lakeat e dreid en tu-all d'an nor en em lakeas da redek.

Sant Per a hope :

— Harzit anezan ! Krogit ennan !

Tri pe bevar eal a yeas war e lerc'h evit kregi ennan.
Hogen Dizoursi a azezas war e galabousen hag a lavaras d'an elez ha da zant Per a yoa o tont gant eur penn-baz :

— Na skoit ket ganen ! N'hoc'h eus gwir ebet d'hen ober ! Me a zo ama em feadra.

Mes sant Per a venne skei taoliou baz gantan. Dizoursi a droas ouz Hor Zalver a yoa chomet da zellet hep lavaret ger ; ne rea nemet mousc'hoarzin :

— O choui, Aotrou Doue, hag a zo al lealded heunan, hag a anavez gwiriou pep hini, anzavit emaon em zra ha n'en deus den, nag eal na sant Per ar gwir d'am c'has ac'halen ?

Hag an Ao. Doue a respontas :

— Ar wirionez a zo ganez, Dizoursi. Lezit anezan e peoc'h, p'eo gwir ne ra gaou ouz den !

— Klevet hoc'h-eus, c'houi holl dre aze ? An Ao. Doue a lavar rei peoc'h d'in, p'emaon em gwir ; c'houi a dle senti outan.

Ha setu aze penaos ez eas Dizoursi er baradoz. Ra c'hellimp kaout eun deiz an heurvad da vont da welet ha gwir eo !

— Amen ! a respontas holl zelaouerien Lanmodez.

Destumet ha skrivet e galleg
gant LUZEL, ha lakeat e bre-
zoneg gant KLAODA 'R PRAT.




EPAD AN DISPAG'H

Ahont ez eus bet gwechall e Daoulaz eur person koz a veze gret an Aotrou Pab anezan. Setu aze unan c'hoaz hag en deus bet da ober epad an dispac'h. Kement eured a zo bet gret e-doug ar bloaveziou kris-ze, etre Plougastel-Daoulaz ha Plonevez-ar-Faou, a zo bet grêt kouls lavaret holl gantan. Ouspen eun dornad kaierou skrivet ha sinet gantan a zo c'hoaz e Lopereg evit testeni a gement-ma.

Evit doare ne oa ket aonik an den, nag eus penn diveza ar sizun ne dlie ket beza ken nebeut. Rak war am eus klevet re goz o konta, ral a wech iliz Lopéreg a zo bet hep oferen da zul, epad an dispac'h. Ha beleg estren ebet n'en deus biskoaz he sklabezet. An aotrou Pab peurliesa a lavare eno e oferen.

Eur zulvez edo gant e oferen p' en em gavas ar re C'hlaz. An iliz a oa leun kouch, hag an doriou, a c'hel-lit kredi, serret ha prennet kloz. Ar zoudarded, daoust ma oa eun dornadig brao anezo, na gredjont ket mont re rust d'an dud fidel. D'ar mare-ze, gant pep hini e veze eul leor ofe en rust eun tammig : eur foulirenn penn-baz, darn zoken eur fuzuilh a zougent. Klask trouz oc'h kement all a dud kris awalc'h marteze da rei eur mestreltaol n'oa ket yac'hus, hag ouspen ne glaske ar zoudarded en dro-man nemet ar beleg. Heman koulskoude a echuas e oferen ken dinec'h ha tra. Diwisket gantan e aournamanchou, ez a e mesk ar bobl : eur c'houer brao anezan, hir e vleo, eur jupen c'hoan rouz gantan evel gant ar re all.



Ar zoudarded a zakre, a jarnee ; den na flache... Eun eur, div eur, teir eur... Ar re oa en iliz a jome en iliz, didrouz o pedi. Ar zoudarded a zaone e kichen an doriou.

Petra da ober ? Naon ha sec'ched a groge er zoudarded keiz. Ar vourc'haden n'eo ket bras. D'ar mare-ze oa bihannoc'h c'hoaz ; ne oa ket enni pemp na c'houec'h hostaleri evel breman ; n'oa nemet unan, hag an hostiz dres, a oa breur an aotrou Pab.

An naon hag ar zec'hed, tudou, a zo gwall bôtres.

— Asa, eme ar c'habiten, ne dalv ket d'eo'ch. Diga-sit aman ho person hag e teuoc'h er meaz tout.

Ger ebet en iliz.

— Mat ? chomit aze da vervel gant ar zec'hed, mar kirit !... An hostiz hepken.

An hostiz n'oa ket eun den kris a galon,

— Ya da ! emezan, daoust ha n'oc'h nemet eun toul-lad lamponed ne ve ket mat lezel ac'hano'ch da vervel gant an naon. Bremaik me 'zo o vont. Ar re-ze a ve gouest da vrevi pep tra du-man, ma ne 'z an ket.

Hag an hostiz er meaz.

Daou zoudard a oue lezet da ziouall pep dor. Ar re all a yeas da heul ar Yan (evele ec'h hanved an hostiz).

P'en doa torret o zec'hed d'ezo da vad hag eun draig ouspen, Yan a yeas d'e c'hodel da glask alc'houez an armel.

— Asa, pôtres, azs ez eus bara e gorre an daol. Mes mar ho peus sonj da gaout eun tamm amann pe eun tamm kig da lakât warnan, e rankan mont da glask an alc'houez a zo gant an hini goz en iliz.

— N'eo ket chas omp-ni, michans, da zebri bara zeac'h... It da glask hoc'h hini goz buhan... He ! he ! eur banne c'hoaz araok.


— Daou, mar kirit.

Hag ar bôtres da drinka. Unan anezo a zavas da vont gant Yan betek an iliz.

— Mari, deus d'an ti 'ta gant an alc'houeziou.

Digoret an nor da Vari, ha Mari er meaz, he mantel dastumet mat an dro d'ezzi. Ne grede ket lavaret eur grik, ar baourez kez ! Dirak soudarded !...

Digeri a reas an armel, ha goude e savas d'ar zolier da jench he dilhad, hag hi o tisken, mes e kreiz an diri



ez eus eun nor da vont el liorz adrenv an ti... ha Mari
el liorz.

Bet eun hanter-eur bennak o tibri hag oc'h eva, e
teuas sonj d'ar zoudarded da vont da ziouall an doriou,
e keit ma vije o c'hamaraded o leina d'o zro.

P'en em gavjont, en iliz e oa skuiz awalc'h an dud
evit doare. Goulenn a reant, da vihana. dont er meaz.

— Ac'hanta, eme ar c'habiten, me c'houie e vijen
deuet a-benn eus ar beleg-se.

— Peseurt beleg ? eme unan bennak. Aman n'eus
beleg ebet.

— Farser a zo ac'hanoec'h ! N'emaoc'h ket, marvad,
o vont da baskaluz d'in-me... Deuit er meaz dre an nor
vihan aman, pep hini d'e dro, ha me a ziskouezo d'eoc'h
bremalk peseurt beleg a zo aze.

Hag an dud er meaz, an eil goude egile. Sellet piz e
oue outo. Den trist ebet, daoust d'ar skuizder ha d'an
naon. Dont a reas koulskoude an diveza er meaz.

Hag ar beleg ?... Beleg ebet !

— Krebie ? eme ar c'habiten. Klaskit aze, pôtred, e
kement korn a zo en iliz, en toullou kovez, er c'ham-
prou, en tour, e pep leac'h. Ma n'omp ket sorset, ema
d'eomp en dro-man, pa lavaran.

Klasket e oue, furchet e oue e kement toull a zo dre
an iliz. Aotrou person ebet !... Ar sorser ! An diaoul ? E
peleac'h an dampred eo eat hennez ?...

... Ar zoudarded n'o deus gouezet biskoaz, marvad,
da beleac'h e oa eat an aotrou Pab, en devez-se, na pe-
naos e oa bet great an taol. Marteze c'houi a garfe gou-
zout. D'eoc'h e livirin avat :

Pa zeuas an hostiz da glask e hini goz, an aotrou
person a yeas er meaz e leac'h Mari, kuzet mat dindan
eur vantele, sioilik e tigoras an armel. ha p'en doa stla-
pet ar vantele er zolier... flip ! hag er meaz... hag en
hent, mar gouie, a-dreuz ar parkeier, ar gwaremmou,
ha d'ar C'hrevet da guzet en eur bern kolo. Setu aze !

Lambôl-Gwimilio. — Klevet hoc'h eus hano eus Lambôl ar C'herniel ? Lod-all a lavar Lambôl ar givizerien. Eno eo tout ! E Lambôl eta e oa, en amzer an dispac'h, eun den hanve Fanch Abgrall. Peil bras goude eo bet beo, ha ya'ch hag istimet gant an holl.

D'ar mare-ze, Fanch Abgrall a oa yaouank awalc'h ; eun ugent vloaz bennak pe war-dro a c'helle da gaout. Kivijer a oa, evel just, pe mar kirit, o teski e vicher e ti e donton Fanch Pap, er Perennou. E ti eur c'christen mat ha start edo, hag hen e-unan a oa eur c'christenig gros awalc'h en e greden. Hen diskouez en deus great. Paotr abret gant an dra-ze : Asa, eul Lambôliad !

Nag a droiou en deus great hennez d'ar re *C'hlaz* ha d'an diaoul, o mestr ! Nag a dud klanv, tro war dro, n'o deus ket bet da drugarekât anezan, evit beza digaset ar beleg d'ezo, epad an dispac'h !

— Fanch, e teued da lavaret d'ezan, e peleac'h, en han' Doue, e kavimp-ni eur beleg ?... Du-man, eme-unan, ez eus eur c'hlavour o vont da vervel... Va zad, va mam, eme re-all, a zo toc'hor... Eur beleg en han' Doue !

— Alo, eme Fanch, it d'ar gear, hag ember da noz digasit aman daou benn kezeg, ha me a gavo eur beleg d'eoc'h.

Da noz e feue daou Ioan-kezeg, ha Fanch gant ar beleg a lavare : yao !


E peleac'h e kave Fanch Abgrall ar beleg ? N'eo ket d'an holl e oa da c'houzout an dra-ze. Kavet e veze eur beleg mat, ha laouen an dud, ha peoc'h goude.

An aournamanchou oferen a oa ive e karg Fanch Abgrall, er Perennou.

Eun droiad, setu pevarzek archer war varc'h oc'h en em gaout d'ober ar furch. Santet e oa eun dra bennak, feson a zo, war heman ar Perennou. Fanch a oa, ken eün ha tra, o plega ler pa zigouezchont.

— Labour o deus kavet, emezan. N'o deus ket roet
avel c'hoaz d'ar guziaden.

Eun nebeudig mat a ler a oa da blega, ha Fanch n'en
doa ket amzer da jom re hir da zellet ouz an archerien.
N'eo ket eun didalvez oa Fanch. Nan ! mont ha dont a



rea gantan briajou ler en eur gana, en eur zatal, ken drant hag eul laouenanig oc'h ober e neiz.

An archerien a yeas d'an ti, a glaskas e pep korn ha netra ne gavehont. Pec'hi 'reant, sakreal spontus.

— Koulskoude aman ez eus beleien, a lavarent.

— Mat, gwelet a rit hoc'h unan n'eus ket a veleien dre aman.

— Gwelomp an armeliou, emezo. An aournamanchou oferen a gavimp.

Ha klask adarre ! An dilhajou en tu-man, en tu-hont. Pep armel a oe dispac'het an trau enni. Bout ! paz eur spilhen an holl !...

Fanch Abgrall en doa pleget, etretant, eur bernig brao a ler.

— Er c'hardi ahont, a lavare unan eus an archerien, e c'hellfe beza kuzet an aournamanchou.

— Klev 'ta, pôtr yaouank, deus aman ! E peleac'h eman eo kuzet ar sitoianed beleien ?

— Beleien ! a lavar Fanch, en eur c'hoarzin leiz e c'hinou, e peleac'h ? E feiz lavarit d'in ha me lavaro d'eoc'h.

— Diaoul, pôtr yaouank, aman war a leverer ez eus, dindan guz, beleien hag aournamanchou oferen.

— Beleien !... aournamanchou !... Va Doue, Ôtronez, me zikouro ac'hanc'h d'o c'hlask, mar kirit. Mes arack e rankan lakât ar bailh-man war ar bern ler a zo ahont gant aon ne dcuse glao. Roit an dorn d'in, mar plij, unan ac'hanc'h !

Stag eun archer da zikour Fanch.

— Mat, breman klaskomp !

Kaer e oe klask e kement toull a oa dre gear, ne re-jont nemet koll o amzer.

Ma karfent, ar c'hinaoueien, beza furchet ar bern ler, e leac'h sikour Fanch d'e c'holo, o dije kavet eno an aournamanchou a glaskent.

Fanch Abgrall, p'en doa gwelet anezo o tont, en doa

buhan ha buhan paket ar re-ze etouez eur c'hrac'henn,
ha ken dizevan ha tra a daole ler-all war c'horre, hag
ar bailh ouspen gant sikour an archer !

Eun istor eus amzer an Dispac'h

Epad amzer trubuilhus an dispac'h vrás, en hor bro
gaer Breiz-Izel n'eo ket bet manket an dud a feiz en des-
pet d'al lezennou yut a zouged neuze. An holl a c'hoar
ez oa eul lezen dreist ar re-all hag a gondaone d'ar
gwillotin kement penn-tiek a vije dizoloet beleien en e
di. En despet da ze, c'hoaz eur wech, en despet da falla-
griez an dud digoustianz a rea neuze o mistri e Bro-
C'hall gant peadra ar re a lazant hep truez, e kaved
c'hoaz tud kalonek da rei digemer d'ar veleien taolet er
meaz eus o fresbitaliou ha d'al leanezed harluet eus o
c'houenchoù.

Hervez am eus klevet va mam-goz o konta, e renk
an dud kalonek ha dispont-ze edo Fanch Madeg hag e
bried Mari Pab, o daou o chom e Kergoad-vihan e par-
rez Pleiber-Krist.

E ti an daou zen trugarezus-ze ez eus bet asamblez
dindan guz betek seiz, etre beleien ha leanezed. N'em
eus dalc'het sonj nemet eus hano daou anezo, abala-
mour, me gred, e vezent eno aliesoc'h eget ar re-all.
Unan eus an daou-ze oa an aotrou Kostiou, maro vikel-
vrás e Kemper ; egile oa an aotrou Abgrall, maro person
e Sizun.

Ar c'henta a oa bet kerc'het e kreiz an noz evit rei ar
vadiziant d'am mamm-goz pa deuas war an douar.

Al leanezed a oa Urzulinezed. Eur pennad int bet
oc'h ober skol d'ar merc'hedigou e bourg Pleiber-Krist
arok mont da Vontroulez d'ar gouent a c'halver hirio

c'hoaz " ar gouent nevez " renet gant leanezed ar mes urz.

Eun ijin dispar a ranke da gaout Fanch Madeg hag e bried evit miret na vije dizoloet ar re en em gave dre guz en o zi ; rak en noz evel en deiz e tigouez tud aberz ar Republikaned rus da furchal kement kougn a yo a el lojamant.

Alies ne c'houient hano nemet klevet dao-dao war an nor. Petra rea neuze Mari Pab ? Hi a zave prim da zihuna ar vugale hag ar plac'ched hag ober d'ezo mont d'ar zolierou e gweleou ar veleien hag al leanezed a gerze epad an amzer-ze en eur c'huz. Paotred ar Republik rus pa ne gavent nemet tud an ti er gweleou, petra rafent nemet mont en o zro ?

An dra-ze ne vire ket n'he dije Mari Pab saveteat o buez da veur a hini.

An oferen a lavared er c'hardi, aliesa ma c'halled. Atao avat e ranke beza tud oc'h evesât, en aon na zibouchfe ar furcherien eus eun tu pe du. Meur a wech ez eus bet ranket hasta buhan kuzet an aournamanchoù hep amzer d'o flega.

Deiz yaou an treut, eur bloavez, en eur ober ar furch, ar Republikaned a gavas en eun armel eur stol hag eun nebeut ludu war eur plad, ankounac'heat eno abaoe an derc'hen.


— Ac'hanta, Mari Pab, eme unan eus ar baotred-ze, c'hoas e leverot n'eus ket beleien kuzet en ho ti ?

— Kav anezo 'ta, mar deus, a respondas Mari ken dispon ha tra ; me zo prest va gouzoug da droc'ha.

Ar republikaned rus, dallet gant respond ar vaouez, a yeas kuit.

Eun devez evelkent, panefe unan eus ar vugale, e vije bet lakeat gwall nec'hет. Diredek a reas ar c'hrennard d'an ti en eul lavaret : « Ema erru ar brageier rus adarre !

An aotrou Abgrall en em gave en ti d'ar mare-ze.



N'en doe nemet just an amzer rekis da nijal evel eul luc'heden eus an ti hep heza gwelet gant paotred ar c'houarnamant a yoa dija o zreid war dreuzou dor ar porz, her ha droug bras enno.

— Amzer, paotred ! eme Vari, ho paperou, mar plij ? E c'hellit kredi, Mari a jomas ar pella ma c'hellas da zellez ouz ar paperou-ze.

Epad an amzer-ze, an aotrou Abgrall en doa reuget hent ha kavet plas d'en em guzet.

Pedomp Doue, kenvroat, ma plijo gantan dizrei diwar hor bro garet eun amzer ken skrijus, leun a goumoul hag a zaelou.


An aotrou Pab, eun devez all, a oa bet koulz lavaret etre daouarn an archerien. Evel dre wask o bizied e tec'has diganto e giz eur zilien.

Peurliesa er C'hrevel, (ac'hano 'oa ginidik), e veze kuzet, gwech er bernion kolo, gwech en ti, gwech er c'hreier. Eno e veze gantan an Aotrou Doue en eur plasig distro bennak. Ac'hano e kase o zakramanchou d'an ded klany hep letern na kloc'hig, An Aotrou Doue a zouge en e vruched.

Eun devez 'ta edo o vont da gas e zakramanchou d'eun den torc'hor e parrez Kimerc'h, en eur geriadenn tistik awalc'h d'an iliz nevez, eun hanter eur vat a vale diouz an iliz goz. Tremenet gantan bourkig Kimerc'h e tigouezas e kichen eun orator bihan a gaver war an hent eus Kimerc'h d'ar Faou. Ti zant Leger a vez great eus an tiig-ze. Ac'hano e welas o tont, a benn-kas d'ezan daou archer war varc'h.

C'houi, marteze, pe me a vije lammet en eur park bennak evit redek a dreuz karter ? Mat, an aotrou Pab ne reas ket evesle. Mont a reas ato gant e-hent, ken dioursi ha tra, rak, a lavare goude, n'eus ket par da la-kât ar chas da gounnari ha da zailha warnoc'h evel redek en o raak.

Setu an archerien : « He ! he ! savez-vous où le citoyen



Pape, le prêtre ? (Goût a rit-hu e peleac'h ema ar sitoian Pab, ar beleg ?)

— Han ! me n'oun dare petra livirit ?

— Aotrou Pab du Crével ?

— Ah ! an aotrou Pab ! Feiz bremaik edo er Chrevvel. Me n'eus ket c'hoaz ouspen eun hanter eur, a zotremenet dre eno, ha d'ar mare-ze e oa en ti o kaozeal gant unan deut d'e glask da welet eun den klanv. N'oun ket evit lavaret d'eo'h larkoc'h.

— *Brute de paysan !* emezo.

Ha yao mar gouient d'an daou lamm rus warzu ar Chrevvel. Dre ma 'z eant, pa gavent unan bennak, e c'houennen kelou. Den n'en doa gwelet an aotrou Pab, war o meno.

Unan, koulskoude, hag a oa a du ganto, a lavaras d'ezo :

— Petra ? n'oc'h eus ket gwelet unan o vont aze bremaik ? Evit pell araozon-me n'ema ket, destumet e vleo gantan cindan e dok, hag hen war manchou e roched ! Hennez eo ! mar hoc'h eus c'hoant da gaout anezan, it buhan d'ar G... Da vont di 'oar deut d'e glask.

Hag an archerien da zispenn e roudou. Ne ket d'ar paz ez eant !

An aotrou Pab, pa welas oa eat an archerien a guz, a jachas ive eun tammig war e zivesker, ne ket an neuz d'ober e oa.

— Ma kav ar re-ze eur c'henseurt bennak, a zonjehen, ema great ganen bremaik. » Buhan ha buhan, p'en em gavas, e roas e zakramanchou d'an hini klanv, hag er meaz prest da guzet.

Eat war e souch, treuz daou pe dri bark, e savas e benn dreist ar c'hlvez ha ken eün ha tra an archerien a yo a vont en ti... An neiz a oa goulo. E peleac'h e oa eat al lapouz ? Den n'en doa gwelet ar beleg.

Setu eta an archerien baour kondaonet da gwitat hep an hini a glaskent. Tro wenn adarre !

— An hailhon-hont, a l'avarent etrezo, en eur vont kuit, a oa oc'h ober gwap ac'hanomp-ni, o tigas ac'hanomp d'ar G... Ar Pab a dle beza er Ch'revel.

Ar beleg, o welet anezo o vont en o zro, a stouas d'an daoulin da drugarekât an Doue a zouge d'ar re glanv hag en doa hen diouallet dija ken alies a wech betek neuze, en dro-man dreist-oll, ha ken alies a dro all divezatoc'h epad holl amzer an Dispac'h.



Gouest a ve c'hoaz an Aotrou Doue, a gav d'eoch'h, da ober kement all evit e veleien, ma tizrofe ar memes amzer war hor bro ? Ne ket d'eomp-ni eo klask an tu da welet ar seurt amzeriou-ze evit aprou furnez ha galloud

ar Mestr. Doue, her c'hredi a reomp, a gar e veleien hizio evel gwehall, hag a c'houfe o diouall hervez e volontez, breman evel neuze. Mes ar pèz a gredomp ive eo ne vankfe ket a drubarded d'o diskuilh a amzer da amzer.



Moustrerig

An dra-man oa er goanv, en deiziou warlerc'h Nedelec pa oa teo an erc'h war an douar, eur pardaevez hag-edo dre-holl ar « gwenn war c'horre » zoken er falla parreziou eus hor bro.

Inouet-maro du-man, goude va c'hoan, e sonjis mont d'ober eun tom da di tonton Yann ar C'halvez, er geriadenn nesa. Kalz tud a veze ato eno, kozidi ha yaouankizou, goude o c'hoan, evit selaou Yann, an tonton Yann, evel m'oа galvet gant an holl, o tanevellat dirak eur c'hef o tevi en tan.

Pa oan o tigeri an nor, eur vouez a zave en diabarz :
« Gwechall ha gwechall all, an nep n'en doa ket... »

O klevet trouz e toul an nor, tonton Yann a davas mik gant e varvailh hag e savas e fri da zellet ha piou a c'helle beza ken divezat o tont da zirenka an traou ha da viret outan da vont pelloc'h gant e gontaden.

— Doue d'ho pennigo ! emeve o vont tre barz an ti.
— Ha ! sell 'ta, te zo aze, kamarad ! Deus aman da gemeret renk en-dro d'an tan.

An dud raktal d'en em starda evit ober eun toullig bihan d'in, rak anavezet e oan evit beza unan eus gwella hostizien an ti.

— Te anavez Moustrerig, a c'houlennas ouzin Yann pa oe siouleat an traou.

— Moustrerig ? emeve souezet. Nan, zur, tonton Yanig, biskoaz n'em eus klevet hano anezan.

— Edon o vont da gonta Moustrerig d'ar re-man pa 'z out erruet. Breman e c'hellan kendelec'her...

Ha goude beza tanet eur c'horn-butun du, koz ha milgoz, da vogedi toullou e fri, Yann a gomansas dre ar-

memes geriou hag a ranke lavaret ato araok deraoui
gant pep marvailh :

— Gwechall ha gwechall all, an neb n'en doa ket
a lagad a oa dall, ha breman, bepred an neb n'en
deus hini na wel ket. Gwechall eta ez oa o chom eur
miliner en milin ar Beler hag a oa hanvet Fanch ar
Berr. War studi ar velegiach e oa bet, ha rak-se oa
desket bras, hag an dud vat eus ar c'harter a grede gwir
bater ez oa sorser.

Me da genta, na rean nemet gwap ouz ar re a deue
da lavaret ze d'in :

— Miliner ar Beler, sorser ! Allo 'ta ! Chouï zo kollet
ho penn, va den mat ? a respontron da gement hini a
errue ganen hag a gomze d'in eus an dra-ze.

— Ya, Yann ar Chalvez, ya, sorser... ya brao, rak
teurel e ra sorserez war an dud.

— Ravoderez gwrac'hed koz evel hounnez eus ar
Roc'h !

Koulskoude eun devez, diwar va c'houst va unan, e
teskis e oa sorser Fanch ar Berr, ha setu aman penaos
e oa darbet d'in lezel va c'hoc'h-en en e di :

Kalvez-milin oun bet ato dre vicher. Eun devez, ar
beleg manket am galvas da vont d'e di da reuka eur
rod-vilin bennak ha ne yea ket mat en dro. Mont a ris
hep marc'hata, rak Fanch oa unan eus va gwella hosti-
zien, ma n'oa ket zoken ar gwella. Evel m'ema milin ar
Beler eur c'houistellat mat ac'halen, e chomen ato da
loja er vilin ; rak d'ober petra ez ajen da goll amzer o
tont d'ar gear pa oa frankiz a-walc'h d'am loja eno ?

Goude beza debret va c'hoan : eun tam patatez gant
leaz ribod d'o zouba, ez is d'am gwele e traon an ti...
Kousket a ris buhan a-walc'h, rak eur gwall-deveziad
em oa bet, ha dà oa d'in diskwiza a-benn an devez war-
Jerc'h a vije ken gwaz all bemdez...

War-dro hanter-noz ez oun dihunet en eun taol !
Santout a ran eun dra bennak o voustra war va gar,

hag à vale a nebeudouigou bihan hed va gar ha goudeze hed va c'horf.

« Asa, daonet, a zonjis, petra 'n diaoul a deu d'am direnka evelhen ? »

Teurel a ris va dorn buhanna ma c'hellen war al eac'h ma zanten an dra dizanav-ze o vale...

Poan gollet ! Ne gavis netra, mes avat an aneval direnker a zoa nijet kwit hep mar. rak ne zanten mui-seurt.

Ha me kerkent d'en em rei d'ar c'housked hep teurel muioc'h a bled ouz an dra-ze !...

Goude beza moredet eun hanter-eur bennak, ar me-mes aneval — pe me oar petra ? — a deuas d'am egazi adarre. E lezel a ris tre da zont betek va feultrin. Neuze ploup ! ha va dorn war al leac'h-se ; mes poan gollet adarre, netra na dapis... nemet eun tamm poan em stomok rak krenv diot em oa skoet.

« N'eo ket a-walc'h an dra-ze, a liviris ; red eo d'in gwelet petra 'zo war va zro... eur raz pe eur c'haz, m'oarvat !...

Furchal ha difurchal, trei ha dizrei linseriou, pallen-nou, kolc'hejou... a ris, mes en aner ; raz na kaz na oe kavet. Betek e-touez ar c'holo e klaskis, mes ne oan ket avansetoc'h.

Sonjal a ris neuze gervel tud, mes marteze ne rafent nemet c'hoarzin d'in ha va gwapaat e leac'h va zikour... Hag ouspen, pa deuis da zonjal mat, daoust ha n'eo ket ar miliner marteze e-unan eo oa oc'h ober an taol farse-rez-se d'in, o klask va miouga dre e zorserez ? Gant ar zonj-se em penn e teuis da grena evel eur bern deilhou... hag e teuas da zonj d'in eus ar pez a gonted war-benn ar miliner, rak gouzout a rean mat n'oa aneval beo ebet er gwele kloz, ken piz em oa furchet hag as-furchet kement leac'h oa ennан.

Petra d'ober ? En em lakaat da gousket adarre, na

petra 'ta ! Mes evelkent n'oan ket dizoursi na dinec'h,
kalz a vanke d'in zoken...

Allo ! mat ! setu hen asdeut, kerkent ha m'am eus
serret va daoulagad.

« En dro-man vat, emeve, e lezin anezan da zont tre
betek va gouzoug, forz ha pa ouisen beza mouget ! »

Ploup ! eman tapet ! a zonjis. Tapet a-walc'h a lava-
ran-me zur ! Ar c'hounif donv a yoa nijet kwit adarre
evel eul luc'heden, ha ne gaven roud ebet anezan.

Ma krenen araok, breman e ris gwasoc'h c'hoaz !
Nan, mar ebet mui ! ar miliner eo a c'hoarie an droiou-
se d'in gant ar zorserez, rak asa, daonet, na oa na raz
na kaz, na seurt ebet er gwele kloz, ken furchet ha di-
furchet em oa anezan.

Em brasa kaouad aon ec'h en em erbedis neuze ouz
Doue, ar Werc'hez, an holl Zent ha Sentezed eus ar
Baradoz... hag e liviris n'ousped *De profundis* — ar pez
n'em oa ket great pell amzer a oa — evit kement ene
maro a c'helle beza er boan, evit ma teujent d'am zi-
kour da denna diwarnoun sorserez ar miliner. Hag
araok kousket e ris eur « sin ar groaz » gant kalz feiz,
ar pez em oa ankounac'heat ober abarz dont d'am gwele.

Ar peur-rest eus an noz, netra na deuas d'am egazi.
Mes avat kerkent ha goulou deiz e hastis gwiska va
dilhad, ha mont er-meaz eus an ti, rak santout a rean
ato e oa ar sorserez o poueza war va diouskoaz.

— Da beleac'h ez it, Yann ? a hopas Fanch Ar Berr
p'edon o tivorailhi an nor.

— Kre diaoul daonet, a zonjis, 'meus aon out soue-
zet abalamour m'emaon c'hoaz e buez, hag ez peus
c'hoant va zapout a nevez...

— Asa Fanch, eme ar wreg, serr da c'hinou. Anat
d'it, Fanch a zo savet gantan c'hoant mont war veaz.

Ne jomis ket da c'chedal hirroc'h, ha me en hent war
zu ar Roc'h-Toul.

**

Er Roc'h ez oa o chom eur vaouez koz, Mona, eur sorserez eus ar penn, eur sorserez dreist ha ne oa ket drouk tam ebet. Er c'ontrol gant an holl e oa lakeat eur vaouez eus ar gwella.

Hervez ar brud e tenne an dichanz diwar an tieg-ma'-n-tieg hag a varve e holl loened gant a bep seurt klenvezou, hag e tenne d'hoaz ar sorserez diwar eun all hag a oa abaoe an dizeur ouz e zeuliou.

He gouiziegez vras a oa anat d'an holl, ha den n'en-dije karet beza fall ganti, rak gouest e vije ive d'ober droug ma karfe, daoust n'he doa great nemet vad betek neuze.

Etrezek Mona eo em oa sonjet mont evit gouzout ha petra eo oa bet war va zro hed an noz. Alies a-walc'h em oa bet mallozet kent Mona ar Sorserez, abalamour m'he doa bet lavaret d'in ez oa Miliner ar Beler eur sorser fall, eus ar falla a c'helled kaout. Mez bremen e kaven gaz mont da c'houlen kuzul outi p'edon en dizeur.

Nevez-zavet e oa c'hoaz diwar he c'holc'hed pa zigouezis en ti, hag edo o tibikouza he daoulagad.

— Doue d'ho pennigo, tintin Mona, a zrailhis oc'h an-treal en ti.

— Doue ra vo ganez, va mabig, a respondas ar wrac'h ha ra daolo evez war gement kammed a ri.

— Da c'oulen kuzul ganeoc'h on deuet, emeve eun tammig frankeat warnoun, rak — hen anzav a rankan — eun tam lent e oan o tigouezout en ti, pe el lochen da vihana, pa livirin gwir, rak eun tam toul dindan soul n'oa ken en faout ar Roc'h-Toul.

— Dijuniomp da genta, ha goude vo gwelet.

Va del'her a reas ganti da zebri va dijuni: ha tre ma kemmeske ar yod silet er chaoudouron war an tan, me a zanevelle d'ezi ar pez a oa digouezet ganen enpad an noz hep ankounac'haat eun disterra.

Dijuni a oe debret gant leaz bourbouilh ha gweden-nek toueziet. Mat a-walc'h e kavis keusteuren an hini goz, rak eur flipad hent em oa great da zont betek enni, ha ze en doa lemmet va dent d'in.

An hini goz a zistalias goude eus dijuni. Kemeret a rea kement ha kement he amzer ma teuen da inoui. Abarz ar fin evelato e welis anezhi o vont da beurwiska he dilhad evit lidou ar zorserez — rak dilhad ispisiañ he doa evit se. — War be lenn eur boned gwen-kann a chlooe he zal ha staget dindan he helgez gant eul lasigtano. Eur mouchouer a zaou pe dri liou war he diou-skoaz, gwenn araok ha du adrenv. Eun tavancher pen-



seliet, gant eur breniden vrás a zave demdost betek he gronch. Eul lunedou kraset war beg he fri. Hag evit echui eur re breched hag eur vaz « majik » etre he daouarn. Setu aze he gwiskamant lid, gwiskamant ne veze ganti e nep leac'h, paz zoken en oferen — ha kouls-koude Doue oar pegen aketus e oa Mona da oferen-bred ar barrez.

Truihennet evelse ec'h azezas war he zrebez.

— Tostaît aman breman. va mab, ha dizoloit d'in ho peultrin ma welin...

Ar pez a ris war ar ger ! Hag e komansas neuze, gant he breched en eun dorn hag he baz prizius en egile, ar zorserez da evesaat ouz va feultrin :

— Ya, va mab, eun aneval a zo bet war ho tro en noz-man... e roudou a weler war ho kroc'hen..., hag eun tammig muioc'h en dije ho mouget, rak t'ost betek ho kouzoug eo bet...

D'ar geriou-ze n'hellis ket miret d'ober eur skrijaden ha leac'h e oa a gav d'in.

— Ya, hag an aneval se eme ar zorserez o kendalc'h gant he oremuz, eo Moustrrig digaset d'ho moustra gant Fanch Ar Berr, sorser milin ar Beler...

— Douetanz bras am oa ! a liviris neuze.

— Ya, Fanch a zo eur sorser eus ar falla, ne dalv ket ar gorden d'e grouga. Klasket en deus ober noaz ouzon-me ive alies a-walc'h, mes va zorserez-me a vez ato treach'h d'e hini...

— Neuze e c'houlennis ouz Mona ha n'em oa mui ezom da gaou' aon rak Moustrrig.

— Eo, ha mouget e viot ganlan zoken, ma ne lakin evez, rak ar miliner a zo droug ennan o veza manket warnoc'h e daol kenta, hag ema o pourchas gwasoc'h d'eo'h abenn emberr... mes me a quezo miret outan da noazout ouzoc'h.

— Ha petra d'ober neuze ? a sklokis, liou ar maro war va dremm.

— Setu ama, eme Vona, hag ez eas d'eur pres e traon an ti.

Eun tam poell du gant eur zac'hig outan a deuas ganti d'am c'haout.

— Lakin ar skapular-man — rak heman a zo skapular bet benniget gant an Aotrou 'n Eskob — en dro d'ho kouzoug, gant ar zac'hig a zo stag outan, ha neuze

e c'hellot beza dizoursi. Keit ha ma tougot ar sac'hig-se war ho kerc'hen, al louzeier a bep seurt a zo kuzet ennan — ha gwriet mat warno ganen-me va unan — a bellaio an diaoul diaouzoc'h — rag Moustrerig a zo diaoul, ententit mat, va bugel.

Dirak ar zorserez koz e lakis dustu ar zac'hig endro d'am c'herc'hen, ha goude beza he zrugarekaet start e kemeris penn an hent da vont da vilin ar Beler, abalamour da gerc'hat di va benviou, mes ne jomis ket avad daoust d'ar c'hoant en doa ar miliner, da echui va labour. Abaoue n'eo ket bet tost d'in lakaat va zreid e ti ar sorser diaoulek-se hag a glaskas va laza gant e Vous-trerig.

Yan Ar Chalvez en doa echuet da goms hag a chor-rennas e gorn-butun en e c'hodel.

Goude eur pennad peoc'h, eur mousig bihan a zavas e vouez skiltr :

— Ha sac'hig ar sorserez koz, petra hoc'h eus great anezan, tonton Yannig !

— Ha ! va filhor, gant kalz a resped hag a zevosion e tougan anezan bepred.

Ha war ze, Yan Ar Chalvez a zigoras war e vruched evit diskwez d'eomp gant kalz evez eur skapular koz ha stag outan eur zac'hig lian karget a... bilhou, a wiad kewnid hag a laou-dar !...

Marvailler Kerneleon.



KOUSK, BABIG !

Yaouank-flam, Fanch ar Menn a deuas e kear da vi cherour. Evel kalz all e oa bet trellet e spered gant ar c'honchennou kaer a gonted d'ezan diwar-benn ar c'heariou.

En oad e oa deut da glask e roud er bed-man, ha komzou kaer fazierien ar bobl a chalmas e galon aour prest d'en em rei evit e genvredeur. Dianaoudek c'hoaz eus ar vuez, e oa prim touallet gant o zorc'hennou.

Prest e oe unan eus starta ebettel ar voutinerez (socialisme) ha brasa enebour an dud kristen a glask mad al labourerien hep o fazia gant promesaou sod.

Dimezi a reas, nebeut goue beza deut da gêr, d'eur genvroadez, eur goueriadez eus e barrez, eur plac'hig fur eus an dibab.

Hen, lezet gantan, pell 'zo, pep kreden, a gare kalz e Vari-Janig, ha pep frankiz a roe d'ez i d'ober he deve-riou kristen.

Eur bug-elig, frouez o c'harantez, a deuas c'hoaz da startaat al liam a stage an daou bried. Koant a oa evel an heol : bez' e oa esperanz ar vamm ha plijadur an tad.

....Er mintin-ze, sez heur sonet en orolach, Fanch a bouchasas pep tra evit mont d'e labour, hag araok loc'ha, hervez e gustum pemdeziek, a teuas da lakaat eur pokig war dal an eal bihan a gouske sioulik en e gavel, eur pokig tener ha karantezus, eur pokig flour gant aon d'e zihuna pe da c'hloaza e gigen fresh.

Goudeze, gant muioc'h a nerz-kalon e laboure, o sonjal e roe e c'houezen evit e vugel dous.

Et gear, gant karantez Mari-Janig ha c'hoarz e va-

big, ar micherour a dueu d'ankounac'haat, evit eur pennad, ar gasoni en doa gwestlet d'an dud en em lard diwar c'houezen ar bobl. Mes er stal-labour ar gasonize a adkroge ennan, hag eno n'en doa ket sell triste zousig hag a zisplije d'ezi seurt konchou, na c'hoarz tener e vugel da viret outan da wall-gomz eus ar re a ren eur vues re zibreder.

En devezeze, d'an heur ma tigore ar stal, gant souez ar vicherourien a welas e oa kresket a galz al labour o doa d'ober ; eur marc'had en doa great ar mestr-labour, en hano ar « patron » eat eus ar gear, hag ar varc'hadourez a ranke beza prest d'an deiz merket.

D'al labourerien eta da boania muioc'h.

Mes ze na blijas ket da veur a hini hag en em glemm a rejont.

Ar mest-labour, da genta, na fellas ket d'ezan o zelaou. Penaos ! micherourien a grede lavaret eun dra bennak enep d'ezan ?

Ar pennou bervet a zavas neuze o mouez kalz uheloc'h.

— Paeamant vrasoc'h pe ni ne labourimp ket !

— Krogit da labourat ato, ha ni welo goude, eme ar mestr-labour, hag eun dra bennak a vo da rei d'eo'ch ouspen ho pae ordinal....

Ar re zioula eus ar vanden a oa prest da zenti. Mes ar pennou bras a nac'has krenn !

— Ta ! ta !... n'eo ket gant kaochou emaomp aman ! Ni, ne labourimp ket, la !...

Ar mestr-labour a nec'he. Petra d'ober ? Mar kizfe, al labourerien a lavarfe e oa plegik.... ha pep galloud a gollfe warno ; hag hen, nevez erruet c'hoaz, a felle d'ezan en em ziskouez kalet ha stris evit e dud.

Keit ha ma chome ar pôtr da nec'hi, gwad al labourerien a verve !

— Ah ! ar pabor ne fell ket d'ezan plega !... Ni welo betek pegeit ez ai d'ezan !...

— Arne zo arru, eme eur vouez, ne rai ket brao beza
er meaz dindan an amzer fall a deu !

Ne felle ket d'ezo beza lezet da dorta e kichen an
nor ! War zin unan eus ar pennou brasa, an hini a
gomze alies en hano ar vanden, an holl vicherourien a
yeas er stal. O dremmou a verke ar gounnar, hag ar
mestr-labour en doe aon ne fellfe d'ezo ober eun droug
bennak ; esa o c'has er meaz a reas.

Ze oa awalch evit kreski an droug e korf an dud-ze
hag en em lakaat a rejont da vrevi pep tra er stal, epad
ma kerze kuit, ar prima ma c'helle, ar mestr-labour.

Er meaz, breman, ar pilh-c'hlaor a goueze, al luc'hed
a sklerijenne an ear hag ar gurun a strake.

En diabarz, ar vruzunerien a gendalc'he bepered
gant o labour a zistruj. Seurt na veze espernet. Bresa
reant pep tra evit ar blijadur d'en em « venji » ha da
ziskouez d'o mestr e oant ar c'hrenva.

— Sell ! petra hennez, an tam traou-ze a zo ouz ar
voger ? a hopas eur vouez e kreiz an trouz bouzarus.

Eur C'christ an hini oa, hag a ziskouez e oa kristen
perc'hen ar stal. Ma vije bet er gear, sur awalch, en
dije roet o goulen just d'e vicherourien. Ne vije ket bet
ken piz-moc'h hag ar mestr-labour.

Eul labourer — Fanch ar Menn, e-unan — eur pen-
nad baz-houarn en e zorn, a blantas eun taol pounner
gant kroaz hor Zalver, hag he distagas krenn.

— Sellit ! ema deut d'an traon !... emezan.
Lod a c'hoarze ; lod all a zelle, mud, ouz ar C'christ
kouezet.

Eun darz kurun a groze, just d'ar mare-ze...

...D'ar mare-ze ive, Mari-Janig, en he zi, a grene.
Babig, epad pell amzer, en doa ouelet, gant an aon en
doa rak argurua o strakal. Ar vamm, pleget azioc'h-han
a c'hoarze outan evit e zisposta, e starde war he feulin-
trin, ha nebeut da nebeut, kustumet eus an trouz, ar

bugelig a gouskas en e gavelig, etouez an dilbad tom ha flour.

— Santez-Anna !... hon diouallit a bep droug!... a lavar ar vamm e kreiz he spont pa glev eun tarz skrijus, iskiz... He daoulagad a zerr. Kredi ra d'ez i eo pulluc'het e kreiz an tan !...

Oh ! Gwerc'hez !... ar vam a zo souezet oc'h en em gaout beo goude eur seurt spontaden...



He daoulagad a gouez war ar c'havel. Petra wel ?... Babig a zo disinv !... Ar gurun n'en deus ket manket e daol...

Ar vamm a ouel ! He c'halon a zo re skoet, dinerz, e kouez...

— O perak, va Doue ! skei eur bugelig dibec'h ?...

**

... An tad, o tigouezout er gear, a gav Babig en e
gavel gwenn, Babig digailhar evel eul lilien, serr e
zaoulagadigou, o tanva kousk kun ha peurbadus an
Elez !...

DIRLEM.



Merc'h ar bunision

Epad an dispac'h vrás, eun tiegeziad tud a yeas da jom d'ar Faouet (Morbihan). Eno, brasa ebat ar wreg oa mont bep mintin war dachen Bouffay, el leach'h ma veze dibennet beleien, noblans ha kristenien vat.

Na pebeus plijadur evili gwelet sevel ar c'hilhotin !

Ha pa goueze ar gountel vrás war benn ar reuzeudik kondaonet e save war begou he zreid, he daoulagad a lugerne, a strinke tan gant ar blijadur, egiz daoulagad al loen gouez a za da zailha war e breiz ha da eva e wad. Strakal a rea he daouarn gant levenez ha yudal abouez penn : « Gwad ! Gwad an aristokrated ! »

Koulskdude ar vaouez-se a oe brazez. Lakât a reas war an douar eur plac'hig, pe kentoc'h eur grouadurez spontus da welet.

Ar plac'hig-se a zo heuzus evel kalon he mamm. Bez ez eo krouadur ar "bunision". Diodez adalek he bugaleaj, n'he deus gellet deski netra, ne c'hoar nemet yudal evel ma rea he mamm. N'edo ket c'hoaz anezi war an douar hag e klevet ar c'hi-ze a loske he mamm.

Ha brema, da bep mare eus an deiz e ve klevet o youc'hal. C'hoant o deus he c'herent d'ankounac'hât an amzer dremenet o testum en dro d'ezo tud henvel outo, krouadur ar "bunision" a zo aze, ha ker buhan, pa zonjer an nebeuta, e vez klevet ar youc'h spontus-ze a laka ar joa da dec'het kuit hag an dristidigez da bara war benn kement hini a zo war al leac'h.

Diouz tôl, en deiz, en noz, eo ret mat d'ezo he c'hlavet. Kaer o deus klask miret outi da leuskel youc'haden-nou, ne c'heller netra. Mar bez skoet, bazatet, n'ez aio

ket er mèz evit se, rak gouzout a ra ar spont a skign a
bep tu ar gwel anezi. Neuze e tremeno an nemorant eus
an deiz en eur c'horn bennak eus an ti ; dioc'h an noz
hepken ez a da ober eun dro er mèz.

Goude beza troet ha distroet epad eur pehnad, ez a
war eur groaz bet diskaret d'an douar epad an dispac'h.
Neuze e teu euz he genou eur youc'haden spontus ; he
mouez skiltrus a vez klevet a-bell en despet d'an avel
ha d'ar gwall amzer. Ar beachour sabatuet (souezet



bras) a zelaou, hag e klev ar c'homzou divalo-ma :
« Gwad ! gwad a zo red evit renevezi ar Republik ! »
kanaouen a garie kement he mamm p'edo brazez ha pa
z ea da welet dibenna ar gristenien vat.

Merc'h ar "bunision" he doa eur breur ganet ar aok an dispac'h (Revolusion). Deuet en oad da veza soudard e c'houennas digant e dad ma vije prenet evit chom er gér. An tad a yoa e tro d'hen ober, rak pinvidik oa, hep m'o divije e zanvez koustet gwall ger d'ezan. Mes ne glaskas ket miret ouz e vab da vont da zoudard. Gweloc'h e kavas miret e arc'hant eget miret e vab.

Goude beza tremenet eun nebeut miziou en arme e tistroas d'ar gér, poan d'ezan chom en e zav, kement oa dinerset gant ar skuisser hag an dizursiou. Dont a reas, eme an hini a skriv an dra-ma, (1) dont a reas evel bleinet gant Doue evit kastiza c'hoaz muioc'h-mui eun tad hag eur vamm ken dinatur.

Eun abardaez edo e dad war dreuzou e zor ; gwelet a reas eun den o tont war eün d'ezan, beac'h gantan en em stleja.

— It ebiou, diavezial, it ebiou ; ama ne roer ket !

— Her gouzout a ran ! a lavaras ar beachour.

Ha koulskoude e tostea ato.

Ar wreg a deuas ive.

— Petra c'hoari... emezi drouk mort enni, petra c'hoari gant ar paour-ma ?

Ar "paour" a ye ato, en eul lavaret :

— N'anavezit ket ac'hanon ? Me eo ho mab kouls-koude...

— Ni grede oas maro, eme an tad ker yen ha ker sklaset hag ar mean a yoa dindan e dreid.

— Sell, a lavaras ar vamm, bet ec'h eus eta da gonje ? Hag evit pegeit ?

— Evit ato ! eme ar zoudard.

— N'eo ket posUBL ? a lavaras an tad ; ni zo eat da baour, ha ne c'hellimp ket derc'hel ac'hanout.

(1) Paul Féval, kredi a ran. (Klaoda).

— O bezit dichal a gement-ee ; n'ho pezo ket d'am
derc'hel pell bras, rak dizale am c'hasot d'ar vered... Ne
deuan ket da jom d'ho ti, da verval eo ! eme an den
yaouank. Va mamm, sec'hed am eus !...

Ar vamm a c'halvas ar verc'h ; ar verc'h, ken ne-
beut, n'anavezas ket he breur.

Eun dervez bennak a-c'houdevez e fallaas d'ar pôtr.
O c'houzout ervad e teue ar maro d'an daoulamp e reas
gervel e dud, hag e lavaras d'ezo :



— C'hoant em boa e vijec'h testou eus va maro.
C'houi eo ho peus va lazet ! Gwelloc'h ho peus kavet
eun tammig aour eget ho mab, hag ho peus hen lezet
da vont kuit ; ha pe seurt kelennadurez ho peus roet
d'in evit va miret dioc'h an droug ? Biskoaz em buez

n'ho peus komzet d'in a Zoue... Buntet hoc'h eus ac'hann er meaz ho 'ti, o sonjal kaout eur c'hrouadur nebeutoc'h da vaga... Ha ma teu ar c'hrouadur-ze d'ar gér n'eo ket evit mervel etre ho tivreac'h, mes evit ma vez e varo eur boan muioc'h evidoc'h. Va mamm, c'houi a gemere ho plijadur o welet ar gwad o redet, ha va c'hoar a zo aze eur groaz pounner evidoc'h... Va zad, c'hoant am beus bet ho piye ive hoc'h hini, ho kroaz. Va bez a vezd d'eo'c'h, e bered ar gér-ma, m'ho pezo sonj hoc'h eus bet muioc'h a garantez evit an aour eget evit ho mab...

Keit ha ma prezge ar mab evelse, an tad hag ar vamm kablus a jome eno e kichen ar gwele, tenval o fenn, hep lavaret ger.

Ar c'hlavour a droe hag a zistroe.

— Hag hen ez eus eun Doue ? Hag hen ez eus eun Doue ? a youc'he heman hep eur mare. Ar gerentavat a jome dilavar.

— Eur beleg !... Buhan, eur beleg !... Degasit d'in eur beleg ! eme an den yaouank gant eur vouez c'holoet.

An tad neuze a lavaras d'ar vamm :

— Deomp ac'halen !... Alteri a ra !!!

Mont a rejont er mêz, ha pa zistrojont edo ar verc'h war gwele he breur, o kana !!!

Ar pôtr a yoa maro !

Feiz ha Breiz koz (5 Even 1875).



Boutouigou ar Werc'hez

Bez 'z eus, eni eun tu bennak e Breiz-Izel, war lez eur c'hoad bras, eur chapelig koz, savet en enor d'an Itron Varia. An doen goz mein glaz hag ar mogeriou hanter freuzet, a zo paket gant an illio, a ra d'ezo evel eur vantele c'has ha dantelezet. Dister eo ar chapel, daou brenest hag a zo beget e penn-kreac'h anezo evel eur viyar, a ro sklerijen enni ; ha dindan eun tourig begmoan, el leach'ma'zeus eur c'hloc'h bihan e pign, e tigor an nor vraskoad dero, kizzellet ha dantelezet, mes hanter vrein. Ar c'hloc'hig en deus eur vouez voan ha skiltr a zav evel kan an evnig a uz d'ar c'hoad, hag a vez klevet a bell.

N'eo ket gwall gaer ar paour kêz chapel ; n'eus netra enni brao da welet, netra nemet ar Werc'hez, eur Werc'hez koz ha koant bepred. Piou en deus grêt anezi ken koant, ken brao ? Eun den ha ne ouezer doare d'ezan, ha n'en deus ket skrivet e hano war ar ijien ; eun den dornet mat kou!skoude, hag eur c'hristen evel m'eo dleet. Diouz gwelet anezi, pa sko warni eur bann heol, dre ar prenest, ha pa hij warni skeud an deliou illio, e lavarfe eun den eo beo ar Werc'hez, gant he bleo melen aour, he diouchod rus, he genou hanter zigor o vousc'hoarzin ken dous, hag he daoulagad glas glizen o sellet gant madelez ouz ar re a ya da bedi anezi. War he zal gwenn evel eur fleurdelizen ez eus eur gurunen steredennek, eur wel gwenn kann a guz he bleo hir hag eur zaë wenn, gant rozennou aour, a wisk anezi, hag a zo dalc'het gant eur gouriz glas evel bolz an nenv. He daouarn gwenn en em stard war he mabig Jezuz hag a zo e zivreach'h en dro da chouzoug e Vamm hag e benn melen war he skoaz.

E treid an ltron Varia, o tra burzudus ! en he zreid ez eus eur boutou, ya ! eur boutou koad, bihan ha koant, evel he zreidigou gwenn, boutou koad melen, liou kistin, kizellet evel koad dantelezet. Boutou koad ? d'eur Werc'hez ? Biskoaz kement all n'ho peus klevet, me gred. Ac'hanta, selaouit, ha me 'ya da lavaret d'eoc'h pebez burzud a c'hoarvezas diwar-benn ar boutouigou-ze.

Ebarz ar c'hoad-ze, e kichen ar chapel, e oa bet kavet, breman 'zo tost pemp kant vloaz, en amzer brezel bras Breiz-Izel, eur c'hrouadur demdost noaz, a oueleg hag a hirvoude, kollet gantan e vamm. Ar boutaouer-ma Gwilh e hano. a zonjas penaos e kavje tad ar bugel hag en divije digantan eur gaer a aluzen dre drugarez.

Nallas ket kaout doare ebet eus tud ar bugelig, ha dre ma kreske henman en oad, e rustae dioutan. Herve — an hano-ze a oa roet d'ar bugel — a oa eta savet evel eur paourkéz emzivad ; aliesoc'h en deveze skouarnedou eget bara.

Biskoaz ne c'hoarze ar bugel paour. Chom a rae awechou ebarz ar c'hoad gwall bell da zelaou kana an evnigou koant ha skany, ha neuze e sonje : « Al labouzed tener o deus eur neizig kluar, emezan, hag eur vamm vat da c'holo anezo gant he askel zom, ha da zigas d'ezo da zebri. Ha me, piou eta en deus koun diouzin ? »

Koulskoude beza 'veze eürus awechou, pa c'halle mont d'ar chapel. Eno en doa kavet eur Vamm ! Ar Werc'hez trugarezus, a zeblante d'ezan e selle d'e gaout en eur c'hoarzin outan ken seder. Hag alies e teue eno da ouela ouz treid e Vamm an Nenv.

Kreski a rae 'ta, en despet d'an tōliou ha d'ar yuniou, karet gant ar Werc'hez koant hag e lavare d'ez, gant fizianz, e holl drubuilhou. Erru oa en oad d'ober e Bask kenta, ha daoust da Wilh ar boutaouer da veza drouk, n'alle ket hen harz da vont d'ar c'hatékiz. Eno Herve a

oa ken fur, ken aketus da zeski ma oa roet evit skouer d'ar re all gant an aotrou Person. Pa dosteas miz mae, miz ar bleuniou, miz an neizou, miz ar Paskou kenta, ar Person a lavaras d'ar vugale e vije mat d'ezo rei eur prof d'an Itron Varia, deiz o Fask. An daelou en e zaoulagad, Herve, stouet ouz treid ar Werc'hez, a lavaras d'ezzi : « Ha me, paourkéz, petra roin-me d'eoc'h ? Allaz ! Mammig ker, n'em eus netra. rak va c'halon a zo d'eoc'h a bell 'zo ! » An heol, o para war dreid noaz ar Werc'hez, a zigasas d'ezan eur zonj vrao. Mont a



reas d'ar gér, ha gant eur gontel lemm hag eun tam koad fao en em lakeas, e kuz, da labourat gant prez. Ar c'hoad a gemeras, tam ha tam, stum diou votezig skanv ha koant; neuze o brodas, o zoullas gant beg e gontel bag e reas war o choukou evel deliou ha boke-dou meurbet fin. Goudeze e vogedas anezo, ken e oant alaouret, melenet, ha koant e oant evel diou vagig gant o beg moan ha tronset war grec'h, hag eur rozennig e kreiz. Lavaret e vije eur boked bleun ha deliou koad. Luc'ha 'reant zoken evel kistin dare.

Setu erru deiz kaer Pask ar vugale. Herve en doa bet digant Itron ar c'hastel, eur wiskamant nevez 'giz an amzer-ze : bragou berr ha porpant glas mor. E vleo hir melen ha flour, frizet evel gloan an oan bihan, a gouez war e ziouskoaz, en eur lugerni d'an heol, dindan e dok ledan, hag e zaoulagad a steredenne gant laouenedigez e galon.

Dindan e vrec'h e oa gantan, paket en eul lien gwenn, an diou votez dantelezet. Da betra lavaret d'eoc'h e eürusted pa zeuas en e galon glan ar Mabig Jezuz, e Vreur ken karel ? C'houi hen goar, an deiz-se eo ar c'haera eus ar vuez, hag Herve n'en doa bet eü-rusted ebet c'hoaz...

Goude an oferen ez eas ar vugale, hervez ar c'hus-tum, da leina d'ar presbital ha goude ez ejont da c'hoari eur pennad ebarz ar prad bras. Neuze pep hini a ziskouezas e brof. « Herve, eme ar re all, diskouez ar pez a roite d'ar Werc'hez. » Herve a zisplegas al lien gwenn. A boan oa digoret ar pakad m'en em lakaas ar re all da c'hoarzin a bouez o fenn ha d'ober gwap diouz ar paourkéz boutaouer bihan. « Boutouigou koad !... d'ar Werc'hez ! he ! he ! red eo d'it beza leue ! Ha penaos e laki te anezo d'ezi ? » « Sell, eme mab ar miliner sell ar chaden aour a roin-me d'ar Werc'hez ! » « Ha me, eme eun all, me a roio d'ezi eur wel lien fin ha flour, nezet gant preder, gant va mamm. » Neuze mab ar

markiz, Raoul Kerbrug, a zigoras eur c'hef bihan, hag a ziskouezas d'ar vugale souezet eur gurunen aour, perlezet, a lugerne war eur fons voulouz glas. Herve, glac'haret ha mezek, a blegas e Benn, daelou en e zaoulagad. Tec'het oa e joa gant gwaperez ar vugale-ze, kriz a galon ; n'en doa ken c'hoant ebet nemet da vru-zuni dindane dreid ar boutouigou en doa kleuzet ha brodet gant kement a garantez. Mes ar persona dos-taas hag a frealzas e galon baour en eul lavaret : « Ar Werc'hez a zello muioc'h ouz ar c'halonou eget ouz ar profou a vo grêt d'ez. Deuit, bugale, d'ar brozesion evit kas ho prof d'an Itron Varia. » Mont a rejont 'ta, laouen en eur gana kantikou.


Goude ar gousperiou — lavaret « war ton ar c'ham-poez gwiniz », gallout a rit am c'hredi ! — pep hini a dostaas da rei d'ar Werc'hez e brof. Ar markiz bihan, Raoul, da genta, gant lorc'h a bignas war eur skeul vihan da lakât war benn ar Werc'hez e gurunen steredennet. Ar re all a zeugas ive an eil goude egile, hag Herve an diveza, an dour en e zaoulagad glas, a zellez ouz ar Werc'hez.

— O Mammig ! emezan, na rit ket fae war va labour,
gantan ee'h adroan d'eo'ch va c'halon.

Koulskoude, pa oa arru lost, e chomas abof, mes ar
Werch'ez a c'hoarze ken tener, ken ma tostreas krenn.
O ya zud vat ! pebez burzud a oa gwelet neuze!....

Ar Werc'hez koad a zavas, an eil goude egile, he daou zroad gwenn, hag Herve a c'hallas, en eur greno, gwiska enno ar boutou dantelezet !... Ha neuze ar Werc'hez a astennas he brec'h, en eur blega he fenn kurunet, da gaout an emzivad disprizet, hag a lakaas heORN benniget war e benn hag eur pok karantezus war e dal gwenn ha glan !

Ar bugel paour, dindan douster ar pok dudius-se, beuzet e galon a levenez, a gollas anaoudegez ha dousik a ruzas hag a gouezas war an douar. An aotrou person



souezet bras ha spontet hen adsavas ; an daoulagad glas a oa digor ha leun a eurusted, ar genou rus a vousc'hoarze c'hoaz mes ar galon, re vihan evit kement a levezenez, a oa paouezet daskei. Seblantout a rea beza maro ! Ne oa ket, koulskoude, ne oa ket maro dre laouenedigez. Eur pennad goude, Herve, stouet d'andaoulin dirak e Vamm a rea d'ezi ar gwesti eus e vuez holl...

Ar Werc'hez a oa adsavet evel diagent, eun hevelep c'hoarz dous war he genou koant, mes gant ar gurunen lugernus war he fenn, ar wel war he bleo, ar chaden aour en he c'herc'hen... hag ar boutou dantelezet en he zreid...


Hag Herve ?... Herve na c'houlennas ket adkemer ar galon en doa roet d'e Vestrez, ha biskoaz den ken n'en deus poket d'an tal-ze a oa bet gwestlet gant genou gian ar Werc'hez. Mont a reas raktal d'eur manati, hag eno e varvas evel eur zant, goude eur vuez a beden hag a binijen.

Gras a c'houlennan digant Doue, evidoc'h evel d'in va unan, d'echui eveltan.

Evelse bezet great.

HERMINIK.


YANN JERTRUD



En amzer ma rene ar roue Charlez VII, ar Zaozon a
yoa en em stlejet war ar Franz bag o doa sonj mat d'he
lounka a-bez. Pariz, ar gêr vrás, a yoa c'ezo. Ar c'hont
Sant-Pol; o chom en eur c'hastel hanvet Kartelier, a fal-
vezas d'ezan, eur zadornvez vintin, mont betek Kom-
piegn evit lakât ar gêr-ze e stad d'en em zifen outo.

Ar c'hont Sant-Pol a yoa eun dijentil kalet, eun den
a vrezel grêt mat evit dougen kleze ha dilhad houarn.
Netra na rea aon d'ezan, ha panefe m'en doa c'hoant da
espern gwad e zoudarded hag e wizien, en divije breze-
lekaet dalc'hmat hag en divije lakaet ar Zaozon d'hen
laza kentoc'h eget lezel ganto eur meurtad douar.

Ar c'hont en doa eur mevel, eur skouer a fealded
hag a lealded, eun denig dister, hanvet Yann Jertrud.
Yann a garie e vestr evel ma karie ar Werc'hez hag an
Aotrou Doue, ar pez n'eo ket lavaret nebeut, rak eur
c'hristen mat oa.



En dervez-se, pa glevas ez eat da gemeret an armou,
e savas da c'horre ar c'hrenv, da zellat ouz ar c'harier
tro-war-dro. Kaout a reas d'ezan a-bell gwelet ar boul-
tren o sevel war an hent tost da Gompiegn. Kement-se
a ziskouze e tlie beza ar Zaozon dre eno, hag e kasas
tri den a-raok da welet. N'eo ket armet c'hoaz ar
c'hont pa deuas an tri den-ma en dro, hag a lavaras
o doa gwelet aleis a Zaozon war an henchou, hag e tis-
trujent oll dre ma tremenent.

— Ma ! eme ar c'hont, mont a reomp da gas eun tammig labour d'ezo. Yann, digas d'in va zok houarn !

— Mes, Aotrou kont, a-veach' ma hon deus pempek kant den dindan an armou ; ha mar deo al lakisienn-ze an hanter muioc'h ?

— Ac'hanta, hon devezo kerch' da rei da bep a zaou !

— Ha mar dint tri oc'h unan d'eomp-ni ?

— Me laka, Doue ra 'z pardono ! ec'h eus c'hoant d'am lakât da gemeret aon ? An dra-ze a yoa mat, pôtr Yann, p'edon en oad a bevar bloaz ; breman avat pa 'z oun deuet da veza den, alo, gwazed, war varc'h buhan, ha bec'h d'ar Zaoz !

— Mestr, ma rankit mont, am lezot da vihana da vont ganeoc'h ?

— Hep arm ebet ?

— N'em eus ket ezom a armou, me !

— Neuze n'ec'h eus nemet dont, hag e weli penaos e taouhanterimp hag e tispennimp-ni ar bôtred-se.

Yann Jertrud a garie e vestr, mes ne garie nemeur ar brezel. En eur zevel war ar marc'h a oe digaset d'ezan e reas tsin ar groaz o lavaret : Intron Gwerc'hez Vari, hon difennit, hag ho pezet truez ouzomp !

Yann a zalc'he troad ha troad gant e vestr e penn ar vanden, a-raok ar re-all ; rak ar c'hont en doa prez hag a yoa en em lakêt en hent a-raok m'o doa bet e dud amzer da glask o armou ha d'en em voda. En eul loc'ha en doa lavaret d'ar re a yoa e porz ar c'hastel, ar c'hom-zou-ma hepken :

— Nep am c'har hag en deus feiz, dont war va ierch !
Ha neuze oa loc'het d'ar c'haloup.

— Mestr, eme Yann, gortoz a diefemp ar re-all !

— Ro peoc'h, Yann, ha kea en dro, marec'h eus aon, mes na glask ket va derc'hel em zav ?

A-veach' ez oa deuet pevar-ugent marc'heg a dost da c'hellout sikour ar c'hont, ma weljont o tispaka eus a douez eur c'hood ouspenn pemzek-kant soudard.

— Gwelet a rit ! Gwelet a rit ! eme Jertrud.

— Dao warno ? Dao warno ! eme ar c'hont. Hag hep-gortoz ken e red d'an daou lamm warzu e enebourien. Mes kaer en doa mont, Yann Jertrud a yo a kerkent hag-hen ha zoken en e raok, rak ar zervicher mat ma 'z oa, c'hoant en doa da lakat, mar gellje, e gorf a-dreuz, da zigemeret ar birou a vije tennet war e vestr.

Ne oe ket hirr an abaden.

Yann a oe treuzet e vrec'h gant diou zaezen, hag-epad ma klaske lakat e vestr d'en em denna, e oe tizet en e c'houzoug gant eur zaezen-all. Ne oe ket lazet kouls-koude ; mes ar c'hont pa welas mat neuze n'edont ket niverus a-walc'h evit derc'hel penn d'ar Zaozon a droas en dro gant e vandennadig marc'heien, hag hepdale ne-weled mui nemet ar boultron savet en ear dre al leac'h m'oant tremenet.

Yann Jertrud a yo eur marc'heg mat ; mes gant teir-zaezen oa bet bet tizet, hag e varc'h gant diou. Ar marc'h a golle gwad, hag hen e-unan a golle muioc'h c'hoaz. Hepdale ar marc'h a gouezas hanter varo, hag-hen a ruilhas en e gichen hep kaout an nerz da zevel en e zav.

Ar Zaozon a yo en em dennen adarre er c'hoad, mes en o zouez ez oa c'houilherien, laeron, a rea mi-cher da vont da c'houilhat ar re a veze chomet war an-dachen pa veze bet eur stourmad bennak.

Tri anezo a gouez war ar paour kez Jertrud. Sellet a-reont da genta oc'h e varc'h da welet hag hen eo mat d'ezo ; hogen, pa welont e c'houliou hen lazont a dao-liou sabren.

Jertrud a lavar neuze outan e-unan : « A ! pa lazont va march, am lazint iveau sur a-walc'h ! Intron-Varia, ho pezet truez ouzin ?

Hag e gwirionez, setu al laeron o tont betek ennañ.

— Alo, loen fall, da yalc'h !

— Me n'em beus ket a arc'hant ; me ne doun nemet
eur mevel paour !
— Mat, da zilbad neuze, ha buhan !



— Kasit ganeoc'h ! Mez taolit evez, en han' Doue !
me zo glazet va gar gleiz ha va brec'h zeou.

— Petra ra an dra-ze d'eomp-ni ?

— O va Doue ! poan a rit d'in !

— Han, poan ? Gortoz !

Hag unan anezo ha darc'hoi eun taol sabren war
benn ar paourkez Yann. Etre daou ives, ar re all o doa-
tennet e holl zilhad digantan.

— Va Doue ! va Doue ! eme Jertrud.

— Petra vank d'it c'hoaz ? eme unan anezo evit e
wapât.

— Eur beleg !... Lezel eur c'christen da vervelevel
eur c'hi ! Va lazit evel a garot, mes a-raok, en han'
Doue ! eur beleg !

Ha neuze Yann a lavare c'hoaz :

— Intron-Varia, ho pczet truez ouzin !

Evel respont, al laeron a ziskarge eur gaouad tōliou
war ar paour kez Yann, a grie ato : Va lazit, va drail-
bit evel ma karot, mes eur beleg da genta !

— Ha da belec'h ez aimp-ni da glask eur beleg d'it ?

War gement-se e klevjont eur vouez en o c'hichen o
lavaret :


— Unan bennak a zo dre aman o c'houlen eur beleg ?

Eur beleg a yoa eno dirazo, evel dre vurzud, evel pa
vije savet eus an douar. An tri laer a oe ker souezet
mach'ehanjont da skei. Goude debat e rojont dek mu-
nuten d'ar beleg evit kovez ar paour kez Jertrud ; mes
n'hen leschent ket e buez, emezo, da vont en dro d'ar
c'hrenv e-touez e genseurte.

A-vec'h en doa bet ar beleg amzer da govez Yann,
ma teuas al laeron en dro. Goude beza gwaligomzet ouz-
ar beleg en em lakejont da skei war ar paourkez den evit
beurgas, ha pa her c'hredjont maro ez ejont kuit.

Ar beleg n'oa ket eat a-bell. Kerkent ha m'oa eat al
laeron kuit e teuas da gaout an hini a gredent maro,
hag e kazas c'hoaz eun tammig buhez ennan. E zougen

a reas da gardi an tiegez a yoa eur pennad ac'hano. Eno
e c'hourvezas anezan war eun neubeut plouz (kolo),
hag ec'h en em roas da zoursial eus e c'houliou. Al lae-
ron avat o doa e welet o tougen e glanvour hag a deuas



ivez war e lerc'h. En em lakâta rejont adarre gant o zabrinier da skei gant Yann Jertrud, hag unan anezo a lavare :

— Red eo e ve ibilet e ene en e gorf pa n'eo ket maro c'hoaz !

— Bremaik ne vezoo ket ! eme unan-all ; hag o laveret kement-se e krogjont daou ennan, unan e pep gar, hag her stlejont a-ruz hag a-drein a-dreuz ar vein hag ar girsier betek eur ster a yoa e kichen, el leac'h ma hen taoljont evit ne vije mui klevet hano anezan.

An tri bourrev a yeas ac'hano neuze. Ar beleg, hag en doa ranket tec'het a yoa chomet war e api, hag a deuas adarre kenta ma c'hellas. Dioc'h argwad, e kavas e hent. Pegen mac'hagnet hennak oa Yann Jertrud ez oa e anaoudegez gantan pa oe taolet en dour, hag e c'hellas lavaret c'hoaz eur wech da vibana a galon :

« Intron-Varia, ho pezet truez ouzin ?

Ne c'houie ket neuui, an den kez ; mes ar Werc'hez, pedet gantan ken alies hag he devoa e zalc'het e buez betek neuze, a deuas war e zikour. Chom a reas war c'horre an dour, hag hep ma c'houie penaos, en em gavas hepdale en tu-all d'ar ster, war ar seach'. Pa zigouzas ar beleg, e treuzas buhan ar ster evit dougen sikour d'ezan, ha Yann en devoe nerz a-walch' evit sevel e zaouarn etrezek an nenv da lavaret :

« Va zad, saveteet oun ! »

Ar beleg a gavas prestik goude eur c'har evit dougen Yann Jertrud d'ar c'hrenv eleac'h edo dioc'h ar mintin. Ar c'hont Sant-Pol a gemeras kement a zoursi eus e zeryicher feal, a lakeas louzaoui ker mat e c'houliou, ma pareas hepdale, hag e oe gwelet yac'h ha laouen o vont da bardona da japel ar Werc'hez, evit e zrukare-kât ha da rei da anaout d'an holl he zrugarez hag ar burzud he doa grêt en e genver.



Eun dro e Bro-Wened

PENNAD KENTA

N'ouzoun dare penaos e tigouezas d'in dont da dremen dre eur c'horn a Vreiz el leac'h oan bet o klask rimadellou meur a vloavez a yoa, hag el leac'h em oa lezet mignonned. Eus Karnak eo e fell d'in koms. Tost d'ar gearig-se edo o chom Judikaël, an hini en doa grêt digemer ker brao d'in eun toulladig bloaveziou diaraok. N'em bije lavaret grik eus ar pez a c'hoarvezas ganen abars mont en e di, panefe ma oen test eun dervez eus eun darvoud hag a skoas va spered kenan. Nevez eat oan da Blenion da c'houlen eur begad hag eur gwele da dremen an noz ; digemeret e oen a galon vat, evel ma tigemerer an holl veajourien e Breiz-Izel ; hogen dizale eteuis da gompren e tremene eun darvoud bras bennak er verouri : mistri, servicherien ha plac'hed, n'o doa repoz ebet. Ha ne greden ket goulen perak, pa glavis unan eus ar plac'hed o lavaret :

— Nan, nan, ar mestr ne bareo ket ! An tôl a zo rebounner !... Hag abaoe an noz eo poan e anaout kement a jenchamant a zo ennan. Lavaret a rafed eo deut da veza gwrac'h ! (Er c'horn-ze a Vreiz ec'h hanver e giz-se ar re a zo bet skoet o spered ganteun dra bennak. eus ar bed-all).

Ha setu me deuet da gemeret eun tammig hardiziez. Ober a ris outi eur goulen bennak.

— Ya, siouaz ! Ar mestr ne zavo ken ; gwelet en deus en noz tremenet skeud Jorj Kadoudal, ha Kadou-

dal hag a oa e jeneral a zo bet lakeat d'ar maro gant ar Re-C'hlas. Sonjit 'ta, aotrou, emezi, hor mestr astennet difinv war e wele, a zav eur wech an amzer hag en em ro da hopal gant nerz :

— War a-raok, paotred ! Daoust ha lezel a refomp anezan da verval ? Goude e kouez a-nevez war e c'holc'hed, beac'h warnan ha glep dour teil gant ar c'houzen.

— N'ouzoun ket petra fell d'eoc'h lavaret, eme-ve d'ezi.

— Ya, emezi, hor mestr eus Bodegat a yoa letanan gant Jorj Kadoudal epad emzav ar Vandée. Ker skoet eo bet p'an deus klevet kelou eus maro e vestr, ma larvar ar medesin eo deuet da veza gwrac'h.

— Neuze, a liviris, ho mestr a zo klanv ha gwrac'h war eun dro ?

— Ya sur, aotrou ; ar vestrez hag ar vugale n'ehanont da ouela endro d'e wele.

— Perak ne c'halvit ket an aotrou Person ?

— An aotrou Person ? Emeder oc'h enterri anezan hirio.

— Mat, neuze easoc'h ze n'eo ken d'eoc'h... Eun toulлад beleien a vezoz aze, ha n'ho pezo nemet dibab !

— Ya, brao eo d'eoc'h lavaret ! Ar mestr n'en doa fizians e den nemet er person maro ; o daou oa bet digouezet d'ezo beza er memez amzer wardro Jorj Kadoudal.

— Ha n'hellfoc'h-hu ket roi d'in eun tammig sklerijen diwarbenn ar weledigez he deus skoet kement ho mestr ?

— Sklerijen ! emezi, an disterra paotr-saout a c'helpo roi d'eoc'h sklerijen war an dra-ze !

— Ganeoc'h eo e c'houlennan, eme-ve d'ezi gant douster.

— Eün tammig e vezoz hir, emezi ; hogen, mont a

ran da esa kountanti ac'hanoc'h. Ne glevan mui trouz
ebet e kambr ar mestr : kousket eo, marvat.

Hag hi diazeza, hag e kasas he dourn d'he zal evel
evit freskâl he memor, hag e lavaras :

— Setu aze, aotrou ! Deac'h da noz, da boent koan,
ar mestr a zistroe eus ar chase, tapet eur bern brao a
draou gantan. Mont a reas oc'h taol ; tenval oa e benn
eun tammig, ha setu ar wreg da c'houlen outan petra
a yoa oc'h ober diez d'ezan.

— Set' aze, Annaig, seblantout a rea d'in beza c'hoaz
o vrezelli el lanneier, hag e kleven Jorj o lavaret d'in :

— Ne welez te ket ar Re-Chlias e penn pella al lan-
neg, en tu-ma da Vodegat ?

Va spered a yoa skoet, rak gouzout a ran eo bet la-
zet ar paour kez Jorj dre urz Bonapart. Setu e keit ha
m'edo ar zonjou-ze em penn, eur c'had o tifourcha eur
pennadig diouzin. Tenna ris warnan, hag ez eas da
ruilha en eur voden vrug. Eur penn gad all bennak a
yoa kent em zach' ; ha setu pa 'z ean da gregi en hou-
ma. ha me gwelet d'ezi eur penn den. Spontet e oen, e
chellit kredi, ha me dont war va c'his, o lezel ja gad
eno. P'edon o tistrei da zont d'ar gér, pegen souezet e
oen-me o welet va c'hi Medok gant va gad etre e zent.
Mes n'he doa mui he fenn den avat ; henvel oa brema
ouz ar gedon all.

— Asa, paour kez Bernadig, eme ar wreg, atao eta
e chomo Jorj Kadoudal war da spered ; daoust ha ped
gwech n'en deus ket ar medisin lavaret d'it ne dleez
ket chom da zonjal en traou-ze ?

Ar mestr na lavaras grik d'ar gouleñnou-ze. Alkodi
a reas diou c'hlin e zivreac'h war an daol hag e kuzas
e benn en e zaouarn.

— Bernadig, eme ar wreg ankeniet, ev da jistr, ha
kas ar zonjou-ze diwar da dro.

Mes Bernadig a jomas dilavar.

— Gwrac'h eo, a liviris ennon va-unan, hag ar mvelien-all a lavaras eveldon.

Dont a reas ar mare da vont da gousket. Ar vestrez a gasas he goaz d'e gambr. Horjella rea war e dreid. E kreiz an noz e oemp dihunet holl gant eur youc'haden skiltrus.

— Sikour ! Sikour ! a hope ar vestrez ; Bernadig en deus kavet e zabren, hag a lavar bep seurt traou n'o deus na penn na lost.

Mont a rejomp prim evel eun tenn : an ozac'h a yoa en e roched e kreiz ar gambr, eur zabren gantan en e zourn ; hag e save anezi en eur lavaret da bep mare : Me zo ama, Jorj ; war va e'horf ez aint a-raok tizout betek ennout.

— Hag abaoe, eme ar plac'h gant tristidez, ar mestr a zo ken dinerzet m'emaomp dalc'hmat war c'hed d'her gwelet o tremen.

P'eo gwir n'hellen ober vad ebet d'an dud kez-se me a zastumas va fakadou da vont adarre gant va hent. Karga ris ar plac'h da gas va gourc'hemennou d'ar vestrez, hag en hent warzu Karnak, o sonjal e pe stad vantrus e c'hell koueza spered an den pa vez re skoet gant eun darvoud bennak.

Lavaret ne gavjen ket war va hent digemer mat ha kalon digor hep avat an ardou nevez deuet gant an a-raokaat a vije tamall e gaou ar vro Vreton. Ne ziskennen ket, gwir eo, e tiez ar vicherourien a renk izel, daoust ma vije servichet d'in eno ive ar pez a yoa a wella en ti, en eur baea brao evelato. Rak, e Breiz, evel el leac'h-all, ne roer ket evit netra d'ar c'henta deuet ar pez en deus koustet ken ker. Eun droiad hepken ec'h en em gavis nec'het : eun abardaez, goude beza grét kalz hent, edon e kreiz eul lanneg, ha war va meno, pell a-walch'h eus ti ebet. Kustumet oan da vale, ha dreze n'oan mui ker kizidik oc'h ar skuisder. Mes, avat red eo d'in hen anzav, n'edon ket em flijadur o sonjal e vi-

che red d'in marteze tremen an noz e kambr ar stered, o kaout evit gwele eun dournad raden hag evit toen eur volz leun a goummoul du ha na lavarent tra vat ebet d'in. Endra ma rean evel-se sellou nec'het endro d'in setu me ha gwelet e penn-all aI lanneg eun neuden voged o sevel en ear. El leac'h ma 'z eus moged ez eustan, hag el leac'h ma 'z eus tan ez eus tud, hag an dud-se o deus eun doen evit o goudori pa deu ar glao. Setu me eta o kerzet etresek an dachen el leac'h ma 'z oa moged ; pegen souezet e oen o welet ne gaven na ti na toen ebet eno, ha me kredi oan faziet. Ar moged koulskoude a zave, a zave atao ; hep mar, tud a ranke beza eno. Chaseourien marteze chomet da droidella, eme-ve, pe glaouerien marteze ive ; ha koulskoude, petra vije deuet glaouerien da ober dre ama, pa n'eus gwezen ebet nag ama na tro-war-dro ! Mont a rean atao, savet bec'h varnon, pa weljon eun toullad goazed, merc'hed ha bugale oc'h ober kelc'h endro d'eun tantad tan raden ha brug. Daou bez ki a deuas da ambrougi ac'hanon, hag e reant eur safar, eun torpenn ; mont a ris evelats, oc'h o lakât da vont diwar va hent gant va fenn-baz. Ar goazed am oa gwelet endro d'an tan a zavas en o zav. Che ! pe seurt doareou tud ! goazed goleet a druillhou, gwragez gwisket evel n'hellié ket ar spered ijinusa ober anezo. Sevel a rejont holl da ober digemer d'in. Ar chas a harze, an dud a dave. Me a yea daveto nec'het evel ma c'hellit kredi ! n'oan ket bet Morse en eur seurt kompagninez. Eur goaz eun tamm war an oad a deuas daveton.

— Petra glaskit ? emezan dichek, ha piou oc'h ?

— Eur beacher divezat, eme-ve d'ezan ; dianket e rankan beza e gwenojennou aI lanneg. Tenval eo an noz, ha karout a rafen kaout eul lojeiz da ziskuiza.

— Ma n'eo ken, emezan d'in adarre ; it en delten vihan-ma ; aze e kavot eur gwele brug soupl a-walch'.

E lagad du a zispennas ac'hanon eus an traon d'an

neach'h, hag evit doare, ar gwel ac'hanon na zisplijas ket re d'ezan. Setu perak e lavaras d'in kerkent gant madelez :

— Ma n'hoc'h eus netra ganeoc'h da zibri, deuit da goania ganeomp.

Grêt em boa va c'hont d'en em gaout abenn an noz en eur geriadenn el leac'h ma kavchen peadra, ha setu perak n'em boa tamm ganen da zibri. Pedi ac'hanon da goania a yoa ober plijadur d'in. Gant skourrou brug o doa grêt eur voger dioc'h kostez ar c'huz-heol ; diou pe deir delten vihan a-veach'h m'o doa daou droatad a-zic'h an douar a yoa goudoret gant ar c'hleuz dic'hizze. Eur podad souben a yoa o vervi goustadik war ar glaou : gwragez ha bugale a veze dalc'hamat o teuler brug seac'h warno. Edon e-touez ar rum dud-se, mez o gwelet a ya hag a deu dre ar bed hep beza eus nep leac'h, chomet a-zav eur pennadig. Lakât a ris da zisken penn an traon va forpan evit kuzat an diou biston hag ar goutellazen a yoa ganen em gouriz. N'eo ket m'am bije re a aon, gouzout a rean ez a hag e teu « Pao-tred ar C'homedi » dre Vreiz-Izel, hep ober ken brezel nemet d'ar yer. Hogen, sonjal a rean e komzou ar fablennor bras La Fontaine : « Beza diou-wech asur, nemet gwelloc'h n'eo ken, hag ar re, e kement-se, na oe morse kollet. »

Evidon da veza en em gavet evel eul laer en o zouez ar rederen bro n'o doa ket doare da veza diesoc'h : merc'hed goloet a druilhou, bugale kouls lavaret en noaz, a yea hag a deue endro d'in, oc'n eva dre o fri ar c'houez vat a zave eus ar pod-houarn.

— Lez da gas, emon-me, mar gellan en em denna kempen ac'halen, m'em bezotraou da gonta divezatoc'h ! Setu savet ar pod-houarn diwar an tan : an dud a zo tro-war-dro o c'chedal ar c'hinaouad. N'ez eus nag asiet na forc'hetez, netra nemet koutilli hir gant eur beg moan. Ar c'hsa en doa kemeret eur forc'hetez henvel

ouz eur forc'hig vihan, hag e tennas an tammou eus ar zouben evit o ranna goude etre an holl gant lealded. Tammou petra oa an dra-ze ? Tammou gedon, yer pe zenvet ?

— Double ! eme-ve, mar o deus ar re-ma friko evel-se bemdez, n'o deus ket da glemm ! Mes e peleac'h 'ta ema ar para hag ar c'hrampoez ? N'em boa ket echu va c'haoz ganen va-unan pa deuas diou wreg gant eur baner leun a grampoez hag a vara du.

— Mat eo ! eme-ve adarre d'in va-unan, gant an draze e ranker kaout eun dra bennak da eva. A-boan ez oa deut ar zonj se em spered ma welis daou baotr krenv o tigas eur varrikennig hag oc'h he lakât da c'hourvez e-kreiz ar vodadeg. Leun oa a jistr, nan a n'eus fors pe seurt jistr, mes eur jistr eus ar gwella. Pep hini neuze a dennas eur weren eus e c'holo hag e oe karget d'ezan a jistr. Me n'oan ket ankounac'heat. Roet e oe d'in eur grampoezen deo o c'holo eun hanter yar, hag o veza n'em oa plad ebet, ar mestr pe da vihana an hini a gemeren evit beza ar mestr a roas d'in e hini.

Va daoulagad a yea hag a deue war an dud-se ; c'hoaz eur wech sabatuet (saouzanet) oan oc'h en em welet en eur seurt kompagninez : petra int ? petra reont ? daoust hag o veva emaint diwar goust an holl hep ma rafent netra o-unan ? Ne zalejon ket da c'houzout ; an dud-se a yea hag a deue dre ar measiou, lod o krafa ar podezou, podou-pri faoutet pe dorret zoken, lod-all o steana listri ar gegin ; re-all o louzaoui al loened klanv, hag ar merc'hed a lavare o "bonne aventure", o flanededen d'ar goueriaded kredik, a denne ar "c'hartou". Gwelet a ris dioc'htu gant pe seurt tud em oa da ober, ha me kerkent da studia o doareou. Ar goazed a yoa etre daou, na bras na bihan, liou brun d'ezo, gant eun dremm a-feson a-walc'h ; o bleo du a goueze war o diskaoaz. Lenn a reat al louarn, ar finesa en o daoulagad du eun tammig bras a vent. Bleo du ar mer-

c'het a goueze evel lost an "hoc'h" war o c'hein ; o daoulagad ledan a yoa a-resed ar penn hag a verve en eun doare souezus. Daouarn ha treid bihan d'ezo, dremp ar gwragez n'oa ket divalo, nemet o zell nec'het ha gouez a rea d'in sonjal e loened ar c'hoajou. N'em boe ket da glemin en o c'hompanagnenez, ha kousket a ris dindan o zelten leun a doullou.

Peurvuia pa vezet skuis e kousker c'houek ; setu perak, a-veach' kouezet war va zorchen brug ec'h en rois da gousket kalet. N'ouzon ket pe ez eas va zud da gousket ken abret ha me pe mont a rejont da ober eun dro dre ar c'heariou tosta, ar pez a ouzoun eo e oen da genta savet dioc'h ar mintin. Mont a ris goustat da zigeri eun tamm va zelten, hag e welis va zud astennet war an douar, hep urz ebet, evel loened en eur park, kousket kalet holl.

Ar re-ma, evit doare emon-me, n'o deus ket an dis-terra anaoudegez eus ar pez a hanver, eur gwele mat ! Ha me da furchal va godellou ha va zier, ne vanke ne-tra enno. Alo ! emon-me adarre, gwelet a ran e talv an dud-ma muioc'h eget o brud ! An hini koz, mestr ar geriadren, kredabl, a zavas da genta. Dioc'htu ec'h em lakeas da lammet ar gliz a yoa war e vleo hag e varo, hag o welet ez oan dihun e teuas davedon, hag e c'hou-lennas diganen hag hen em boa kousket mat. Va res-pont a reas plijadur d'ezan evit doare.

— Ni a zo o vont pelloc'h, emezan ; ha c'houi, pe-hent a gemerit-hu, pe kentoc'h, da beleac'h ez it-hu ?

Goude beza sellet ouz va faperou e tiskouezis d'ezan war va c'harten eur geriadren ha na dlie ket beza pell ac'hano.

— Mat, emezan, hogen, meur a leoiad lann a zo-ac'han di, ha gallout a rafec'h c'hoaz en em goll meur a wech ; mont a ran da roi d'eoc'h eur storier.

E keit-se, ar re-all a yoa dihunet ive, hag a deue en dro d'eomp.

— Ne fell ket d'in ho kuitât hep ho trugarekât evit an digemer kalonek hoc'h eus roet d'in. Hag e lakis eur pez aour a zek lur, en e zourn. Gwelloc'h avat em bije grêt o chom hep hen ober, evel e vezò gwelet pelloc'h. An dud-ma n'edont ket war c'hed eus an dra-ze ; dioc'h va dilhad komun o doa barnet n'oan ket pinvidik : ar gwel eus ar bern gwenneien-ze a lakaas an tan en o daoulagad hag en o c'halonou. Dek lur evit eur goan hag eur c'holched da dremenn an noz, traou ha n'o doa koustet t:mm poan ebet d'ezo ! Setu peadra da roi d'ezo da gredi ez oan eun Aotrou bras ha pinvidik hag e vije eas ober va stal d'in en eul leac'h ken distro. Mont a ris en hent gant va hencher, eur c'hennard a zaouzek pe bevarzek vloaz, hogen, n'oan ket re ampart : ar zellou a-dreuz a reat ouzin, ar c'homizou izel a zrailhed en dro d'in, n'oant ket peadra d'am lakât em eaz. Gouzout mat a rean ne ra ar galouperien droug ebet d'an diavezidi keit ha m'emaint ganto el leac'h int chomet a-zav, goude avat...

Pa oen eat eur pennad eus al leac'h em oa tremenel an noz e kasis va dourn d'am gouriz da c'houzout hag hen edo edo ato va fistolennou ha va c'chontel : va fenn-baz oc'h ezom a c'hellje hen ive roi harp d'in. Va bleiner a yea dirazon, ha bep eun amzer e rea sellou is-kiz en dro d'ezan. Kas a reas ac'hanon warzu eur zao-nen, el leac'h ez oa kalz drez hag eur wezen gisten ben-rajen d'e heul ? Lavaret a ris d'ezan n'ez a ket peurvua an henchou bras dre ar zaonennou. Ober a eure war-non eur zell fall hag e lavaras hepken :

— An hent berra eo !

Kredabl e vijen eat d'e heul, panefe ma welis, o sel-let a gleiz, tri goaz a deue warzu ennomp oc'h ober eun tamm tro. Lavaret a ris eta d'am faotr krak ha berr e feiz n'ez ajen ket d'e heul.

— Mat, emezan gant keuz, it eta hoc'h unan, p'eo

gwir ec'h anavezit an henchou gwelloc'h egedon. Ha kerkent e tennas eur c'houitel (suterez) eus e c'hodel hag e sutas gantan meur a wech, mes en eun doare dishenvel bep tro. Taoliou sut a glevis kerkent ive eus tu an tri ganfard-all. Edou tapet en eul las ; asten a ris va dourn evit kregi em faotr, hogen, tec'het a reas ker prim hag eur gaerel a dreuz al lann o c'houitellat bepred.

Ne lavarin ket d'eo c'h ez oun eun den dispont e pep-darvoud : anzav a ran e savas c'houenn em lerou ha me skarra ac'hano an dilloa ma c'hellis ; ha n'ez ean ket, e c'hellit kredi, dioc'h an tu em oa gwelet ar bôtred.

Prestik goude e kavis eun hent-kar ha me eürus ke-nan, rak, a zonjen, p'eo gwir eo darempredet al leac'h, an dud n'emaint ket pell ; hag e gwirionez, ne zalejon ket d'en em gaout gant daou gouer a yo a kas o zaout d'eun tu bennak. Hame d'o c'haout ha da gozeal outo e galleg. Hogen, va zud n'ouient ket ar galleg, ha me da vont d'ezo e brezoneg. Lavaret a ris da beleac'h edon o-vont.

Dizale e welis sklearoc'h c'hoaz dre be seurt riskl oan tremenet ha pegen mat oa bet d'in kaout an daou c'hoaz-ma war an hent. An tri den a yo a klask va c'holl a zifourchas prestik dreist ar c'harz. Hogen, o welet edon gant kompagnunez e chomchont a-zav. Neuze ec'h em rois da gonta d'am c'hamaraded nevez petra yo a c'hoarvezet ganen.

— A ! eme unan eus an daou goueriad, klaoustre eo al lamponidi-ze eo a zo o peilha yer ha legumach dre ar c'charter.

Goude e kontas e-unan d'in penaos oa bet rastellet ar gludou hag al liorzou, nan en noz diveza avat mes en hini a-raok.

— E feiz, eme-ve d'in va unan, debret em eus evel-se 'ta eus yer an dud vat-ma, rak gwall leun oa pod-houarn an dud-se hag a zeblante kaout ken nebeut a-

dra war o hano. Oe'h ober hent evel-se, an daou armeziad a zisplegas d'in eur maread laeronsiou, hag e seblantent beza lakeat doun en o fenn mont gant o amezeien da ober an hu warno dre ar c'charter.

Gwelet a ris hepdale nadoz eun tour dreist ar gwez, ha prestik goude toenou glas a lavare d'in ez oa eno eur vourc'haden bras awalc'h. Ar pez a zo muia iskiz eo ne gavis eno hostaleri ebet da zigemeret ar veajourien ; d'ar pardoniu hepken e teue di bourc'hisien da werza peadra da zibri ha da eva, dindan telennou. Pe i ne felle ket d'ezo digemeret ac'hanon en o zi, pe marteze ive abalamour m'oa gwir, va amezeien a lavaras d'in o doa da vont larkoch'. Hag e rojont ali d'in da vont da c'houlen digor d'ar presbital digant eur person meurbed madelezus bag em bije eno eun digemera-zoare. Mont a ris, ha keuz n'em boe ket.

— Aotrou Person, emon-me d'ezan, me a zo eur reder-bro o klast marvailhou koz Breiz-Izel evit o skriva hag o miret evel-se da vont tre da doull du an ankouac'h.

An aotrou Person n'en doa ket c'hoaz sellet ouzin, p'am oe echu avat e troas warzu ennon hag e welis warnan eun dreumm madelezus.

— N'o'h eus ket kavet lojeiz er vourc'h, emezan, hag ez oc'h deuet d'am zi ; mat hoc'h eus grêt, mat sur hogen, araok ober anaoudegez ganeoc'h, me ho ped da azeza ouz va zaol ; goude e komzimp. N'eus ket a friko ama, hogen, a galon vat eo !

Nan, n'oa ket a friko : viou fresk, amann ha jistr, n'oa ken. An aotrou Person a zelle ouzin, me avat a zelle kement-all outan. Ne oen ket pell evit santout e karien anezan eun tamm bennak.

— Aotreit d'in, mar plij, kemeret an hardiziegez da c'houlen diganeoc'h pe seurt marvailhou hoc'h eus penaouet betek hen.

— Gant plijadur, aotrou Person, eme-ve. N'hoc'h eus

ket klevet hano marteze eus va dastumadennou Marvailhou ?

— Nan, a respondas an aotrou Person, m'am bije anavezet ac'hanoc'h kentoc'h em bije gellet marteze kinnig d'eoc'h va drammou nevez.

— Roit anezo, aotrou Person ; a greiz kalon ho trugarekaan en araok, eme-ve d'ezan.

Ar pez am eus kontet em Rimadellou diwar-benn Lan ar Meur a zo bet kontet d'in e ti Judikaël.

— Judikaël ! eme an aotrou Person ; an dud-se a zo kerent d'in eun tamm bennak. Ha n'anavezit-hu ket ive an tad-koz Tanhouarn ?

— O anaout a ran holl, aotrou Person. Bet em eus arblijadur da dremen dre di Joë-Judikaël ha komzet em eus zoken gant ho tad-koz.

— A ! eme an aotrou Person d'in adarre, n'oc'h mui eun diaiveziad evidon, eur mignon eo ez oc'h. Eun nebeut deiziou a zo eo bet ouz va gwelet. Goan eo ato, yac'h pesk, hag ever dour.

— Mar ho pefe eun dra bennak da eüna em Marvailhou, aotrou Perzon...

— Kalz gwelloc'h em eus, emezan ; klasket em eus e-touez traou kosa Breiz-Izel baour, hag ez oun bet evurusc'h eget ar re n'o deus kavet ken da gonta nemet an tabudou etre Bleaz ha Monfort. Eat oun larkoc'h, a lavaran d'eoc'h e istor hor bro.

Daoust ha gouzouf a rit, emezan d'in c'hoaz, o doa lezet an drouized en Arvor eun had hag a c'helle lakât karet hon relijon zantel ; prezeg a reant eo divarvel an ene, ez eus goude ar maro eun digoll evit ar re a vale eün er bed-ma hag eul, leac'h a gastiz evit ar re a ra an droug, hag ar pez ho pezo poan o kredi marteze, troet o doa ar vro-ma da zigemeret sklerder an Aviel. Lavaret d'eoc'h e kave mat ar gristenien genta sakrifisou an drouized a vije mont eneb ar wirionez : setu perak e oe grêt brezel d'an drouized, kaset e oent d'an harlu ha

meurbed gwall gaset ; mes hadet o doa eun darn eus kredennou ar feiz kristen.

Er seizved hag en eizved kantved, e oe kredet oa maro an drouized, hogen, n'o doa grêt nemet troka o dilhad, ha tud ar vro-ma dizesk ha difoutre na weljont ket larkoc'h. An drouized o doa chenchet hano, ha netra ken. Hor pardoniou a zo bet savet gant unan eus an ebettel kenta a brezegas ar feiz en Arvor, evit teuler d'an traon an asambleou a veze betek neuze er c'hoajou



doun ha lakât en o leac'h eur relijon a garantez.

Pell, pell bras omp bet, emezan, o kredi diskiantere-zou diwar-benn Merlin, mestr an drouized. Klasket em eus en holl levriou am eus gellet kaout hag hen ez eus bet Morse eun drouiz hanvet Merlin, karet, doujet hag enoret evel eun den meurbed tost da Zoue. Anzav a rankan e kredan, abalamour m'am eus gwelet, e kredan start ez oa Merlin, an drouiz Merlin, nan eur zorser, mes eun abostol eus ar relijon gristen, marvet na oar

den na peleac'h na penaos, eun tamm bennak a-raok donedigez Sant Erwan en Arvor.

Mont a ran da ziskouez d'eo'c'h eur pennad-skrid el leac'h em eus skrivet va zonjezonou hag ar pez am eus gellet kaout war an amzer goz. Ha da c'chedal, emezan, c'houi a raiio d'in ar blijadur da jom ama meur a zervez ganen, hag e c'hellimp komz en hon eaz.

Derveziou eur person dre ama a zo gwall henvel an eil ouz egile, inouus eo beva e-unan en eur presbital. Mont er meaz ? Da brezeg ? An dud dre ama a zo leun a feiz hag a relijon. Da roi sklerijen diwar-benn gwel-lât labourou an douar ? Re start e talc'hont d'o c'hiou, ar pez a zo bet grêt a vezô grêt hep chenchamant ebet. Lavaret a raint d'eo'c'h gant nerz : Ni a ra ar pez a rea hon tadou. Gwelet hoc'h eus, aotrou, p'eo gwir e veachit dre Vreiz-Izel, e c'hellfe roi dek gwech muioch'. Gwir eq hon deus aezen ar mor a sko war hor parkeier hag a rost an trevachou. Ha perak e rost kement an avel-mor ma n'eo ket abalamour n'eus netra da harz anezan. Prenet em eus lanneier tostik-tost d'ar mor ; grêt em eus lammet al lann ha lakât gwez pin en o leac'h hag a-benn brema eo kalz goudoreethorbourkig. Re-all o deus mennoz da ober eveldon. Ra blijo gant Doue e teufent niverus !

Setu aze eur person speredet hag a ouie soursial eus buez e barrezioniz !

Ne skuizen ket o komz gantan ; seulvui ez ean d'e zelaou, seulvui e plije d'in.

Goude koan e tigasis da zonj d'ezan eus ar bromesa en doa grêt d'in diwar-benn an drouized. Sevel a reas dioc'h taol hag ez eas d'eur gamprig el leac'h ma 'c'h en em denne da studia. Dizrei a reas hepdale gant eur paper koz skritur dourn warnan, mez ken koz, ma 'z oa debret gant ar prenved.

— Setu aze, emezan, va respont : gouzout a ran breszoneg va bro, hogen, kaer am eus bet, n'oun ket deuet

c'hoaz a-benn da entent mat a-walch' kement a zo el levr-se. Eun dra hepken a rai plijadur d'eoc'h : ar skeudennou grêt gant an dourn.

Leda reas neuze eur fallen baper melen war an daol. War ar paper-ze e tiskouezed meur a dra eus buhez ar Varzed ; ar skeudennou n'oant ket eus ar c'haera, hogen, dreizo e komprenen meur a dra hag a yoa chomet tenval em spered. En daolen genta ez oa eur maread goazed destumet en eur c'hoat, gwisket gant dilhad dic'hiz. Meur a seurt rummou tud a yoa eno ; en eun tu e weled eun drouiz o kelen an dud, dioc'h e wiskamant oa eas e anaout ; ar zelaouerien a yoa odaoulagad troet holl warzu ennan. Eur gentel eo a roe an drouiz d'ar C'heltek, hon tadou (gouzout a reer n'oa ket kustum an Drouized da skriva o c'helennadurez ; red oa eta d'an dud miret o c'helennadurez dindan envor). E kichen ez oa eur maread diskibled. Nec'het e vichen bet m'am bije ranket lavaret petra reant. An Ao. Person a zisplegas d'in :

— Aze ema ar gelennadurez war al lezen ; setu perak n'int ket gwisket henvel. N'eus skrivet netra : d'ar spered eo miret ar gelennadurez. Nebeut goude e lavaras adarre :

— En taolennou-all am eus da lakât dirak ho taoulagad, ne welot koulz lavaret netra : bokedou huelvar ha netra ken.

— Hag ar c'helc'h-ma. emon-me, petra eo ? Gwelet a ran ennan tud, telennou a deir gorden en o daouarn.

— Ar re-ze a zo barzed, emezan ; deski a reont ar muzik hag ar c'han d'o diskibled, hag e welit telennou ganto holl.

Dremm ar mestr keleñner a zeblante d'in beza grêt gwelloc'hik eget ar re-all ; lenn a read evel pa lavarfent ar wiziegezen e zaoulagad. Chom a ris pelloc'h da zellez ouz hema eget ouz ar re-all. An Aotrou Person a lavaras :

— Deomp d'ar bedervet eneben. N'em eus gallet dont a-benn da c'houzout petra lavar, nemet lakât eo an dud-se Bourrevien an Drouized (1) Sellit ouz an divrec'h noaz-se, kountellazennou bras en o daouarn, an daoulagad lugernus-se hag o deus doare da veza ker gouez ha ker kris. Ne gredfen ket diskleria d'eoc'h an daolenez, kaer am eus bet klask, n'em eus kavet netra wament-se.

C'hoaz eur wech, ar skeudennou ze a yoa koz bras, ha n'oant ket koant, pell ac'hano : n'oa ket enno neleur a ouziegez, hogen, ar pez a ziskouezent a yoa hervez ar wirionez. An dervennou a yoa deuet brao a-walc'h, an disheol avat n'oa ket kaer.

Ar skeudennou ze o doa skoet va c'halon, daoust peger fall bennak oant grêt ; koz, koz bras e tlient beza ar paper a zeblante d'in beza henvel ouz paper-kroc'hen an Egypt digaset da vro ar C'helteg gant ar « Phenisia-ned. »

An nep en deus traou ker koz-se dirak e zaoulagad n'hell ket miret da ober sonjezonou.

— Setu, emon-me d'in va-unan, taolennou hag a gomz d'in eus eun amzer hag a zo koulz lavaret ankounac'heat. Mes, petra oe an amzer-ze ? Piou hen lavaro d'in ?

— Emaoc'h oc'h huvreal, a lavaras d'in an aotrou Jegu. Me va-unan em eus grêt kalz huvreou o sellet ouz ar skeudennou-ze. Sonjet em eus alies : Penaos e c'hellfemp-ni gouzout eun dra bennak eus eur mare ha ne skrived netra ? Pe seurt oad e c'hellfed roi d'an taolennou-ze ? N'ellont beza bet grêt nemet er seizvet pe en eizvet kanved, pa oa gwali-gaset ar muia an drouized. Ouspenn a zo, emezan d'in, eun daolen ziveza am eus

(1) Gouzout a reer hizio ez oa karget an Drouized da varn ha da gastiza an dorfetourien. Kredi a reer ne lakaent ket o-unan d'ar maro ; mes bez o doa Bourrevien karget da ober al labour-ze.

da lakât dindan ho taoulagad. Houma marteze a roio d'eo'ch eun tammig muioc'h a sklerijen war doare beva an drouized.

Leda reas eur paper ledan war an daol, hag e welis traou souezus. En eur c'horn eus an daolen drouized a yoa war skourrou eun derven vras, eur falz aour en o dourn o trouch'a an uhelvar. Dindan ar wezen ez oa pôtred yaouank, bleo hir d'ezo, o tigemeret ar blanten zakr ; en tu-all, merc'hed yaouank ive gwisket e gwenn eur ouel fin war o zal a zigemere digant ar bôtred an uhelvar kempennet a bep loustoni.

— An dra-ma, kredabl, emezan, eo lid an Eginane. Mes, emezan d'in o kas e zourn d'eur c'horn-all, setu ama hag a roio d'eo'ch eur tanva eus buhez an drouiz en e di. An ti a zo huel ha ledan goudoret gant skourrou teo an dero. Grâgez eas da anaout gant o goueliou hir ha gwenn a ra al labour en diabarz. An toullad bugale-ma o deus doare da veza sioul, savet mat int. Ar gegin a zo ledan ; podou-houarn ledan a zo krouget uz d'an tan, setu eur daol penn-da-benn ar gegin. Gwelit an den-ze, baro hir d'ezan, gwisket evel eur beleg, savet eo war eur skaon uhel ; lavaret a rafed e fell d'ezan gwelet kement a drezen dre an ti. Daoust peger fall bennak eo an daolen, ar penn den-ze a zoug d'an doujans ha marteze zoken d'an aon. Grit eur zell war ar c'horn-all eus an daolen. Ama ez eus eur vodadeg goazed. An hini a zo e kreiz a rank beza eur prezeger : taolet en deus eur skour huelvar koulz lavaret dindan e dreid. An disprij-se evit ar louzaouen zakr a zo eur fae lavaret a rafed emaint o tiskleria brezel. Ha gwelet a rit-hu an divrec'h-se astennet d'he dastum hag (ar bouc'hili-ze hag a zo e kouevr, hervez al liou a zo roet d'ezo ama. Brezel a vezò hep mar. E kichen, sellit brema ouz Br goazed-se start o gouriz endro d'ezo, trouset o brageier gant lasou krec'hen ? Ar re-ma, kredabl, a zo rederien karget da gas kelou ar peoc'h pe ar brezel. Ouz

per bouched

ar c'hosteziou, ha ne welit-hu ket ar bouo'bili-ze ken neat, ken lugernus, ar gwaregeier-ze a ispilh e kichen sier leun a virou ; kompreñ a rit eveldon ema an dud-se o vont d'eun hevelep leac'h.

Gant e viz, an aotrou Person a ziskouez d'in eur wreg, eun toullad bugale endro d'ezzi ; astenn a rea he daouarn evel evit o difenn. Marteze e fazian ; mes me gred beza desket hirroc'h gant an taolennou-ma eget gant kement am eus lennet el levriou.

EIL PENNAD

An aotrou Person a reas d'in sellet piz ouz ar skeudennou-ze hag o displegas d'in gwella ma c'hellas.

— Setu aze hag a zo mat, eme-ve d'ezan, hogen, kement-ma na zesk netra d'in evit ar pez a zell ouz Marvailhou an amzer goz.

— Nan, emezan, eur faout a zo ha n'oun ket evit dont a-benn d'her stanka : mar fell d'eoc'h kaout Marvailhou, e vez red d'eomp mont da amzeriou kenta ar gristeniaj.

— O klask Marvailhou emaon, ha ne ran forz eus o oad. Livirit d'in ho re.

— Bez' ez oa, emezan, d'ar poent ma 'z oa eun duk e Breiz, ha ma 'z oa Breiz distag dioc'h Bro-C'hall, eun tiegeziad tud-jentil ; an istor ne goms ket anezo : tiegez Laënnec oa. An tad en doa kalz tud en e di, holl Arvoriz penn, kil ha troad. Eur brezel a zavas etre tuchentilou amezeien, hag o veza ne felle ket d'ezo lakât o fri en tabud, ar Vretoned-ma a c'halvas o amezeien d'en

em voda hag e rojont da glevet d'ezo n'o doa ken nebeut nag i netra da welet er brezel-ze. Kement-se a yoarei tro d'an duchentilou e karg d'en em glevet. Familh Laënnec a oe grêt an hu warni ha barnet da jom hep darempred ebet mui hiviziken gant an duchentilou-all. N'he divije harp digant den. Ar penn-tiegez a yoar eunden a galon ; boda reas e gerent hag e vignoned, ha setu ma 'z oant eun toulladig brao a dud evit stourm. An aotrouien a yoar trouz etrezo a reas ar peoc'h hag a deuas da vresa maner Plouedig, lec'h krenv ar stourmerien. Goazed, grwagez ha bugale a oe lazet, ne oe espernet den ; an douar a dœus da veza dilezet, den da labourat. Hag e kave d'ezo beza kaset an enebiez da netra, hogen lavaret a reer o doe da ober neuze gant ar revaro. Maner Plouedig a yoar bet lakeat etre daouarn soudarded an duchentiled o doa gounezet. Hogen, kement a drouz a rea ar sperejou dre eno epad an noz mateuas an dud-ma da lavaret grons ne felle mui d'ezo chom pelloc'h eno. Kaset e oe re-all, hag ar re-ma a lavaras ar memes tra. Klevet a reant, emint-i, e kreiz an noz, youchadennou ha klemmou mantrus an emgannou, ha n'hellent kousket berad.

Kaset e oe eur strollad-all. N'en em gavjont ket eas'h ; ma lavarjont d'o zro n'helled ket chom eno. En dourellou, war ar mogeriou, e sal an armou, e kleved en noz youchadennou ha trouz klezeier oc'h en em stoki. Aotrou Vaucourt, perc'hen ar maner, a gasas d'i soudarded eus a bep leac'h, rederien-bro, laeron, muntrerien. An dervez m'eu em gavjont a dremenas o fibri, oc'h eva, o farsal. Mes avat pa deuas an noz e oe eun abaden-all. Grêt o doa gwap eus ar sperejou ; ar sperejou avat o doe o zro. N'helljont kousket berad : an trouz spontus oe gwasoc'h eget diagent. Mestr ar vanden zoudarded a reas ober enklaskou pis dre ar maner hogen, kaer a oe, netra na oe kavet. An nozveziou warlerc'h e kreskas c'hoaz an trouz, hag ar zoudarded dis-


pount koulskoude pa oant deuet di da lavaret, e feiz, e lamjent dreist ar mogeriou ma na gared o c'has dillo d'eur ger-all.

O klevet kement-se, aotrou Vaucourt a gasas eur c'habiten « laëron war an henchou bras » gant eun toul-lad tud eus an hevelep goubari. An dud-se, holl dizoue, dispost peurvua, a reas eta d'ar maner. Eur pred eus ar c'haera a oe grêt evito, debri hag eva a rejont, betek re zoken, ha pa gavas d'ezo oant leun awalch'h ez ejont pep hini d'e c'hlud, o wapât, o farsal ar zoudarded aonik a yoa bet eno en o raok. N'ouzon, eme ar person, nemet ken ar pez a zo bet lavaret d'in. Mes, evit doare e tremenas traou ken estlammus er maner en nozvezze ma tisklerias ar re-ma ive antronoz vintin zoken ne c'hellent ket chom eno. Kaset e oe kannaded da rei kelou d'an aotrou Vaucourt eus ar pez o doa divizet. Ar re-ma a zistroas gant urz da jom er maner. Ret eo d'eomp mont a spered war an a-drenv betek an amzeriou-ze evit gwelet pegen nebeut a stad a reat neuze ouz urziou ar vistri. Ar zoudarded gant ar c'habiten en o fenn a yeas da jom en unan eus porsiou ar maner. Mes, tra estlammus, tud ha kezek a oe ken strilhet epad an noz, ma toujont holl war an heur ne jomjent ket eun derivez muioc'h er maner milliget.

O veza klevet ar pez a dremene, an Ao. Vaucourt a gemeras warnan mont e-unan war al lec'h ha da welet petra yoa e gwirionez oc'h enebi ouz e dud.

En em gaout a eure gant kant marc'heg, ha gant pep bini anezo eur skoueder : mont a reas e-unan er gambr vrasa, hag e lakeas goardou e pep korn evel ma tieje an enebour dont da daga ar maner. Peadra vije da zibri, er c'hoajou bras tro war dro ez oa moc'h gouez, gedon, ha loened-all eas da dapa, el lenn ez oa pesked.

Pep tra a yoa eta evit ar gwella, hag an Ao. Vaucourt a reas d'e zoudarded ker brao ha pa vijent bet tu-chentilou. Erru oa an noz tenval; arne bras a yoa.



Nadoziou an avel war beg an dourellou a yea hag a deue war o ael o wigourrat gant eun trouz iskiz. Ao. Vaucourt avat a yoa oc'h taol o frikota ha ne gleve netra.

Setu an noz tenval hag enkreuzus. Ao. Vaucourt a zav dioc'h taol ar banvez hag a c'houlen uhel evaj ar vro. Astenn a rea e weren d'eur mevel pa lavaras hema :

— Ar spont a zo kroget en ho tud, Aotrou, hag int eat da guzat dindan ar mogeriou. Ar glao hag ar c'ha-zarc'h a gouez evel steriou dic'hlaniet.

— Daoust hag ar glao hag ar c'ha-zarc'h n'int ket anavezet en hor Breiz-Izel ? a respontas Vaucourt. Daoust ha tud hag a zo bet didanno kel liez a wech a c'hell sponta razo hizio ? Alo, alo, il da lakât son d'ezo d'en em voda, ma welimp ped den dispont hon deus.

A-veac'h en doa lavaret ar c'homzou-ze ha setu diou luc'heden da zalla o skei stank an eil warlerc'h eben. Eun tarz kurun spontus a grozas kerkent hakement e lakeas an douar da vralla ma kouezas taoliou ha kadoriou ar zâl

a-verniou d'an douar gant kement a yo a warno. Ao. Vaucourt a deuas da veza drouk-livet evel ar maro ; hogen, dizale e savas war e zeuliou hag e c'halvas e dud. Holl oant direstet ac'hano, ha ne gavas nemetan e-unan e sal ar banvez. Vaucourt a yo a eun den dis-pont : e blijadur en doa kavet betek neuze er brezellou ; hogen, anzav a reas neuze evelato en doa da ober gant krenvoc'h egetan, hag ouz an nerz dispar-ze netra n'helle beza trec'h. Disken a eure er porz, el leac'h ma krede e kavche e dud boded. N'oa den ennan ; kaer en doa gervel, den na responte, hag e welas neuze n'en doa mui netra da ober. An amzer fall koulskoude na ehane ket : glao ha kazarc'h teo a ruilhe hag a ziruilhe diwar e armou. Edo eta e-unan, hep skoazel ebet.

Lakeat en eun hevelep stad, Ao. Vaucourt a gemeras e galon gant e zaou zourn, evel ma leverer e galleg, hag a yeas da ober eur bale dre an ti. Gwelet a reas holl gempreier ar maner : goullou oant holl.

— Petra eo kement-ma ? emezan ; va zud na zentont mui ouzin ? Hag e kemeras eur c'horn a-isplih ouz e c'houzoug, hag e c'halvas meur a wech. Respont na deuas : e-unan en eur maner dilezet. An hini a ro urziou a zo krenv, abalamour d'ar fizians en deus er re a zent outan ; hogen, p'en em gav e-unan, gant e dammig nerz hepken, neuze eo e wel pegen dister eo ha pegen nebeut e c'hell. En dizesper edo ez eas d'ar marchosi, eno e kavche kezeg e dud. Ya da ! eur marc'h a yo, e hini.

— Setu eta, emezan, ma 'z int eat holl en hent ; ar pez a ziskouez d'in o deus hen grêt a-zevri eo m'o deus kaset ganto o c'hezeg ha kement o doa. Ma vijent bet o klask gwerza ac'hanon, ne divijent ket tec'het, grêt o divije o zreitourach oc'h ober kelc'h endro d'in. Mes tec'het int ! A ! tud digalon ! Petra rin-me brema ?... Hag ez eas wardro e varc'h da ober e-unan labour e zaou varchosier. Pegen souezet e oe o welet al loen o krena

war e ziwesker ha pa glevas anezan o klemm truezus.

Ar c'haizarc'h a goueze gwasoch gwas, an avel a zourre ker krenv ma kredas edo touriou ha maner o vont da veza diskaret. Ne c'houie petra da ober, ha setu hen da c'hourvez e kichen e varc'h evit esa kousket. Klevet a rea an trouz spontus a yoa er-meaz ; hag hen da zonjal e kement en doa gwelet ha klevet en deiz trubuilhet-se. Ha ker strafilhet oa ma kredas e ranke beza an diaoul oc'h ober brezel d'ezan.

Hag e klaske eun doare bennak d'en em denna ac'ha-no. Ar marc'h avat n'helle ket finval, hag an avel a rea eun trouz da vouzara. Prestik goude e welas evel skle-rijen eur c'haouen dan o lugerni en eur c'horn eus ar marchosi. Ao. Vaucourt a zavas prim en e zav. Kement-se a lavare d'ezan ez oa unan bennak c'hoaz dre eno. Mont a reas warzu ar sklerijen, ha petra gavas ? Eun nor serret kloz. Dre an nor-ma, kredabl, ez eat e porz kreiz ar maner. Kaer en doa ne deuas ket a-benn d'he digerri ; dizrei a eure da gichen e varc'h, tristoc'h e zoare eget biskoaz. Al loen a skrije hag e vleo a yoa gleb dour gant ar c'houzezen. Ar paour kez baron a ven-holl diaoulou an ifern ; en e yaouankiz en doa klevet hano eus hevelep marvailhou. Pa vezet diskaret evel-se eo e troer ouz Doue da c'houlen sikour digantan.

Baron Vaucourt a bedas, hen ha n'anaveze evit mestr betek neuze nemet an nerz, hag en doa gwelet pep tra e plega dirazan.

Eun tamm sklerder bennak a deuas da zila er c'hraou ; ar glao hag ar c'haizarc'h a yoa ehanet da goueza, an avel a dave : eun tamm nerz nevez a deue adarre d'ar baron. Kas a reas e zourn war e loen astennet en e gi-chen : ne grene mui. Echu oa eta gant ar gwall-amzer. Sevel a eure hag e reas d'e varc'h sevel ive : mont a reas gantan er-meaz. Kredi a rea e kavche eno unan bennak euse zoudarded, mes n'oa den. Treuzi a reas

ar porz, mont a reas dreist ar pont da zevel. Pegen souezet e oe o welet a gleiz hag a zeou kezek stag ouz ar gwez ha soudarded astennet war an douar leiz. Mont a reas da unan evit e zihuna gant beg e gleze ; sevel a reas ar zoudard en eul lamm, e zaoulagad evel trellet. Ar spont he doa lezet he roudou war e zremm. N'hellas ket dioc'htu roi respont da c'houennou e vestr.

— Dihun da vignoned, a lavaras Ao. Vaucourt d'ezan, dastum anezo, rak me fell d'in gouzout perak o deus dizentet ouzin.

— Ao. Baron, a lavaras ar zoudard evel o tiabafi, va c'hamaraded ha me a zo bet red d'eomp mont er-meaz eus ar maner. A ! emezan o sevel e ziwrec'h d'an nec'h, ar brezellou komun n'int netra e skoaz ar pez hon deus gwelet.

— Dihun da gamaraded, a lavaras an Aotrou e koun-dar ; va zud-me n'eo ket gwrac'hed koz int...

Ne oe ket eas dihuna anezo ; kousket kalet oant. Pa oent en o zav, Ao. Vaucourt, sounn hag uhel war e varc'h a lavaras d'ezo dichek :

— Fiziet em oa ar maner ennoc'h, perak n'hoc'h ket chomet d'hen diouall ? Petra eo an nerz he deus grêt d'eoc'h dizenti ouzin, mont dreist va urziou ? Piou eo ar mestr en deus grêt d'eoc'h dont en tu-ma d'ar mogeriou-ze ? Goazed eo ez oc'h, c'houi hag ho peus manket d'ho tever ? Daoust ha servicherien feal hoc'h c'houi hag hag ho peus dilezet ho mestr, pa gave d'eoc'h ez oa riskl evit ho kroc'hen ? Respondit, respondit d'in 'fa, mevelien digalon ; n'em eus kavet hini ac'hanc'h wardro ar maner, perak oc'h tec'het holl ?

Ar zoudarded a blege o fenn gant ar vez, hag hini ebet anezo na grede respont d'ar mestr. Kement a zroug a yoa e Aotrou Vaucourt, ma kemeras e gleze da zanka e kalon an hini a yoa da dosta d'ezan ; bogen ar re-all

a dostaas kerkent da ober kele'h en dro d'an Aotrou, da zistrei ar c'bleze, ha da ziskouez d'ezan en doa da ziouall...

— Ao. Kont, eme unan, c'houi a ro urziou d'eomp abalamour m'emaoc'h uhelloc'h egetomp ; gwir hoc'h eus da roi urziou d'eomp ; sentet hon deus ouzoc'h betek-hen ; hogen, mar teu eur c'halloud-all uhelloc'h eget hoc'h hini da c'hourc'henn d'eomp, ni a zent outhi, evel hon deus sentet ouzoc'h.

— Petra fell d'eoc'h lavaret? eme kont Vaucourt, komzit freasoc'h. Petra eo ar c'halloud-all-ze uhelloc'h eget va hini a zo bet o roi urziou d'eoc'h?

An hevelep den a zavas da respont adarre :

— Pa roit urziou d'eomp, ni ho kwel hag a zent ouzoc'h war an heur ; hogen, eur c'halloud brasoc'h ha n'hellomp ket gwelet a c'hourc'henn ennomp hag a zoug ac'hanomp da zenti : n'oamp ket evit chomm hep senti.

Ar c'homzou-ma a skoaz kalon ar prins ; chom a reas eur pennadig da zonjal, hag e c'houennas outo petra o doa gwelet, petra o doa santet.

— N'hon deus klevet nemet an avel o yudal, eme adarre an hini en doa komzet betek neuze, ha n'hon deus gwelet netra. Heb beza en em glevet, d'an hevelep poent, ez omp eat holl prim ha prim d'hon armou ha d'hor c'hezek, ha buhan er'meaz eus ar maner milliget-se.

Aotrou Vaucourt a yoa mantret o klevet kement-all, hag a roas urz da bellaat dioc'h ar maner.

Setu dilezet ar maner. An Aotrou ne reas ket d'e zoudarded tremen dreizan a-raok mont kuit da vad ; aon en doa ive marteze ne vije ket sentet outan. Mont a rejont d'eur maner-all demdost di hag a yoa da unan eus kerent Ao. Vaucourt.

— Lezomp anezan, a lavaras an Ao. Person : setu ama'traou nevez ; eus eur strollad marvailhou soue-

zus ez aimp en eur strollad marvailhou ker souezus-all.
Wardro pe da vare e c'hoarvezas an darvoudou-ze ?
N'oufen ket hen lavaret : ar pez am eus gellet gouzout
tost da vad eo e c'hoarveschont en amzeriou kenta ma
teuas ar feiz kristen en Arvor.

Piou eo a deuas da brezeg d'an Iverzon ? pe eur zant
evel sant Erwan, pe unan da gompeza an hent d'ezan,
pe zant Patrik ? N'hellan lavaret nag e hano nag e pe
vare her greas. Ar pez a c'houezer eo e teuas eun dia-
veziad da zouara war hon aochou, e prezegas d'hon tud
koz eur relijon dizanav betek neuze, hag e teuas e
berr amzer da zastum eun toulladig tud dindan e van-
niel. Gwall-gaset e oe avat gant an drouized hag ez eas
da jom dounoc'h en douar. En em gaout a reas evel-se
gant eur maner dilezet abalamour ne grede den chom
ennan. Hag o veza ne gavas den war e dro, ez eas da
jom di gant e ziskibien. Ar c'helou a yeas buhan dre ar
c'halter, ha meur a hini a lavare uhel, efeiz ne jom-
chent ket pell eno, e teuje ar sperejou d'o stlapa er-
meaz, evel o doa grêt da zoudarded Aotrou Vaucourt
ha d'ar re a yoa bet hardis a-walch'da vont ennan
a-choudevez.

An hini a yoa deuet da jom er maner dilezet a yoa
eun abostol kristen. Gouzout mat a rea ar pez a yoa tre-
menet el lec'h-se, kement-se avat na viras ket outan da
vont ebars, n'en doa aon ebet rag ar sperejou.

Gonde beza tremenet eno meur a zervez, hep beza
bet diezet an disterra gant sperejou, an den santel a fel-
las d'ezan gwelet doareou ar maner. Ouspenn hanter-
kant vloaz a yoa eat dreist an darvoudou hon deus
komzet anezo, setu perak edo en eur stad mantrus. Ar
yeot, an ilio, an drez, ar spern a zave stank e pep lec'h
e gwask ar vein. Er c'hampreier, an treustou a goueze
e poultren. An abostol a welas meur a hini eus ar
c'hampreier-ze : ker fall oa lod anezo ma n'eas ket enno.
Ar mojeriou da gloza war ar maner a yoa en o zav ;

en o zav ive an dourellou, nemet oa kouezet an toen-nou en o foul.

Tro-war-dro d'ar maner, douar bet labouret gwechall evit al legumachou a yoa brema golet gant bep seurt louzou fall.

O tizrei d'ar gambr vras, a yoa hini an Aotrou, a zonje d'an Abostol, hema a azezas war eur mean hag en em roas da zonjal. Sevel a reas evel pa vije bet resorchou didannan, poulzet oa kredabl gant spered Doue, hag ez eas d'eun toullig kambr. Skei a reas e meur a leac'h war ar mogeriou teo gant ar vaz a veze gantan dalc'hmat. Da genta, an trouz a rea o skei na lavaras netra ebet d'ezan ; hogen, e kreiz, dioc'h an trouz oa anat ez oa kleuz ar voger. Klask a reas da welet ha ne gavje ket linennou eun nor : kaout a reas. Hag hen da c'hervel unan bennak eus e ziskibien hag e c'hourc'hemannas d'ezo digeri ar voger. Ar vein elec'h koueza en diabarz a gouezas en diaveaz. Kaout a reas evel-se eun derez hag a ziskenne en douar evit gellout tac'het eus ar maner pa zavche beac'h.

— D'ar mareou-ze, evit doare, a lavaras an Ao. Person d'in, galloud an drouized a yoa disterreat kalz ; an dud a ouenn vras koulz hag an dud pinvidik a zave maneriou bras gant tourellou el lec'h ma c'helljent en em denna bag en em zifenn pa deujed d'o zaga ; dre ma teue ar pennou bras da greski o finvidigez, e kreskas ive o gwarizi, hag e ranked en em zifenn. Ar maneriou-ze ker stank war douar Breiz a zeblant bez a gret en hevelep stum : mogeriou ledan meurbed, gant eun hent en o c'halon da gas dindan an douar hag ac'hano d'ar c'hoajou, pell a-wechou. Dre an hent-se eo e c'helle an dudchentil hag ar zoudarded tec'het pa welent e vijent trec'het o kenderc'hel da stourm a-wel. Distrei a reant neuze hag e sailhent war gein an enebourien a yoa o taga ar maner.

Lezet hon deus an abostol eun tammig, dizroomp d'e

gaout. Speredet kaer oa ive evit doare. Gwelet a reas dioc'htu petra c'hellje da ober euz ar c'hoz maner dilezet ha dirapar. Hag e c'halvas e holl ziskibien d'e gaout da roi d'ezo urz da gempen eun toullad kampreier da c'hellout loja enno, hag e reas d'ezo labourat an douar.

An drouized a ranke beza peur gollet o galloud d'an ampoent, rak den na deuas war dro ar gristenien da ober trouz d'ezo : ar re-ma a greskas buhan an niver anezo.

— Ama avat, eme an Ao. Person, e rankan lavaret d'eoc'h ez a va c'hontaden da vro ar marvailhou, evel ma karer anezo e Breiz-Izel. Da hep kammed azalek brema e kavimp darvoudou souezus, dourn Doue o roi harp d'e zervicherien. Mont a ran da genderc'hel gant va c'haoz.

Abaoue meur a viz a yoa, ar maner a zeblante kae-rât bemdez, an douar a yoa bet turiet, trempet ha distrempet gant c'houezen servicherien an Ao. Doue. Ar re-ma en em gave brao eno, a veve e peoc'h ha didrabbas, tra rouez en amzer-ze. Aotrou Vaucourt a deuas eun dervez da welet an Abostol, Andre e hano. Goloet oa a armou, rak abaoue m'o doa tiegeziou an duchentil laeret douarou dukaj Breiz hag o rannet etrezo, ar re-ma n'en em glevent mui hag a veze dalc'hmat e brezel, maner oc'h maner, kastel oc'h kastel.

N'eo ket koulskoude evel enebour eo e teue Ao. Vau-court di, nan.

Klevet en doa lavaret ez oa deuet da jom eno eun den eus pell bro, hag e veve e peoc'h, pa 'z oa bet red d'ezan e-unan, perc'hen ar maner koulskoude, tec'het evel buntet gant eun nerz vurzudus. An abostol Andre a reas digemer laouen d'an Aotrou, hag e c'houennas outan petra rea d'ezan dont d'e welet.

— Ar pez a glaskan, eme ar c'hont gant eun earfaëüs, eo gouzout mar deo posUBL petra reas d'am zad ker ha d'e dud mont eus ar maner-ma, evit hen lezel

digor d'ar c'henta deuet. Livirit d'in ar wirionez krak ha ber, emezan c'hoaz. Ha gellet hoc'h eus-hu kousket er maner-ma, c'houi hag ho tud, hep beza diezet gant netra direiz ebet ?

— Aotrou, n'hon deus klevet ken trouz dre ama nemet hini ar fraoed hag ar gaouenned a rea o neizi e gwask ar vein hag a zo bet red d'ezo diloja da lezel al lec'h-ma ganeomp.

Ao. Vaucourt a zelle outan nec'het bras hag e lavaras e karje tremen an noz en eur gambr en doa klevet hano anezi gant e dad.

— Ne viot ket lojet kaer ; n'eus tamm arrebeuri ebet enni hag a vije dioc'h ho toare ; n'em eus nemet va gwele, ha me zo sur ne garfac'h ket kousket ennan ; mes p'eo gwir e feil d'eoc'h, deomp da welet al lec'h-se araok ma vez eat an heol da guzat abalamour d'eomp da gaout eun tamm sklerijen. Pa ho pezo gwelet, ma fell d'eoc'h ato chom ama da dremen an noz, me lezo ar gambr ganeoch'h ha c'houi a raio enni ar pez a gerot. Ouspenn-ze, kement am eus a roin d'eoc'h evit dousât ho toare, evit ne viot ket re fall enni.

Mont a reas da gas Ao. Vaucourt d'ar gambr a c'houlenne. Hema a zellas a bep tu en dro d'ezan, hag a zisklerias e c'hoantae tremen an noz enni. Digouezout a reas d'ezan ober eur zell dre ar prenestre hag e welas eur renkenn nad tud o vont sioulik en eun tiik dister eun tamm tour warnan.

— Petra eo an dud-se, a c'houennas-hen, a zo aze er porz hag a ya ker sioul-se en tamm lochen savet en eur c'hougn ?

— Va breudeur int, a respontas an abostol Andre ; da lavaret o fedennou ez eont d'ar japel.

— Entent a ran, a lavaras Ao. Vaucourt ; c'houi a zo eus ar relijon nevez a zesk d'an dud ez int holl breudeur ?

— Ar wirionez eo, eme Andre, ha mar fell d'eoc'h

dont ganeomp, c'houi a welo dreizoc'h hoc'h-unan penaos e vevomp.

— A greiz kalon ha gant plijadur, eme ar c'hont ; ken nebeut a blijadur hon deus hed hor buez ma vezoebat evidon gwelet lidou eur relijion ha ne vezont ket grêt e dounder ar c'hoajou.

Evelato ma rit eur vijel hep distag, evel am eus klevet, me a gaso unan eus va zud da glask eun tamm kig ha traou-all d'ar c'hériou tosta.

Andre a stouas e benn evit lavaret ya, hag a yeas a-dreuz ar porz evit mont d'ar japel el lec'h edo ar re-all eur pennad a yoa. Ao. Vaucourt o veza m'oa kustum da gaout eur maread mevelien war e dro da ober ardou d'ezan a oe darbet d'ezan kaout da lavaret abalamour n'oa savet hini eus ar goueriaded en e zav pa'z ea er japel. Eur skabel goat a yoa goullo dres dirak an aoter. Pa lavaran aoter, arabat eo d'eoc'h mont da gredi ez oa eun aoter evel ar re a gavomp hizio en hon ilizou. N'oa eno nemet eun daol goloeit gant an dousier lin gwenn kann gant eun tabernakl koat livet groz hag eur groaz war e c'horre. Ao. Vaucourt azezet war e skabel goat, eul loden hepken eus e dok houarn savet, a zelle gant souez en dro d'ezan dre ar japel zister. An toulladic kristenien a yoa eno daoulinet war ar vein yen ha kallet, pleget o fenn, sioulik, o pedi ; ha kement-se a lakae nec'het an Ao. Kont : en eur bed nevez e kave d'ezan beza. An abostol a yoa eat a-drenv an aoter hag a deuas gant e zoupiliz hag e stol. Mont a reas d'an daoulin war bazennou an aoter hag e krogas gant, ar pedennou dioc'h an noz. An tad a yea da genta, hag an dud fidel a laverre war e lerc'h, hag evel-se keit ha ma padas ar pedennou. Neuze ar beleg a droas ouz an dud hag a reas d'ezo an tammig prezegen ver-ma :

« Va breudeur ker,

« Labouret hoc'h eus hed an deiz da c'hounit ar
« bara pemdeziek a c'houlennomp digant Doue deuet

« oc'h d'e drugarekât d'e veza roet d'eoc'h ; ra zeui-
« e vennoz d'en em asten warnoc'h holl ha ra zis-
« kuizo hoc'h izili dre eur c'houesk c'houek ha reiz-
« mat. It e peoc'h ! »

Hag ec'h astennas e zaouarn da roi d'ezo e vennoz.
Mont a rejont holl er meaz, sioul ha pep hini d'e dro.

— Pe seurt religion eo hounnez, a c'houennas an Ao.
Kont. An turierien douar-ze a zent ouzoc'h evel oaned ;
kredit ac'hanon, ho religion na daolo kel a c'hriziou en
hon touez ; ni hon deus ar c'hallooud, an nerz, ha ni a
fell d'eomp e ve sentet ouzomp e pep tra.

— Ar pez a blijo gant Doue a c'hoarvezo, eme an
Abostol, ha ni ive ebrestel hor mestr, ni a zo sentus hag-
a ya d'al lec'h ma fell d'ezan ez afemp. Lavaret en deus
d'eomp : it ha kelennit an holl boblou. Eat omp hep-
aon ebet.

TREDE PENNAD

Ret eo d'eomp bêva a spered gant an dud e komzomp-
anezo, er c'hoec'hvet pe er seizvet kanvet abaoe done-
digez H. Z : d'ar poent-se, hel lavaret am eus, an droui-
zed o doa kollet eun tamm brao eus o galloud hag a yo-
red d'ezo en em denna da guzat e dounder ar c'hoajou-
pe er reier kleuz. Paianed Rom a yoa diruilhet war ar-
vro, hogen, ne rejont nemet tremen ha ne daoljont gri-
zien ebet e douar an Arvor. Eur boblad tud penn kalet
evel ar Vretoned n'hellt ket digemeret a galon vat
eur religion digaset gant o gwaskerien kasaet. Araok ar-
mare-ze eta eo e oe grêt eun dukaj eus an Arvor, a la-
var lod, re-all a lavar eo eur rouantelez a oe.

Daoust pegen dizesk bennak eo eur bobl, ato e ka-

ver er vro eun tiegez bennak el lec'h eo savet gwelloc'h an dud, el lec'h ez int muioc'h brudet, muioc'h enoret, abalamour d'an taoliou kaer o deus grêt hini pe hini. A'chano da zevel eur memes gouarnamant evit an holl, eur gouarnamant hag a vije gwir vestr war ar vro a-bez, ez eus pell, kredit ac'hanon perc'henneien bras an douar, holl koulz lavaret eus an tiegeziou kosa, a grede beza mistri bras war hed o douarou, gant gwir da varn ha da ober brezel. Lavaret d'ar just da bevare e c'hoarvezas kement-se na ve ket eun dra eas war va meno.

Kredi rean oa red d'in roi d'eo'ch an diskleriaduriouze evit ma c'houfac'h penaos ha perak oa ken dizeblant ar baroned uhel ouz ar relijon hag ouz gwiriou padus ar boblou.

Evel-se 'ia, Ao. Vaucourt na gomprenas ket nemeur a dra er pez en doa gwelet er japel. Hen ha na gomprene nemet eun dra : galloud ar c'hrenva war e nesa, a gredas oa al labourerien douar-ze en em dennet a zindan galloud baroned ar c'halter evit n'o divije mui da zenti outo. Setu hen da ober e bôtr faro, ha goude beza koaniet eus ar pez o doa digaset d'ezan e vevelien ez eas d'e gambr da dremenn an noz, daou eus e dud a dlie chom gantan er memes kambr. Ne gave ket d'ezan oa awalc'h ar sklerijen evit beza dispont, ha setu perak e tilasas hepken e lerennou, e lammas e voned houarn hag e lakeas eur galabousen c'hloan en e lec'h. Goudeze ec'h astennas e gorf war ar c'holched a zerviche da Andre ; n'edo tamm ebet e poan avat pe e kavche ar beleg eun dra bennak da c'hourvez e-unan pe na raje ket. Bolz an nenv a yoa goloet a goummoul, avel a yoa kenan, hag ar c'hazarc'h a goueze puilh war an toennou ha war gwer ar maner koz. O veza m'oa yen awalc'h an amzer, an Abostol Andre en doa lakêt kas hordennadou brug, lann ha balan d'ar gambr vrás, hag en doa e-unan grêt tan enni.

— Aymar, eme Ao. Vaucourt, kerz da deuler eurzell war holl gougnou ar gambr-ma ; ma ne gavez netra fall ebet e teui da c'hourvez war ar brug-ma, endra ma taolo evez da gamarad e kichen an tan.

An den a zentas, hogen, a-vec'h en doa kaset e zourn da unan eus mogeriou ar gamb ma laoskas eur glemmaden zister hag e kouezas a stok korf d'an douar. Ar zoudard a yoa astennet hep tamm anaoudegez ; dioc'h gwelet e zaoulagad digor frank oa anat oa bet skoet gant eur spont vras souézus.

— D'Elbec, eme Ao. Vaucourt d'ar zoudard-all, dilas e leren d'az kenvreur ha taol dour war e zrem evit e zi-vorfila.

D'Elbec a dostaas en eur grena. Stleja reas e gamarad tre dirak an oaled, hag e taolas dour war e zrem. Ao. Vaucourt en doa kroget en eur c'houlaouen rousin, pe eun dra bennak-all evesle, lag e save anezi hed a hed ar voger. Ar voger a yoa leun, da vihana ne weled digor ebet enni. En eun taol kont, setu hen o santout eur c'houezaden nerzus evel eun taol avel : ar goulou a oe mouget. Mont a reas war e giz, spontet, war ar voger e krede beza gwelet o tremen evel eul luc'heden.

N'edo ket e penn e zouez : tostaet oa ouz an oaled, hag eno elec'h kaout unan astennet e kavas daou astennet evel pa vijent maro. Sellet a reas er siminal ; ha petra welas eno ? eur c'horrigan du pod oc'h atisa an tan gant e zaouarn. Ao. Vaucourt na vanke ket a nerz kalon d'ezan pa veze war dachen an emgannou, evel diret oa enep ar spont. Chom a rea eno en o zav, kroaziet e ziwrec'h gantan, evel sklaset gant ar spont ; evel eun ed gwenan a yoa en e zishouarn, ha dirak e zaoulagad ez oa evel koumoul teo. Mil boan en devoe o vonet betek e c'hole hed. En em deuler a reas warni hag e kuzas e zaoulagad gant e zaou zourn evit na welje ket an oaled. Selaou a rea avat, bec'h warnan : trouz ebet n'ez oa, nemet a gave d'ezan, e zaou zen oc'h halani.

Hardisât a reas a-nebeudou, betek tenna e zaouarn diwar e zaoulagad hag ober eur zell dre laer eus kostez an oaled. Tan a yoa, kalz tan zoken, ma'z oa meurbet sklerijennet ar gambr. N'oa korrigan ebet ken eno. An daou zoudard a frote o daoulagad evel tud hag a zo o tihuna goudé eur c'housk hir. Ao. Vaucourt a zavas en e c'hoaze hag a c'halvas e zaou zen. Sevel a rejont goustadik en o zav, ba ker goustadik-all oc'h horjella evel daou zen mezo, e teujont da gaout an Aotrou. Hema a yoa re sougeüs evit lavaret d'ezo petra en doa gwelet. Kredet o divije en doa bet aon.

— Deuit ama dirak va gwele, emezan d'ezo, gourvezit aze, ha bezit war zav d'ar wech kenta ma tigouezfe d'in gervel ac'hanoch.

Senti a rejont. An noz a dremenras hep darvoud nevez ebet.

— Lavaret am oa d'eo'c'h ez each' da glevet traou souezus ; hor marvailhou brezonek a zo leun anezo. Deomp brema da welet traou-all hag a ziskouezo d'eo'c'h pe seurt kredennou diboell a yoa neuze etouez an dud. O sonjal e kement en doa gwelet abaoe m'edo er maner, Aotrou Vaucourt a daolas evez dreist-oll ouz ar pez en doa gwelet er japel : skeuden eur gwaz staget en noaz ouz ar groaz, lakêt uz d'an tabernakl, a reas d'ezan kredi oa tud ar maner eus eur vreuriez sorserien bennak savet gant Marzin, barz, diviner ha sorser meurbet brûdet en Arvor a-bez. Ar zonj-se a skoas anezan kenan, ha setu hen da gaout e dud, dare da lammet er japel ha da deuler d'an traon kement a yoa enni.

Sklerijennet gant spered Doue, an Abostol en doa gwisket e zilhad oferenna hag a c'hede war dreujou an nor.

Ao. Vaucourt a yoa skoet o welet doare santel ar belleg, ar peoc'h hag ar veurded (majesté) a yoa war e zrem ; hogen, ken kustum oa da skei ha da ziskar hep ken abeg nemet e youl direiz, ar baron a zic'houinas ar

c'hleze ne c'helled da vanea nemet gant an daou zourn,
hag a hopas d'e zaou zoudard :

— A-raok, ha bec'h d'ar zorser !

Hogen, kerkent e krogas ar c'hren en e holl izili hag
ar c'hleze a gouezas eus e zaouarn. Eur spont ha na
deue ket eus ar bed-ma a grogas en e zervicherien hag
e oe mall ganto tec'het da glask o c'hezeg, hag ac'hano,
fidamdoule ! d'am daoulamm rus h'p goulen pelec'h
mont. Ao. Vaucourt a jome diflach dirak an Abostol
dispost.

— Ao. Baron, emezan, an den gwisket a houarn a
zo zoken nebeut a dra dirak galloud Doue ; dont a reez
da ziskar ar pez a zo digaset da ober ac'hanout eun den
nevez : gwel eun tammig dre da spered ar pez ac'h eus
gwelet en diavez ac'hanout ha klevet ennout da unan :
kemer da gleze ha kea da glask da zoudarded.

Piou en divije kredet ? Ar baron lorc'hus a yoa
deuet da veza sentus evel eur bugel : dastum a reas e
gleze hag hen ac'hano lostek. N'oa mui ar memez den ;
ne livirin ket ne grede mui er zorserien, kredi a rea
avat ez oa bet en deiz-se kenver-oc'h-kenver gant eur
c'halloud eun tam krao uhelloc'h eget e hini.

Meur a zervez a zo tremenet abaque. An Abostol
hag e ziskibien a ra didrouz pep hini e labour ordinal.
Eur burzud-all a yea da c'hoarvezout ; skuis kenan
gant labouriou e zervez, an abostol Andre debret gan-
tan e goan, ha lavaret grasou a yeas da c'hourvez war
e c'hole'hed brug hag a reas eun huvre souezus. Gwe-
let a reas dre e gousk an abostol sant Paol oc'h ober
telennou evit beva eus frouez e labour. Greomp al la-
bour a zo fiziet ennomp, a lavaras d'ezan sant Paol, an
holl a zo sebeliet en denvalijen hag a enor falz-doueou :
d'it-te eo skigna ar c'helou mat (an Aviel) er vro-ma
gant al labourerien a zigas d'it ar Mestr. Gant c'hoec'h
eus da dud ez i d'an aod, disul kenta, kemeret a ri hep
aon ebet ar bagou a gavi stag eno, hag ez i da zikour ar

paour kez bag war nez penzea : savetei a ri evel-se o buez da bevar misioner, rak ar veajourien-all a vezoz lazet gant tud gouez ar c'charteriou-ma evit paea o gwall vuez.

Ar zonj eus ar pez en devoa gwlets ha klevet ne deas ket epad an deiz diwar spered an abostol Andre. Koulskoude, o teuler muioc'h a evez, e teuas da lavaret ennan e-unan ne dalveze ket ar boan terri ar penn gant huvreou, hag e teuas da ankounac'hât an hini en doa gwelet en noz a-raok evit en em roi korf hag ene d'e labour pemdeziek. Edod er zadorn, der-c'hent devez an Aotrou ; dont a reas da zonj d'ezan a gement-se p'edo o vont da gousket.

— Va Doue ! emezan o kouenza d'an daoulin dirak e c'holc'hed, mar deo eun urz eo ho peus roet d'in dre c'chinou Hoc'h Abostol, grit d'in gwelet sklér ar pez am eus da ober.

Pell e padas e beden, hag ez eas d'ober eur c'housk ; kousket kalet a reas en-deün. Brumachen a yoa ; eun avel arne a c'houeze evel mara ken alies e bro Breiz, ha setu ar weledigezo tonta-nevez dirazan. Sant Paol en drama a yoa euntammig tenval ebenn, hag evel oc'houdrouz eun tamm bennak e lavaras gant eur vouez nerzus : « Sav, arabat eo d'it koll da amzer ; ema erru ar gwallamzer. Ar mor a zo fall ; a-raok ma vezi digouezet en aod, ar vag am eus komzet d'it anezi a vezoz bet meur a wech war-nez goueledi. N'az pez nep aon na rak an avel na rak an tarsiou ; an dourn a zizav leuren gompez ar mor bras a gaso ac'hantout d'al lec'h ma fell d'in ez afez. »

An abostol Andre ne jomas ket pelloc'h da dorts ; sevel a eure evel eun tenn, hag ez eas da zihuna c'houec'h den-all eus e gompagninez. Mont a rejont o seziz en hent, daoust d'an avel dirollet ha d'ar glao bilh a rea, hag e berr amzer e tigouesjont war deven uhel eun aber ez oa erni diou vagig o vransellat. Mont a rea

Andre nan dre e volontez e-unan, mes kaset gant eun nerz hag eur sklerijen vurzudus. Dre nerz ar memes galloud-se e tiskennas en aod hag e kemennas d'e zis-kibien sevel er bagou ; e-unan e krogas e stur an hini vrasha ; tri diskibl a rouenve ; ar vag kenta a yeas er meaz eus an aber, an eil a yeas war he lerc'h. Ar mor a yoa fall fall ; n'eo ket c'houitellât, blejal eo a rea an avel, hag ar bagou kouslskoude a rea hent ha ne deant tamm da steki ouz ar c'herreg ken stank dre al lec'hiouze koulskoude.

En eun taol, a-dreus an tarsiou bras divent, setu i o welet eur sklerijen skedus ; ar sklerijen-ze a yoa pell ac'hano ; hogen, an diou vag a yea evel douget gant an avel, koulz ha pa vije bet kompez ar mor. Digouezout a rejont evel-se dizale e kichenik eur vag vrasc'h a yoa meurbet gwall gaset gant an amzer fall : gwech e save war gerniou an tarsiou gwenn evit koueza prestik goude e beiou doun el lec'h ma vije lavaret sure vijent goloet ha konfonet prim a-wale'h. En eun taol, setu kristenien Breiz-Izel o klevet eur youc'haden e yez bro ar Jude. Respong a rejont kerkent, hag ez ejont betek ar vag. An abostol Andre a anavezas an dud en doa klevet hano anezo en e huvre. Digemeret e oent e bagou Breiz dres d'an ampoent ma ouelete eben. Diou vag an abostol a droas o begou warzu an douar hep ma vije bet ezom da veza e poan gant ar stur.

Dizrei a rejont ker buhan hag ez oant eat, hag hep muioc'h a ziezamant.

Tud ar vro a yoa ato war gern ar reier, kouls ha d'an deiziou bras, da lavaret eo d'ar gwall-amzer, o c'chedal ar poent da zailha da gaout o lod. An Abostol hag ar re en doa saveteet a yoa diskennet d'an douar. Ar bagou a yoa pennasket evel diaraok. O tizrei d'ar gêr e kavas o tont d'an aod eur bern tud, prez bras warno. Abalamour marteze d'an denvalijen, pe c'hoaz abalamour ma ne

zisplije ket d'ar peilherien gwelet nebeutoc'h a dud war dro ar bagou o klask o lod, ar re-man a lezas ar gristenien da vont e peoc'h gant o hent, hep lavaret ger d'ezo.

— Va Doue ! eme an Abostol, setu lapoused ar gernez o vont da blava war baour kez tud eat da benzea ! Daoust ha n'hellfemp ober netra evit rei sikour d'ezo ?

— Mestr ker, a respondas unan eus an diskibien, n'oc'h ket eus ar vro-man ; ni a gred eveldoc'h, ha ma vefemp gwelet war an aod, hep douetans, e vefemp troc'het dre dammou.

An Abostol na reas nemet huanadi. Dont a reas sonj d'ezan eus komzou sant Pol er welidigez en doa bet : tud ar vag a dlie meravel abalamour d'o buez fall. Goudeze e c'houennas digant unan eus ar re en doa save-teet a be vro oa. Heman a respondas oa eus Rom, ez oa bet harluet gant sened Rom. « Ar re a yoa o sturia hor bag a grede oamp penn-abeg deus ar gwall-amzer a rea hag evit kaout peoc'h o deus diskarget ac'hanomp en eur c'hanod da vont en avantur Doue. Setu perak omp salvet.

— Siouaz ! eme an Absstol, Doue a gastiz kalet a-wechou, hogen ar pez en deus gourc'hennet a c'hoar-vezo, na c'hellomp netra enep an dra-ze.

Erru oa goulou-deiz. An avel a goueze hag an arvoriz kavet ganto ar vag penzeer a youc'he evel eur mared chas warlerc'h eur penmoch'h gouez. Ar pez a zisplijas ar muia d'an abostol a oe gwelet mevelien tuchentil, re Ao. Vaucourt en o zouez, o redek d'an aod da glask o zamm.


— Pe seurt tud eo ar re-man ! eme an Abostol ou-tan e-unan. N'hellimp biken ober d'ezo dont d'en em garet evel breudeur hep skoazel an Holl-C'halloudeg. Ar skoazel-ze avat na vanko ket d'eomp, fizians hon deus enni, rak hor Mestr eo en deus lavaret d'eomp : It, ha kelennit an holl boblou.

Digouezet oant e lojeiz an Abostol. Heman a zige-

meras an diavezidi hag a reas d'ezo kaera ma c'hellas.
Echui a ran.

Ar guchennad kristenien-man a brezegas ar feiz
gant kement a nerz hag a galon ma teujont a-benn e
berr amzer da c'hounit an Arvoriz. Ne gredan ket lava-
ret ne oent mui peilherien, laeron ar penzeou, a-c'hou-
devez, rak pell amzer c'hoaz goudeze e welomp duked
Breiz o tifenn ober ar seurt traou heuzus-se.

Tremenet em boa daou zervez hanter er presbital.
Trugarekat a ris an Ao. Person evit e vadelez em
c'henver, ha me da vont larkorc'h



DOUE R'HO PAEO !



1. Kement-ma a dremene er bloavez 1870, epad seziz Pariz. An amzer a yoa ker kriz hag ar breszel ; skourni rea ; erc'h a rea ive. Eur vaouez paour he devoa ledet eun tamm pallen koz hag a yoa warnan manegou bourret gant gloan ; hag e klaske o gwerza ; hogen, ne deue den d'o marc'hata. Daou « vobil » Breton digouezet en derc'hent a deuas da dremen, hag a gavas ar manegou eus o doare. Gwisket truilhek oant hag e krenent gant ar riou. Choant o doa da gaout ar manegou, pa c'houezent en o daouarn o seilet agorn ouz ar varc'hadourez. « Ar manegou-ze a rafe vad d'eomp, a lavarent-i etrezo ! »

2. Eun ofiser a deuas da dremen dre eno hag a welas dioc'htu nec'hamant an daou Vreton. Ya,

divinout a reas o c'hoant hag o faourente. « Va bugale, emezan, kemerit daou re manegou evit pep hini ac'hanc'h, me eo a baeo. » Ar Vretoned a zo lentic ; an daou zoudard n'oa ket mall ganto senti, hag an ofiser da lavaret evit an eil gwech : « Kemerit 'ta, paotred, eur mignon eo a ro anezo d'eoc'h ! » N'helled mui argila. Kemerout a rejont ar manegou en eur lavaret : « Doue r'ho paeo ! va ofiser. »

3. Eur pennad goude e oe eur c'brogañ e Cham-pigny, hag an daou « vobil » edo eno. Etouez ar



vistri ec'h anavesjont o mignon, ofiser ar manegou, evel m'hen hanvent. Hogen, pa oe echu an emgann, kaer o doa klask ha sellet, ne deuent ket a-benn da gaout anezhan. N'edo ket war al leac'h ken nebeut pa oe great ar galv. Glazet e ranke beza eta, pe lazet, unan a zaou.

4. Daoust ma'z oant hanter varo gant ar skuis-

der, ar yenien hag an naon ; daoust ma c'hellent beza lazet gant tennou ar Brusianed, an daou Vreizad ne jomchont ket da varc'hata. Dizrei a rejont war dachen ar brezel : unan anezo a oe ti-zet en e c'har gant eun tenn fuzul. Lakaat a eure eur mouchouar da c'holo ar gouli, hag en bent adarre. Kaout a rejont an ofiser astennet en erc'h evel maro.

5. Dioc'htu e krogchont d'e frota gant ar manegou bourret, da zoursial ker brao outan, ma teuas a-benn eur pennad brao a amzer da halani ha da zigeri e zaoulagad : n'oa ket maro ! o pebeus eur-vad evid hon daou Vreton !



6. Samma rejont anezan war o diskaoaz d'e gas d'ar c'hlanydi (hospital), el leach' ma teuas da gaout adarre ar yec'hed... Ar vad en devoa great en doa talvezet d'ezan : selaouet oa bet peden an daou Vreton :

Doue r'ho paeo !

Hunvre eur Bugel

Great en doa e bask kenta.

Dar c'houlz-se an deskadurez n'oa ket, en hor bro,
stank evel hizio, hag ar pôtrig Seven n'en doa darem-
predet ken skol nemet hini e vamm goz.

Goude beza, hed an deiz, diouallet chatal e gerent e
gwaremeier ha prajeier Pont-ar-Zal e kare kalz dont d'an-
ti, e leac'h daouhanteri o c'hoariou gant ar vousedigou-
all eus ar geriadern.

Kaout a rea, en eur gador, ar stam etre he daouarn, pe
azezet dirak eur c'har-neza, e vamm-goz Fanchon.

Fanchon a oa mat ouz ar bugelig. Evit na zirenkfe
ket ar vamm en he labour, hi a zalc'he Seven en he c'hi-
chen. Da laouennât e benn, tra ma stamme pe ma yea
ar c'har-neza en dro e konte d'ezan eur marvailh ben-
nak hag e kane eur werz eus an amzer dremenet.

Difinv evel eur skeuden, Seven a zelaoue. Echu ar
zon e c'houlenne : « Eun all, mamm-goz ! »

Hag e zaoulagad a yoa ken dous, e vizach ken ka-
rantezus, e zaouarnigou astennet ken pedus, ma ne
c'helle ket ar vamm-goz vat lavaret nan.

— Hizio e kanin d'it gwerz *Lez-Breiz*, a lavaras eun
deiz Fanchou d'he mab-bihan.

— Lez-Breiz ? Piou eo hennez, mamm-goz ?

— Lez-Breiz a zifennas hor bro eneb ar C'hallaoued
E vuez a zo hini eun den kalonek... Setu hi aman !

Ar vaouez goz he doa koumanset. He mouez, raou-
liet gant ar bloaveziou, a zeblante beza adkavet he holl

nerz gwechall evit kana buez hag oberou broadel an hini a zo bet leshanvet mat gant hor c'henvroiz Lez-Breiz. Ouz e zelaou, Seven a denerea e galon, hag araoak ar fin, o tremenn e zorn war e zaoulagad e santas anezo gleb.

En devez warlerc'h, a greiz diouall e loened. ar bugel — tra souezus — en em roas da hunvreal. Gwerz Lez-Breiz, hag he doa ken skoet anezan, en derc'hent, a oa atao en e benn. Estlammet e chome dirak kalonder vurzodus ar marc'hig breizad, ha karet a rea ive ar floc'hig yaouank a respontas d'e vestr, pa ne felle ket da heman e lezel da vont d'an emgann :

N'am eus ket aoun rak ar C'hallaoued

Kriz eo va c'halon, va dir lemmet !

Setu aze eta, a zonje Seven, betek pegeit ez ea kantez ar Vretoned koz evit o bro, betek rei o gwad eviti, evit he difenn eneb he gwallerien.

Perak, a c'houlenne ar bugel outan e-unan, na zavche ket c'hoaz eul Lez-Breiz bennak war an douar he deus gwelet o c'henel kement a dud kalonek ? Daoust ha sklaset eo e gwazied ar Vretoned gwad rus ha nerzus o c'hentadou !

E zaout a beure. Chom a reant reiz, hizio, en o fark.

Karget e spered gant hunvreou dreist e oad, ar me-saer yaouank a zerras e zaoulagad... ha prest en em lezas da gousket.

E kreiz e gousk, eur zonj iskiz a deuas d'e drubuilha.

War eun dachen a vrezel ec'h em gave. Endro d'ezan ec'h en em ganned evel leoned. A bep tu e skoed dizamant, didrugar. An tennou fuzuilh a zute o treven a-zioc'h e benn...

Hen — o gweladen iskiz ! a oa unan eus ar gwasa lazerien. Bep taol e tiskare e zen !.. Mes eur vouled a deuas d'e dizout d'e dro ive, hag hep 'eur griaden e e kouezas d'an douar, kontant da skuilh e wad evit difen ar Justiz !

En eun taol e tihunas. N'oa nemet eun hunvre !
Mervel yaouank-flam evit Breiz !...

* * *

Dek vloaz divezatoc'h, ar pez en doa gwelet Seven
dre e hunvre a dlie digouezout.

Edod en amzer an Dispach-Vras. Dre Vreiz a-bez,
an dud vat, rukunet gant torfejou ar C'hallaoued, a oa
en em zavet evit lakaat ar Re-C'hlaz d'echui o falloniou
bag o argas er meaz ar vro.

O tigas d'o heul an dijentiled, ar Vretoned o doa ke-
meret o armou, hag eat d'an emgann. Gant ar re genta
edo pôtre Pont-ar-Zal, hag en o zouez Seven, den
yaouank ampart abenn neuze.

En eur barrezig vihan, Re-C'hlaz ha Re-Wenn en
em gavas penn-ouz-penn. Ar Re-C'hlaz a oa kalz nive-
rusoc'h eget hor c'henvroiz.

Mes evit difenn ar Justiz, ar Breizad a zo ken ner-
zus ha tri.

An tan a grogas prim. Evel keilhen an dud a goueze
a bep tu, ha diez oa gouzout gant piou e chomfe ar gou-
nid.

Pa venne d'eur rummad fallgaloni mouez ar mestr a
zave :

Beac'h warno, potred Breiz, beac'h warno, ha gwelomp !
Mar 'ma 'n Diaoul a du ganto, ema Doue ganeomp !

Ar c'halonou a grenvae, hag eur youc'haden a zave !
« Araok !... Tan !! »

Er penn kenta, Seven a gerze hag a skoe evel eun
dall... En despet d'o c'halonder, ar Vreiziz a oa war var
da rankout plega.

— En em roit ! eme ar jeneral gall.

— En em rei?... Allo 'ta !... a respondas Seven er
penn kenta, hep gedal ger e vistri, hag o skei gwasoc'h-
gwaz...

D'ar mare-ze, en e vrasa kounnar eneb enebourien

e vro, ar Breizad a oa skoet e kreiz ar galon, gant eur
vouled. Hep eur glummaden, Seven a gouezas o you-
c'hal d'e gamaladed : « Evit Breiz!... Araok bepred!...»

E c'houli a oa marvel ; mes mesaer koz Pont-ar-Zal,
o vervel, en em ziskoueze laouen : « O! va hunvre!...
va hunvre kaer a vugel! » emezan...



P A N E R

ar Marvailhou munut

Ar morian hag ar zoudard

Eur morian a c'houenne eun deiz digant eur zoudard ha kredi a read c'hoaz e Doue en e vro Frans.

— Setu aze eun hunvre ! eme ar zoudarded gall.
Pou a c'hell kaout douetanz ez eun Doue ?

— E feiz, lavaret a rafed, eme ar morian ; ne roit morse testeni ebet euz ho feiz !

Daoust ha ne c'hellfed ket goulen ar memes tra digant ar bern tud a bep stad a vev hirio evel pa n'o dese mui tamm feiz ebet ? Daoust ha ne c'hellfed ket ober d'ezo ar rebech c'houero a rea Doue gwechall d'e bobl dre c'hinou ar profed Izaias : « Krouet em eus bugale, maget ha savet am eus anezo ; int-i avat o deus great faë warnon. Eul loen diskiant a anavez e vestr ; an den avat n'anavez mui an iliz.

Roudou Doue

Goulen a read eun dervez digant eur morian o chom er gwelec'h, da lavaret eo en eur vro ha n'eus ket nemeur a dud enni, devet ma 'z eo gant an heol hag an

treaz bero : « Penaos hoc'h-hu deuet da c'houzout ez eus eun Doue ? »

Hag ar morian da respont gant kalz a furnez :

— « Evel ma c'houzon dre ar roudou chomet war an treaz pe ez eus tremenet eun den pe eul loen. »

Hag e gwirionez, pa welomp da bep kammed a reomp kement a roudou leun a furnez hag a c'halloud lezet gant an Hini en deuz great ar bed, penaos miret da lavaret :

— « Eun Doue a zo bet dre ama ! Kement-all a draou kaer n'hellont beza great nemet gant eun Doue ! »

Hag an Doue-ze eo an hini a anavezomp, ni, kristenien !

Doue a zo e pep leac'h

Sant Bernardin a yoa meurbed doujet gant kamarded e oad pa oa c'hoaz bugel. Mar tigouez d'ezo koms etrezo a draou difennet e tavent kerkent ha mar her gwelent, o lavaret :

« Peoc'h gant an traou-ze ! setu erru Bernardin ! »

Mar doa a-walc'h d'ar re-man gwelet Bernardin evit beza fur, taolit evez, bugale, ez eus dalc'h-mad tostik-tost d'eoc'h eun Doue hag eun eal a glev ho komzou, a wel hoc'h oberou ha kement zoken a dremen e goueled ho kalon. Bezit fur eta kouls pa n'eus nemetoc'h evel pa emaoch gant ar re-all ; pa 'z oc'h douget d'an droug, livirit evel ar plac'h chast Suzanna a zo hano anezi er Skritur-Zakr : « Penaos e c'hellfen-me pec'hi dirak va Doue am gwel hag am barno ? »

Hosti c'hlanc'h

Kement-ma a dremene e Lourd n'eus ket pell c'hoaz, e kichenik al leac'h ma 'z eas Bernardett da skrabat an

douar gant he bized ha ma teuas da ziouana eun eien
nen he deus pareet kement a dud abaoue.

An dud klanv, ar re vac'hagnet, kabac'h, seizet,
bouzar, dall ha mut, an holl glenvejou, an holl boaniou
a yoa bodet endro d'ar pisinou hag a c'hede beza sou-
bet en dour burzodus.

Eur beleg a bede hag a alie an dud yac'h da bedi o
diwreac'h e kroaz. Lavaret a rea :

— Eürus ar re o deus poan da ziwaska ! Eürus ar re
a ouel !

Hag ar glanvourien a unanas o mouez gant ar re
yac'n evit lavaret :

— Eürus ar glanvourien ! Doue o c'har !

— Mes neuze, mamm, a lavaras eur bugel klanv
pell a yoa, mar kar an Ao. Doue ar re glanv, me zo
gwelloc'h ganen chom klanv !

* *

Digaset e oe en eur gador eur plac'hig daouzek vloaz
sounnet outi he holl izili, drouk-livet evel ar maro ha
ken treut ma n'oa mui nemet ar skeud eus an den. Di-
gaset oa bet da Lourd gant eur framason difeiz da dire-
lijion. Hen a yoa chomet kuzet e-touez an engroez tud,
hogen klevet oa bet o lavaret :

— Ar pez a zo sur eo mar teu houma da gaout ar
pare en dour-ze, me a gredo hag a govesao.

Hag ar beleg da hopal :

— Plijet gant an Intron-Varia Lourd parea ar bugel-
ma !

Ar bobl kristen a youc'has war e lerc'h gant eur feiz
birvidik ?

— Plijet gant an Intron-Varia Lourd parea ar bugel-
ma !

Ar beleg a lavaras adarre :

— Goulen a ran eur sakrifiz digant unan eus ar

glanvourien a zo ama. Ra zeui unan anezo da ginnig da Zoue chom klanv betek e varo, epinijen, evit ma pareo ar c'hez-ma ha ma kredo an difeiz-se.

Eun den etre tregont ha daou-ugent vloaz a dostaes d'ar poent-se oc'h en em stleja gwella ma c'helle war bouez e flac'hou. Lavaret a reas gant eur vouez hag a dreuzas an holl galonou :

— Me !

E kichenik ez oa eur vamm o ouela, ganti war he barlen eur c'hrouadurig sez vloaz ganet bouzar ha mut : hag e lavare enni he-unan :

— Mont a ran da ginnig va merc'h !

Karantez ar vamm a oe treach'eur pennad war he c'harantez evit eun dianavezet. Ne badas ket pell ar c'hrogad, ha dizale e tilammas da gaout ar beleg gant he merc'h.

— Dalit ! emezi.

Ar beleg a gemeras ar baotrez etre e ziwireac'h, a zavas anezi etresek an nenv evel m'eo kustum d'hen ober bemdez da Hosti zantel an oferen.

— Setu, emezan, an Hosti c'han a ginniger evit paea distro ar pec'her !

Ar feiz a verve e kalonou an dud fidel hag an daelou a zirede eus an holl daoulagad.

Ar bugel daouzek vloaz a oe soubet en dour hag a gavas ennan ar pare. Ar pec'her a zalc'has d'e c'her hag a deuas da veza kristen mat.

An daou vreur

Jeruzalem n'oa c'hoaz d'ar poent-se nemet eur park a labouré evel ar re all. Al loden eo bet savet warni an templ brudet a yoa neuze boutin etre daou vreur, unan anezo dimezet ha tad da veur a vulg'el ; egile a veve e-unan.

Pa deuas poent an eost, an daou vreur a vedas, a hordennas o drammou hag a reas ganto daou vern henvel.

Mes, e kreiz an noz, ar paotr dizemez en doe eur mennoz mat. Lavaret a reas ennan e-unan : « Va breur en deus gwreg ha bugale da vaga, pa n'em beus-me den nemedon va-unan. Ne vije ket brao d'in kaout ker bras loden hag hen. Mont a ran da denna eus va bern eun dramm bennak da greski e hini. Ne ouezo netra evel-se ; mac'h ouf, ne asantfe ket. »

Hag e reas evel en doa divizet.

En nosvez-se ive ar breur-all a zihunas hag a lavaras d'e wreg : « Va breur a zo yaouank, hag e-unan ; n'en deus den war e dro da zerc'hel kompagninez d'ezan pa 'z eo yac'h ha da brederia gant e ezomou pa 'z eo klanv ; ne vije ket leal d'eomp kemeret keit hag hen eus gounidegez ar park : savomp, ha deomp da greski e vern ; ne ouezo netra ha rak-se ne c'hello ket kaout digarez da jom hep kemeret. »

Hag e reas evel en doa divizet.

Antronoz an daou vreur a yeas d'ar park, hag e oent estlammet o kaout ar berniou ker bras. Hini ebet avat na lavaras grik d'egile eus ar pez en devoa great.

Ar memez tra a c'hoarvezas meur a nosvez dioc'htu. Eun droiad koulskoude ec'h en em gavchont an eil gant egile, sammet. En em deuler a rejont an eil e diwreach' egile.

An dachen-ze benniget gant karantez an daou vreur a blijas da Zoue. An dud a zavas eno eun iliz, ha Krouer an nenv hag an douar a gavas mat ober anezi e di.

Azen ar Bardonerez

En eur c'hom Bod hent-houarn, eun Aotrou kof bras a zo azezet en eur c'hougn. Dirazan ez eus eur goueria-

dez, eur vaouez diwar ar meaz gwisket e giz Lanndi. Eur chapeled bras a zo en he c'herc'hen ; bet eo o pardona e Lourd.

An Aotrou (gant eun ear gwapaüs). — E Lourd oc'h bet, gwelet a ran !

Ar goueriadez. — Ya da, Aotrou.

Hen. — Hag ez eus great d'eoc'h gwelet traou a bep seurt liou ?

Hi. — Ya, Aotrou, gwelet em eus e Lourd traou kaer kenan.

Hen. — Gwelet hoc'h eus an eienen ?

Hi. — Gwelet em eus an eienen, Aotrou, evet em eus he dour ha gwalc'het ganti va daoulagad.

Hen. — Gwelet hoc'h eus ive eur bern pareansou ?

Hi. — Kaeroc'h, Aotrou ; bet em eus eur weledigez, eun « aparision ».

Hen. — Brao ! brao ! O ! kountit an dra-ze d'in 'ta, Itroun vat. (An Aotrou a frote e zaouarn gant plijadur).

Hi. — Ya, gwelet em eus an Tiegez santel e Bethleem ; ar Werc'hez Vari, sant Jozef, ar Mabig Jezuz, ar vesaerien, an tri Roue... Ne vanke netra nemet eun dra.

Hen. — A ! ... Petra vanke ?

Hi. — An azen ! ... Eun eal en deus lavaret d'in her gwelchen dizale. Laouen oun brema... Ouz ho kwelet ez eus deuet sonj d'in eus komzou an eal !

An Aotrou a droas oc'h ar weren hag a reas meur a zell korn ouz ar c'houabr a yoa deuet da c'holo an heol.

An Iliz reformet

Ar gountaden-ma a zo bet kutuilhet gant an *Echo de Noël* e kannadig eur barrez.

Eur ministr protestant a yoa

Oc'h ober e dro

Dre ar vro,

o prezeg e relijon, oc'h ingala levriou etouez an dud.

En em gaout a reas eun dervez gant eur serjant, hag
hen dioc'htu da ginnig e levriou.

— Petra eo an dra-ze ! eme ar zoudard... Almanagou
nevez ?

— Gwelloc'h c'hoaz ! eme ar ministr.

— Petra int eta ?

— El levrigou-ma e tesker anaout ar relijon, ar
gwir relijon, hon hini-ni.

— Ha pehini eo ho relijon !

— Ar relijon reformet (1).

— Mat, Aotrou, ho relijon neuze na dalv netra !

— Penaos 'ta ?

— Abalamour, ganeomp-ni, soudarded, pa vez « re-
formet » unan bennak, e vez lavaret d'ezan mont d'ar
gear, n'eo mui mat evit ar zervich. Evel-se 'ta, dalc'hit
ganeoc'h ho levriou ; ne gavfen saour ebet gant eur
relijon « reformet » gant Konseilh ar Revu.

Paour kez emzivad !

Bez ez eus kalz tud hizio hag a gav o brasa plijadur
o wapaat ar veleien hag ar relijon ; ne vankont tro ebet
d'hen ober. A-wechou koulskoude e kouez o meud en o
dourn. Selaouit kentoc'h an darvoud-ma c'hoarvezet
n'eus ket pell.

Eur person diwar ar meaz a zavas en eur c'hom Bod
da veachi war an hent-houarn. Kenver ha kenver ec'h
en em gavas gant eun Aotrou o veachi evit eun ti a
gemwerz.

— Aotrou Persen, eme ar bourc'hiz war eun ton tru-
bard evel an hini a gemeras Judas pa lavare da Jezuz e
teue d'e zaludi, klevet hoc'h eus ar c'helou bras ?

Hag e rea ardou gant e vouez, hag e selle a gorn ouz
e amezeien.

(1) Ar relijon protestant, savet gant Luther,

— N'em eus ket, Aotrou ; gwall abret oun deuet eus ar gear er mintin-ma, ha n'em beus ket bet amzer c'hoaz da zellez ouz ar c'hazetennou.

— Penaos ! penaos ! n'hoc'h eus ket klevet ? Mes n'eus ken hano koulskoude nemet eus an dra-ze !

— Ne welan ket, Aotrou, eus petra e fell d'eoc'h komz.

— Mat, Aotrou Person, eur blijadur eo evidon beza da genta o tigas d'eoc'h ar c'helou : an diaoul a zo maro !!!...

— Mantrus eo ! eme an Ao. Person, evel tenereet e galon. Mat, Aotrou, atao em eus bet truez ouz an emzi-vaded kez : kemerit an daou wenneg-ma, me ho ped !...

Gwelet a rit, mechans, ar penn a reas ar bourc'hiz o klevet kement-se... An holl a zirollas da c'hoarzin.

An Dragon hag ar Beleg

— Perag e rit-hu vijil da wener ha yun edoug ar c'horaiñ a c'houenne eun dervez eun dragon ouz eur beleg.

— Ha c'houi, eme ar beleg, perag e stlejit-hu eur zaben ouz ho kostez ?

— Abalamour m'eo gourc'hemennet.

— Mat, ni iveau a ra vijil da wener hag a yun edoug ar c'horaiñ abalamour m'eo gourc'hemennet an dra-ze d'eomp gant an Iliz.

— Koulskoude ar c'hig a zo koulz da wener 'vel da zadorn.

— Heb mar ebet ; mes pa vez lakeat ar zoudarded da veva divar bara ha dour er zal polis, evel ma c'hoarvez a wechou, daoust hag e rear an dra-ze abalamour m'eo falloc'h ar gesteuren er c'hazarn en deiz-ze eget d'an deiziou-ali ?

— Nan, ober a rear an dra-ze evit lakât Yann zoudard e pinijen.

— Mat, evit lakât ac'hanomp-ni iveau kristenien, e pinijen, abalamour d'hor pec'hejou eo e tifenn an Iliz ouzomp debri kig, dervezienou a vez.

— Ar vijil c'hoaz ne gavan ket re iskiz, mes ar yun avat, a gavan re galet.

— Perag e tougit-hu var ho pen eun tok-houarn ker pounner hag a rit?

— Evit hon diouall diouz an taoliou a skofe an enebourien ganeomp.

— Mat! ni iveau kristenien, hon deus eun enebour touet hag eo an diaoul; n'eus netra gwell evit en em zifenn outan eget yun, ha setu aze perak an Iliz, hor mamm, a c'hourc'henn d'eomp hen ober bep an amzer.

J. M. P.

Elumen viou ar c'homis beachour

An Tad Lacordaire a yoa eun dervez o leina en eun hôtel e n'ouzoun mui pe seurt kear.

Ar gwener a yoa, deiz vijil eta. Eun dro vrao d'ar c'homisenegiz-ma da ziskouez d'an holl o deus re a spered evit kredi e galloud an Iliz hag e madelez ar relijon, traou koz, echu ganto pell a zo!... oc'h o c'hlavet, da vihana.

Goude beza dizac'het eur bern sorc'hennou diskiant enep ar vijil, an dud devot, ar veleien..., ar paotr faro a droas warzu ar prezeger bras, da ginnig d'ezan ar pez a jome en e zilerc'h eus an elumen viou.

— « Me, aotrou, emezan oc'h ober gwad, me ne gredan nemet ar pez a gomprenan.

An Tad Lacordaire a lakeas en e asied an tammik a viou en doa lezet an aotrou diffeiz.

— « Aotrou, emezan d'ar c'homis, ha kompreñ a rit-

ha penaos e teu an tan da deuzi an aman ha da galedi
ar viou ?

— E feiz... ne ran ket da ! a respontas ar paotr
nec'het bras.

— « Na me ken nebeut, eme ar manac'h gant souge...
Gwelet a ran koulskoude e kredit en elumen viou, hag
e kavit matenezi. n'eo ket gwir ? »

En dizro eus Lourd

Eul labourer douar diwar dro Skaer e Bro-Gerne, a
yoa o tizrei eus Lourd ; laouen oa evel kement hini a
zizro ac'hano... Hag e tisplege gant plijadur d'ar re a
yoa en e gombod henthouarn, an traou dudius en doa
gwelet et kear dispar ar Werc'hez.

Eur medisin yaouank a yoa o selaou en eur c'hougn.
Mousc'hoarzin faëüs a rea o klevetar « paour a spered »,
re zouget da gredi, war e veno. Hag hen o lavaret a
greiz tout :

— Neuze'ta, va den mat, hoc'h eus gwelet pareansou?

— Ya da, Aotrou, gwelet em eus pareansou...

— Ha ped, mar plij ?

— Diou, Aotrou !

— Diou?... Ha ped klanvour a yoa'ta ?

— Ouspenn daout c'chant, Aotrou...

— Ouspenn daout c'chant !... Mat, red eo lavaret neuze
n'eo ket ho Kwerc'hez gwall c'halloudus pa ne c'hell
ket parea kement hini a ya ker pell-all d'he fedi !

— O ! eo, Aotrou, gellout a-walch'a rafe... Hogen, ar
Werc'hez a zo gwelloc'h, madelezusoc'h eget an dud !
Klask a ra mad an holl... Ma teufe da barea an holl

glanvourien, ar vedisined ne zalefent ket da verval gant
an naon... hag an dra-ze, kredabl, ne vije ket dioc'h ho
toare ?...

Ar penn-azen

Klevet em eus ober hano eus eur c'houeriad hag a
c'hoantea gwelet Pariz, eur wech en e vuez iveau.

Mont a reas, ha peadra a gavas eno da zigeri e c'hi-
nou, me lavar deoc'h. Fellout a rea d'ezan gwelet pep
tra, an embannou war an tiez-kemwerz, ar varc'hadou-
rez a yoa e pep stal.

Kaout a reas eun den azezet e-unan oc'h eun daol
skriva.

Aotrou, emezan evel eur glapezen, livirit d'in, mar
plij, petra werzit ?

Ar skrivanier a lavare outan e-unan, edo o vont da
gaout tro da ober eur c'hojad c'hoarzin diwar goust
Yann Gouer.

— Gwerza ran, emezan, pennou azenned !

— E feiz, neuze, eme Yann Gouer, ho peus gwerzet
eun toullad brao hizio, rak ne welan mui nemet unan
en ho stal ! ! ! ...

Hag hen er meaz hep goulent an heur.

El leac'h ez eus hano eus kostou Adam

En henchou-houarn e weler hag e klever kalz mar-
vailhou. En deiz-all ez oa eun nebeut beajourien en eur

wagon, kaoz krenv ganto. Pa na vez netra da oder e ra vad trabellat da dremen an amzer.

E touez ar veajourien-ma ez oa unan, bet gwechall war dachen an brezel, el leach'en doa lezet eur c'har. Goudeze oa deuet d'e garter, ar groaz a enor war e vruched, ez oa dimezet, hag e veve evel eundan a zoare, mes ive, evel eun den hep relijon. Evel ne laboure ne-meur, e komze kalz pa gave tro, hag e blijadur oa ober goap eus al lezen gristen hag eus ar re hen heuilh. Rak hen a rea souge da veza eun den seven hep moumou-nerez ebet.

Ama'ta oa en em lakeat, evit dizenoui e genbeajouri-en, da zistaga peziou kaer eneb al lezen gristen ha gwirionezou ar feiz, hag e komze a-dreuz hag a-hed evel ma ra peurvua an doktored-se a goms eus ar pez ne anavezont ket.

E-touez kalz a zotoniou-all distaget a eneb ar Skritur Zakr, a-eneb lezennou ha lidou an Iiz, setu hen o kaout houma :

— Lenner em eus, enezan, er Skritur Zakr, pa falvezaz da Zoue rei eur pried d'hon tad kenta Adam, e tigasas ar c'houesk d'ezan, hag epad e gousk e tennas unan euz e gostou, ha gant ar gosten ze e savas ar vaouez genta. Hogen, Adam a dlie neuze mankout eur gosten d'ezan, ne dlie kaout mui nemet teir warnugent ha koulskonde an dud wiziek, ar re o deus studiet hag a oar penaos eo great korf an den, a lavar holl hon deus ni peder gosten warnugent. Mat, me garre kaout unan kennak da ziskouez d'in penaos e c'hellomp, ni holl bugale Adam, ni holl diskennet anezan, kaout peder gosten warnugent pa n'en doa hon tad nemet teir warnugent.

War gement-se ar veajourien a yoa o selaou an doktor a zirollas holl da c'hoarzin, nemet unan. Hema a zistroas oc'h an doktor hag a lavaras d'ezan :

— Dioc'h ma livirit, c'houi a zo bet soudard ?

— Ya, aotrou.

— Evit doare hoc'h eus kollet eur c'har ?

— Ya, chomet eo bet war an dachen a vrezel, ha setu perak e welit ar groaz kaer-ma war va bruched.

— Goude m'oac'h distroet eus ar brezel eo hoc'h bet dimezet ?

— Ya, Aotrou.

Ha roet en deus Doue bugale d'eoc'h ?

— Ya, bugale am eus, hag esper am eus e teuio eun deiz unan bennak anezo da zifen e vro evel m'en deus great o zad.

— Ha divac'hagn eo ar vugale-ze ? Ha bez o deus-i diou c'har pep hini anezo ?

— Ya, Aotrou, ken divac'hagn ha pep den.

— C'houi koulskoude, dioc'h ma welan, n'hoc'h eus nemet eur c'har ?

— Nan sur, mes petra fell d'eoc'h da lavaret war gement-se ?

Me garfe e c'hellfac'h lavaret d'in penoas e c'hell ho pugale kaout diou c'har pep hini anezo, p'eo gwir c'houi, o zad, n'oc'h eus nemet unan ; ha mar en deus gallet Doue rei d'eoc'h-hu bugale hag o deus pep a ziou c'har, petra bennak n'en deus o zad nemet unan, livirit d'in ha dieasoc'h ez oa d'ezan rei peder gosten warnugent da bep hini ac'hanomp-ni ha pa n'en divije hon tad kenta nemet teir warnugent ?

Ama ar veajourien o doa c'hoarzet o klevet peziou kaer an doktor a droas c'hoarz a-eneb an doktor e-unan ; hag hema neuze a zerras e veg hag a oe mut epad ar penn diveza eus ar veaj. — E gwirionez, eur gentel gwall c'hoero en devoa bet.

G. M.

Providanz Doue

Eun deiz Doue a gemennas da zant Mikael arc'heal mont da gutuilh ene eun intanvez a yoa dare evit an neuvou.

An arc'heal a ziskennas a denn-askel war an douar, ha pa oe digouezet e kramb an intanvez, e welas daou grouadurig e-harz he zreid. Sonjal a reas e chomje ar vugaligou-ze emzivaded hag er vrasha dienez, ma kermerje ene ar vamm, hag e tizroas d'an nenv goullo e zaouarn.

— Perak, a lavaras Doue, n'ez peus ket digaset d'ine an intanvez ?

— Aotrou, gwelet am eus he devoa ar vaouez-se daou grouadur, hag em eus lavaret ouzin va-unan : Piou a gemero soûrsi anezo pa vezo eat kuit ? Gant truez outo em eus lezet an ene da veva c'hoaz korf an intanvez.

Ha Doue a lavaras d'an arc'heal : « Disken e goueled ar mor : eno e kavi eur vilien, hag he digasi ama.

An arc'heal a zigazas ar vilien.

Ha Doue a lavaras d'ezan :

— Brema, torr ar mean !

An arc'heal a dorras ar mean hag a jomas sebezet : e kreiz ar vilien, eviti da veza disfaout hag en he fez, daou brev a finve, leun a vuez.

— Piou a vag ar re-ze ? a c'houennas Doue.

An arc'heal a hejas e ziskoaz hag a jomas sioul.

— Na gemer ket nec'h gant an emzivaded, a lavaras Doue ; an dra-ze a zell ouzin : te, gra ar pez am eus gourc'hemennet.

Pep hini e studi !

Eur bourc'hiz en doa eur merour. Ar merour-ma n'oa ket gant ar re warlerc'h o paea e ferm ; e di a yoa urzet mat. Ar vugale, ar mitisien, a yoa boazet da heulia gourc'hemennou ar mestr. D'eun dervez sadorn en em gav ar merour-ma gant e aotrou.

Setu ama ar gaoz a zavas ganto :

An aotrou. — Da beleac'h ez it varc'hoaz ?

Ar merour. — D'an oferen.

An aotrou. — Gwelloc'h e ve d'eoc'h labourat.

Ar merour. — Aotrou, d'ar zul ne labouran morse.

An aotrou. — Eun diot oc'h.

Ar merour. — Ken diot evel a gerot : me a gar ar relijon, hag e fell d'in he heulia.

An aotrou. — Ar veleien eo a ra d'eoc'h beza diot evelse. Lakeat o deus ac'hanoc'h da gredi ez eus tri ferson e Doue.

Ar merour. — Gwir eo, kredi a ran kement-se.

An aotrou. — Ma ve lavaret d'eoc'h ez eus eun Doue ne lavaran ket e ve diot eun den o kredi kement-se. Mes pa lavaront e zo tri ferson e Doue, penaos o c'hredi ? Ha bet int betek ar baradoz o welet ?

Ar merour. — Pa deu eun den da glemm gant ar boan benn, e ve layaret d'ezan e teu ar boan eus ar bruched ; piou a zo bet eno ?

An aotrou. — Eur studi a ve great war gement-se.

Ar merour. — An aotrou Person en deus great studi ive.

An aotrou. — Ar vedisined a oar parea ar c'hlenvejou, ha mat a ra an dud selaou anezo.

Ar merour. — Gwir eo ; mes me a gav mat ive heu-

lia aliou an aotrou Person. Peoc'h hag urz vat a zo em zi ; va bugale ne reont ket a zisplijadur d'in, c'houi her goar. Aliou an aotrou Person eo a zo penn-kaoz a gement-se. Ne weler ket ar memes tra e tiez an dud ne heuliont ket ar relijion.

War gement-se an aotrou a droas kein en eur c'hros-molat. Eur c'hrouadur en doa hag oa 'bet desket d'ezan pep tra nemet ar gwirionezou kristen ; ha brema e laka an dristidigez e kalor e dad.



Ar Vamm-goz Mizer o klask lojeiz

Mar fell d'eo'ch diroufenna ho tal, mar ho peus c'hoant da danva brezoneg c'houek, lennit ar werz-ma. Kavet em eus anezi er *Feiz ha Breiz* koz, 11 meurz 1865. Koz eo eun tammig, egiz ma welit, mes lennit anezi, hag e leverot d'in goude n'he deus kollet tamm eus he c'houez vat.

Kalz barzoniezou a zaver en hon amzer, hogen, ar gwir varzed a zo tan.... Eur gwir dudi, eur banvez dreist eo evit ar spered hag ar galon kaout bommou brezoneg da zaouri evel a zo er pennad-mad.

N'eo ket dibaot kaout eus an traou dudius-se er *Feiz ha Breiz* a yoa renet gwechall gant an Aotrou Morvan. Hag evel ez eus nebeut ac'hanomp o kaout en o zi fol-lennou melenet ar gelaouen goz se, em eus sonjet e ragen plijadur o servicha pennadou eus ar pez a reas-kement a vad d'hon tadou.

* *

Gwechall e trenenas en eur bourkig a Vreiz,
Ar Vammig-goz Mizer, o vont da glask lojeiz.
He daoulagad skoelfet, diskabel, diarc'hen,
Treut evel eun ankou ha ridet he c'hoc'hen,
Ne daol troad d'an douar, nemet a bik-lammou :
Koulskoude, war he c'hein, gant he zammig truilhou,
C'houec'h mil bloaz gwall bouanner da zougen,
A dle roi d'he diou c'har ouspen eur vorzaden.

D'ar strinkel-ze, siouaz ! uhel hel lavaran,
Ne vank na tiegez, na lojeiz er bed-man.
Abaoue m'en deus Adam e zor d'ei digoret,
War goust e vugale bemdez he deus bevet ;
Rak nep a vez gwasket dindan he c'hrabanou,
A ya skany e c'hodel ha kleuz e vouzellou.
An dreitourez eta d'an tiez a gerze,
Da c'hout peleac'h kluja he c'hoval paourente :
He daoulagad paret war eur c'hoz lochennig,
E lavar o kaskalat : « Evit eun nozvezig,
Aman, war a gredan, me gavo lojeiz prest.
Mes araok antreal, sellomp dre ar prenest. »
Kerkent he daoulagad a furch mat el lochen :
Eur wreg, hag he mabig ganti war he barlen,
Gant eur vouez dudius, henvel ouz eun eostig,
A gane d'he bugel : « Kousk, kousk, va c'halonig ! »
He fried, kemener, o c'hriat war e dorchen,
Diwar benn e c'hlin a jache prim e neuden.
Ne welet, evit gwir, en ti-ze o lugerni
Na moger paperet, aour nag arc'hantiri ;
Mes ne welet ket ive treid hir ar gefnidien,
Endro d'ar mogeriou o steui gwiaden.
Eun tiegez kempen, joaüstet ha labour,
A zalc'h plas d'an arc'hant hag ive d'an aour.
— Kerz pelloc'h da glask fred, rak ama, va c'hommer,
Daoust m'eo treut ar c'high sall, n'eus tamm plas d'ar vizer. »
Evelse, dre he dent, e c'hoosmol ar wrac'h koz,
Ha kerkent e tro kein hep lavaret bennoz.
Kerzet a ra neuze d'an tiegez tosta,
Da c'hout ha hi gavo gwelloc'h evit loja.
An ozac'h mezo mik, war leuren ar gegin,
En daou bleg destumet evel eun urusin,
A laosk en eur gousket ken pounner roc'haden,

Ma weler eo stoufet betek e gornailhen.
Eus e c'chinou digor, hag ive eus e fri,
E ruilh, hed e varo, eur waz glaour ha mec'hi.
Piou gredfe koulskoude ? Daoust ma 'z eo badaouet,
Ar weren hanter-leun en e zourn 'zo chomet !
Daou vugel diskempen en eur c'horn a rueilhe :
Daou-all er chodouren ar yod a c'habouilhe,
Hag a-bouez e zivreach', unan gant ar sklinsin,
A skoe war ar billig, da c'hoari taboulin.
Ar vamm eus he c'hostez, ar vamm, koz libouden,
E kuz, gant eur gomer, a lipe he gweren.
O welet kement-ma, ar c'hrac'h — n'eo ket eston —
A lugern he lagad hag a drid he c'halon :
— Setu, krak ! emezi, al lojeiz a glaskan ;
Peleach' e vin mestrez mar ne deo ket aman ? »
Kerkent e poulz an nor, hag evel eur vleizez,
En eur skrignal he dent e lamm gant bleo Jakez :
— Poent eo divisorfila, sao, emezi, dihun !
Korf laosk ha didalvez, mesvier, lounk-e-zizun ;
Mar ne zentez raktal, diwar bouez da griben,
Me raio d'it skuba 'l leur-zi gant da chupen ! »
Ouz he c'hlevet, Jakez hanter divadaouet :
— Piou hoc'h-hu ? » emezan gant eur vouez truezus,
— Rouanez ar vizer, eur vaouez galloudus ;
Al labour 'zo treac'h d'in, hag ar vertuz ive ;
Mes evit eur mesvier hag eun den didalve,
A stlejan dilouïs ermeaz o ziegez,
Ha war o zammig meubl e ran gwerzidigez ;
Evelse, va c'homper, kerz el leac'h ma kari :
Evit ama pelloc'h eun nozvez ne gouski. »
Kerkent e taol he dourn war ar vugaligou,
Hag e trok o dilhad oc'h tammou koz truilhou.
O roi neuze taol troad d'an eil goude egile,
E poulz war an treujou tad, mamm ha bugale.

**

Mar bezit visius, mesvier pe didalvez,
Ho pezo d'ar vizer leach'h da deuler evez,
Mes bezit labourer, reizet ha vertuzus,
Ha c'houi vezo laouen, divorc'het hag eürus.



ROLL

Rakprenerien

ar Pevar Levr Marvailhou

M^{me}

1	DELAPORTE, Louis, Châteauneuf-du-Faou	1
---	---------------------------------------	---

M^{les}

2 De	BOISANGER, Kerdaculas, Landerneau	2
3	CADORET, Philomène, Bonen, par Rostrenen	1
4	CHARRAN, Louise, Kermaria-Sulard (C.-du-N.)	1
5	CORRE, Françoise, Landivisiau	1
6	DUMARNAY, Louise, pl. St Corentin, Quimper	2
7	FRANCES, Françoise, Kernilis, par Lesneven	1
8	LUCAS, Marie, Run Riou, Plouaret	1
9	POULIQUEN, Jeanne, près la Gare, Landerneau	1
10	QUÉLENNEC, Marie-Yvonne, Landivisiau	1
11 Le	ROUX, Alexandrine, Lanarvily, Lesneven	1
12 De	VOLZ, villa Kermorbras, Quiberon	1

MM.

13	ABGRALL, vicaire, Plounéour-Trez	2
14	ABGRALL, abbé, pens. St Joseph, Landivisiau	1
15	BELLEC, Léon, Croix-Courte, Pleyber-Christ	1
16	BOUSSARD, Alain, Keridreux, Argol (Finis.)	1
17 Le	BEC, Yves, Roscornaou, Poullaouën	1
18 Le	BERRE, vicaire, Landivisiau	1
19 Le	BOUL'CH, vicaire à Lanvéoc	2
20	BOCHER, Auguste (Ar Yeodet), Saint-Brieuc	1

21	Le BER, Guillaume, débitant, Landivisiau	1
22	BOTREL, Théodore, chansonnier, Pout-Aven	1
23	Le BARS, Goulven, St-Thonan, Landerneau.	1
24	COROLLER (Gweltaz), Moncontour	1
25	CORRE, Joseph, instituteur libre, Landivisiau	1
26	CAPITAINE, Alain, Coatsquirriou, Quéménéven	1
27	CADIOU, Yves, sacristain à Congrier (Mayenne)	1
28	CABIOC'H, Charles, débitant, Roscoff	1
29	Le CERTEN, J. L., Combrit par Pont-l'Abbé.	1
30	CLERGÉ de Roscoff	2
31	Le CLERC. (Kloareg-Ar-Wern), prof., Guingamp	1
32	De CARNÉ. (Barz an Arvor), Villa d'Arvor, Paris	1
33	COQUET, vicaire, Landivisiau.	1
34	CANSOT, Joseph, Peumerit-Quintin.	1
35	CAUREL, Joseph, instituteur libre, Landivisiau	1
36	DERRIEN, libraire, 52, rue de Siam, Brest	12
37	Le DIBERDER, Yves, rue Duguay-Trouin, Lorient.	2
38	EVEN, Francis (Karevro) Tréguier	5
39	ERNAULT, E., prof. Faculté de Poitiers	1
40	FRANCÈS, Joseph, cons. municipal, Lesneven.	1
41	FERTIL, Guillaume, Lanfrank Vihan	1
42	De la GUICHARDIÈRE, Henry, Quévert par Dinan	1
43	Le GONIDEC, vicaire, Plounévez-Moédec	1
44	Le GOFF, vicaire, Guimaëc par Lanmeur.	1
45	GUÉDON, Pierre, Kertreaz-Gwenn, Concarneau	1
46	Le GOFF, Yves, bourg de Pleyben	1
47	Le GOFFIC, Charles, 24, rue Beaunier, Paris.	1
48	GUYOMARC'H, Théophile, négociant, Berrien	1
49	GESTIN, instituteur libre, Saint-Joseph, Brest	1
50	GUIVARC'H, Pierre, rue de Landerneau, Land.	1
51	GODEST, Gustave, marin de commerce, Hâvre.	1
52	GOURIOU (abbé) instituteur à Crozon	1
53	Le GALL, dir. pens. N.-D., Kérinou-Lambézellec	3
54	GODEST, Julien, Callac-de-Bretagne	1
55	HAKIM, E. Ker-Annik, Brignogan (Finistère)	1
56	HAVARD, JONES, Soham (Angleterre)	1

57	Le	HUÉROU-KERIZEL, Plounérin (C.-du-N.) . . .	1
58		HAMON, Louis, négociant en vins, Landivisiau . . .	2
59	D'	HERBAIS, Kervoasdoue par Lanvollen.	1
60		JAFFRENNOU (Taldir) dir. d'Ar Bobl, Carhaix . .	5
61		JOURAND, recteur de Rospez par Lannion	1
62		JESTIN, François, Penn-ar-Wern, en Coatméal. .	1
63		JAOUEN, Fçois, chât. de Lesquiffiou, Pleyber . .	1
64	De	KERANFLECH, G., Milizac par Saint-Renan . . .	1
65		KERMARREC, François, Pellan, Ploudaniel. . . .	1
66		KERVELLA, recteur, Guiclan (Finistère). . . .	2
67	De	KERMÉNÉ, Ronan, Laurenan (Côtes-du-Nord). .	1
68		KERBRAT, Jérôme, Pennavern, Irvillac	1
69		LICHOU, recteur de Santec par Roscoff	1
70	De	LAIGUE, château de Bahurel par Redon	1
71		LOYANT, Job, 7, rue de Breil, Nantes	1
72		LUCAS, Georges, 69, rue de l'Hôpital, Lorient. .	1
73	Le	LEC, vicaire, Plouzévédé	1
74		LANNUZEL, Biel, Office Central, Landerneau . .	3
75		MAZÉ (abbé) dir. du pens., Landivisiau	1
76		MAOUT (abbé), vicaire à Gouesnou	1
77		MOËME, Auguste, dir. d'éc. lib. St-Thégonnec.	5
78		MOCAER, Pierre, au <i>Pays Breton</i> , Lorient . .	1
79		MASSON, E., professeur au lycée de Pontivy . .	1
80	Le	MAY (Méliaf) recteur de Saint-Aignan	2
81	Le	MOAL, Y., Coadout, par Guingamp.	1
82		MELLAC, André, dir. du <i>Pays Breton</i> , Lorient .	1
83	Le	MASSON, André, Laval-Rapides, P. Q. Canada.	1
84		PAUGAM, Jean-Yves, inst. libre, Lorient. . . .	1
85		PALLIER, vicaire, Ile de Sein, par Audierne . .	1
86		PALLIER J.-B., recteur, Kernouès, Lesneven .	1
87		PERROT, vicaire, St-Vougay par Plouzévédé .	12
88		PRIGENT, vicaire, Plouescat	1
89	Le	PAGE, vicaire, Cavan (Côtes-du-Nord)	1
90		POULIQUEN, vicaire, Plabennec.	2
91		PICQUENARD, Ch., adjoint au maire, Quimper .	1
92		RIOU, J.-M., Star City. Saskatchewan (Canada).	1

93	Le RUMEUR (Mathaliz) Azay-le-Rideau (I.-et-L.) .	1
94	Le ROUX, René, 88, bd Latour-Maubourg, Paris .	1
95	RIOU, A., Aumônier des Bretons, Le Havre. . . .	1
96	RAGUÉNÈS, François, Keromnès, Milizac	1
97	Le ROUX, Pierre, professeur de celtique, Rennes.	1
98	ROUÉ, instituteur, Kerniliz par Lesneven	1
99	SÉGALEN, recteur de Mespaul, St-Pol-de-Léon.	6
100	SEGONDAT, général, Keranden, Landerneau	1
101	SALAUN, libraire, 7, rue St-François, Quimper	24
102	TILLENON, François, Prat-Ledan, Saint-Thonan	1
103	TILLENON, Yves id.	1
104	VALLÉE, <i>Kroaz ar Vretoned</i> Saint-Brieuc,	3
105	VALLÉE, Olivier, papeteries, Belle-Isle	1
106	VÉRINE, Louis, rue Saint-Guénal, Landivisiau.	1



Madoberourien

al levr-man

Setu aman hanoiou an dud vat o deus bet ar vadelez da
rei harp da skeudenni al levr :

An Aot. J.-M. PERROT, en deus roet skeudennou *Feiz ha Breiz.*

An Aot. J. HAINAUT, eus Skol-Veur an Ijinou-kaer, en deus linennet ar skeudennou-all.

An Aot. BOTREL, en deus paeet klicheda 3 skeuden.

An Aot. JAFFRENNOU, en deus paeet klicheda 3 skeuden.

An Aot. Kont de MUN, en deus roet 10 lur evit sikour paea klicheda skeudennou.

An demezel Nathalie de VOLZ 10 lur

An Aot. COROLLER 20 real

An Aot. de CARNÉ 20 real

AN Aot. Chaloní GUITTÉREL 10 lur

An Aot. Abad LE CLERC 20 real

An Aot. VALLÉE 10 lur

An Aot. FRANCES, eus Lesneven 10 lur

An Aot. F. EVEN 2 skoed

An Aot. SEGALEN, Person Mespaol 8 lur

Trugare d'ezo, en hano Doue ha Breiz !

Klaoda 'r Prat

Taolen

Oberou Klaoda 'r Prat	5
D'al Lenner	7
Mao Kergarrec	11
Botezig an Aot. Sant Per	26
Nedelek er Skoliou	33
Salaün ar Foll	37
Penaos e oe kollet Ker Iz	42
Paostr-saout Komanna	52
Kilhog Betleem	57
Ar bod beuz benniget	64
Yann ha Mac'harid	70
Nik ha Seven	76
Foar ar godellou toull	84
An daou vartolod.	90
Bragou kenta Paolig.	98
Loden Doue.	104
Ar marc'heg milliget	109
Dizoursi	118
Epad an Dispac'h.	135
Moustrarig	151
Merc'h ar Bunision	164
Boutouigou ar Werc'hez	169
Yann Jertud.	175
Eun dro e Bro-Wened	183
Doue r' ho paëo	222
Hunvre eur bugel.	225
Paner ar marvailhou munut	229
Ar vam goz Mizer	245
Rakñrenenerien	249
Madoberourien.	253
Taolen.	254

5635

